

Moal (Jozef ar) - Ar Bara loued

bet lakeet e brezoneg gand
Loeiz Konk ha Paotr Jeg

Lodenn genta

AR BLOAVEZIOU KENTA

Ar maro

Deuet e oa an noz. Gand koan e oam. Ma mamm, ma breudeur, ma hoarezed hag ar zervijerien a oa ouz taol. Me a oa 'n em hoarez war mên ront an oaled, e-tal an tan.

Souezet e oan o weled on amezeien oh erruoud lerh-ouz-lerh, gand o friejou hag, a-wechou, o mevelien.

Toud, goude eur zalud diardou, a dreuze ar gegin evid mond da gambr on tud.

Sioul-kenañ e oa toud an dud. A-greiz-toud e savas eur vouez izel. Eur vaouez a zibune ar pedennou, e brezoneg.

Ar famill ah eas neuze da adkavoud ar re all. Ha Matilda, unan euz ar mitizien, a grogas em dorn ha ma hasas ganti d'ar gambr.

Soñjal a reen e oa c'hoarvezet eun dra bennag a-bouez.

Plah ar pedennou a oa tost d'ar gwele.

Toud an dud a zaoulinas. Dond a reen a-benn da guitaad ma diwallerez hag en em zilen e-kichenn ar gwele. Gweled a ris ma zad, astennet, difiñv. E zaouarn a oa juntret, eur chapeled du etre e vizied. E gorv a oa goloet gand eul liñsel hag eun tapis gwenn. Er hostez kleiz, e oa lakeet eur hrusifi.

Evidon, ne oa ket maro ma zad. Diskuiza a ree hepken. E kred e oan ma lavared ar pedennou evid hasta pare e harr a harze anezañ da redeg war-lerh ar zaout.

An hini maro kenta a welen. Pevar bloaz e oan, a-veh. D'ar 27-se a viz c'hwevrer 1911, ma zad a oa nao ha tregont.

Mestr nevez Seveon

Ma mamm, bet ganet Soaz an Heveder, a oa anavezetoh dindan an ano Soaz Seveon. D'ar mare-ze, n'anavezet ket "stad sivil" an dud. Dougen a reent aliesoh ano al leh ma oant o chom ennañ. Ma mamm a oa bet ganet e 1872. E 1896, e timezas da eur Jolu, kosoh eviti a dri pe bevar bloaz. Dond a rejont da zerhel menaj da Goz-Leh, e Kamlez, da houde da Gastell-Du, e Langoad.

He fried kenta a varvas da zaou vloaz ha tregont, o lezel anezi heh-unan gand daou vugel.

E 1902, eh addimezas gand Izidor ar Moal, ma zad. Dond a rejont da jom da Zeveon.

Ma mamm a jomas intañvez, evid an eil gwech, e 1911, gand pemp a vugale e karg. An hini hena, ar Jolu, e-noa trizeg vloaz ha me, an hini yaouanka, pevar bloaz. Stad al leveou, e Seveon, evel e kalz menajou e Bro-Dreger, a oa neuze gwall-reuzuz. Ar gouelmikêliou a oa dale ganto. Ma mamm a zleas mond, meur a wech, da leñva ouz Kont Roquefeuil evid ma pledfe ganti en ti ar perhenn : kont Vaujus-Lagan.

Nebeud a viziou a-raog e varo, ma zad hag a fallae bemdeiz gand an droug a grigne e harr, e-noa gopret Fañch ar Rolland, euz Kelou-Mad, e Langoad, da vevel diouz ar bloaz. Evel just, e oa red e baea “amzer-leun”.

Ma mamm hag a oa c'hweh vloaz ha tregont, ne zoñje ket, tamm ebed, dimezi evid an deirved gwech. Med red e oa beva ! D'ar mare-ze, dreist-oll evid an intañvezed, ne veze ket kont diouz karantez. Dimezi a reed dre red, evid padoud.

Eun deiz a viz even, pa zihunis, e oen souezet gand ar mone-done digustum a rene e Seveon, ken en ti hag er porz hag e grañj ar binviou.

Goulenn a reen digand Maria Lukaz, mestrez matez ar menaj, displega din petra a hoarveze. Berrig-berr e oe an displeg ! Ma mamm a hourhemennas din dond ganti er-mêz ha ma hasas a-dreñv an ti, gand urz da jom eno beteg eur hemenn nevez all. N'am-oa torret netra, n'am-oa ket roget ma dillad, ne gomprenen ket perag e oan lakeet e pinijenn.

Em zoñjou e oan aze, war-dro deg eur, pa zeuas ma breur ha ma hoar, Yann ha Frañsin ar Moal, d'am adkavoud. Bet o-doa an heveleb urziou. O goulennata a reen. Perag toud ar mone-done-ze ? Perag e kemere al listri taol hent ar hrañj ?

E-barz al leh-se, kempennet penn-da-benn, em-oa gwelet e oa bet savet taoliou-an-eost war o marhou-koad. Daou zevez a-raog, Chañmar ar Rolland a oa deut abred d'ar menaj hag e-noa lazet eul leue ha diwadet eur pemoh yaouank. Goude, e-noa greet pate ha chaosiz ha ne oam ket bet aotreet d'o zañva.

Yann a lavaras dim e oa bet lakeet er guzulig gand Maria. Rei a reas din da hovezoud ar helou braz : « Hirie zoken e tle beza eured or mamm gand Fañch ar Rolland, ar “paotr-harnez” ! »

Hervez ar helou roet gand Maria, ne hellem ket kemer perz nag en overenn-eured nag er friko. Med ar Vari galoneg he-doa touet mired dim eul lodenn euz ar pred-eured.

Or mammig a oa bet dibleguz ganim en he mennoz. Lavared a ree ne helle ket or gwiska evid an degouez. Ouspenn-ze, ne oa ket a blas evidom er gweturiou da vond d'an overenn-eured d'ar Vinihi. Ne gomprenen ken seurt ebed.

Kompren a ris e oa red dim, adaleg an deiz war-lerh, heñvel Fañch ar Rolland on “tad” evid ma chomfe dalhmad e Seveon.

Me a respontas dak e veze cheñchet ken êz ha tra a jarreter, er menajou all, hag e helled ober evel-se du-mañ.

Beb an amzer, o heda al lojeiz, e taolem evez ouz ar pezh a hoarveze er porz.

War-dro deg eur hanter, ar gweturioù a yeas gand hent bourk ar Vinihi. Yann a lavaras dim e-noa ar Rolland kemeret ar rañjennou, goude beza bet diazezet, e-barz ar wetur, ma mamm, on hanter-breur ar Jolu hag on hanter-hoar Chann ar Jolu.

Eur pennad goude, Maria Lukaz a zeuas d'or herhad evid debri. Evel prometet, on-oe ol lod friko. Lonka a rejom ar gwestell, a-veh a-raog distro an eured.

E-pad toud an abardaevez, e heuliem piz mone-done "paotred-ar-hog".

Echu ar friko, toud an dud ah eas er-mêz. Ar re a zervije ouz taol a haste bremañ ober leurenn houllou e-barz ar hrañj. En eur horn, e oe lakeet eun daol vihan, ha warni eur gador.

Pa oa deut an noz, e teuas Maria en-dro d'or zenna diouz ar "harter-a-gastiz". Ma hemer a reas goustadig dre ma dorn hag or hasas ganti d'ar hrañj. Mond a ris 'n em hoazez en he hichenn. Neuze eo e welis eun den oh errued.

Dougen a ree war e gov eur voest vraz, bet staget war e skoaz gand eul lerenn. Kamma a ree eun tammig. Red e oe e zikour da zevel war an daol. Goude beza evet eur volennad chistr, en em lakaas da gas en-dro e venveg, o sacha warnañ a-dreuz. Kleved a reen soniou. Hag e welen koublajou paotred ha merhed o vond hag o tond, o trei warne o-unan, ha harta evid mond adarre. Gweled a reen ma mamm o tremen dirakon, e divreh ar Rolland heb taol din eur zell.

Ar zoner a oa Jul an Amezeg hag ar soniou-ze a gleven a oa soniou o tond diouz e arkordeoùs, a lavaras din Maria. N'ouvezan ket pegeid e padas ar bal. Maria am lakaas da gousked, en daol kegin Seveon. Rag an daol-ze a zervije ivez da wele ; dindanni e oa eun spes torchenn goloet gand eur holhedad pell kerh klozet klok. Diouz eun tu, he-doa diou zor war rez gand gwerzidou a laoske an êr da dremen. Ma flas a oa aze, pa veze eun toullad tud e-barz ar menaj.

An deiz war-lerh beure, Maria a adlavaras din am-oa eun tad nevez hag a oa hiviziken mestr Seveon.

An odivi chistr

Nebeud amzer goude an eost, e Bro-Dreger, e veze dornet ar melchon.

Ar Rolland a zegase e garradou foenn melchon ti Erwan Gallou, a zalhe eur menaj e-kichenn Seveon. Hemañ a oa o paouez prena eun dornerez kaset en-dro gand eur "vapeur", an hini genta euz ar hontre.

E miz gwengolo 1912 e oam. Selled a reen karga ar harr. Petra muioh em-ije gallet ober da bemp bloaz, atao em lostenn ?

Eun devez, e lavaras ma mamm d'ar Rolland :

- Kas hemañ ganit !

Ma zad am zavas war ar harrad. Erruet er penn-leh, evid harz ahanon da vond war-dro ar mekanik, e fizias ahanon e Maivon Gallou. Houmañ a gemeras ahanon en he harg ha ma lakaas 'n em hoazez war treujou he zi en eur lavared :

- « Chom aze, ha me ah a da rei dit eur bannah traou mad. »

Chom a reen 'n em hoarez, a gement muioh parfet, ma oan dirag an dornerez.

Eur hard eur goude, Maivon Gallou a zegasas din eur volennad vraz a evaj dianav evidon. Odivi ha mel mesket e oa.

- « An dra-ze a zo gwall-vad !, emezi. Ober a rey vad dit ; kemer toud da amzer evid hen eva. »

An evaj a oa dous ken e oa. Hen lipad a reen goustadig. Kaoud a reen anezañ saouruz.

Eur pennadig goude, e roudellen d'an douar en eur youhal gand ar boan-gov.

Echu an dorna, ma zad am lakaas er harr hag a yeas gand hent an distro. Derhel a reen da youhal en eur adlavared beb an amzer :

- « Zant Erwan ! Zant Erwan ! »

Distro da Zeveon, e tisplegas ma zad d'am mamm ar pezh a oa degouezet. Kompren a reas buan ma stad. Daoust ma oa pareerez, e kavas dezi ne rafe ket he louzeier vad ebed d'he mab.

- « Maivon he-deus roet kalz re a alkol dezañ. An danvez-kov a dle beza gloazet. Red e vo ober dezañ gwalhaj-kov. Gwelloh eo dit mond da glask ar medisin. »

D'abardaez noz an "Aotrou Lolo" (ar medisin Loyer), a oa e Seveon.

- « Grevuz eo », emezañ. Red e vo ober gwalhajou-kov dezañ, ha, dreist-oll, na roit dezañ tamm boued ebed. »

Ober a reas din eur gwalhaj.

- « Dond a rin en-dro, e penn kenta an noz, evid ober eur gwalhaj all hag e roin dezañ eun distaner evid ma hello diskuiza eun tammig. »

An deiz war-lerh, ar boan-gov a oa bepred spontuz. E-pad tri devez e reas an Aotrou Lolo war ma zro gand largentez.

Ar boan ah eas war digreski nebeud-ha-nebeud.

E-pad eun deg devez bennag n'am-oa boued all ebed nemed dour zoubenn heb holen.

Red e oe din eur pemzeg deiziad mad d'am lakaad adarre war ma zu.

Kleier Pask

D'ar yaou gamblid, diouz ar beure, e-barz sioulder ar mêziou, e klevem brall ar hleier, d'ar memez eur. Goude, e chome mud ar stal beteg sadorn Fask. Añjeluz ebed ken, na zoken a daoliou euriou.

Lavared a reed o-doa kemeret ar hleier o nij 'trezeg Rom d'ober o gourhemennou doujuz d'ar Pab.

Kleved a reen aliez komz euz burzudou, ha dreist-oll euz re or patron Zant Erwan ; med soñjal e kemere ar hleier o nij a oa dreist ma entatamant.

Diouz ar beurevez-se, eur Yaouvez Gamblid, e-pad ma oam gand lein, e oa kaoz a gement-se, ouz taol.

- « Bremaig, eme ma mamm, e klevim kleier Ar Roh ha re Langoad ; ha beteg disadorn ne glevim ken an disterra taol kloh, na zoken an Añjeluz. »

- « Mond a reont da Rom », a lavaras d'e dro an deveziatær, Fañch ar Rouz.

Em hoazez e oan 'tal an tan, war ma mên. Pa n'am-beze droed ebed da gomz, e selaouen ar gaoz hag e huñvreen a gleier. E-kreiz ar beurevez, e oan e-barz al liorz, e leh ma tenne ar Jolu eur beh foenn deuz ar bern, evid e gas d'ar zolier. Digoumoul e oa an oabl. Sevel a reen ma fri, o furchal gand ma daoulagad. Hag e klevis ar hleier brudet.

- « Ma fell dit gweled ar hleier o vond da Rom, setu deut ar momed », a lavaras din ar Jolu. Tostaad a reas hag, o tiskouez din ar hleuz : « Kee 'n ez kourvez, a-dreuz-kil, dirag ar hleuz. » Hen ober a reen en eur houlenn koulskoude:

- « Ha perag 'n em astennez ket da-unan, te ? »

- « N'eus nemed ar vugale a hell o gweled ! », a respontas Ar Jolu, gand eun êr greduz-tre.

- « Gwir eo », a zoñjen em fennig, « d'am oad, e kav din n'am-eus ket pehet c'hoaz. »

- « Ha bremañ, serr da zaoulagad ha digor da henou. »

Sentuz mad, e sentis adarre. Jolu a oa daoulinet em hichenn. Gwelet am-oa enoa e zorn dehou 'dreñv d'e gein.

- « Dreist-oll, serr mad da zaoulagad ha digor frank da henou. »

Hag e vountas etre ma dent eun dornad kaoh-kezeg.

- « Gwelet 'teus aneze, kleier Pask ? » a hoapaas ar Jolu.

Sevel a reen buan war ma hillorou hag o ouela.

Evel-se e oa buhez ar paour-kêz Jefig en e vloaveziou kenta. Ma veze eun taol farserez da ober, e veze tapet da genta-toud. Ar yaouanka e oa, komz a ree fall en eur vesteodi, ne oa mad da vann, diêza a ree c'hoaz ar re all.

Ma ne houezen ket kaozeal mad, e houezen nebeutoh c'hoaz lavared gevier. Biken n'am-ije bet ar zoñj euz an disterra gaou evid klask en em zidamall, m'am-oa greet eur zotoni. Soñjal a reen e oa toud an dud evel don-me e Seveon. Roet e veze din siliou da lonka. Zoken ar haoziou kontet gand an Tonton Rolland, e-pad ar beilladegou, a oa gwir bater evidon.

An Tonton ar Rolland

E Seveon, e lahed ar peurlies a tri bemoh a-vloaz. Distammet e veze ar pemoh gand ar higer. Miret e veze eul lodennig chaosiz ha pate evid tud an ti, hag al lodenn vrasa a veze ingalet pe d'ar person, pe da goñversanted vraz ar Roh, pe c'hoaz d'ar vignoned. Ar higer a ree ivez sosisonou hag anduill euz ar re wella a veze lakeet da zeha, in-pign ouz treustou ar zolier. Daou zevez labour a veze red evid laza, distamma ha salla ar pemoh.

E Seveon, or higer a oa Chañ-Mar ar Rolland, eur breur d'am zad. Red e veze mond da gerhad 'nezañ d'e gêr, gand ar charabañ. Digas a ree gantañ toud e oustillou kiger ha kivizer. Pa veze fin gand ar pemoh, e profite ma zad evid ober dezañ repari toud an harnaj. E-pad ma veze ganeom, Chañ-Mar a loje e Seveon. Plijed a ree din kaoud an Tonton du-mañ.

Bez' e oa eur marvailler dispar. Konta a ree flugezennou hag istoriou heb ehan. E heuill a reen dre-oll. Hag er goañv, goude koan, e-tal an tan, e konte c'hoaz. Boulh e gontadennou a veze atao damheñvel : « Gwechall e oa eur Roue er Frañs, ha bepred ez eus unan emichañs... Med nann... Gaou a lavaran, rag ar Republik a zo bremañ ».

Hag e-pad eun eurvez, muioh a-wechou, e kase Tonton ar Rolland ahanom gantañ en e viraklou, e fals-kredennou, e goñchou burzuduz leun a verhed yaouank pe c'hoaz a wrahed koz.

Ar gorrikez elektrisite

Kaset e oen bet da skol Zant Erwan Landreger, e penn miz here 1917. C'hweh vloaz hanter e oan. Ma breur Yann a oa ganin. Abaoe eun nebeud bloaveziou dija e oa er skol-ze. Or mamm or hasas gand ar charabañ. Karget e oa ennañ eur zahad patatez, eur zahad bleud, kig-sall hag eun doukennad jistr.

Ar patatez, ar hig hag ar jistr a veze kaset d'ar skol evid ar vagadurez. Ar bleud a veze roet d'ar Hleh, bouloñjer e Landreger, ha karget da rei dim or bara. Ar bañsionerien a dlee c'hoaz en em bourchas a liñseliou gand eur holhedad pell kerh hag ar penn-weleou. Or mamm a guitaas ahanom, d'abardaez noz.

Ar bañsionerien en em vodas dindan ar preo da hortoz koan. Ne anavezen den ebed nemed ma breur. Kregi a reen ennañ dre draoñ e borpant. Doaniet kalz e oan, en abardaez-se. Selled a reen en-dro din ouz toud ar baotred dianav-se.

Ma zellou a dardas war eur voull-werenn stag ouz solier ar preo ha diwallet gand eur grillaj. Klask a reen kompren mad an dra-ze pa alumas a-greiz-toud. Sebezet e oan. Para a reen ma daoulagad ouz ar sklêrijenn gevrinuz-se a vihannaas he skeud e-pad nebeud a amzer, a vougas hag a adalumas adarre. Eur burzud an hini e oa. Gervel a reen ma breur :

- « Gweled a rez ar sklêrijenn, aze, 'krweh¹ ? Ahanta, alumet eo heh-unan. Sur on ! Just e oan o selled outi. Petra eo an dra-ze ? »

Ma breur, ken didro ha tra, a respontas din :

- « Ar goulou-ze eo an elektrisite. »

Yann a blijas dezañ rei din c'hoaz displegadennou all. Med ne gredis ket eur ger euz ar pez a lavare.

Ar C'hwil

D'ar henta devez-skol, e oe greet dim sevel evid ar bedenn. hag unan bennag a hourhemennas :

- « Kroazit ho tivreh ! »

Me am-oa intentet “kaozeit mad”.

¹ 'krweh : e-kreh (Tregerieg).

Selled a reen ouz ma amezeg deuz an tu kleiz en eur en em houlen ar pez a hellfen lavared dezañ. Spi am-oa ivez e stagfe da gomz da genta. A-benn nebeudig, e roas din eun taol-ilin hag e kroazias e zivreh. Ha me a reas eveltañ. Ne houvezen ger galleg ebed. Ne anavezen ket zoken ma "stad-sivil". Me a oa atao "Jefig Bihan", pe c'hoaz "Jefig Seveon", na muioh, na nebeutoh ! Ha netra ken !

En deziou kenta, ne glevis ger brezoneg ebed. Ne gomprenen eta netra d'an urziou roet dim. Goude eur pennadig amzer, ar mestr-skol a gavas gwelloc'h ober eun disparti. Ar re ne houvezent netra - ar re na anavezent ket ar galleg - a oa eur hartad euz ar hlasad. Kemeret e oem e karg gand eur seurez. N'am-eus ket miret kalz a eñvoriou euz ar henta bloavez skol-ze, paneved unan : gwall-reuzuz e oe evidon. Gand-se ma vo aotreet din nompaz skei war an tach ! Jefig Seveon ne hortoze nemed eun dra : ar vakañsou.

Miz Eost 1914

War ar mêz, ne lenned ket ar journaliou. Kloh an tangwall a roas dim da houvezoud e oa ar Frañs o vond d'ober brezel d'an Alamagn. Galvet e oe ma zad d'an arme adaleg deziou kenta miz eost. Rekizisioni a reed ar hezeg, ar herh. Diou gazeg a guitaas Seveon er hiz-se, evid mond peleh ? Den ne oare. Ma hanter-vreur ar Jolu a oa a-veh c'hwezeg vloaz. Kemer a reas ar stur, kuzuliet gand ar "mevel ober eost".

Evuruzamant, ar merhed a oa kaloneg ; ar hen-zikour ne oa ket eur ger goullou. An eost en em reas evel ma helle beza. E Seveon, ne oa ket an dud war o zu. Ne oa ket bet gwall-vad an eost, ar pez ne wellae ket stad al leveou, dija berr-berr. Fall e oa ar heloiou. An Alamagn a oa krog d'aloubi ar Beljik. An darnvuia euz rejimantou Breiz en em gave el linenn genta hag or zoudarded gand o bragouiou ruz a oa eur gwel euz ar henta evid an Ulhaned.

Erru e oam e hanter miz Gwengolo ha lizer diweza Fañch ar Rolland a oa abaoe an ugent a viz eost. Bemdez, e penn kenta an enderv, unan bennag euz Seveon a ree ar ged war an hent. Gedal a reem ar fakteur koz a ree e dro war droad. D'an ugent a viz Here nemetken, eh erruas eul lizer a roe dim da houvezoud e oa Fañch ar Rolland prizonier en Alamagn. Gloazet e oa bet en e vorzed ha greet prizonier gand an hanter euz e rejimant e Tourteron, en Ardennes. Roet e oe al lizer d'or mamm, eur zulvez, d'abardaez-noz, gand ar fakteur koz a oa eet da gerhad anezañ da bost Landreger, daoust ma ne oa ket a zervich.

Ar hatekiz

En abeg d'ar brezel, eh adkemeris hent ar bañsior gand liez sizun a zilerh. Rener ar skol ha meur a vestr o-doa adkavet o rejimantou. An darnvuia euz ar skolidi vrasa a oa chomet er gêr evid labouriou ar menaj. Er skol, toud an traou a oa direizet eta. Da gelennerien, n'on-oa nemed seurezed, pe eun nebeud a vistri-skol oajet pe torret a zoudard, en o zouez an tad Lebrun, lesanvet ganim "an eskob-

meur“ pe “ar patriach“, abalamour d'e varo hir. Abaoe ma oa e retred, e ree dreist-oll war-dro ar jardrin.

Pa vanke mistri, toud skolidi an eil bloavez, brezonegerien anezo pe ne oant ket, a oe kendastumet. Or hlasad a bemp skoliad warn-ugent a oe greet diou lodenn dioutañ. Me, evel just, a oe lakeet e-barz an eil lodenn, gand pevar pe bemp azen all ha ne hovezent ket kalz gwelloc'h evidon an dro da gomz galleg.

Ar seurezed a roe dim kenteliou katekiz ha n'o-doa fin ebed... ha leoriou ha ne oam ket barreg da lenn. Evidon-me, Doue hag e Zent hall a jomas hebreaj !

Frouez al labour-ze ne zalejont ket. Da beb diskrog deg eur, en em gaven e pinijenn gand pemp pe hweh genaoueg all, kazi ordinal ar memez re. Ar binijenn a oa ober tro peder gwezenn er porz, or hatekiz en on dorn. Divennet e oa kaozeal d'or honsorted a vizer. Or frealz nemetken a oa rei eun taol botez d'ar gwez, gand spi, en aner, d'o gweled o vond da get gand ar binijenn !

Deveziennou a oa, ar gentel gatekiz a hoarveze e fin an abardaevez. Ar re a veze kastizet a zlee daoulina e-barz ar housk-leh, bepred al leor 'n o dorn. Ar hastiz a bade d'an nebeuta eun eur goude ma veze eet ar re all da gousked.

Or mestr-studi, an Aotrou Bourdon, a oa eun den en e dri-ugent, krog da dapa kov. Sutellad a ree pastillou bent heb paouez. Goude e dro kustum dre ar housk-leh, e tremene dirakon hag e houlenne ganin hag-eñ e hovezen ma hentel. Ma respont a veze ordinal ar memez hini :

- « Ne oaran ket ar galleg ! »

Hag e hini a veze kemend-all :

- « Red eo e zeski. »

Hag e lahe ar goulou oh en em denna en e gambrig e-kichenn an nor a zispartie an daou gousk-leh. Aze, e lenne, bepred o sutellad e bastillez bent ; hag a-raog mond d'e wele, eh aotree ahanon da vond d'am hini. A-wechou, em-ije kemend a boan em daoulin, ma ranken en em harpa war ma daouarn evid galled kerzed. E-pad ar goañv, e vijen bavet gand ar riou. Ar housk-lehiou ne oant ket tommet. C'hoarvezed a ree ivez aliez ma vezen ankouaet gand ar mestr-studi. Hag e peuken evid degas soñj dezañ e vezen aze c'hoaz.

Ar vuhez kaled

Fall-tre e oa ar bevañs e Zant Erwan. Evidon, d'am lein, bara, kig-sall ha dour. Ma mamm, abalamour d'ar brezel, n'he-doa ket a beadra da rei amann din. Na muioc'h a gafe, nemed e-pad miziou kaled ar goañv, miz Du ha miz Kerzu.

Ma mamm a roe dim chistr, med ma breur Yann nemetañ ah eve 'nezañ. Dirakon, er zal-debri, am-oa eur henderv euz ar Roh, Loeiz Tremel, mab d'eun amunuzer ha ne oa ket bet galvet d'ar brezel. Loeiz e-noa 'ta muioc'h evidon : kafe hag amann beb beure. Beb merher, devez ar bizitou, e vamm a roe dezañ eun dabletenn jokola pe madigou all hag a oa dianav evid Jefig Seveon.

Diouz ar beure, a-raog larda ma bara gand kig-sall, e tiskouezen dezañ, heb lavared ger ebed, ma bara zeh. Eur wech a-ziwar diou, e ree din eur zin-penn da

rei din d'intent eh asante. Galled a reen neuze trempa ma bara en e gafe. Hag e lonken 'nezañ e berr amzer.

Da greisteiz e veze zervijet dim eun spes dour zoubenn a veze bet poazet enni al lard hag ar hig pourvezet gand tud ar vugale. Ar heginer a dremene en or zouez, gand eur pezh plad karget a dammou kig. Eur blakennig metalleg merket warni niverenn bañsion ar skoliad a veze stag ouz peb tamm. Yann ha me on-oa an niverenn 23. Al lodenna a gemere eun tamm amzer hag al lard a veze yen pa'h errue war ma asied. Ha lonket am-ije dija ma fatatez. Treutoh c'hoaz e oa ar geusteurenn da goan. Roet e veze dim restajou soubenn kreisteiz. Ha setu toud ! Eüruz an hini e-neve eun tammig lard en e rastell !

Ar gweleou, gand o golhedadou pell kerh degaset gand tud ar vugale, a oa dispartiet gand speurennoù bihan koad eur metrad a uhelder. Ar vreudeur n'o-doa ket an disparti-ze. Yann ha me a helle komz an eil gand egile a vouez izel. A-raog mond er gwele, e veze red daoulina, e penn ar gwle, evid pedennoù an noz kaset en-dro gand ar mestr-skol. Yann a oa devod braz. Adaleg ma vezem en or gwele, e houlenne stard ma lavarfe pedennoù all, war ar marhad : unan evid ma echufe buan ar brezel, eun all evid distro ol lez-tad, eun all evid pare ar gazeg hloazet, eun all evid ma'h afe mad ar vuoh. Menel a reen kousket aliez a-raog fin ar halvar-ze.

Erh

D'an deziou kenta a viz Genver 1916, e-pad vakañsoù ar bloaz nevez, ma mamm a daolas pled e oa koeñvet ma gouzoug ha ma jod dehou. O falvata a reas ha kaoud a reas e oa ar penn-zah. Goude beza tamouezet ludu tomm, o lakaas en eul loer goz en-dro d'am fenn. Gourhemenn a reas din mond dioustu d'am gwele ha dreist-oll ma goloï mad, en eur lavared din, evel eur medisin asur euz e skiant :

- « A-benn tri pe bevar devez e vi pare ! »

Gourhemenn a reas da Varia Lukaz cheñch al ludu pa ne vefe ket aze. Lakaad a reas ahanon er gwele-kloz, er zal gumun, dirag an nor a skoe war borz ar menaj.

An deiz war-lerh beure, Maria Lukaz ah eas er-mêz an ti da gerhad keuneud er hao. Lezel a reas an nor digor-braz. Ober a ree erh. Eun dra ral e Bro-Dreger. Pa zistroas, e houlennis ganti :

- « Maria, laosk an nor digor eur pennad, evid ma hellin gweled an erh o tiskenn ».

Ma mammig hag en em gave er zal a lavaras, kounnaret :

- « Felled a ra dit gweled an erh o koueza ? Ahanta, kee 'ta, neuze ! »

Eun dra bennag a oa war he spered, er beure-ze. Tenna a reas ahanon, a-daol rust diouz ma gwele, hag am strinkas ken buan all e-kreiz al leur. N'am-oa evel gwiskamant nemed ar pezh a jome euz ma roched. Ha ma mamm a zerras an nor, hag a roas c'hoaz ouspenn eun taol torroill². Ar Varia vad a deuas kerkent d'am

² eun taol torroill : prena an nor.

zikour ha setu-me distroet d'am gwele. Maria a damallas d'am mamm he zaol kounnar.

- « Er stad-se, ar paour-kêz bihan e-nije gellet taped e fall hag ho-pefe bet keuz diwezatoh ! »

Hag e cheñchas ludu tomm ma loer hloan.

Paotr ar homisionou

E-pad ar vakañsou, eh een aliez d'ober ar homisionou : mond da gas eur volotennad amann d'ar Roh, da gerhad sukr, kafe, pe chikore ti Marharid an Diuzed da bennkêr Zant Renaod, pe c'hoaz da gas koefou da feri ti Chan-Vari Vaou. Pa zleen mond d'ar Roh, ne oa ket heb doan eo eh een.

Brudet e oa ar Rohiz eiz-daouzeg vloaz evid klask kann ouz ar re all. Memestra evid paotred Langoad, o amezeien-enebourien. Pa zeue eur bagad Langoadiz d'ar Roh, e veze gwelloc'h deze pellaad diouz plasenn ar Pourhied, eun dachenn douar fraost 'dreñv d'an iliz. Houmañ a oa leurenn-dreist c'hoariou kanfarded ar Roh.

Kavet e veze ordinal en a-raog abegou kannou : « Da vreur, da genderv pe da gamarad e-neus skoet unan diouzim, roget dezañ e borpant... ha ne 'n-eus ket rentet dezañ e gasketenn... » Hag ar stourmadeg da gregi. Ne bade ket pell an traou, ar peurliesha. Degouez ar fakteur, gourdrizou ar hantonier o vond da hervel ar gward-champet, ha setu echu ar mesk.

Vakañsou Pask ha yaouzeziou an nevez-amzer a roe tro d'ar stourmadou ar brudeta. Bez' e oa amzer an neiziou. An douar dindan ar Roh ne oa ket braz hag ar Rohiz ne dandonent³ ket evid klask jeu ouz o enebourien war douar ar re-mañ, e kostez Milin-Zeh. Treuzi a reent ar Yodi, e Penn-ar-Pont hag a yee da guz e-barz ar hoajou ha brouskoajou leun a biked, kegined, mouilhi, brini...

Al Langoadiz a gave o-doa ar Rohiz o harzou-bro hag e tleent beza bountet er-mêz war an taol. Eur stourm arloupet a groge. Ar Rohiz, penneg da ziskregi, o niver disterroh aliez, en em zivenne evel leoned, o klask dreist-oll diwall an neiziou hag an uou. Malloz d'an hini a veze tapet e neiz digantañ. An uou a veze friket dezañ war e benn.

An alouberien, neuze, a gile, a dreuze an hent koz roman e Milin-Zeh, evid en em gavoud war douar ar Vinihi, eur vro neptu, a veze sellet outi gand ar stourmerien hag o-doa o emgleoiou, evel o Bro-Suis.

Ar Rohiz a helle neuze en em aotren d'ober geizou pe da hegasi al Langoadiz heb riskl ebed da veza enkrezet. Ar Vinihi a oa evidom eul "leh a beoh". Ar varmouzien o-doa o lezenn hag an hini a dremene dreist a veze skoet er-mêz diouz ar gevredigez.

Evid antren er Roh, e oa red din treuzi eul lodenn euz plasenn ar Pourhied. En em guza a reen diouz ma gwella, o krena gand an aon. En em zila a reen 'dreñv

³ ne dandonent : ne oant ket etre daou evid.. .

d'an ti-kêr en eur ober tro d'an iliz. Ma teue eur gedour a-benn din, e hasten rei dezañ ma ano a-raog ma 'nevez bet an amzer da skei :

- « Me eo Jefig Seveon, euz ar Vinihi, eur hamarad da Yann Varot ».

Yann Varot a oa eur Rohad penn-kil-ha-troad. Tremen a ree e vakañsou en eur menaj, e Zant Renaod, evel paotr-saout bihan. Degouezed a ree din c'hoari gantañ eur wech an amzer.

Ma ano aprouet gand hiniennou euz izili ar bagad, e veze roet din ma “zremen-hent”. Ne oan ket euz Langoad ; o chom e oan en eur vro neptu hag ouspenn-ze e oan eur hamarad da Yann Varot. E-ser ar miziou, e teuen da halloud ober ma homisionou heb aon ebed.

Fererez ar hoefou

Anavezet e veze eun Dregeriadez diouz he hoef. Eur beizantez koefet a-zoare a ziskoueze anad ne oa ket soursiuz hepken da en em ficha brao, med c'hoaz e oa dalhet he zi en eur stad vad ha kempennet mad.

Eur vaouez pe eur plah yaouank ne guitae jamez he menaj heb beza lakeet he hoef, ha pa ne vije nemed evid renti vizit d'he amezegez. Va mamm, ma hoarezed, Chann ha Frañsin, o-doa eur bern braz a goefou. O cheñch a reent peurlies a teir gwech ar zizun. “Seveon” a oa eur gliantez vad da Chann-Vai-Vaou, ar fererez koefou.

E-pad eun toullad bloaveziou, e oan bet karget da gas dezi beb pemzeg deiz, dre vraz, koefou ar famill da nêtaad ha da feri. Ar Chann-Vai vad hag he merh kaloneg Ann-Vai a groge gand o labour abred diouz ar beure, evid echui ken diwezad all en noz pa veze re skuiz o daoulagad evid derhel da feri.

Labourad a reent, pep hini en eur penn da daol vraz o zi bihan. Ampeza, amidoni, feri a reent koefou Bro-Dreger gand eur “fer” tommet gand glaou koad. Ar hoefou feret a veze reñket war eun daol all, a-verniou a dregont pe daou-ugent. Heñvel e oant toud an eil ouz egile. Koulskoude o ferhenn a adkave o mad heb jamez 'n em drompla.

Ar “Miseron-Gwenn”

A-raog ar bloaveziou 1900, e oa gwall-fall an heñchou e Bro-Dreger. Ne oa nemed eun hent-houarn, hini ar Stad : hent-houarn Pariz da Vrest, da Zant-Brieg, Gwengamp, Plouared ha Montroulez. An ehanou, Gwengamp ha Plouared nemetken, a oa pell-mat euz aochou Bro-Dreger. Eun hent braz nemetken ah ee diouz Landreger da Wengamp dre ar Vinihi hag ar Roh. Tremen a ree a-rez kant metr diouz Seveon, a en em gave evel-se lakeet dreist, e-keñver ar menajou all. Ar pennad hent treuz a dremene dirag or menaj a oa eun hent koz roman ah ee diouz Seveon da Vilin-Zeh.

Gwella avantaj an hent-se a oa e houliennou⁴ ledan goloet a yeot, a zervije da beuri ar zaout e-pad ar goañv.

An nebeudig a heñchou a oa a oa eur beh evid ekonomiezh Bro-Dreger hag ar hlemmou d'ar pennou-braz a deue da veza niveruz. "Servijou publik" an departamant a gemeras preder gante hag e oe lakeet e santier eur rouedad heñchou-houarn etre ar hêriou brasa, er bloavezioù diweza an XIX^{ved} kantved.

An aotrou Harel de la Noë, ijiner-penn karget diouz labouriou al linenn hent-houarn Gwengamp da Landreger a zleas boulha gand enklaskou diwar-benn an tachennou douar. Diskredig kenañ e oa an darnvuia euz ar beizanted, ha ne oa ket heb poan e prenas an douarou red evid poza ar raillou. Perhenned Seveon a werzas d'an departamant 34,60 arad, ugent real beb arad. Touch a rejont ouspenn beb seurt sikouriou all, evid kloza o douarou. An digoll a-bez a oe lakeet da 3 850 lur diouz an amzer-ze, da lavared eo 192 loeiz-aour.

Boulhet e oe al labouriou d'an 28 a viz Genver 1902. Añfin, d'an 10 a viz Meurzh 1905, war-dro seiz eur deg, ar henta "Miseron-Gwenn" a dreuzas berjezou Seveon, hanter-kant metrad bennag diouz an ti. An treñ ne zlee ket mond buannoh evid pemp kilometrad warn-ugent an eur.

Eun tregont bennag a amezeien a oa deut evid zaludi an nevezenti. Nebeud anezo o-doa gwelet an treñ a-raog. Lakeet a-gostez ar zoudarded koz, den ebed ne oa morse bet eet e-barz.

E dremen kenta e Seveon a oe lidet dre eun adlein a-zoare hag eur hafe. Ha pep hini a roas e ali : darn a gave mad, ar re yaouank dreist-oll ; ar re goz a glemme ouz distruj ar parkeier, risklou a zarvoudou o treuzi ar hroaziou-houarn.

Ar menaj e-noa bet ar muia a goll gand savadur al linenn a oa, heb douetañs ebed, Seveon : eur verjez trohet e daou, teir lodenn douar all dibennet. Evid ma mamm, koll he gwez-avalou ne oa ket eun dra a denne da vraz. Ar pezh a zebre ar muia he spered a oa penaoz diwall he loened. E gwir, ar verjez a ree evid peurenn e-pad ar goañv hag ar zaout a riskle kalz beza spontet gand taoliou c'hwistell ar marh-du ha trouz an treñ. Ne vefe ken posubl laosken eun ebeul da haloupad. Med ar gwall-droiou-ze ah eas gwall-brim da vann hag ar "Miseron-Gwenn" a zeuas buan da veza eur mignon.

Dre brenest ar gegin e veze gwelet an hent-houarn. An treñ a dremene peder gwech bemdez, da zeiz eur, da unneg eur, da deir eur ha da hweh eur hanter. N'on-oa ezomm ebed a voñchou. An eil tremen en em gave gand ar verenn hag an drived gand hini adverenn. E hwistelladennoù a roge an êr. Kleved a reem anezañ da beb kroaz-hent-houarn, diouz Langazou d'ar Roh. A-wechou, pa veze riellet ar raillou, ne zeue ket a-benn da zavel grav ar Roh. Eur marh-du all a zeue neuze d'hen dizac'ha.

Al linenn a deuas buan da veza eur roudenn da vale war droad pe da vond war velo beteg ar Roh. Eno e oa ar medisin, an apotiker, ar spiser, ar person hag an iliz. Ar venajerien diwar-dro a ree o hent da Zeveon. Micherourien ar Roh a dremene

⁴ e houliennou : e wrimennou.

dirag ar menaj a-raog an deiz evid mond d'o labour war-dro Landreger. Ouspenn treñiou ar veajourien, d'an nevez-amzer dreist-oll, e tremene treñiou marhadourez. Evid al lin o tond diouz kostez Karaez evid mond da vilinou-lin niveruz e Bro-Dreger ; pe evid ar patatez kaset war-du Pariz, pe c'hoaz evid ar gwano degaset diouz ar Perou gand marhadourien traou an douar.

Ar mekanisian, eur henderv a-bell d'am zad, a harte a-wechou e dreñ e Seveon, amzer da zebri eun tamm ha da lipad eur chopinad. Treñ ar veajourien, eñ, ne harte ket. Med aliez, war-dro 1919 ha 1920, en em lakee da vond war e horregez o treuzi ar verjez evid laosken ma breur, ar Jolu, da ziskenn pa zistroe d'ar gêr, e permission.

An avañtur vraz

En ma bloaveziou kenta, e skoas kalz an treñ ma zammig spered.

Kustum e oan da veva gand ar yer, ar hezeg, ar zaout, ar moh. Kompren a reen loh ar hirri sachet gand ar hazekenned, med eun êrouant du a dreuze ar verjez o krozal, o tufal, o tivogedi, o c'hwistellad, o heuill, heb en em drompla, daou rail dir, kement-se a oa divunadenn evidon. Med gand ar bloaveziou, e ris muioh anaoudegez gantañ. Da bemp pe hweh vloaz, an treñ bihan a oa deuet da veza eur mignon din. Seul-vui e kresken, seul vui ar c'hoant da vond e-barz a waske ahanon.

E-pad ar vakañsou 1917, e tiskoulmis ar gudenn. Komz a ris euz ma mennoz d'am breur Yann.

-« Mond 'barz an treñ ? Hag evid mond da be leh ? Ha neuze, an dra-ze a goust re ger ».

Evid Yann, pep tra a oa re ger.

Koulskoude e talhen stard d'am mennoz. Toui a reen ne zistrogen ket d'ar skol, a-raog beza bet greet eur veaj e-barz an treñ. Komz a ris diouz se d'am amezeg ha mignon Emilig. Eñ ivez, ne hortoze nemed an dra-ze. Asamblez e rejom or mennoz d'ober eur pennad hent diouz gar ar Roh beteg ehan Langazou. N'on-oa ide ebed diouz ar priz ha goullou dizesper e oa or yalhou. Eur henderv da Emilig a houlennas an doareou hag e roas deom ar priz : deg kweneg ar billed. Eun teñzorig !

Evuruzamant, e-kerz ar zizun, e oa bet lazet ar pemoh e Seveon. D'an degouez-se, e oa ar hiz mond da gas chaosiz fresk ha pate d'or mamm-goz ar Rolland. Ma mamm a ree dalhmad he mad diouz an degouez-se evid ober eur vizit dezi. Goulenn a ris mond d'he zi, war digarez e oan e pañsion e-pad al lodenn vrasa diouz ar bloaz ha n'am-oa ket gwelet anezi abaoe pell amzer.

Ar vamm-goz am hare kalz. Kalon vad he-doa hag asur e oan en a-raog da gaoud eur halanna mad ha kresket, dre ma oan e pañsion.

An deiz war-lerh, kerkent ha merenn unneg eur, eh een da Gelou-Mad da Langoad, gand ma zraou presiuz paket gand eun torchouer fresk.

Mamm-goz am degemeraz a-greiz-kalon etre he divreh. Kinnig a reas din bara fresk, greet er gêr, amann ha chokola zoken. Chom a reen eur pennad mad ganti ha d'an eur da vond kuit, e roas din eur varrennad chokola ha gwenneien, leun a wenneien. A-boan war an hent, e ris ma hontchou. Bez' am-oa a-walh evid paea ma billed hag hini Emilig. Adaleg an deiz war-lerh e oe merket deiz on avañtur vraz : ar zul war-lerh.

D'ar zul, e Seveon, on-oa droed da bedi eur hamarad da verenn. Goude an overenn deg eur, er Roh, e pedis 'ta Emilig da zond ganim. Goude merenn, e oe c'hoariet taoliou pilpod war al leur gand Yann. Den c'hoaz ne oa anaoudeg euz or mennad. Ma breur ha ma hoar Frañsin a oa e karg euz ar menaj an deiz-se. Displega a ris deze :

-« Emilig ha me a ya da vond gand an treñ diouz ar Roh da Langazou. Soñjal a ran e vefet e-barz ar verjez, Frañsin ha te, evid or gweled o tremen ».

-« Bez' ho-peus, c'hwi, soñjou, avad. Mond gand an treñ ? Ha bez' ho-peus arhant a-walh ? »

Tenna a ris peziou moneiz diouz ma godell.

-« Komprenet am-eus », eme Yann. « Setu perag e oa kement a hoant da gas ar chaosiz hag ar pate d'ar vamm-goz. Gouvezed a rees e-tije da werz-butun ».

-« En em zifretet am-eus ; med na larit dreist-oll mann ebed d'or mamm, evid bremañ ».

Ha ni da vond gand roudenn an hent-houarn ha da heuill ar harrpont beteg gar ar Roh.

N'am-oa ket lakeet c'hoaz ma zreid er gar-ze. Menel a ris kentoh war ma hoant. Evidon, eur gar a zlee beza eur reñkennad lojamañjou braz, eur pez karrdi evid binviou hag oustillou an treñiou, eur garaj evid ar vagoniou. Ha gar ar Roh ne oa nemed eun tiig dister gand eun doenn ruz.

E-barz ar zal vraz e oa eun orolaj, eur vaskul, ha war an tu dehou, eur bureo gand eur rakled hag hini mestr ti an hent-houarn. Pe oe digor ar rakled, eh astennen ma gwenneien da baotr ar gar en eur zisplega dezañ e felle din mond gand an treñ, gand ma hamarad Emilig.

-« Med da beleh e fell dit mond ? », a houlennas ar paotr.

-« Da Langazou ».

Para a reas e zaoulagad warnon.

-« Mond a rafes buannoh war droad ».

-« Her gouvezoud a ran », emezon-me. « Med gweled a ran ar Miseron-Gwenn o tremen dre ma berjez meur a wech bemdez ha n'on ket bet c'hoaz e-barz. Arhant am-eus ha me 'fell din kaoud eur billed. Ma breur ha ma hoar a zle mond da weled ahanon o tremen dre ar verjez bremaig ».

Ar gaoz a jomas a-zav, aze. Rei a reas dim beb a villed, ha setu ne hovezen ken bremañ petra ober gand ma hini. Pa welas e oam nehet, e lavaras dim :

-« Pa'h eoh 'barz an treñ, e rofet 'nezañ d'an aotrou gand ar hepi ».

Gortoz a rejom eun deg munutenn bennag. Errued a reas beajourien all... Hag an treñ a hartas e-barz ar gar. Sevel a rejom war ar "zavenn". Eur paotr gand eur

hepi war e benn a oa aze. Rei a rejom or billejou dezañ. Selled a reas a-bik e gwenn on daoulagad oh heja e ziouskoaz... ha ne fellas ket dezañ kemer ar billejou. Diskouez a reas dim eun den all hag a zouge ivez eur hepi.

-« Roit ho pillejou d'an aotrou-ze », emezañ. « Me, n'on ket e servij ». Ar hontrolour a zellas ouzim, a zeblantas on anavezad hag o weled or billejou, e hejas e skoaziou d'e dro. Taol a ris pled d'e gepi. Seblanted a ree din e oa disheñvel diouz hini ar hontrolour kenta. Soñjal a reen e-noa an hini kenta eur hepi disheñvel dre ma ne oa ket e zervij. Chom a reen eur momed etre daou vennoz a-raog antren e-barz ar vagon. Paotred ar hepiou a gaozee diwar-benn kezeg. Emilig a zilas din em skouarn :

-« An hini e-neus nahet kemer or billejou a zle beza eur palafrigner, moarvad ! »

Ne respontis ket. Hija a ris ma diouskoaz. Rag ne hovezen ket an disterra petra oa ivez ar ger-ze.

C'hwitellad a reas an treñ. Eun tammig goude eh adkemerar e hent. Krog e oa an avañtur vraz. Med ne badfe ket pell. Diskenn a reem dija grav Koad-Malouan hag an treñ en em gavas e penn ar harrpont 'uz d'ar Yodi. Bez' e oam neuze war-hed pemp kant metrad bennag diouz Seveon. Kuitaad a rejom diabarz ar vagon evid mond war ar "zavenn-dreñv". Errued a reem e uhelder ar verjez. Ma breur ha ma hoar a hejas o mouchouerou-godell ha ni or hasketennou. Hag an treñ a dremenar etre parkeier Kêr-Rivoalenn ha Zant Renaod, 'dreuzas "an hent-praz niverenn eiz", hag a hedas 'nezañ beteg halt Langazou, on "fenn-linenn".

Diskenn a rejom. Eüruz e oam. Eur gouestl a oa o paouez dond da wir. Greet on-oa pemp kilometrad hent e-barz an treñ.

Asiedou kenta Seveon

A-raog ar brezel 14-18, e Bro-Dreger, an asiedou ne vezent ket implijet nemed da-geñver ar goueliou braz, an eost ha degoueziou meur all, ral a-walh. Er-mêz euz ar re-ze, nemed da zul, ar famill hag an devezietaerien a zebre a-ziwar an daol. Servijet e veze koulskoude ar zoubenn da bep hini en eur skudell.

Ne oa ket a fourchetezou kennebeud. Ar baotred en em zervije euz o hontell o-unan hag euz eul loa goad. Mestr an ti hag eur paotr harnez o-doa o loa o-unan. He hregi a reent en eur plas dibabet ouz unan euz treid an daol. Ar re all a gemere o loa er "hased-loaiou" in-pign ouz eun treust hag he roent an eil d'egile, pep hini d'e dro.

Meuziou kreisteiz a veze aliez an heveleb re : patatez, kig-sall ha bara, aliez louedet. Pep hini en em zervije en eur daol evez da bellaad ar preñved diouz ar hig-sall, nemed ar re goz ha n'o-doa ken ar basianted-se hag a lonke ar hig, preñved ha toud.

E-kerz ar blovaziou 17, eur rummad prizonieren vrezel Alamant a oa lojet e kouent seurezed ar Groaz e Landreger. Kerkent ha ma oent gwellaet, e oant bet kaset da labourad e-barz staliou braz ar hontre hag e-barz ar menajou e diouer a labourerien. O zikour a oe presiuz evid an eost e Seveon. Ma breur ar Jolu ah ee

davete abred diouz ar beure gand ar charabañ. Heuliet e vezent gand eur zoudard koz euz an "territoriale" karget d'evêsaad oute ha d'o divenn. E mare emgannou Verdun e oam hag ar sperejou a oa muioh pe nebeutoh troet gand se, dreist-oll e-touez ar re o-doa unan bennag euz o herent e gwall reuziou ar brezel.

Da verenn unneg eur, ar brizonierien hag o gward a zeue da zebri goude tud ar menaj, kement-mañ evid en em ziwall a gement degouez. Memez tra evid adverenn peder eur.

Ma mamm a houlennas ivez sikour ar brizonierien alamant evid tenna ha serri ar patatez e miz gwengolo. 'Benn eiz eur hanter, toud an dud a veze war labour... Nemed ar haporal. C'hoant 'walh e-nije bet da labourad, emezañ. Med n'e-noa ket droed. Ne helle nemed klakenni eur wech an amzer gand ar merhed.

Adlein nav eur a veze kemeret er park. Ar brizonierien a gase founnuz ar hrog en-dro ha gand ampartiz. Ar merhed a zerre ar patatez e panikellou evid o lakaad goude e-barz eun dumporell. War-dro unneg eur, toud ar skipaill a ziskenne da Zeveon da verenn.

Ma mamm he-doa lakeet eun daol ouspenn evid ar re yaouank, ar brizonierien hag o gward. Ar Jolu hag ar merhed a oa en o hoazez ouz an daol vraz. Karolina Nouel, pompinenn Chann Vai Nouel, a zalhe eur hoñvers spiserez e Sant Renaod, a bozas ar chaodouron war an daol. Ar Jolu hag ar merhed a grogas da en em zerviji en eur lakaad o fatatez hag o hig end-eeun dirake, war an daol. Souezet e oa ar brizonierien ; an dra a oa anad. Ar haporal a lavaras :

-« Petra 'ta a hortozit, Itron, evid lakaad dim asiedou war ho taol ? »

Ar vammig, he daouarn e godellou he zavañjer, a jomas bamet o kleved kement-se.

-« Asiedou ? Med n'eo ket sul hirie ! »

Ar haporal a skoas war an tach.

-« Urziou am-eus, Itron, hag urziou striz. Dleed a rit lakaad asiedou, kontellou ha fourchetezou d'ar brizonierien, anez da ze, e rankin degas en-dro ma zoudarded da Landreger ha displega dre skrid ar peza a zo bet c'hoarvezet ».

Ma mamm, med en despet dezi, ah eas d'ar pres, a ziblasas eur bern liñseliou, hag a gemeras pemp asied don gwenn.

Toud ar patatez ne oant ket bet tennet an deiz kenta. Adretorn a rejont 'ta an deiz war-lerh. Memez c'hoari adarre !

Da verenn unneg eur, an deiz war-lerh, Erwan ar Jolu a zavas diwar e vank-taol :

-« E-pad daou zeiz », emezañ, « ar brizonierien "voch" o-deus bet droed da gaoud asiedou ; ne welan ket perag, ni ho pugale, n'on-ije ket ».

-« Gouvezoud a rez e virer aneze evid ar zul ».

-« Poent braz eo kaoud an distag diouz ar hiz-se », a lavaras ar Jolu, en eur vond e-unan d'ar pres.

Ar vammig e laoskas da gemer an asiedou, ar hontellou hag ar fourchetezou.

Eun araokadenn a-bouez a lakaas an doare-beva da chañch. Ar menajou diwar-dro a gemeras skwer diwarnom, heb dale.

Cheñchamant buhez

Da fin vakañsou braz 1917, eo e oe kemeret eur mennoz a-bouez e-keñver ma amzer da zond er skol.

-« D'ar zizun a zeu, e vi kaset e pañsion da Blistin gand Erwan Lorou. Kosoh eo evidout. Anavezad mad a ra ar skol, peogwir ema e-barz abaoe pemp ploaz. Galled a raio taol pled ouzit », a lavaras din ma mamm, nebeud a zeiziu a-raog adkregi gand ar skol.

Kavet am-ije mad mond n'eus forz da beleh, evid nompaz adkavoud yender ar vuhez e skol Sant Erwan. Laouen braz e oan 'ta o klevad ar mennoz-se, kemeret gand ma mamm heb beza goulennet ma ali diganin.

Ar skol-ze a roe ar peb reta evid ar bevañs. Red e oa hepken da bep hini degas gantañ e liñseliou gwele ha kaoud eun troñsad deread a zillad. Ma mamm, hag a oa dellezeg braz, a ree kalz a van ouz al lavariou. N'he-dije jamez gouzañvet gweled he mab en eur stad kêzig.

Erwan Lorou hag e vamm a lavaras dezi ar peb reta. Droed am-oa da zaou vragou, daou borpant, diou re loerou, eur jiletenn hloan, daou re chaosonou, eur re votou-koad, eur re galocho, eur gasketenn, toud nevez-flamm. Red eo anzav, dre ma oam e brezel ha prizioù frouez an douar o veza eet war gerraad da vad-kaer, stad al leveou a oa bet gwellaet mad e Seveon.

Hag e teuas an deiz da vond da Blistin. E penn miz Here e oam. Ne oa ket deut c'hoaz ar beure pa oen divunet. Eun taol torch glebiet war ma dioujod ha deg munutenn goude e oan gwisket a-nevez, ha c'hwezet evel eun touseg. Ar val goz koad hag he-doa servijet dija evid ar re hena a hortoze. Or hazeg "Bergère" a oe staget ouz ar charabañ. Karget e oe ar val a-dreñv hag Ar Jolu a gemeras al landoniou.

Mond a rejom 'trezeg Milin-Zeh e leh ma oa komisioner ar hontre o chom. Bez' e-noa eun harnez a hweh a gezeg, liez charabañ vraz a hweh pe eiz plas, gweturiou skañv ha reou all c'hoaz gand bankou tal-ouz-tal. Ar Broudig a gase an dud diwardro da varhajou Lannuon beb yaou, da Wengamp d'ar zadorn ha da Landreger d'ar merher. Degouezed a ree dezañ ivez ober pourmenadennoù prevez gand e weturiou skañv hag e weturiou "keñver-ha-keñver".

E Milin-Zeh, Erwan Lorou hag e hoar a hede ahanom. Ar maliou a oe staget war horre ar harr. Ha ni toud e-barz. Ar paotr-karr, eur mab da Vroudig, seiteg vloaz, a oa studier e skolaj kêr-Lannuon. Seblanted a reas din e oa eur paotr studiuz braz. E-pad eur pennad mad euz ar veaj, e lennas, en eur zacha eur wech an amzer war al rañjennou da zioullaad bevder e aneval.

Mond a reem propig-toud gand on hent, d'an trotig war ar plên, d'ar paz en disterra grav. E graviou Beg al Lann ha Sant Eflamm, e oe red dim skañvaad ar wetur ha diskenn d'an traoñ. Da zeg eur, e rejom eun diskuiz evid rei e gerh d'an aneval. Ma mamm ha Chan Lorou a zigoras paner ar bitaill evid terri an naon. Ha setu-ni añfin e penn or beaj.

Rener skol Sant Jozef Plistin, an aotrou Merseur, eur beleg yaouank a dregont vloaz, ne oa ket bet galvet d'an dachenn-vrezel, dre ma oa silwink e yehed. Degemer a reas ahanom a-vraoig kaer. Anavezad a ree ar famill Lorou ha felled a reas dezañ kaoud disklêriaduriou war ar pezh am-oa desket er skol. Goulenn a reas digand ma mamm stad resiz or famill. Savet e oe or maliou er gambr-kousked. Ma mamm ha Chan a reas ar gweleou, a reñkas an traou e-barz an armeliou. Hag e teuas ar momed da gimidi.

Skol Zant Jozef Plistin

Eun ugent pañsioner bennag ha pevar-ugent skoliad diavêz e oam er skol. Erwan Lorou ha me, pa oam erruet da genta, e rejom or gounid diouz an damliberte a rene e Sant Jozef evid mond da weled al lehiou : saliou-klas, kambrou-kousked, saliou-studi, preo, porz-skol, chapel. Mond a ris zoken da zewel ma fri e-barz ar jardrin, eun tamm mad a zouar dindan nebeud gwez avalou ha legumajou e-leiz evid bevañs ar bañsion.

Ar bañsionerien a zeue kazi toud diouz ar parrouziou tro-war-dro : Lomikêl an Trêz, Pluvur, Tremel... Deut diouz ar penn all euz an aroñdisamant, e oan eun tamm an drolig euz ar strollad. Goulenn a reed diganin piou e oan ha diouz peleh e teuen. Respont a reen e oan genidig diouz parrouz ar Vinihi, o lavared ivez e oa bro ar sant braz, Sant Erwan. Ar gamaraded ah estlamme neuze :

-« Hemañ a zo euz bro al Lorou ».

Tra-walh evid beza degemeret mad gante !

Da zeiz eur, en em lakeem ouz taol evid koan genta ar bloavez skol. E roll meuziou ar pred : soubenn ha per poazet. An dro genta din da dañva ar frouez-se. Eun dra ha n'ankounain jamez.

Ar skol a grogas an deiz war-lerh. Or rummad a oe kemeret e karg gand an dimezell Etienne. Eun daou-ugent vloaz bennag e oa... ha... skolaerez lik. Seblanted a reas din e oa gwall-dihras, gand he lunedou braz. Ober a reas diou zarn euz ar hlasad. Ar re "goz" a oe, evel just, lakeet e-barz an divizion vraz. Hag evid ar re "nevez", on dimezell a dleas ober eun dibab en eur zerhel kont diouz on oajou ha diouz ar studiou on-oa greet.

Nebeud goude, e oen lakeet e-barz an divizion vraz ha labourad a reen mad a-walh. Setu perag ma mestrez am hargas aliezh d'ober dibuna o henteliou d'am hamaraded, a vouez uhel, e-keit ha ma ree gand ar re vihan. N'am-eus jamez greet gwall-implij diouz ma galloud. Staga a reen gand al labour en eur houlenn digand pep hini :

-« Gouvezed a rez da gentel ? »

Respontet e veze din beb taol :

-« A-wellig ».

En em lakaad a reen neuze dirag ar paotr hag e talhen al leor digor war ar penn all evid ma hellfe ma hamarad lenn e gentel. Eur wech an amzer, e sonnaen al leor evid harz ar skoliad da lenn re brim, pezh e-nije gallet dedenna evez an dimezell.

Ar bevañs, ma ne oa ket ken dihrozet-se, a oa yahuz ha founnuz a-walh. Ar bara hag an amann ne oant ket disterraet, daoust d'ar brezel. An aotrou Merser n'e-noa kudenn ebed evid kaoud an traou red d'or bevañs. Bez' e-neve êz a-walh kig, lêz hag uou er menajou tro-dro. Ha neuze, bez' on-oa person Plistin, eur beleg leun a vadelez, brudet evid e aluzennou. Hemañ a veze prederiet gand or bevañs. Gand frouez or jardrin, e lakee ouspenn re e hini.

D'ar yaou, e houlenne gand eun deg bennag diouzim dond da rei eun taol sikour dezañ e leh mond da bourmen dre hentchou ar barrouz. Evel ma oan eur peizant, e teuen aliez a-benn da veza dibabet. Ne oa ket diêz al labour. An teir pe beder yaouvez kenta, e tastumem an avalou-mir hag an avalou-chistr. Goude, e serrem ar patatez, ar harotez, an irvin, an harikoïou, tennet en a-raog gand ar person koz.

Ne oa ket red d'an aotrou Person goulenn or zikour da jardrina. Med hen ober a ree moarvad evid on diwall diouz eur valeadenn inouïz. Red eo lavared e tremenem muioh amzer ouz taol, e sal-debri ar presbital, evid er jardrin. Or pae a oa eun adverenn founnuz gand bara fresk, amann, pate, gwestell zeh, koñfitur hag eur wech an amzer eur wastell aozet gand ar garabasenn.

An oberiou a zevosion a zalhe eur plas euz ar henta e skol Sant Jozef. Beure ha noz e lavarem or pater asamblez, e-barz ar zal-gousked, daoulinet ouz troad or gweleou. Beb sadorn d'abardaez-noz, war-dro pemp eur, e rankem mond da govesaad gand ar person koz. D'ar zul, e kemerem perz en overenn deg eur hanter er barrouz. An traou ah achue gand ar gousperou, goude merenn.

Tremen a ris vakañsou berr an Oll-Zent er skol gand eun nebeud skolidi all, re bell diouz ar gêr evid soñjal mond di. Ma vakañsou braz kenta a oe re Nedeleg 1917. An deiz 'raog, e lavaras ar rener e tleem, Lorou ha me, en em gavoud an deiz war-lerh beure da unneg eur e skol Itron Varia Blistin, e leh e vefe unan bennaked evid en em garga diouz or beaj.

Skol Itron Varia Blistin a oa, d'ar houlz-se, eur skol vrudet-tre, e deg leo tro-war-dro, eur skol a genta hag a eil derez evid merhed bihan bourhizien ar hontre troet gand ar relijion.

An deiz war-lerh, dirag ar skol, eur wetur (eur "vis-à-vis"- unan "keñver-ha-keñver"- evel ma veze greet diouti), a oa o hortoz ahanom. Ar paotr harnez a reñkas or pakajou e-barz ar houfr, ha ni 'trezeg Seveon.

War-dro kreisteiz, e rejom eun tamm diskuiz en eun ostaleri vihan, er-mêz a Lannuon. Reizet e oa bet peb tra a-raog. Prest e oa an daol. Ar "paotr-harnes" a stagas e aneval ouz an organell, eul lagadenn houarn er voger, hag a roas dezañ e gerh. Goude merenn e kemerjom adarre hent Seveon.

Mare braz ar hantved

Toud an dud a oar e vez beb ugent vloaz pe bemp bloaz warn-ugent eur "morad ar hantved". An taol lagad a dalv ar boan pa zeu gand eur barrad amzer ar mor da gounnari.

D'an 18 a viz meurzh 1918, e-kerz koan, an aotrou Merser a lavaras dim e vefem divunet an deiz war-lerh beure da bemp eur hanter evid galled arvesti ouz an darvoud-mor ken brudet. Al leh gwella evidom, a lavaras c'hoaz ar rener, a oa ar garreg Vraz, e bord an drêzenn a en em led war bevar gilometr a hirder, dirag Sant Eflamm da Lomikêl an Trêz. Lavared a reas dim ouspenn e tleem en em wiska tomm ha ne vefe servichet lein nemed pa vefem distroet d'ar skol.

Gwelet on-oa bet dija, liez gwech, mareou euz eur vrazder vrao, e-kerz or pourmenadennou sizunieg. Setu perag en em houlennem etrezom hag-eñ e talvez e ar boan mond d'ober an dro-ze. An deiz war-lerh beure, e lakeen ma diou roched an eil war eben, ma diou re loerou, ma diou jiletenn hloan, ar peb brasa euz an dillad am-oa. Ober a rejom ar pevar gilometr etre ar skol hag ar Garreg Vraz, d'an trot. Ar rener a heulie ahanom war e velo. War-dro seiz eur, e oam war al lehiou, harpet ouz ar voger zimant a zispartie an hent diouz ar mor. An taoliou mor a oa sebezuz. Dond a reent da dizaha en eur darza ouz ar voger-harp.

A-greiz-toud, eur barr-mor divent a zeuas da en em frika ouz ar voger on diwalle. Eur pezh tarz spontuz ha gwenn, meur a vetr a uhelder, a zavas 'uz d'or pennou, ol lonkas koulz lavared, a dreuzas toud an hent o tiskar hag o ruillal kalz a vugale-skol. Ha d'he distro, an doenn-vor or pladas toud ouz ar voger-harp.

Spontet gand an aon ar gwas, an aotrou Merser a reas buan-buan ar galv. Meur a skoliad a oa bloñset, med netra grevusoh. Distrei a reem d'ar skol, d'an trot, evel ma oam eet. Trempet e oa on dillad ha krena a reem gand ar riou. Erru er skol, ar rener a zastumas toud ar zervijerien a oa libr : ar geginerez hag he matez, hag a reas kerkent labour eun iñfirmierez, an dimezelled Anna hag Etienne. Ar jardriner a oe kaset d'an ospital da houlenn sikour diou pe deir seurez.

Ha setu-ni toud noaz-beo, ha frotet or hrohenn dim gand nerz. An dimezell Etienne a zouble he daoulagad gand mez-fur dirag korvou noaz ar re gosa euz ar vandenn hag a zlee kaoud war-dro pemzeg vloaz. Diêsaad a reas an traou evid meur a hini evel don ha n'o-doa tamm dillad cheñch ebed. An ospital a roas dim rochedou-noz. Servijet e oe dim eur banne kafe bero ha chom a rejom en or gwele beteg kreisteiz, evesaet gand ar seurez iñfirmierez.

Da greisteiz e oe roet dim bragouigou iskiz e mezer gwenn, serret dindan on daoulin gand daou vouton, jiletennou ha bereou bask : dillajou laz-sonerien ar skol ha ne reent ket netra abaoe ma oa krog ar brezel. E-kerz an abardaez, ar bañsionerien ar wella pourvezet a brestas eul lodenn euz o dillad d'ar re n'o-doa tamm dillad fresk ebed.

A-benn tri devez, e oam sur da gaoud heol peogwir e oa devez kenta an nevez-amzer. Diskenn a rejom d'ar zal-debri e bragou berr ha war gorr or roched. D'an diskrog deg eur, an heol ne oa ket aze. Bez' e oa sur a-walh eur gaou bennag en alamanak. Unan diouzim a houlennas gand an dimezell Anna, or mestrez studi, displega dim perag. Pell diouz respont dim, or hasas gand herr d'ar zal-gousked da lakaad on dillajou gloan. Goude merenn, e oe greet eur gentel da doud ar skolidi war an amzer hag e froudennou.

Pask kenta

E-kerz ma bloavez-skol 1918 e Plistin, e ris ma fask kenta ha ma hoñfirmasion. Ar retred tri devez a oe renet gand or person koz hag eur seurez euz skol an Itron Varia.

Eun tri-ugent vad e oam, paotred ha merhed skoliou prevez ha lik asamblez. Med hervez ar hrenlavar koz "arabad meski an torchouriou gand ar serviedou", dimezelled bihan an Itron Varia ne zeujont ket ganim.

An devez kenta oa an hini a gontas dreist-oll. Diouz ar beure, e oe an arnodennou katekiz. Greet e oe daou rummad : unan e peb penn diouz an iliz. E-kreiz ar beurevez e oe greet eun diskrog : ar plahed bihan e jardrinou an Itron Varia hag ar baotred en hini ar presbital. Da greisteiz, ar seiz pe eiz skoliad euz Sant Jozef o-doe an enor braz da zebri o merenn ouz taol an Ao. Person. Predet mad e oem gand ar garabasenn.

An abardaez e oe roet dreist-oll da zegouez an arnodennou. Da bep hini e reñk hervez e veritou. Hag e oe eun drugar evidon d'en em gavoud da genta gand unan euz ar plahed. Pell-pell e oa bremañ amzer skol Sant Erwan Landreger !

E-pad ar retred, e resevis eul lizer gand ma mamm a lavare din eh errufe derhent ar gouel. Chann Lorou a zeufe ganti peogwir Erwan a ree e drede pask hag e goñfirmasion.

D'ar zadorn da noz, e teuas da weled ahanon hag e roas din eun habit nevez, eur roched wenn, eur re botou-ler, loerou, eur vreh-wisk, eul leor overenn bask, hag evel just eur chapeled.

Va mamm ha Chann Lorou a oa diskennet e-barz "Ostaleri ar veajourien". Prometi a rejont deom eh afen da vernia gante, an deiz war-lerh.

O veza ma kreske heb ehan prizioù traou an douar, ma mamm n'he-doa ket liardet ouz an dispignou. An deiz war-lerh beure, e oan souezet o wiska ma habit nevez. Ankouaet am-oa kreski, moarvad ! Evuruzamant, eur seurez a reas din eun nebeud krafioù ha ne vezent ket gwelet. En iliz, pep tra ah eas heb an disterra distres. Va mammig a oa kalz a stad enni o weled he mabig e penn ar brosesion... Ha pa oe echu, e oa gand Chann Lorou o hortoz ahanom dirag dor-dal an iliz.

Mond a rejom gand hent an ostaleri. Seblanted a ree din e oan o voulha eun huñvre vuzuduz. An taoliou a oa goloet gand doubierou gwenn. Ar zervijerien o-doa zoken kemeret ar boan da lakaad eur boked fleur dirakom. Dreset e oa an traou : tri asied, diou werenn... Pesort friko ! gand eun toullad meuziou... Pennou-pred, pesked, kig dous ha mad, gwestell e-leiz. Diskarget e oe gwin dim : Lorou ha ne grede ket dinah, ah evas eun tammig re, heb en em renti kont.

Echu ar friko, e tistrojom d'ar skol evid ar gousperou ha goude ma mamm a oe aotreet gand ar Rener d'am derhel da goan... e-barz an ostaleri. Ar pred a badas eun tammig re, ha diwezad e oa pa zistroen d'ar skol. Den ebed er porz ! Mond a reen gand ar skalierou da zevel d'ar gambr-kousked. A-boan am-oa savet eun nebeud dereziou, en em gaven dirag ar Rener a oa o paouez alumni ar goulou. Stumm ar fum a oa warnañ o kredi e oan er memez stad hag al Lorou.

Gourhemennou a reas din mond war ma daoulin. Eñ, ken plên ar peurliesea, am beuzas e-barz eul liñvadenn a gomzou rebechuz, o lavared din am-oa greet eur pehed marvel ha ne helljen ket beza koñfirmet an deiz war-lerh. Klask a reen, en em zidamall, en aner ! Spontet e oan. Ne hellen ket beza bet greet eur pehed marvel peogwir n'am-oa evet nemed dour en ostaleri.

Lakaad a ris em fenn tehel kuit dre ar prenest evid adkavoud ma mamm en ostaleri. Siwaz ne hellen ket taped ar stolikez. A-greiz-toud, e teuas din ar zoñj da vond da weled ar person koz ken madelezuz. Eñ, da vihanna, a gomprenfe ahanon.

Kemer a ris unan euz ma botou-koad ha taolen diouz toud ma nerz er prenest. Eur werenn a strinkas a-dammou ha ma botez en em gavas er porz. O kleved an drouz, ar rener ah erruas, taeret-ruz.

-« Da goves, dioustu... Ha me a roio dit an absolvenn hag e helli ober da goñfirmasion warhoaz », a lavaras din evid am digounnari.

Med kement e fuc'hen, ma responten :

-« Nann ! n'am-eus greet pehed marvel ebed ! N'am-eus ket da goves. Felled a ra din mond da weled an Ao. Person. Eñ, da vihanna, am homprenno ».

Ar Rener a zeuas memestra a-benn d'am zioullaad. Mond a reas 'n e goazez, kemer a reas ahanon war e varlenn, ha kaozeal a reas din gand douster. Toui a reen dezañ n'am-oa evet nemed dour. An aotrou Merser a zerras ma botez a oa er porz hag a reas din prometi ne gomzfen da zen ebed diouz ar pez a oa c'hoarvezet. Hag eh asuras din e hellfen ober ma hoñfirmasion.

An deiz war-lerh, bugale ar paskou a yeasas adarre gand hent an iliz. Houmañ a oa leun-kouch. En abeg d'ar brezel ne oa bet beteg neuze koñfirmasion ebed abaoe 1914.

Ar veaj e diavêz bro

War e ziwez e oa ar bloavez-skol. E hanter miz Gouere e oam ha tostaad a ree devez pourmenadenn ar bañsionerien. War gement-se, abaoe eun nebeud deziou, e veze klevet meur a gaoz. Komz a reed diouz eur valeadenn war vor. Eur hanfard e-noa klevet an Ao. Merser o komz gand an dimezell Anna diouz eun treuz bennag war eur vag. Eun all, an dimezell Merser hag ar rener oh ober ano diouz ar mor.

Ar mister ar husa a rene ha den ne deue a-benn d'e zistroba. En em lakaad a rejom 'ta d'ober eun enklask hag a jomfe en e zav. Eur hamarad a guriuzas ar seurez iñfirmierez. Poan gollet... Ne houeze mann ebed. Eur yaouvez, goude merenn, eun deg bennag a bañsionerien a oe pedet da vond da zerri hariko glaz gand ar person koz. E-pad an adverenn, e klaskem ivez ha gouvezed a ree eun dra bennag. An den mad hag a houeze koulskoude diouz toud pez ar hoarveze er skol, ne lavaras na grig na mik. Daoust da ze, gand an nebeud a hovezem, eh huñvreem dija eun avañtur vraz war ar mor.

Ha setu, eun devez, ar Rener a embannas o-doa ar "skolidi diavêz" koñje en abeg da valeadenn ar bañsionerien. An deiz war-lerh beure, e lammem er-mêz or

gwele, heb diêz ebed. Med ar beurevez en em zilas evel an ordinal... er skol. Da bred merenn adarre, mann nevez. Ne oa nemed o vond er-mêz ar zal-debri eo ma lavaras dim ar Rener eh afem kuit war-dro eun eur hanter hag e vefem souezet.

Krog e oa on nervennou da ziskregi pa guitaem añfin ar skol. An dimezelled Anna hag Etienne a gemeras e karg ar strollad hag or hasas da Doull-an-Herri : eur porz bihan war ribl sav-heol an Douron, eur sterig a zisparti Aochou-an-Hanternoz diouz Penn-ar-Bed.

War bord ar hae, eur vag gand eun den enni a oa ouz or gortoz. Or mestrezed a zivizas gand paotr ar vag, hag ar bagad kenta a oe pedet da zével el lestr da heuill an dimezell Anna. A-boan he-doa kuitaet ar vag ar hae, ma welem an dimezell Etienne o taoulina hag o kemer he chapeled. An dimezell Anna a fizias ennom eh aspede an Dimezell Etienne an Ao. Doue evid ma hellfe an treuz en em ober a-blên-kaer. Hag e stagas gand eur hantik a ziskanem d'on tro toud asamblez.

E-pad eun nebeud munutennou e oam pirhirened o vond d'an Douar Zantel, o fizioud or horv hag on ene da Zoue ha d'e Zent. Siwaz !... ar veaj ne badas nemed eur hard eur, hag an treizer a zouaras war ribl all ar ster en Enez-Wenn.

Ar vag a zeuas en-dro evid mond da gerhad ar re all diouz ar strollad. An dimezell Etienne a nahas sevel er vag hag a zaoulinas evid an eil gwech. An treizer a reas eta eun drede beaj eviti... rag treuzi a reas añfin war urz an Ao. Merser. Diouz kleved, e hlasae gand an aon pa ranke mond war vor... ha neuze e oa trubuillet gand ar zoñj da veaji e kompagnunez eur gwaz dianav.

Pa oe en em adkavet toud ar skolidi war ribl Penn-ar-Bed, e kemerem hent an Enez-Wenn, eur gouent diouz ar haerra renet gand seurezed ar Spered Santel. Ar re-mañ on degemeras mad avad hag a ginnigas dim eun adverenn roue. Ha ni goude d'ober eun dro e-barz ar park hag ar jardrinou. Ar sivi a dennas dioustu or zellou. Aotreet e oem da zastum hiniennou.

Evid ar wech kenta em-oa lakeet ma zreid en eun departamant all : Penn-ar-Bed.

Palmares ar prizioù

An deiz diweza a'r bloavez-skol a oa ivez hini ar prizioù. Ar skol he-doa tri glas, diou zivizion e pep hini, ha pep hini he-doa he "falmares". Toud tud ar skol a oa aze : ar Rener, or mestrezed, or person koz ken madelezuz, hag eun nebeud a gerent deut da gerhad o hanfarded. Ar gouel a grogas gand daou bez-c'hoari. E-touez ar strollad kenta a hoarias e oan : "Paotred ar moustachou". Da gloza ar gouel e oe embannet anioù al loreidi. Kleved a reen an Ao. Merser oh embann ma ano gand eun nebeud a brizioù kenta hag eil prizioù a oe roet din. Evid echui, am-oe ar priz-dreist. Kontant braz e oan med ne houezen ket pezh a zinifie ar ger-ze. Mantret oll, e saven 'n em zav hag e kemeren hent al leuren, evel en eun huñvre. Ar rener a lakeas din eur gurunenn lore war ma fenn hag a ginnigas din eun nebeud leorioù ruz gand eun troh alaouret.

Kurunet ha resevet ganin ma friziou, e chomen koulskoude en diaskren. An dimezell Etienne a gomprenas sur a-walh ma abafter hag a deuas d'am zikour. Poked a reas din stard war ma diou jod hag e tizroen d'am flas dindan kenyouhadennou lod euz an dud hag ivez sellou aviuz meur a hini all.

An archer

Eun nebeud deiziou a-raog ar vakañsou-eost, em-oa bet eul lizer digand ma mamm. Lavared a ree din dond d'ar gêr asamblez gand Erwan Lorou hag a heuille ahanon dre-oll. Rei a ree din da hovezoud e tleen mond e-barz an treñ e Plistin ha diskenn e Lannuon el leh ma vefe eun tonton din, ha n'am-oa c'hoaz gwelet morse em buhez, o hortoz ahanon. Ober a rafe war ma zro beteg an deiz war-lerh hag aze unan euz ma breudeur a deufe d'am herhad gand ar charabañ.

War he lizer, ma mamm a lakaas gand evez din ano hag adres an tonton :

“Fañch ar Goaziou, ru Ti an Archerien, Lannuon”. En ma fennig an ano ru-ze a zlee lavared a oa ma zonton eur jañdarm. An dra-mañ am chale eun tamm. Bez' am-oa eun aor spontuz diouz an archerien. Soñjal a reen e oa an aotrou-ze, daoust dezañ da veza eun tonton din, eun den da zouja.

An aotrou Merser a enskrivas or pakajou hag a gemeras or billejou. An treñ bihan a lakeas ouspenn eun eurvez d'ober ar c'hwezeg kilometrad hent etre Plistin ha Lannuon. Gwir eo e reas daou ehan. War gae ar gar, e Lannuon, jañdarm ebed. Nag an disterra “kepi” en dremmwel ! Ha me da ouela ! Ha Lorou a glaske ma frealzi gwella ma helle.

-« Dale e-neus marteze an archer. Gwel 'ta, ema marteze o redeg war-lerh eul laer bennag pe zoken eur muntret. Med na rez ket gwad fall, dond a raio ».

Neuze e welis eun tammig paotr koz, gand eur baro griz, o tostaad ouzom.

-« N'eo ket te eo Jefig Seveon, dre zegouez ? », emezañ. Evel ma asanten, e lavaras din adarre :

-« Me eo da donton Fañch ar Goaziou ».

-« Med, an tonton a zlee dond d'am herhad a zo eun archer. Ma mamm he-deus hen skrivet din war he lizer diweza ».

-« Nann, nann... te a zle beza komprenet a-dreuz. N'eo ket dre ma'h on o chom e ru “Ti an archerien” eh on eun archer. Deus 'ta. Mond a ran da gerhad da val ».

Dipitet e oan memestra diouz ma n'am-oa ket eun tonton jañdarm, dreist-oll dirag al Lorou a dage da hoarzin. Kleved a ris adaleg an abardaez-se e oa ma zonton ar Goaziou eur retreted euz an hent-houarn. Setu ma tlee evelato beza douget eur hepi. Tremen a reen an abardaevez hag an nozvez gand ma zonton ha ma zintin. Houmañ he-doa aozet eur goan euz ar henta. An deiz war-lerh, ar Jolu a zeuas d'am herhad.

Yao ! ha ni 'trezeg Seveon.

Sant Jo

Ma hamarad Erwan Lorou ah echuas aze gand e studi. O paouez kaoud e drizeg vloaz e oa. Lakeet e-noa en e benn e oa desket a-walh evid ober eur peizant a-zoare. Evidon-me, greet ganin ma studiou ar henta derez ha dre ma ne brepare ket skol Blistin nemed ar zantifikad, ma mamm a zivizas ma lakaad e skolaj Sant Jozef e Lannuon (anvet Zant Jo ar peurlies).

Ma hanter-hoar Chann ar Jolu, ma hoar Frañsin ha ma breur Yann o chom war ar menaj, e oa tra-walh a labourerien e Seveon.

Ar peadra a greske gwelloc'h-gwella. Person ar Vinihi a reas 'ta an difreou evid ma vefen degemeret e Sant Jo. Rei a reas d'am mamm priz ar bañsion ha listenn an troñsrad-dillad a oa red kaoud. E penn kenta miz Here, setu-me 'ta o vond en hent 'trezeg ma zrede skol. Gouvezoud a reen dija petra 'oa ar bañsion hag en despet d'am unneg vloaz, n'am-oa doan ebed o vond d'eur skol dianav evidon.

E Sant Jo, e oem degemeret gand eur beleg koz a roas dim toud an doareou gwikefrea. Ar vountadeg e-barz an trepasou a vefe diêz da gonta. Daou-hant skoliad yaouank ah errue, an deiz-se, hag e-touez, eun hanter-kant bennag a reou nevez.

Ma mamm a reñkas ma zraou hag e taolas pled he-doa ankouet ar pod hag ar plad gwalhi. Evuruzamant an tonton ar Goaziou a oa aze.

Mond a reem goude da vureo ar hontchou da baea eun "a-raog" evid an tri miz kenta. Ma mamm a houlennas rezizou war briz ar pevar rumm pañsion. Re ar bañsior genta o-doa, ouspenn ar zoubenn hag ar meuz braz, eun digor hag eun dibenn pred. Re an eil rumm n'o-doa digor ebed. Dibenn-pred ebed evid an trede rumm. Ar pevare ne helled tenna dioutañ nemed ar chistr : eur bañsion gand dour ! Ar priz a oa evel just hervez peadra pep hini hag evel-se e veze êzetoh reñka ar skolidi.

Ma mamm he-doa he lorh. Ne felle ket dezi gweled he mabig en eur reñk izelloh evid hini ar beizanted all euz heh anaoudegez.

-« Ma mab a zo eur skoliad a labour mad. Bet e-neus bet ar priz kenta e Plistin. Med silwink eo e yehed. Evel ma ne ev ket chistr, e plijfe din e lakfeh 'nezañ e-barz an eil pañsior gand priz an drede, o veza ma ev dour ».

Dare e oa bet din sevel ma mouez pa glevis lavared e oa dister a-walh ma yehed. Anad mad e oa ne oa ket gwir. Med Soaz Seveon, evel eur beizantez vad, a hoveze chipotal. E gwir, an teñzorier ne reas ket an disterra abeg. Salvete e oa enor ar vammig vad !

An deiz war-lerh en em gaven e-barz ar zeizved klas gand hanter-kant skoliad all. Abalamour d'an niver, e oe red ober daou rumm. Ar miz kenta a oe eur "mare da weled" evid an diou zeurez a hellas evel-se en em renti kont diouz derez pep hini. Adaleg ar pemzeg devez kenta, meur a skoliad a zleas kila e-barz an eizved klas. Darn all a oe kaset war-du eur helhad berr a dri bloaz, anvet e Sant Jo, kelhad ar galleg. Gwir eo, eh heulied e-barz eul lodenn euz programm ar "brevet", gand ouspenn kenteliou koñvers ha labour-douar.

Niver skolidi ar zeizved klas ah ee war digreski a zeiz da zeiz. Da fin miz Here, ar vestrez-skol a lavaras din e oan barreg da zeski al latin. D'al lun war-lerh e oan lakeet e-barz ar c'hwehved klas gand eur hamarad all.

Or helenner, an Ao. Korr, unan gwall-hloazet euz ar brezel, a roas dim ol leoriou skol hag en o zouez an "deveris" (De viris⁵). Med evidon-me, mab d'eur peizant, e talhen al latin evid didalvoud, mad nemetken d'an danvez-beleien er hloerdi braz. Or helenner a gendalhas e genteliou heb soursial ouz an daou nevez-deut. Ne hellen ket dond a-benn da daped ma dilerh, daoust din da vond war-raog enoruz a-walh evid toud an traou all.

Nebeud amzer goude, ma hamarad a nahas krenn derhel gand al latin. En em repui a reas e-barz "kelhiad ar galleg", war guzuliou e dud, da vihanna hervez ar pezh a lavare.

Ar grip spagnol

Ne oa ket eur miz ma oa krog ar skol. Eun deiz, kerz diskrog kreisteiz, ar hloh a zonas hag ar vistri studi a bedas ahanom da vond da zal-oueliou ar skol e leh ma oam gortozet gand "Prefed an urz" hag ar pennrener. Lavaret e oe dim e tleem kuitaad ar skolaj dioustu, evid eun ehan-skol a eiz deiz d'an nebeuta. Ar skolajou o-doa bet urz digand Prefed Aochou-an-Hanternoz da zerri dioustu o veza ma oa ar grip o redeg dre-oll.

Ar grip-se, anvet "grip spagnol", a reas maleuriou kriz-meurbed dre ar Frañs a-bez. En or parrouzig ar Vinihi, e oe war-dro deg o vervel. Kaset e oem 'ta d'ar gêr, war an eur..., ha, ma feiz, ne oam ket dilaouen diouz ar vakañsou dihortoz-se. Pep hini a rankas en em glask evid mond d'ar gêr. Kemer a ris war droad hent Seveon, a-gevred gand Fañchig Goarin diouz Kerivoalen. Ober a rejom c'hwezeg kilometr e peder eurvez bennag.

Ar peoh

Prefed an urz hag ar mestr-studi a oa en o zav dirag an daol war al leurenn, e-barz ar zal-debri. Gand or merenn e oam. Ar prefed a hejas e glohig evid goulenn ganim rei peoh ha sevel en or zao. E vouez leun a from a lavaras : « Ma bugale, echu eo ar brezel ».

Gouvezoud a reem, dre ar skolidi diavêz, abaoe eun nebeud deiziou, eh ee an armeou unanet war-raog. Al linennou alamant a oa bet peurdoulet e peb leh hag or zoudarded a adkemere an dachenn o-doa bet kollet. Med abaoe ken pell en em reem diouz ar brezel daonet-se ken on-oa poan kredi e oa echu. Toud ar skolidi a davas eun netraig. En em zelled a reem, bamet :

-« Piou e-neus gonezet ? »

⁵ De viris : De viris illustribus Romæ : eul leor a veze implijet a-benn ma veze ar vugale er 5^{ed} klas. (Diwar-benn tud veur Roma).

-« Ar Frañs, evel just, ha Bro-Zaoz, hag an Amerik. Koll eo an Alamagn », a zisklêrias ar Prefed.

El leh-se, tonket da brejou debret heb kaozeal, gand hepken diridign al loaiou, gand an disterra kaoz kastizet dioustu, or joa a strakas evel eun taol kurun e stlakadou daouarn ha youhadennou. Darn euz ar baotred a zavas war ar bankou hag a grias : « bevet ar Frañs ! D'an traoñ ar "Voched" ! Lamm int ». En eur momedig a beoh, ar Prefed a lavaras adarre :

-« Goude kreisteiz, ne vo ket skol ; mond a raim toud da bourmen e ruiou Lannuon. Ha bremañ "Deo gratias" ! » Aotreet e oam evel-se, dreist-reol, da gomz ha da ziskouez ol levez. Foll e oe !

Goude merenn, eh eem 'ta etrezeg plasenn kreiz-kêr. Du e oa gand an dud. Bez' e oa ivez tud karget diouz an urz. Ar vugale-skol a oe lakeet er reñkou kenta, dirag an ti-kêr. Eun nebeudig goude, e teuas mêt Lannuon war ar balkon, heuliet gand eun nebeud a bennou-braz ha person koz ar barrez.

Ar mêt a bedas an dud da devel ha gand sikour eur horn-mouez, e veulas gand fouge or zoudarded, or breudeur-stourm, famillou ar re a oa bet lazet ha toud ar re a oa distroet gloazet diouz an dachenn vrezel. Poueza a reas war ar red evid toud ar Frañsizien d'en em adunvani, diskouez dreist-oll e tlee toud ar hostezennou politikel en em voda hiviziken en eur gostezenn hepken : hini ar Frañs.

Strakal a reas an daouarn. Ar mêt a bedas ar person koz da gomz d'e dro. Meuli a reas nerz-kalon ar zoudarded. Evid echui e houlennas diganim pedi evid toud ar re o-doa roet o buhez evid ar vro. Neuze, ar mêt hag ar person en em vriatas evid diskouez skwer vad an adunvaniez vroadel. Dorn-ha-dorn, e stagjom da gana ar "Marseillaise", adkemeret a-unvan gand an daou pe dri mil a dud bodet war ar blasenn.

Er brasa dizurz e tistrojom da Zant Jo. Ar skolidi genta a oe distro d'ar skolaj war-dro peder eur hanter ha droed o-doa bet d'ar hafe. Ar re ziweza ah erruas diou pe deir eurvez goude. Med deiz an "Armistis" ne oa ket posubl kastiza ar skolidi. Me ah eas ti ma zonton ar Goaziou, sur da veza degemeret mad.

Tok-meloñs ar patriach

Chan-Mai Boujet a oa o chom en eun ti kaer e "Kig ar Grez", e penn all ar Vinihi, tost da Vilin Zeh. Chann-Mai a oa eur bourhiz, hag e-nevoa kalz a zouarou en e gerz. Ne laboure ket. Beb an amzer, e ree war-dro e blantadegou pin ha sapin. Dougen a ree ordinal eun tok-meloñs war e benn. E varo a batriach a ziskenne kalz izelloh evid e vruched. Bet e oa bet mêt e-pad liez bloaz, dreist-oll e-pad ar brezel.

Beb beure, e hede an hent koz roman evid mond d'an ti-kêr. Tremenn a ree dirag Seveon en e wetur skañv, staget outi eur marh-troter bihan. A-wechou, e harte da houlenn hag-eñ ne veze ket a gomisionou evid an ti-kêr pe ar presbital. Chann-Mai a oa eun den a galon vad, êz e oa e werz-butun ha plijed a ree dezañ c'hoarzin ha farsal.

E-pad ar vakañsou, a-boan ma vijen distroet d'ar gêr, e veze fiziet ennon mond da vêsa ar zaout, e-leh ma hoarezed ha ne blijje ket kalz deze ar garg-se. Degouezed a ree din aliez kas ma zaout war-du douarou Chann-Mai e leh ma oa gouliennou leun a yeot a-hed an hent-houarn. Galled a ree ma loened peuri sioul ; an hent ne oa ket pleustret nemeur, pezh a roe din amzer da gaozeal gand Channig, merh dudiuz intañvez ar Gag, merourez Boujet koz.

Pa veze hemañ oh ober tammou labouriou en eur blantadeg, kerkent ha ma wele ma zaout, e vlejje a-bouez-penn. Ma loened a jome heb taskagnad, o klask a be du e teue an hini a gomze en o yez. Chann-Mai en em boste e-kreiz an hent, hag a zave e zivreh d'an neñv, o hejal e dok-meloñs.

Pa welent ar spontaill-ze, ma zaout, ha dreist-oll an annoarezed, pennfollet, en em lakee da vreskenn en eur redeg a beb tu. O dastum a-nevez a oa eun truach. Mond a reen, droug ennon, med en abeg da oad ha reñk an torr-reor-ze, ne greden ket diskouez ma imor fall. Ar patriach, kontant euz e farsadenn, a halve ahanon hag a roe din eur gwenneg pe daou evid ma honforti. O degemer a reen muioh pe nebeutoh, en despet din.

Eun devez koulskoude, pa oa Chann-Mai o paouez adober e daol zod, e nahis e werz-butun hag e krogis en e veloñs, en eur lavared dezañ :

-« E gavoud e refet war an hent, el leh ma vin deut a-benn da zastum ma zaout ! »

Ha me kuit, an tok em dorn.

Deg munutenn goude, mevel Chann-Mai hag a oa ivez e jardriner, a zeue d'am zikour da zastum ma loened.

-« Jenet eo ar patron », a lavaras din, « ha keuz e-neus da veza trechalet ahanout. Ma harget e-neus da ziwall da zaout dit e-pad an amzer ma'h i da gemer eur bannah kafe gantañ ».

Ar patriach ha n'e-noa ket kredet lavared an dra-ze d'e wreg, am gortoze, me... pe an tok, e toull ar porz. Lakaad a ris dezañ e veloñs war e benn.

-« Ar re goz, gweled a rez, a gouez a-wechou en o bugaleaj ».

-« Aotrou Boujet », a responten, « n'on ket deut amañ da zegemer digareziou. Ar hontrol an hini eo ; me eo a ra deoh ma re... N'am-eus ket gouvezet 'n em gontroli bremaig ».

-« Na gomzom ket diouz se », emezañ, « ha deom da daped beb a vannah kafe ».

Ar pod-kafe a veze dalhmad war ar fourno. E wreg or zervijas. En eur gas ahanon beteg an hent, e tennas diou dablettenn chokola diouz e hodell hag o roas din.

-« Kemeret am-eus aneze e-barz ar bufed. Spi am-eus ne daolo ket ma gwreg pled ouz se. Debr aneze ha na lavar mann ebed da zen. Bez dizoursi, laosken a rin da zaout e peoh hiviziken ».

-« Keuz am-eus, Aotrou Boujet », a respontis, « med, e Seveon, ne weler ket chokola aliez. Ha ne hellan 'med o rei d'am mamm ha lavared dezi piou e-neus o roet din ».

Ar zizun war-lerh, ar patriach a oa en eur verjez, e veloñs atao war e benn. Pa welas ahanon e tennas e dok hag e lakaas eur gasketenn goz. Dond a reas d'am haoud :

-« Kontant on eh out deut en-dro. Poan am-ije bet ma n'am-ije ket adgwelet ahanout. Gouvezed a rez, Jefig, setu ouspenn hanter-kant vloaz, n'am-eus ket lakeet eur gasketenn. Ma welfe ma amezeien ahanon er stumm-ze, e lavarfont oute o-unan : " An aotrou Boujet e-neus kollet e benn". »

Redeg a ris 'trezeg ar verjez, kemer a ris e veloñs hag e lakais anezañ a-nevez war e benn.

"Gang" ar fals-voneizerien

E penn kenta an XX^{ved} kantved ne oa koulz lavared nemed peziou eur gweneg ha daou-wenneg en arem. Ar pez a wenneg e-noa ment ar peziou a ugent real bremañ. Ar pez daou-wenneg e-noa eun trouz kalz brasoh. Ma hovezem petra 'oa ar gwenneien, n'on-oa ket kalz aneze. Ma yalh a veze dalhmad goullou dizesper. Hini ma breur Chann, ne oa ket e gwelloc'h he stad. Hag an Emilig, ma amezeg ha kamarad, a oa mad da veza lakeet war ar memez linenn ha ni : hini ar vugale dizarhantet.

Beb sul, or mamm a roe dim daou wenneg da vond d'an overenn d'ar Roh : eur gweneg evid ar gador hag eun all evid plad an Anaon, a ankouaen, gwir eo, aliez a-walh. Eur zulvez d'abardaez, Chann, Emilig ha me en em gavem e-kichen an hent-houarn. Emilig a dennas tri bez eur gweneg diouz e hodell.

-« Me am-eus eun ide », emezañ, « ma lakfem eur gweneg war ar raill, e kemerfe marteze ment eur pez daou wenneg. Evel-se e hellfem e rei da blah koz ar hadoriou a zo berwel hag e rentfe dim eur gweneg all ».

Chann ah eas da gerhed eur gweneg en e gambr. Evid eur wech, am-oa lakeet ma gweneg diweza e plad an Anaon. Emilig a brestas unan din. Lakaad a rejom or peziou war ar raill, en eur lezel eun deg metrad bennag etre pep hini. Ma breur e-noe an ide vad da boza e hini dirag kloued ar verjez da lavared eo en eul leh meinek.

En e uhella e oa or from pa zeuas an treñ bihan. War an taol, ne welim netra. Emilig ha me a glaskas, en aner, or pez e-mesk yeot ar verjez. Chann a gavas e hini e-barz ar haoh-saout. Pladet mad e oa bet. Galled a ree bremañ beza kemeret marteze evid eur pez daou wenneg. Diwar neuze e oa bet adhreet an taol meur a wech, med ne zeuas ket aliez da vad. A-wechou e kavem daou bez a-ziwar dri. Darn dioute hirgelh gand o skrivaduriou diêz da lenn. Ha koulskoude ne gollem ket kouraj. Beb sul, e lakeem or gwenneien en eur stumm disheñvel, e spi da gas on taol da vad.

Dre forz klask an tu, e savas en or spered eun ide vurzuduz : pega ar peziou war ar raill gand eun tamm mastik. Burzuduz e oe an efed. Da genta, e kavem toud or peziou ; d'an eil, e vezent pladet mad ha mired a reent furm eur helh. Ganet e oe "gang" ar fals-voneizerien.

Evid kavoud tro d'en em denna, gand frouez or froderez, daou dra a oa a-walh : o rei da blah ar hadoriou e iliz ar Roh pe da Chann-Vari Nouel a zalhe eur stal spiserez e Sant Renod.

Chann-Vari a oa oajet ha ne wele ket kalz gwelloh evid plah ar hadoriou. Gwerza a ree dreist-oll ar barrennou brudet anvet "reglis", daou wenneg an tamm. D'ar zul war-lerh e krogas an trafik.

Mond a ris da di Chann-Vari da houlenñ eur varrenn "reglis". Kinnig a ris dezi ma fez. Leun a fiziañs, ne zellas ket outañ. Gand plah ar hadoriou e oe greet an heveleb taol... Bamet e oam. On ijin a oa o vond da zaougementi or peadra. Kemer a reem ar brasa evez. Mond a reem, pep hini d'e dro, d'ar stal spiserez. En iliz, unan hepken a roe eur gwenneg pladet. Med diouz eun abardaez da noz, ar Chann-Vari 'vad ah anzavas he diskred d'he merh Karolina :

-« Drol eo », emezi. « E Seveon e tleer rei kalz a wenneien d'ar vugale, er maremañ. Bep sizun Chann ha Jefig a deu da brena "reglis". Beb an amzer eo Emilig. Estonuz eo an dra-ze rag a-raog n'o gwelen nemed diou pe deir gwech ar bloaz ! »

Karo, evel ma reem diouti etrezom, a zigoras tiretenn ar moneiz. Tenna a reas toud ar moneiz er-mêz, lakaad a reas toud ar peziou daou wenneg diouz eur hostez hag e tizoloas or peziou trafiket. Daouzeg a oa aneze. Evid en em ragevezia e pouezas aneze war balañsou ar butun. Ma 'n-oa kresket ledander ar peziou, ar pouez, hañ, a jome rik bepred an heveleb hini.

-« Reñket am-eus da voneiz. Bugale Zeveon o-deus bet, a gredan, arhant digand o zintined. Med gweled a rin an dra-ze unan euz an deziou-mañ, rag ranka a ran mond da labourad da Zeveon warhoaz ».

An deiz war-lerh, e hortozas en em gavoud heh-unan gand Chann evid e gemer a-gostez. Tenna a reas an daouzeg pez diouz he godell. Chann a gomprenas dioustu e oa kontet bremañ deziou ar "gang".

-« Dal da wenneien ha re Emilig. N'ho-peus ket a vez o trompla eur paour-kêz koz ? Ma lavarfen an dra-ze d'ho mamm, e hellfeh kaoud tomm d'ho pastell-dreñv. Med Soaz a zo mad ganin. Setu ma ne lavarfen netra. Hag ar reglis a vo war ar marhad. Med arabad deoh adkomañs. Hag evid pez a zell ouz an Emilig, e welin ivez eun deiz bennag hag e klevo ano diouz an afer-ze ».

Ar gang a oa skoet e varo en e benn. Chann a oa izel mantruz e fri. Gwelet am-oa Karo o tebati gand ma breur, hag ar beurevez-se, er hontrol diouz ma hustum, n'am-oa c'hoant ebed da weled ar goantenn Karo.

Person ar Roh, pa gonte e fin ar zizun arhant an iliz, a veske mesk-ha-mesk hini ar hadoriou gand hini ar hestou ha kef ar Werhez. An diou zizun genta, e evez ne oe ket dedennet. On tri gwenneg bihan ne gontent ket kalz e-keñver ar bern a-bez. Eur zulvez, Doue hepken a oar perag, ne veskas ket e wenneien, hag evel Karo, e reas daou verniad. Taol a reas buan pled e oa lod aneze ha n'eh eent e neb rumm ebed. Selled a ree spiz ouz an arhant en eur verad aneze, heb konta.

Soñjal a reas eur pennad er Marichal... med hemañ n'e-noa na bugel na mous. Ober a reas gervel plah ar hadoriou.

-« Sellit, setu aze peziou eur gwenneg hag a zo bet pladet ha kresket. Sur mad eo marmouzien o-deus ho tromplet. Me a garfe mad anaoud ar farserien-ze ».

-« Douetañs am-eus eun tammig », a respontas plah ar hadoriou. « Pa roont din o fez moneiz, bugale Zeveon hag o hamarad, a bleg ordinal o fenn ha kerkent ha ma vez troet ma hein, en em lakaont da hoarzin etreze. Ne vijen ket souezet e vijent kabluz ».

-« Kerkent ha disul, ma teuont d'an overenn, lavarit da Jakez, ar chasgeu, mond ganeoh a-raog errued beteg enne ».

D'ar zul war-lerh, e oam diwezad en overenn. Or plas kustum a oa kemeret. Red e oe dim en em lakaad tri reñk a-dreñv. Plah ar hadoriou 'n em rentas kont. Pa'h erruas en or reñk ordinal, e reas sin d'ar chasgeu. Pa weljom anezañ o tond e-touez an dud fidel gand e habit ruz, e dok daougorneg hag e ganenn ebena, e roas Emilig din eun taol ilin :

-« Serrom buan or peziou ha kemerom euz ar re wir. Jakez a zo o tond evidomni ».

Pa zeuas plah ar hadoriou d'or havoud, ar chasgeu araoki, Jakez a gemeras anezañ. Trei a reas or gwenneien, o mered a reas hag o roas d'ar plah, o hejal e skoaziou. Marteze a-walh e-noa komprenet e oa bet touellet. Tremenet e oam e-rez d'eun droug-lamm spontuz.

Eun toullad miziou goude, e oe dizoloet or farsadenn. Med ne oe nag an disterra anzav, nag an disterra prouenn. Lakeet e oa eun termen da gammdroiou ar "gang" ... Med salvet e oe an enor.

Soaz Seveon, aozerez

Eun devez nevez-amzer 1920, e-pad vakañsou Pask, eun nebeud a-raog distrei d'ar skol, e-kerz eur bourmenadenn en eur park euz Seveon, setu ma kavis eun neiz kegin en eur wezenn zero goloet he horv gand ilio. Divarret e oa bet daou pe dri bloaz a-raog. An neiz a zlee beza tri pe bevar metr uhel. Dre ma n'o-doa ar brankou nebeud a zalh, e oa red din kraped kazi a-bouez ma divreh. Ha goude beza poaniet kalz, e tapis errued erfin e-kichenn an neiz. O vond da gemer an uou en ma dorn dehou e oan, pa ziskrogas ma hini kleiz. Koueza a ris d'an douar, ma fenn da genta hag e chomen astennet, hanter-fatiket.

Pa oen difatet, e santen eur boan iskiz em fenn. Poan am-oa ivez em hostez kleiz hag em skoaz. Da genta toud, e oan e chal gand ma dillad. Med ne oa roget netra. Mond a reen d'ar gêr, fall a-walh an traou ganin. Antren a reen e-barz ar gegin, difatet. Eur an adverenn e oa. Klask a reen konta kaoziou, med ma mammig ne oa ket touellet.

-« Ev eur bannah kafe ha kee da gousked », emezi. « Ober a rin en-dro dit warhoaz beure ».

Mond a reen dioustu d'ar marchosi hag en em lakeen em gwele. Mahet spontuz e oa ma gouzoug. Ne reen nemed trei ha distrei 'n em gwele e-pad an noz. Diskarget e oan euz ar goro-zaout evid eur wech. Echu e oa lein pa en em lakis ouz

taol. Kregi a reen heb an disterra ilboued gand ma skudellad soubenn pa'h antreas ma mamm en ti. Selled a reas ouzin eur pennadig :

« Te a zo kouezet diouz eur wezenn pe diouz eur skeul, ar pezh a zo sur, diouz uhel a-walh. Poan e-teus en da gostez dehou, da benn, da houzoug ha da skoaz ».

Felled a reas din sevel ma mouez.

« Me 'zo o vond d'ober war da dro, dioustu. Gouvezed a ran e pe leh 'teus poan. Inutul dit hen nah ! »

War he goulenn e tennen ma dillad. Kemer a reas eur vuredad louzou hag e frotas an izili a ree poan din.

« Diskuiz hirie ha dreist-oll n'ez ket da haloupad. Prestig e tleez distrei d'ar skolaj ha red e vo dit beza war vale ».

Ober a reas louzou ma mamm o efed. An deiz war-lerh, e hellen adarre trei ma fenn. Eun nebeud deizioù war-lerh, toud ar poaniou a oa eet kuit.

Ma mamm, an tammig maouez vad-se, eur metr daou-ugent a uhelder, a oa eun aozerezh. He brud a yee kalz pelloh evid ar parrouzioù diwar-dro. Petra a baree ? Hervez he lavariou, an darnvuia euz ar hleñvejoù diabarz : re ar galon, an estomak, an avu, ar bouzellou, ar felh, ar vestl... Anavezad a ree dre eñvor toud korv an den. Aliez am-eus klevet anezi taolenni piz dirakon toud e lodennoù disheñvel. Hag e brezoneg, 'vel just !

Soaz Seveon he-deus evel-se aozet e-pad daou-ugent vloaz bennag heb gouvezed an disterra tra diouz ar vedisinerezh voutin. Hag he gwella klian a oa... an Aotrou Loho...

Pa 'neveze greet an Doktor Loyer war-dro eur hlañvour heb tamm frouez ebed, e-pad pell amzer, e kase anezañ da gaoud ma mamm. Med ne oa ket kision koulskoude evitañ da gas dezi eur hlañvour a hoveze kondaonet. Ha lakaad a ree 'ta ar medisin eun tamm fiziañs e donezonou ma mamm ? Den ne hovezas morse.

Dleed a ree soñjal koulskoude, ma ne ree ket droug eur guzuliadenn gand Soaz Seveon, e helle marteze ober vad, tro pe dro...

E-touez ar glañvourien greet gand ma mamm war o zro, n'am-eus ket ankouaet martolod-koñvers ar Roh. Eun devez, eh erruas e Seveon, skoazellet gand e ziou hoar. Ne jome ken 'n e zav war e dreid. Livet melen e oa ha tapet e-noa eur hleñved e-kerz unan euz ehanou e vatimant er holoniou. Ma mamm a reas dezañ mond ganti en he hambr-degemer evid e houlennata. Pa oa eet kuit, e lavaras mamm dim :

« Paour-kêz den ! Gwall fall eo e jeu. En em houlenn a ran ha n'e-neus ket gortozet re bell evid dond d'am gweled. Añfin, gwelet e vo. Dleed a ra dond endro, warhoaz ».

Pa veze oh ober en-dro d'he hlañvourien, ma mamm a zibune he fedennoù en he hambr-degemer, daoulinet war he hador-bedi. Lavared a ree gouzañv poaniou ar re a deue da houlenn kuzul diganti. Pell a-walh e pade ar pedennoù. Divennet groñs e veze neuze he direñka. Pa veze echu an "orezon", e tistroe d'ar gegin, a-wechou evel pa vefe unan all en he leh, gand he dremm skuiz. Ne gemere netra d'he merenn. Evid ar martolod, ar pedennoù a badas ouspenn eun hanter-eurvez.

A-raog pred unneg eur, pa veze savet ar gliz, eh ee gand he faner aozill d'ar park anvet "Park Koumanant Baill", eur hant metrad bennag diouz an ti. Kuntuill a ree aze kaol-teol ha kalz a blantennou all hag a louzou. Dastumet e vezent dalhmad er memez park hag er memez leh euz an tamm douar. Eul leh greunvêneg espar ! Ar huntuill echu, e tistroe d'he hambr hag eh aoze he buredadou.

Mired a ree dalhmad a-gostez eun nebeud boutailladou gwin gwenn, hag ivez bleuniou lili lakeet e gleh e-barz odivi-chistr.

Ar martolod a retornas tri deiz goude, skoazellet adarre gand e ziu hoar. Ma mamm a roas dezañ eun dour-louzou burzuduz, ha, da heul, gourhemennou a-buill. Tri deiz goude, e oa distro. Ar wech-mañ e valee heb sikour e hoarezed. Bez' e tlee beza war-dro teir eur goude kreisteiz hag e oam gand an adverenn. Pedet e oent toud da zond da zebri eun tamm ganim. Evel-se e oa ar hiz : neb piou ah errue en eur menaj da eur ar prejou, a zlee mond ouz taol. Nah a veze kemeret evel eun dismegañs da vestr an ti. Ma veze re vihan an daol, ar re yaouanka ah ee en o hoazez e leh all.

Ar martolod a zebras kig, pate ha bara, an oll glebiet mad. Pa oa o vond kuit, ma mamm a lavaras dezañ :

« Ma n'en em zantoh ket mad, evel ma soñjan, 'n em zregasit ket ; distroit d'am gweled a-benn pemzeg deiz ».

Diou zizun goude, ar paotr yaouank a deuas en-dro... gand eur velo nevez-flamm. O tond en ti, kerkent diraki, e soublas da bokad d'am mammig hag a oe oll-strafuillet.

« Me a zo ken eüruz, ma kemeran frankiz da bokad deoh. Setu-me pare hag evid lida an dra gaer-ze, am-eus prenet eur velo nevez brao. Pa e-noa an Aotrou Loyer kuzuliet din dond d'ho kweled, e oan digred a-walh. Med evel ma anaveze ma hoarezed ahanoh, kement-se a roas din eun tammig muioh a fiziañs ».

« Bez' ho-poa hoh avu en eur stad gwall-fall. Santet mad am-eus se e-pad ma fedennou. Bet oh chomet pell e-barz ar broiou tomm ha sur a-walh eh oh bet piket gand eur fubuenn bennag. Dleet ho-pije mond da gaoud eur medisin dioustu ».

Ar martolod a lestras daou viz goude. A-raog mond d'an Havr, n'ankouaas ket dond da lavared kenavo d'am mamm. Diwezatoh, ha beb tro ma teue d'ar gêr, e tistroe da weled e aozerez gand eun donezon degaset diouz ar holoniou.

Soaz Seveon he-doa 'ta ar galloud da barea ar hleñvejou ? Ne fell ket din lavared ya. Koulskoude e kreske he brud a vloaz da vloaz. E-pad toud he buhez, e tle beza greet war-dro tri mil klañvour bennag. He henta goulenn a veze da houvezed hag ar hlañvour e-noa gwelet eur medisin. Pa responte ya dezi, nemed avad klianted an doktor Loyer, e nahe groñs pleal gante. Aliez e teue tud dianav d'he haoud. Ma mamm, war diwall, a houlenne digante ano an hini e-noa o aliet.

Ma mamm a nahe kemer arhant a-zizolo ha ne zegemere donezon ebed goude ar genta guzuliadenn.

« Gwelet e vo goude, pa yelo gwelloh an traou ! »

An darnvuia euz he hlañvourien, goude o fare, a zegase dezi donezonou a beb seurt : kafe, chikore, gwestell hag eur wech an amzer, eur voutailad rom pe Benediktin pe Elixir Arvorig (greet e Lannuon). Ma taerre lod euz he hlañvourien, o chom er barrouz, evid rei arhant dezi, e houlenne digante mond da rekomandi eun overenn evid anaon ar famill. Nah a ree ivez an disterra gopr-ouspenn evid pleal gand ar glañvourien en eur stad diêz.

Meur a dro e houlenas Frañsin ha me diganti disklêria dim he sekrejou. Hervez he lavariou, e talhe an donezon-ze diouz he zad hag e-noa eñ ivez bet diouz e hini an herez burzuduz-se a yee evel-se, a rumm da rumm, a beb amzer. Kleved a ris diwezatoh, ar roidigiez-se ne helle mond nemed da eun "Heweder". Ne oa ket hepken red kaoud gwad an Hewederien er gwazied, med c'hoaz ouspenn ivez dougen an ano.

*Bi, Rault, Meur, Mathon
hag ar re all*

Er bloavez-skol 1919-1920, e oen evid an eil gwech er c'hwehved klas, mennet mad da vond ken mad all gand al latin. Anad e oe ar frouez : eil priz e troidigez latin e galleg, eil priz e galleg, hag ivez meur a veneg. Chom a reen berrig e jedoniezh. E miz Here 1920 eh is er pemped klas. Ar bloavez-se, or helenner a oa an tad Bi (an Aotrou ar Bihan).

Pe hed bihan an Tad Bi 'oa ar butun-poultr. E voest-vutun a veze dalhmad war e vuro hag e-pad ar hlas ne baoueze ket da briza. Pa strevie, ar butun a zivere diouz toullou e fri, evid plijadur vrasa ar vugale a ree dez o gwella evid distaga dezañ eur fentigell bennag a-dreuz. An tad Bi ne ree ket fae war ar chervad. Aliez e talee da gregi gand e genteliou goude merenn. Med an dale-ze ne harze ket anezañ da veza laouen ha da sklabousad.

Er bloavez war-lerh, eh antreen e-barz ar pevarved klas. An traou ah eas war barfetaad. Tri gelenner on-oa, en o zouez, da genta, evid al latin hag ar galleg, an Aotrou Rault, diouz kostez Lamball, brasa pibenner am-eus morse anavezet. Er hlas-se ivez eo e krogen da studia ar zaonneg gand an Aotrou ar Meur, lesanvet an tadig Meur. Beleg war-dro e hanter-kant, frammet mad, e vleo touzet berr ha reud evel kreo eur broust. Tremen a ree eul lodenn vraz euz e vakañsou e Bro-Zaoz. Komz a ree eur zaonneg dibikouz ha gand an "aksant".

An tadig Meur e-noa eur heuz braz : ma ne oa ket eur sujed da "He Meurdez", rouanez Bro-Zaoz. Pa govesae, eh errue dezañ rei an absolvenn heb pinijenn d'ar skoliad a lavare dezañ kared an Añglijen. Goude eun dousenn bennag a genteliou, e lakee en e benn e houvezem tra-walh a zaonneg evid kompren al liziri a deue dezañ euz an tu all a Vor-Breiz. Eur wech an amzer o lenne dim ha goude e houlenne diganim :

-« Komprenet ho-peus ? »

-« Ya », a respontem toud a-unvouez. Goulennata a ree neuze daou pe dri skoliad... ha ne gomprenent ket zoken ar goulennou.

-« Ezen korneg eh oh toud », a lavare neuze, evid kloza e gentel, an hini a oa eur spered braz, med siwaz ! ken digomprenuz !

Kelenner ar jedoniezh, an tad Mathon, gwall-hloazet er brezel, a oa eur mestr diouz ar henta. Ne oa ket nehet evid rei kenteliou d'ar skolidi an nebeuta donezonet, eveldon-me ! Bet on bet ordinal teodet mad ha ne hellen ket konta ped ha ped gwech eh on bet kastizet gand ar vistri-studi en abeg d'an ezomm am-oa da gaoud darempred gand ar re all.

E-pad vakañsou Pask 1920, ma mamm a resevas follenn notennou an tri miz. Mad a-walh e oant, dre oll, med ar billed a zouge ivez "*bavard*". Ma mamm, droug enni, a fellas dezi teñsa ahanon.

-« Med, mamm, en em drompla a rit. N'eo ket "*bavard*" a zo skrivet, med "*buvard*". Ober a reont diouer er skol ».

-« Ma vank "*buvariou*" dit, kee da brena d'ar Roh, med ne fell ket din ken gweled ar ger-ze war da follenn-notennou. »

Breviel Zant-Erwan

E penn kenta vakañsou eost 1921, e resevis e Seveon bizit or person nevez, an Ao. Savidan.

-« Penn-rener Sant Jo a zo eur mignon din », emezañ. « Kaset e-neus din notennou da vloavez skol. Mad a-walh int. Labouret mad e-teus ha meuli a ran ahanout. Ezomm e-tije koulskoude da adweled da latin. En-zell eh on, gand asant da gerent, da rei dit kenteliou prevez, eur wech ar zizun. D'ar meurzh e vo, war-dro nav eur ». Asanti a ris a galon vad. Mêsa ar zaout pe mond d'ober latin gand ar person, ne vanen ket da dortal.

D'ar meurzh war-lerh, da nav eur, eh een d'am henta kentel. Dudiuz e oe ar person ganin.

Rozenn, e garabasenn, eun tamm dizoñj ha berrwel ivez, a roas deom eur bannah kafe-lêz mad. Ar gentel a badas eun daou-ugent munutenn bennag. Ar person a zisklêrias din pegen talvouduz e oa beza maill war al latin.

-« Yaouank out », emezañ. « N'e-teus ket c'hoaz greet da vennoz war da amzer da dond, med marteze an Aotrou Doue da vlenio war-du ar velegiaj ».

Ne respontis netra. Med kompren a ris prim ar perag euz kenteliou latin ar person. War gement-se e kuitais ar presbital, war-dro unneg eur. D'ar meurzh war-lerh, Rozenn a roas din da hovezoud e oa eet ar person d'eur vodadeg beleien da Landreger ha ne vije ket en-dro nemed war-dro kreisteiz. Aozet e-noa din ma labour. Galled a reen 'ta mond d'ober ma foelladenn. Ar gambr e-leh ma labourer a oa an hini vrasa hag ar gaerra euz ar presbital. Miret e veze evid tud-a-iliz abouez. Presbital ar Vinihi a zegemere evel-se kalz a dud diouz ar Frañs a-bez ha zoken diouz an estrañjour, o tond da birhirina da iliz ha ti Sant Erwan : maner Kervarzin e-kichenn ar bourk. War unan euz komodennoù ar gambr, am-oa taolet pled, abaoe eur pennad amzer, ouz breviel Sant Erwan, pozet digor e-barz eur houfrig koad, diwallet gand eur werenn zerret gand eur grogenn-diwall

niverennet. Ar breviel a zlee beza euz fin an drizegved kantved. Evel ma plije din kalz c'hoari troiou, e kemeren gand evez ar breviel hag hen lakeen war eur gomodenn all, 'dreñv d'ar bandulenn. Ober a ris goude-ze ma foelladenn latin hag e kimiaden diouz ar garabasenn.

D'ar meurzh war-lerh, a-boan erruet er presbital, ar Rozenn vad, disliv he dremm ha difetet, a zisklêrias din an darvoud : Breviel ar Sant hag ar houfrig a oa steuziet abaoe ar gwener.

-« An aotrou person e-neus roet da hovezed d'an eskopti e oa kollet ar releg hag ar vikel vraz a zle dond warhoaz d'ar presbital da weled ha kemer an diarbennou red-mad ».

E-keit ha ma oa Rozenn o tisplega an traou, e niverem toud an dud a oa deuet d'ar presbital abaoe ar meurzh diweza. Nemed daou veleg hepken, den ne oa eet d'an estaj.

-« Goulennataet on-eus toud tud ar bourk, heb ober ano diouz koll ar breviel », a leñve Rozenn, « evid gouvezed ha n'o-doa ket gwelet er vered pe en-dro d'ar presbital, unan bennag tres fall warnañ, eur foeter-hent da skwer. Med toud o-deus respontet nann ! »

-« Abaoe ma oas eet kuit, dimeurz, n'on ket bet diou wech oh ober komisionou, e-keit ha ma ne oa ket an aotrou person aze. N'am-oa ket prennet an nor, med dindan eur hard eur e oan en-dro. Heb douetañs eo bet laeret ar breviel d'ar mareze ! A ! ma Doue... Pebez darvoud ! Hag ar vikel-vraz a zeu warhoaz beure... ha marteze e vo lavaret am-eus greet an taol hag e vin digouviet... Ha Sant Erwan a ya da gaoud droug ouzin da veza kemeret ken nebeud a breder diouz e vreviel... A ! ma Doue... petra e teuin-me da veza ? »

Komañs a reen memestra da en em houlen penaoz sacha ma hillorou ganin.

-« Gortozit eun tammig », a lavaren da Rozenn. « Me 'zo 'vond d'ar gambr ha da furchal dre-oll, diouz red. Med kavoud a rin deoh ho previel. N'en em chalit ket, Rozenn ! »

Evel just, e kavis ar breviel el leh am-oa e lakeet. Hen tenna a ris diouz e guz hag e lakais 'dreñv d'al leoriou e-kichenn ar bandulenn, e doare ma vefe gwelet eul lodenn anezañ. Gervel a ris Rozenn :

-« Deuit da gwreh 'ta, Rozenn. Ar breviel a zo brao, aze ».

Kerkent e oa er gambr.

-« N'ho-peus ket sellet mad... aze ema... a-wel. Ma 'pije diboultrennet meublaj ar gambr digwener, ho-pefe gwelet anezañ memestra. »

-« Pa ran menaj ar gambr, e voulhan dalhmad gand al leor zantel. O veza ma ne gaven ket anezañ en e blas kustum, em-eus kollet ma fenn hag em-eus galvet an aotrou person. N'e-neus gallet nemed gweled ne oa ken aze. Ne wel ket gwall-vad eur pennad 'zo ha n'e-neus evesaet netra. Abaoe, n'on-eus klasket e neb leh ebed. Roet on-eus nemetken eun taol lagad war ar gomodenn da weled ha n'en-doa ket ar houfrig adkemeret e blas ».

Lakaad a ris ar breviel en-dro en e blas mad. Ar Rozenn vad a zaoulinas, a drugarekaas an Aotrou Doue ha dreist-oll an Aotrou Sant Erwan da veza saveteet anezi. En eur zével, o ouela en he joa, e pokas din. An aotrou Savidan ah antreas :

-« Aotrou person... Aotrou person... deuit amañ prim... Al leor zantel a zo en e goufrig. Jozef eo e-neus e gavet ».

Ma displegou a oe sklêr hag anad !

-« An daol-labour a oa leun a gelaouennou devod. Ha setu am-oa cheñchet plas d'ar houfrig hag hen lakeet war ar gomodenn all. Reñket am-oa ho paperiou en o flas. Goude, am-eus greet ma foelladenn latin hag eh on eet d'ar gêr ».

Ar person a zegemeras da wir toud ma disklêriaduriou. Ar houfrig a oa aze ha netra n'e-noa ken a bouez evitañ. N'en-dije ket jamez degemeret e-nefe eur paotr euz Sant Jo... da biou e ree kenteliou prevez latin hag a oa, sklêr evel an heol, galvet da veza eur beleg diwezatoh, troñset eun taol-farserez evel-se. Eur wir zakrilaj !

Evid priza ma lealded, ar person a bedas ahanon da chom da vernia gantañ, goude ma hentel.

“Poil de Carotte” hag ar vell-droad

Adaleg ar pemped klas, peb klasad a dremene eun abardaevez ar zizun war leurenn ar sportou evid eur bartiad mell-droad. Sañset e vezem da veza heuliet gand or helenner penna. Kement a bres a veze warnom da vond da hoari, ma reem toud an hent d'an trot, o laosken a-dreñv on heulier. N'on-oa ket evel just trikoïou da hoari, hag e c'hoariem gand on dillad bemdez. E-giz botou-fobal, n'on-oa nemed or galochoù pe or botou-ler-koad. Ne anavezem ket an disterra reolenn-hoari. Redeg a reem toud asamblez war-lerh ar volotenn. Ar stokadenn galed hag ar meskou dilavaruz a zivie buan ar hoarierien.

Er pemped klas, devez ar vell-droad a oa d'ar merher. Diouz ar beure, an Aotrou Corre a gemere plas an Tad Bi... or helenner penna. Daoust d'e hloaziou brezel, an Ao. Corre a oa douget evid an nerz a gorr hag ar sportou. Tremene a ree e-gwir toud e veurevez o klask sanko en or spered reolennou kenta ar c'hoari. War al leurenn e save daou skipaill a zeiz pe eiz c'hoarier. Goude, e lakee en o flas ar hoarierien, en eur guzulia aneze diouz e wella. Siwaz ne zeuas ket e strivou da vad. Dalhmad, ar memez redadeg war-lerh ar volotenn, toud ar baotred warni : araokerien, divennourien, c'hoarierien-greiz. Zoken ar mirer-pal a zileze e bost ! Pa dostae ar volotenn dirag ar pal, toud c'hoarierien ar skipaill a zeue da rei skoazell da vad. Pevar pe bemp c'hoarier, a zalhe mad da lavared e oa a-drugarez deze. Nemed 'nije merket ar c'hoarier 'eneb d'e skipaill evel just ! Pez a hoarveze kazi da beb krogad.

Echu ar hrogad, or horv goloet a vloñsaduriou, eh adkemerem hent Sant Jo, bepred d'an trot. Med on diouharr a veze flak.

Er pevarved klas, or helenner penna a oa ar butuner meur, an aotrou Rault. Mahagnet er brezel, e-noa kalz a boan o kerzed. Ne oa ket kision evitañ d'on heul e

park ar sportou. Red e oe kaoud eun all a blijfe gantañ dond ganim. Ne oe ket êz an dra.

Toud ar gelennerien a gavas beb a zigarez : unan aneze e-noa dija eur skipaill all ; eun all e-noa re a eurveziou-skol ; an trede a oa brudet mad evid beza 'eneb d'ar sportou. E-berr, ne jome ganim nemed an aotrou Guillou, eur mestr-studi gand eun êr droug, yaouank, ha ruz e vleo. Ne oam ket evid gweled anezañ. Lesanvet e oa bet ganim "Bleo Karotez".

En or hlas e oan unan euz ar muia arloupet war ar "foot". Kazi toud tresaduriou ma leor-istor a oa troet e c'hoarierien fobal. Setu perag e oen dibabet evid mond da zivenn kaoz or hlas dirag an aotrou ken spouronuz.

D'ar yaou, e-pad ar valeadeg, eh een davetañ evid goulenn digantañ beza on heulier-fobal. Gweled a ris war e vuzellou mousc'hoarz kenta ar bloaz.

-« Deuit da weled ahanon 'vid an abardaez-noz, em hambr, e-pad ar studi ».

Gand eun tamm moustr-kalon, e skoen ouz dor "Bleo Karotez". An emwel a oe euz ar re galoneka.

-« O hortoz ho koulenn e oan », emezañ. « Ne welen ket piou a hellfe mond ganeoh d'an dachenn-hoari, anez ahanon. Greet em-eus kalz a vell-droad pa oan yaouank, ha peogwir eo c'hwi ho-peus bet kalon da zond d'am goulenn, eh anvan ahanoh dioustu penn-skipaill. Me a vo tredeog or hrogadou kag ho kuzulioù ».

Dindan e gred, ha gras d'e anaoudegez vraz euz ar c'hoari, laz-c'hoari mell-droad ar 4^{ved} a reas kalz a hent war wellaad, ar bloavez-se ! Evid peurreñka on anaoudegez e-barz ar c'hoari-ze, an aotrou Guillou a reas dim mond da weled krogadou kevezadeg war dachenn-hoari an U.S.L. Evidom-ni, pesort bevez a-bouez !

"Bleo Karotez", ar mestr-studi ar muia doujet gand paotred Sant Jo, a deuas evel-se da veza ar muia prizet gand ar hoarierien fobal.

Tonton ar Goaziou

Pa gomzan diouz ma bloaveziou-skol e Sant Jo, ne hellfen ket tevel war an tonton Ar Goaziou, a zalhas eur plas braz em yaouankiz. Jardriner e Sant Jo e oa an Tonton... med a-lajadou. Labourad a ree pa blije dezañ. Ne oe lakeet eur ebed dezañ nemed da amzer ar chistr. Kemer a ree perz ennañ gand toud e ouiziegez hag e skiant-prenet.

D'ar yaou, e oam aotreet da guitaad ar skolaj euz unneg eur da beder eur hanter, gand beza heuliet gand unan bennag euz or famill. Ma mamm ha n'he-defe jamez manket he marhad-merher e Landreger, ne zeue ket aliez d'am gweled pa oa karget gwreg an tonton Ar Goaziou diouz ma lienaj ha da zegas din ma amann. Adaleg sizuniou kenta ma skolaj e Sant Jo, an tonton, an deiz-se, a guitaer ar jardrin war-dro kreisteiz nemed kard evid ma has gantañ da verenn. E weled a reen o klask ahanon e-touez ar bañsionerien all, gand e davanañjer-ler koz hag e votoukoad.

Ar gwella euz ar wazed e oa an Tonton : dilorh, brokuz gand eur galon aour. Pa en em roe evid ma has er-mêz a'r bañsion, an dintin a aoze em enor eur verenn saourusoh evid an ordinal. Ha n'o huitaen jamez heb eun tamm brao a jokola.

Koulskoude, er sizuniou kenta, am-oa mez gand ma zonton... Kerkent hag a welen anezañ e-barz ar porz, e skoen 'trezeg an nor-dal, oh en em guzad a-dreñv kamaraded evid diwall da veza gwelet a-gevred gantañ. Evid seveni ma lorh hag en em weled e-touez ar re binvidika, e vefe bet red, onn 'walh, e lakafe an Tonton e zillad d'ar zul, pe c'hoaz e vefe bet dilezet gand e verh, ken koant ha ken fichet kaer, he labour gwriad evid dond da gerhad an toull-lorh ma oan.

Evuruzamant, kalz a skolidi all, gand muioh a skiant evidon ha nebeutoh avelaj en o fenn, a hastas ober din kompren am-oa eur chañs vraz e teue unan bennag d'am glask evid mond e kêr hag e vijent bet eüruz-braz da veza em flas. Rei eur gentel a furnez hag a zilorh a rejont din hag a lakeen evuruzamant evidon-me da dalvezoud.

Ha buan-tre, ne glasken ken distrei diouz darempred ma Zonton Ar Goaziou, ha gand eur mousc'hoarz laouen eo eh een penn hent dezañ. Ma dorn en e hini, eh eem 'trezeg an nor-dal.

*An difueriou tredan
(an izolatouriou)*

E-pad ar vakañsou, eh een aliez da besketa gand ma breur Yann, Emilig... hag a wechou an Dremeled. Ol leh pesketa a veze ordinal aber ar Yodi, e-kichenn kêriadenn Sant Renaod. Ar hregill, ar hranked, hag ar hokez brudet ne reent ket diouer el leh-se. Pesketa a reem e-barz al lehid, or bragou troñset beteg on daoulin. Ar hregill a veze ordinal e-barz ar memez tu euz an aod, etre diou wazenn dour. Tra-walh e oa deom kaoud an toullig a roe zin e oant aze, da rei neuze eun taol seul-botez, ha da gleuza. War ar bank oam.

Ar pesketa a echue pa zoñje gand pep hini diouzm on-oa dastumet tra-walh a gregill, war-dro ugent pe beder lur warn-ugent ar peurlies. Eur wech an amzer, e hortozem al lano evid mond da neuial. E-giz bragou-kouronka -"slip"- n'on-oa nemed or mouchouer.

Pa n'eh eem ket da besketa, unan euz or c'hoariou ar muia karet a oa "emgann ar rail", diouz Seveon d'ar harrpont. Rei a reem bod d'eur vandenn Rohiz goude an overenn deg eur. Galled a ree ar jeu boulha. Red e vije kerzed war ar raillou daou-ha-daou. Beb skipaill o vond a-benn d'egile a ranke ober kant hanter pe daou-hant metrad. En hanter-hent, an enebourien en em gave tal-ouz-tal. Ha da staga gand an emgann. Unan euz ar stourmerien a zlee esa diskar e enebour, o chom 'n e zav e-unan war ar rail. Eur wech a-ziwar diou, e kouezent o-daou hag e vijent rasket.

Echu ar pennad hent, eur skipaill all a gemere e dro hag an emgann a gendalhe ken e veze skuiz-divi ar stourmerien. Ar bartiad ah echu neuze aliez en arguzou, beb bandenn o tamall eben da veza trichet.

Degouezoud a ree deom ivez c'hoari fobal war leur dorna Seveon. Ober a reem eur volotenn deo gand gloan ha truillou, ha pa veze freuzet e paoueze ar hrogad.

E kostez ar Vinihi e oa kalz a hoarierien pilpod. Ar galochenn a oa eun tamm koad kaled (beuz pe dero), war-dro daouzeg santimetrad a uhelder, gand eun ask en he hanter. Pozet e veze war an douar. Peb c'hoarier e-noa daou baled, gand eun niver war bep hini. Ar c'hoari a groge dre eun tenna plouzenn-verr evid dibab ar henta tenner. Pep hini a lakee war ar galochenn eur pezh daou wenneg pe daou bez hervez divizou an deiz ha stad e yalh. Ar c'hoarier kenta a strinke e baledou evid klask diskar ar galochenn. Ar gwenneien stlabezet a oa d'an hini e-noa diskaret ar galochenn. Dre vank gounid, e veze rasket.

Med ar pezh e-noa an dalvoudegez vrasa evidom a oa izolatourien linenn an telefon a-hed an hent-houarn. Al linenn-ze, diouz Landreger da Bloueg-Pontreo, a oa bet savet e 1904, e memez amzer gand an hent-houarn. Diazeza al linenn-ze ah atizas evel just sellou kuriuz tud ar hontre, diskred eur rumm, souez ar re all.

Evidom-ni, kanfarded, ar pezh a zedenne ahanom ar muia, a oa an difueriou-tredan, ar boulou bihan gwer-ze ken iskiz, staget ouz kwreh ar postou, 'uz d'an hent-houarn.

Eur zulvez d'abardaez, goude beza bet o neuial e-barz ar Yodi, Emilig, me hag an daou Dremel, e oam 'n or hoazez dindan gwez-avalou ar verjez, heb tra ebed d'ober. Gweled a reem mad Emilig ha ne baoueze ket da lucha war ar gwerennouigou-ze.... Sevel a reas ha mond kuit evid dond en-dro eun tammig goude gand e strinkerez-vein.

An distruj a oa o vond da gregi. Da genta Emilig ne dape ket e ziblenn. Ar vein a oa re vihan, pe re vraz. An izolatouriou a zalhe mad. Pa welen eh eem war-du eun darvoud, eh aspeden anezañ da baouez gand e hoari. Med aheurti a ree muioh-mui. Droug e-noa ouz an difueriou-tredan. Penn fall, en em lakeas da strinka diouz toud e nerz, mein grosog-grosa. Barnet e oa an izolatouriou da veza kaset da get. Unan kenta a nijas e mil damm... hag eun eil, hag eun trede. Emilig a hlaourenne gwenn bremañ. Sabatuet e oan. Soñjal a reen er pezh a zegasfe an taol distruj-se, pa zeufe mestr hent-houarn Ar Roh gand e vizit, an archerien, en trepan a dapjen gand ma mamm, e rebechou spontuz ma zad.

-« Lakaad a ri toud an traou-ze war gont "Paotred ar Vilaj" a zeu aliez dre amañ da hoari, d'ar zul », a lavaras din Emilig.

Unan euz an Dremeled a gemeras e dro hag en em lakeas da ziskouez e ampartiz. En em zanted a ris, a-greiz-toud, dihalloud oll. N'eus forz penaoz, an droug a zo greet, a zoñjen. Neuze 'ta, kenkoulz din ivez en em zidui. On-fevar, e-pad ouspenn eun eurvez, e vombezem an izolatouriou. Eur mên a-ziwar bevar a skoe war ar ziblenn.

Eun draig hepken am diboanie : eun tamm izella hepken euz ar werennig a freuze ; al lodenn uhella en-dro d'an hini a oa staget neud-orjal an telefon a zalhe. Gallet e vije sur a-walh derhel da bellgomz. Ne oa ket 'ta ken grevuz an droug. Kousked fall-tre a ris an nozvez-se. Heskinet e oa ma spered gand ar jañdarmed. N'am-oa lavaret netra d'am zud.

Adaleg an deiz war-lerh, goude lein, en em gaven ma-unan el leur gand ma zad. Anzav a reen dezañ toud ar stal. En eun taol ken truezuz, al lealded eo a zeblante din ar gwella diskoulm. Fañch ar Rolland am heulias beteg an hent-houarn da weled an dismantrou. Gweled a reas e oa dibistig toud al linennou. Ma lealded a zleas gounid e galon.

-« Evuruzamant, e tle c'hoaz an telefor mond en-dro ; anez da ze, on-ije bet dija bizit paotr an hent-houarn. N'eus forz penaoz, ne fell ket din ken gweled da gamarad Emilig amañ. Eul laer-e-vara ha na ra nemed sotoniou. Ma kendalh, kenta tro e klasko terri prenestou Seveon. Mond a ran da gomz diouz se gand da vamm ».

Errued a reas d'he zro dindan nebeud munutennou goude hag e roas eun taol-lagad hepken d'an izolatouriou.

-« Mad on-oa greet laza ar pemoh derhent deh ». Setu toud he sarmon. O hortoz ar skourjez e oan, ha ne oe ket greet din zoken an disterra rebech.

Eur poster nevez a oa bet anvet er Roh abaoe nebeud amzer. Bet e-noa bet dija anaoudegez euz an traou. Karga a reas paotr ar pakajou - a anaveze mad Seveon - da zond da weled ar gwastou. Distroet d'ar post, e lavaras d'ar resevour :

-« War al lodenn-ze euz al linenn hent-houarn, e-pad ar vakañsou, e tremen kanfarded a-hed an deiz, dreist-oll d'ar zul. Diêz e vo dim kavoud ar re o-deus greet an taol, gand niver ar vein ingalet war an hent hag e berjez Seveon ».

-« Telefoni a ran d'ar jañdarmed », a respontas mestr ar Post, « ha dond a refom a-benn d'o havoud ».

-« Jañdarmed Kêr ar Roh n'o-deus tra da ober peogwir an darvoud a zo c'hoarvezet er Vinihi a zo e beli Landreger. Med estonet-braz e vefen ma kollfent o amzer da glask ar re o-deus greet an taol, dreist-oll ma'h int kanfarded euz Kêr ar Roh ».

-« Med kement-se a zo eur "helh bah" ».

-« Selaouit », eme Paotr ar pakajou, « ma karit, me ah a da gavoud Mestr ti an hent-houarn. Anavezad a ra mad ar hontre hag e reñko prim an afer-ze heb kalz a drouz ».

-« Grit eta ar pez a gavit mad, med ne fell ket din ken klevet komz diouz an istor-ze. Bez' am-eus a-walh d'ober a-hend-all ».

D'abardaez-noz, mestr ar gar a zeuas da Zeveon. Evid an doare, e lavaras din ma fegement, hag e reas din mil gourhemenn evid ma ebatou da zond, d'ar zul dreist-oll. Debri a reas neuze eun adverenn founnuz ha Soaz Seveon a zistouvas liez boutaillad chistr. Mestr ar gar a zistroas d'ar gêr gand chaosiz ha pate. Karget e oe ivez deuz eur pakad evid ar Resevour hag unan all evid paotr ar pakajou.

An diroudennadur

Ar peurliesia, an treñ bihan ah ee war e horregez a-raog staga gand pleg-braz al linenn e penn hanternoz unan euz liorzou Seveon. E 1922, diouz an noz, e-pad ma oan oh ober war-dro ar hezeg, e klevis kazi dioustu ma oa tremenet an treñ

marhadourez, eur gwigour hir heuliet gand eun drouz spontuz. Redeg a reen kerkent d'ar galoup 'trezeg al linenn : hartet e oa an treñ, hag ar vagoniou diweza, leun a avalou, a oa o paouez gwinta er prad, tri metr izelloh. Ar marh-du a oa chomet war e raillou. Ar vagon kenta, eñ, a oa chomet stag ouz an hini e-noa gwintet.

Toud Seveon a oa prestig war leh an darvoud. Eur seurt degouez ne hoarveze ket bemdez. Ar blenier hag ar mekanisian en em houlenne petra a oa en em gavet gante. Presta a rejom eur velo d'ar blenier da vond da har Ar Roh, da houlen sikour. Div eur goude, eur marh-du all a deuas da gerhad ar vagon kenta.

An deiz war-lerh, eh erruas eur gru evid adlakaad en e zav ar vagon gourvezet war ar prad. Dibrada hag adlakaad a-nevez war ar raillou a gemeras eun tamm brao a amzer. Mestr Ti hent-houarn Landreger a zleas en em gleved gand e batron Gwengamp evid en em garga euz kas ar veajourien. Eun treñ beajourien a guitaas Landreger d'an eur gustum hag eun all a zeuas d'e ziambroug euz Ploueg-Pontreo.

War-lerh an darvoud, ar veajourien a zleas diskenn diouz treñ Landreger evid kemer hini Ploueg. Toud ar chañchamantou-ze a oe greet e gwerjez Seveon. Hag evel-se adarre evid treñ teir eur.

E-pad an amzer-ze, paotred an hent-houarn, goude beza eeunet ar raillou, da hortoz gwelloh, en em brese d'ober war-dro ar vagon diboullet e traoñ ar prad. Leun a druez, ma mamm a aozas deze eur geusteuenn vad evid o merenn unneg eur. Ha da deir eur, e oe kaset deze chistr da eva hag eun dra bennag da zebri. Da fin an abardaez ar vagon a oe adlakeet war e raillou.

Pa'h erruas an treñ beajourien c'hweh eur hanter, ar vicherourien a houlenas digand ar mekanisian sach a vagon gwalldarvoudet gand e varh-du. Ober a rejont sin dezañ da vond war-raog. Petra a hoarvezas neuze ? Den ne oar. Med ar vagon paour a guitaas adarre e raillou hag a splujas a-nevez e-barz ar bradenn.

Mantret, aon gante da veza tamallet, paotred an hent-houarn a zavas e-barz an treñ beajourien hag ah eas kuit gantañ. En deiz war-lerh, e teuas teknisianed, oustillet diouz se. Ar raill sieg a oe lakeet eun all en e blas hag e-kerz an abardaez, ar vagon a adkemer añfin e blas war al linenn. Soaz Seveon a roas a-nevez ragout ha kafe.

Eur hrogad mell-droad

Abaoe eun nebeud bloaveziou, e Kêr ar Roh, tri pe bevar goñversant a glaske, heb dond a-benn, da zavel eur "skipaill c'hoarierien fobal". Med tud an ti-kêr ne daolent ket evez war gement-se. Ha, heb tachenn-hoari, heb tamm skoazell arhant ebed, an dud a volentez vad a gollas kouraj hag a zilezas.

E 1922, da-geñver goueliou Ar Roh, hag a vez beb bloaz e penn kenta miz Gwengolo, an aozerien, skoazellet evid an taol-ze gand ar hoñseill, a deuas a-benn koulskoude da zavel daou laz-c'hoari mell-droad. Eun nebeud mistri-skol, c'hoarierien-bet ha yaouankizou bet stummet er skoliou, en em roas evid skei war ar volotenn.

Eur menajer ah asantas presti eun tamm douar, eur halvez a reas e vennoz d'ober ha da blanta postou ar paliou. Bolonteziou mad en em gargas d'ampresti trikoïou digand paotred al lazou-c'hoari tro-war-dro. Prenet e oe ivez eur volotenn pe diou ha kavet e oe ivez eur barner.

Ar hrogad a oe taboulinet tro-war-dro. Toud gwardou-mêziou, toud sakristed ar hontre, war ar mên pe war ar groaz, a roas da hovezoud d'an oll, goude an overniou-zul, e oa eur hrogad braz a vell-droad etre eul laz-c'hoari euz Kêr ar Roh hag eun all savet gand c'hoarierien ar parrouziou diwar-dro, da-geñver goueliou ar gumun.

Aozerien al lidou a oa asuret en a-raog euz eur gounid mad. Kavet o-doa eun dachenn-hoari, er-mêz euz ar Roh, war bord ar Yodi... med e parrouz Langoad. Evel dre zegouez al laz-eneb a oa evid kalz a Langoadiz. Trivliuz e seblante beza ar hrogad. Paotred ar Vilaj (da lavared eo Ar Rohiz), c'hoarierien ha sellerien ivez, a ziskoueze dija pegen briz karerien-vro e oant.

Ar hrogad a zlee komañs da deir eur. Kaer e oa an amzer, niveruz an dud e-barz ar park. Al leur-hoari a oa diwallet gand peuliou plantet e-barz an douar ha kildroet a gerden. C'hwistellad a reas ar barner an taol-kas d'an eur. Daoust da veur a hoarier da veza hegaset, ar hrogad a voulhas seder a-walh.

Deg munutenn goude, eur c'hoarier rohad euz al linenn-divenn a falhas eun araoger euz al laz-eneb, war ar poent da zistaga eun taol-pal. Hemañ a jomas astennet war ar yeot glaz, o tiwaska gand ar boan. Eul lodenn euz ar zellerien a houlennas eun taol-kastiz. Eul lodenn all a gelhie ar c'hoarier hag ar barner a zleas kleved an deiz-se ar haerra kunujennou euz toud e vuhez.

Ar barner, en entremar, ne hoveze ken petra ober, a gement muioh ne oa linenn wenn ebed evid merka al leurenngastiz. En eur zerr-lagad, toud ar zellerien a oa war an dachenn-hoari, e-pad ma skare "paotr ar c'hwistell" ar buanna ma helle evid en em lakaad er-mêz a zañjer. An taoliou a goueze a-buill a beb tu. E-kreiz ar mesk hag an drouz, eun hanter dousenn a baotred solud euz Langoad, euz ar gevredigez-a-ziwall, a zeuas war an dachenn, beb a benn-baz en o dorn. Unan aneze e-noa eur horn-mouez :

-« Ho pedi a ran d'en em denna dioustu diouz an dachenn-hoari. Anez e vo red deom mond d'ho sikour ».

An alouberien a zentas. Nemed eun daouzeg bennag a ganfarded pevarzeg, pemzeg vloaz : Bokedou kaerra Traoñ-ar-Pont. O anavezad a reen peogwir e oam memez oad. Trabaserien, ravailoned, farserien, fier da veza "Paotred ar Vilaj". Ne oant ket, er hontrol, tud d'ober droug d'o nesa ! ma ne oa da laerez eun nebeud sivi, kerez pe per e jardinou ar vourhizien. Selled a rejont ouz strollad an darined ha kompren a rejont buan e oa inutil klask jeu oute.

-« Bez' eh int kalz kreñvoh evidom », a hrozmolas Penn ar vandenn, « med ni a zo kalz muioh dillo. D'am zaol c'hwistell, tehit a beb tu e-touez an dud. D'an eil taol, deuit oll en-dro war an dachenn-hoari med diwallit dreist-oll da veza tapet. Dond a raim d'o skuiza ».

Strollad ar baotred solud ah eas war-du ar Rohiz yaouank. Erruet eur pemzeg metrad bennag dioute, da daol c'hwistell o mestr, hag int da redeg e-touez an dud. Nebeudig adarre, d'an eil taol, setu-int o tond en-dro, dre dri pe bevar, 'trezeg kreiz an dachenn, oh en em zerhel pell a-walh diouz ar "ramzed". Ar re-mañ a glaskas taped krog en unan dioute hag e-nefe gallet beza o ostaj ; med goude eun taol c'hwistell all, ar vandenn a dehas adarre a beb tu.

Aozerien an abadenn a drugarekaas ar skarzerien... evid o zaol-zikour frouezuz. Med eur wech c'hoaz, ar c'hwistell a skiltras... hag ar re yaouank a zistroas evid ar wech diweza, dindan stlakadegou daouarn ar zellerien, eüruz braz da ober o mad euz an abadenn evid netra. Mestr ar vandenn a zaludas gand e zorn dehou ha toud ar skipaill a dehas kuit a-nevez, heb ma n'o-doa bet gwazed Langoad amzer da rebarbi.

E-pad toud an degoueziou-ze, ar c'hoarier gloazet e-noa bet amzer da zond war e du, hag ar barner da adkavoud e zifrom.

Ha d'adstaga erfin gand ar hrogad. E hanter ar hoariadenn, an daou laz a oa kein-ha-kein : daou ouz daou. Hervez ar barner, da vihana ; rag toud an taoliou pal a oa muioh pe nebeutoh daeluz. "Paotr ar c'hwistell", trehet gand an degoueziou, ne zalhe kont ebed diouz an "taoliou dihoari", an taoliou c'hoarier gand an dorn, ar hrogou a beb sort, an taoliou-korn, an taoliou-gwrimenn. Ar herden en-dro d'an dachenn-hoari a oa bet diframmet pell a oa. Ar hasedadou gwin, chistr, bier, a oa goullo buan. An degaser, gand e gamionetenn goz, ne baouez ket da vond ha da zond gand e varhadourez.

Ha da adkregi adarre.

Eur c'hoarier euz al linenn-divenn a-eneb, c'hoant gantañ dieubi e du, a zistagas eun taol-troad ken kreñv d'ar volotenn ken e kasas anezi da loja en eur wezenn-gistin, war gleuz ar park. Chom a reas eno, sac'het uhel, etre daou vranc teo. Ar zellerien a stlapas mein ganti, ar skarzerien, o fenn-baz, med netra d'ober, ar vell a jome gand ar wezenn.

Eur hrennard pemzeg vloaz bennag a ginnigas kraped war ar wezenn da daped ar volotenn. Unan euz an aozerien e drugarekaas :

-« Mad eo ar pezh a rez aze. Kaer eo euz da berz. Renti a rez dim eur zervij mad ».

Ar hanfard a grasas evel eur haz-koad er wezenn-gistin. Taped a reas ar volotenn, en em lakeas en e goazez war eur brank hag e lavaras d'unan euz ar renerien :

-« Me a zo mad amañ. N'on ket preset da ziskenn. Me a rento ar volotenn-mañ pa 'po roet eiz real d'am breur a zo en ho kichenn ».

Fuc'ha a ree ar renerien.

-« Mir anezi, da volotenn, bez' on-eus eun all », a lavaras unan dioute.

Mond a reas da gerhad ar volotenn all 'dreñv da dinell an evaj. Distrei a reas diou vunutenn goude. Dihwezet e oa ar vell ha toullet treuz-didreuz a-daoliou kontell.

E-keit-se, ar hanfard war e glud, e-noa kemeret ivez e gontell. He derhel a ree, gourdrouzuz, a-uz d'ar volotenn :

-« Eiz real d'am breur, anez da ze e plantan ma hontell enni ».

D'ar momed-se, eo eh anavas J.C., Prezidant strollad ar goueliou, er haz-koad ar wezenn, mestr ar vandenn he-doa lampet war an dachenn-hoari e-pad kenta lodenn ar hoariadeg. Gouvezed a ree mad ne laoskfe ket morse ar hanfard ar volotenn. J.C. a roas 'ta eiz real. Ar volotenn a zeuas neuze d'an traoñ hag ar hoariadeg a gendalhas.

Siwaz, unan euz ar skarzerien en em emellas. Anavezed a reas d'e dro or haz-koad, an hini e-noa greet kement a hoap outañ dirag toud an dud. Kregi a reas e skouarn ar breur nevez-pinvidig hag e piñsas anezi ken kreñv ken ma youhas hemañ gand ar boan :

-« Rent din buan an eiz real a zo 'n ez kodell, anez da ze e kasan ahanout d'ar jañdarm a zo du-hont ».

Ar hanfard ne reas ket digareziou, hag a rentas an arhant kerkent. Mestr ar vandenn, hag e-noa heuliet an traou, a gavas gwelloh chom en e goazez war e vranc da hortoz n'eo ket hepken fin ar hoariadenn, hogen ouspenn kimiad an dud ha hini an dinell.

Paotr ar horn-mouez e-noa prometet dezañ eun trepan. Koll-gounid e oa an daou laz-c'hoari : tri ouz tri. Beteg gweled !

Eil lodenn

Ar peizant tregeriad en despet dezañ...

An digorn-tro

E miz here 1922 e oan e sell mad da zistrei da Zant-Jo evid kenderhel gand ma studi. E-pad ar vakañsou, am-oa bet tro da en em gavoud gand an aotrou Bitoux, veteriner ar Roh. Pa garen kalz al loened, dreist-oll re ar menajou, n'am-oa nemed eur mennad, beza ivez veteriner. Sanket don en ma spered e oa an ide-ze ; med en em houlenn a reen penaoz en em gemer evid tizoud ar vicher-ze.

Rei a ris da houzoud ma mennoziou d'am mamm. Eur helou dudiuze eviti ! Alia a reas din mond da weled an Aotrou Bitoux. Hemañ n'am diskourajas ket, med e lavaras hepken e oa red din da genta beza bachelour ha da houde beza resevet er honkour evid beza degemeret en unan euz an diou skol "Medisinerez loened", Alfort pe Lyon. War an taol, ma hoant da veza veteriner a zisterraas eun tammig braz.

Deiz an distro d'ar skol, ne houezen ket c'hoaz netra diouz ma flanedenn, diouz ar beure. War-dro deg eur, e komzis diouz se d'am mamm hag a lavaras din :

-« C'hoant am-eus-me d'az kweled o terhel gand da studi. Da lienaj ha da draou a zo prest. Med da dad a zo etre daou vennoz ha ne zeblant ket felled dezañ rei e aotre. Gortoz eun tammig, mond a ran da helven anezañ ».

Ma mamm ah eas er-mêz hag a zeuas eun nebeud goude en-dro, heuliet gand an tad Ar Rolland. Ne zeblantas ket din e oa troet mad.

-« Felled a ra dit distrei d'ar skol da ober da "feneant". Soñjal a ra dit 'ta e chomo toud an dud amañ, er menaj, evid ober diouzit eun Aotrou ! N'eus ket ano a gement-se. Pemzeg vloaz e-teus hag ezomm a zo diouzit er gêr. Da vreudeur ha da hoarezed n'int ket bet keit ha te er skol. Dleed a rafes dija en em gavoud eüruz ! Bremaig, pa 'to debret da lein, e kemeri eur forh da vond da skuill teil da Bark Uhella ».

Ne respontis netra. N'am-oa ket d'hen ober. Kaset e oan da netra.

Da unneg eur, ouz taol, den ne houlennatas ahanon. Lonka a ris ma fred prim-ha-prim ha sevel a ris diouz taol, an hini kenta. Kemer a ris eur forh ha me 'trezeg Park Uhella. Oh erruoud en toull-karr ar park braz-se a zaou zevez-arad, pa welis ar hantadou a verniou teil a zleen skuill, ne hellis ken derhel ma foan hag e tarzen da ouela, beuzet en ma daerou. Kompren a reen e oa troet eur bajenn. Kenavo ma huñvre da veza veteriner ! Kenavo ma huñvreou ! An tad Ar Rolland, a oa o paouez kondaoni ahanon d'ober ar vicher galed ha poaniuz a beizant, n'am-oa nag an nerz-korv nag ar c'hoant eviti.

Soñjal a reen e Sant Jo, em hamaraded ar 4^{ved} am-ije dleet adkavoud e-barz an 3^{ved} klas. Ne gomprenen ket mennoz Ar Rolland. Evid ar wech kenta em buhez, e soñjen en displealded an dud.

Ar paotr-saout

E derou an diskar-amzer 1922, an tad Ar Rolland a anvas ahanon kenta paotr-saout Seveon, evid kemer plas ma hoar Chann ar Jolu a oa nevez-dimezet. Karget e oan euz ar zaout a-hed an deiz. D'ar beure, adaleg ma tivunen, e tleen rei deze eur rastellad vad a blouz kerh hag o goro goude gand sikour Mai Guyomard. Goude e roen al lêz kignet d'al leueou bihan. Echu pourvezadur ar beure, e veze dija poent soñjal e predou an abardaez hag an deiz war-lerh.

Klask a reen, ar gwella ma hellen, en em ober d'ar zoñj ne zistrofen jamez ken d'ar skol. Anad mad e oa koulskoude. Bez' e oan marteze trista potr-saout Bro-Dreger a-bez. Tamm-ha-tamm, koulskoude, en em reen diouz ma stad. Petra a hellen ober a-hend-all ? Kared a reen ma loened, ha pa grogis gand ma harg, e komzen oute aliesoh evid ouz tud Seveon. Ma zaout a zeuas da veza ma mignonezed ; evel just, e kaven darn dioute dreist d'ar re all.

Soñj am-eus dreist-oll diouz Dragonne. Eur vuoh espar e oa houmañ, kement dre he ment ha dre he skiant. Kerzed a ree dalhmad e penn ar vandenn pa gasen aneze d'ar beurenn. N'oa ket a voñtr d'ar houlz-se. Distrei a reem d'ar gêr diouz ar park pa glevem treñ teir eur o c'hwistellad. Ma tegoueze din ankouaad an eur, Dragonne ah ee war-du ar gloued hag a vleje evid degas soñj din diouz ma dever.

D'abardaez-noz, pa'h antreent er hraou, e lamme ar zaout war o lodenn voetrabez. Unan hepken diouz ma loened a hortoze gand pasianted fin ar vountadeg ; hag e oa Dragonne.

A-wechou, e tegoueze din chom da gaozeal gand Chan Varot, eur paotr-saout brudet euz Ar Roh. Ma c'hoarveze d'am zaout mond dreist d'ar hleuz er park all, e save Dragonne da vlejal war ar hleuz evid rei din da houvoud. Ne ziskenne jamez en tu all.

Dirag loueriou-dour, e veze ordinal an hini diweza o terri he sehed. Dre aon, sur a-walh, da veza gwall vountet gand ar re all pe da resev taoliou korn (ha ne roe ket en-dro, morse !) ; pe kentoh dre finesa, pe dre skiant, ma fell deoh anzav o-deus ar zaout eun ene ivez...

Maro eo ar paour-kêz Dragonne dindan taol morzol nerzuz Tonton Fañch ar Rolland. Koz e oa, ne roe ken a lêz nag a leue. Neuze ma zud a zivizas he larda evid he laza. Bet o-doa tra-walh a gizidigez evid pellaad ahanon diouz ar gêr e-pad daou zevez evid ober o zaol. Mond a ris da blanta patatez ti ma hoar Chann ar Jolu. D'am distro, Dragonne a oa e-barz an hili zall. N'am-eus debret morse tamm ebed anezi. Ma zud n'o-deus ket dalhet warnon. Gouvezed a reent e oa inutil.

Ne oa ket druz ma fae a baotr-saout ! Ken dister e oa gwerz-butun ar zul ken ne oa kaoz da foeta arhant. Douget d'ar sportou, dreist-oll d'ar vell-droad, an daou Dremel ha me, e roem pep hini e skodenn evid prena ar "Miroir des Sports" ha

”Sporting”. Taped a reen ivez kaoud eur romant bennag ha setu penaoz e ris anaoudegez gand Arsène Lupin, ken marzuz, an Erer Du, Robinson Crusoe. Evidon-me, d'ar mare-ze, toud an dud-se o-doa bevet, e gwir. E Sant Jo, or helenner galleg e-noa ankouaet deski deom an disheñvelder etre eul leor istor hag eur romant ”avanturiou”.

An Aotrou enseller

Eun deiz, d'abardaez, o tond gand ma zaout diouz Traoñ-an-Dour, o laosken da beuri war goulienn an hent a gase da Zant-Renaod. Chan Varot a ziskenne gand e re. Kustum e oa ol loened da en em gavoud ha ne glaskent ket en em ganna. Tost e oant da dremen-a-rez an hent-houarn ”Seveon”. An treñ bihan teir eur a oa o paouez tremen, ha soñjal a reem e oa frank an hent ganim. Lod euz or zaout a beure war ar wenojenn miret evid an dud war-droad a-hed al linenn.

Klakenni a reem diwar-benn traou ha traou all, pa glevjom a-greiz-toud eun taol c'hwistell skiltr hag a badas eur momed.

-« Kaoh ! an treñ marhadourez », eme Chan Varot.

An treñ en em lakaas da vond war e horregez, a dremenas e-biou d'ar zaout, war al linenn, heb diêster ebed, hag a dreuzas ar hroazhent-houarn.

-« Tremenet eo ! », a lavaras adarre Chan Varot, eüruz ha dizamant.

Siwaz ! an treñ bihan a oa hartet eun tammig pelloh hag eun den gand eur hepi paotr-an-hent-houarn a deuas war-du ennom en eur huchal :

« Ne welit ket 'ta ema ho saout war al linenn ? »

-« On digarezit », a responten, seven. « Med an treñ teir eur a zo o paouez tremen. Ne zoñje ket dim e oa eun treñ marhadourez dioustu war e lerh ».

-« Dizenti a rit ouz al lezenn », a gendalhas egile. « Da biou eo ar zaout-mañ ? »

Evel na felle ket din, a gont ebed, lakaad Chan Varot e kaoz dre ma helle kleved e Zantamaria gand e vistri, setu ma responten :

-« Da Zoaz Seveon ».

-« Petra fell deoh lavared ? », a dareas ar paotr.

-« Ni a lavar deoh, ar zaout en em gav aze bremañ, war al linenn, ar zaout-se a zo da Zoaz Seveon ».

-« Piou eo ar Zoaz Seveon-ze ? »

-« Ma mamm ».

-« Hag e peleh ema-hi o chom ? »

-« Heuillit al linenn war-du Ar Roh : treuzi a ra al liorzou hag ar menaj a zo war an tu dehou d'al linenn. An hini kenta a welfet, a-benn pevar pe pemp kant metr ».

-« Ha c'hwi a lavar e treuz al linenn al liorzou ? »

-« Evel ma lavarit, Aotrou, al linenn a droh or berjez e daou ; ar pezh a ra deom kaoud gwe⁶ evid distrei or zaout d'ar gêr ».

-« Ha penaoz e rit evid o degas d'ar gêr ? »

⁶ Kaoud gwe : kaoud mizer.

-« Digeri a ran, na petra 'tra, kloued ar hroaz-hent-houarn ».

-« Med, evel-se, da zaout a hell mond war al linenn ».

-« Hiniennou a deh a-wechou diwar o hent evid mond warni ».

-« Med divennet eo ! »

-« Marteze a-walh ! Med n'eo ket dre or fait ma treuz ho treñ or berjez. Derhel a ran koulskoude da lavared deoh eh anavez an euriou an treñ bihan hag e reom diouz or gwella evid diwall en em gavje ol loened war al linenn, pa vez o vond da dremen ».

-« Ahanta ! Lavarit d'ho mamm e teuin da weled anezi warhoaz evid ober eur prosez-verbal ».

-« Bizit piou a zlefen lavared dezi ? »

-« Hini enseller hentchou-houarn an departamant ».

-« Lavared a rin d'am mamm. Toud an dud a zeu da Zeveon a vez degemeret mad. Koulskoude, Aotrou Enseller, e lavaran deoh e rafeh gwelloc'h diwall ober ano euz prosez-verbal ».

-« Gwelet 'vo ! »

En eur errued er gêr, e lavaris d'am mamm diouz bizit an enseller evid an deiz war-lerh.

-« Resevet e vo evel m'eo dleet ! », a lavaras hepken ma mamm.

Oh echui e oam gand on adverenn pa'h erruas an enseller. War urz ma mamm, e chomen er zal ganti, em hoazez, e-tal an tan. Kerkent ha m'en-doa greet e hourhemennou, e pedas ma mamm anezañ da vond ouz taol da zebri eun tamm ganim.

-« Trugarez deoh, itron, med n'on ket kustum da zebri da beder eur ».

-« Ne houvezan ket perag oh deut da Zeveon, med gouvezit mad, bete-vremañ, den n'eo deut c'hoaz en ti-mañ, da eur eur pred, heb kemer perz ennañ.

Dre zevender moarvad ha dre zoujañs marteze, en em lakeas an enseller ouz taol, e kemeras eun tamm bara hag amann, e tañvaas an anduillenn, eh evas eur volennad chistr, a kavas sur 'walh saouruz e vlaz, e tiskargas eun all, ha zoken eun all c'hoaz. Komz a ree a draou pe re all gand ma mammig hag eh evas an tri-hard euz ar voutailad chistr, ma mamm ha kemer evez d'e zerviji beb an amzer. Goude, e tegasas dezañ gand eur bannah kreñv hag a oa, anad deoh, "mab ar gêr".

Soaz Seveon a gavas neuze e oa deut ar momed da vond d'an traou a-bouez. Goulenn a reas 'ta digantañ ar perag euz e vizit. An enseller, o klask adkavoud e skiant, a respontas :

-O ! Itron ! me 'felle din hepken lavared deoh e vefe mad pedi ho mabig yaouank da daol eun tammig muioh evez ouz e zaout war-dro ar hroaz-hent-houarn. Med dreist-oll, na hourdrouzit ket anezañ. Ken seven eo bet ganin, deh d'abardaez, ma vijen glaharet ! »

-« Na en em jalit ket, Aotrou, roet am-eus eur gentel dezañ ».

An enseller a glaskas sevel hag a gouezas adarre 'n e goazez war e vank. Soaz Seveon a gemeras he zro evid ober dezañ trinka eur wechig c'hoaz. Dond a reas memestra da en em lakaad war e zav. Horjellad a ree eun tammig war e dreid, hag

e tleis e zikour da guitaad an ti. War an treuzou n'ankouaas ket trugarekaad ma mamm evid he degemer ken dreist.

-« N'on ket prest d'ankouaad degemer peizanted Vreiz », emezañ.

-« Kalz gwelloc'h eo evel-se », ah echuas ma mamm, ha rei dezañ eur pakad bihan, gand diou anduillenn e-barz.

-« An dra-mañ a zo evid ho kwreg ! »

Er porz, an enseller ne houeze ken pe du kemer evid kuitaad ar menaj. Kemer a ris e velo hag e pedis anezañ d'am heul evid kemer hent Landreger.

E heul a ris evel-se war gant metrad bennag. Êzennou "hini kreñv" Soaz Seveon a nije kuit a-nebeudiougou.

-« Gortozit c'hoaz eun tammig, a-raog sevel war ho velo. Bremaig e yelo gwelloc'h an traou. Med taolit evez, kant metrad diouz amañ, ez eus eur hroz hent-houarn ».

An Deiz kenta a'r bloaz

Er goañv e veze nebeud a labour e-barz ar menaj. Evid peizanted Vreiz, e oa ar mare da en em gavoud aliesoh evid beilla, marvaillad, pe c'hoaz ober tro ar hêriadennou evid nozveziadou brudet ar bloaz nevez.

E Seveon, deiz ar bloaz a oa eur gouel dreist. Sevel a reem, va breudeur ha me, d'an eur gustum, war-dro c'hweh eur hanter. Redeg a reem d'an ti ha taboulinad a reem war an nor evid divuna ar merhed a oa c'hoaz kousket. Lakaad a reent eur jiletenn hloan war o chouk, ha dre reñk oad, Jolu e penn kenta, heuliet gand e hoar Chanig, ma hoar Frañsin, ma breur Yann, ha me o kloza ar brosesion gand Mai Guyomard, eh eem da gambr or zud.

Bez' o-doa o lamp "Pigeon" hag adaleg ma antreem, en em lakeent en o hoazez en o gwele. Pep hini, d'e dro, a ginnige deze e helou gwella :

-« Bloavez mad a hetan deoh, yehed ha prispolite, hag ar baradoz e fin ho puhez ! »

Greet ganim on hetou, pep hini a zlee mond d'e labour-bemdez a-raog lein: war-dro ar hezeg, ar zaout hag en em adkavem toud ouz taol. Mitonet e veze ar zoub evel an ordinal, evid ar wazed nemetken. Ar merhed a helle kregi dioustu gand ar bara-amann ha kafe.

Frañsin, Yann ar Moal ha me, on-oa droed euz eur varrenn jokola Menier ha deg kwenneg ouspenn. Jolu hag e hoar, o veza eet dreist oad ar madigou, a reseve c'hweh real. On zud, ar peurliesha, a veze en imor vad da zeiz ar bloaz. Setu perag e kemerem on amzer ouz taol. Goude, red mad e oa, e skubem al liorz, e lakeem ar bern-teil war e rez. Ha, yao en hent da heti ar bloavez mad d'an amezeien. Bez' on-oa or zeier e leh ma oam asur da gaoud eur galanna vad.

Komañs a reem dalhmad dre Gerfalig, eur menaj e-kichenn e leh ma vezem degemeret gand eur blijadur vraz gand Mai-Zent Gallou, eur vaouez a galon vad. Rei a ree da bep hini eur grampouezenn deo ed-du a denne diouz he forn. Ha, buan e tehem 'trezeg Zant-Renaod, ti Chann Vai-Noud, a oa bet reuziet gand "gang ar fals Voneizerien", hag a roe dim diou varrennig reglis. Evid echui, eh eem

da weled an itron an Diuzed, ar gemenerez. Derhel a ree eur stalig spiserez ha rei a roe dim beb a damm chokola.

E-keit-se, e Seveon. e oa an defile. Toud ar famill Durand a oa aze. Maivon ar Halvez, Mari Lukaz, Matilda, Fañch ar Rouz, an deveziataer tort, Fañch Gallou... Ma hoarezed Chan ha Frañsin a boanie evid serviji toud an dud-se. An deiz a-raog, an tad ar Rolland a oa bet eet da gerhed bara fresk ti Toupet, bouloñjer ar Roh. E-leh ar seiz torz kustum, en em gontante da gemer teir nemetken. Hag e plas bara loued an deziou all, deiz ar bloaz a laoske plas d'ar bara fresk, ar hig-sall da chaosisou hag anduill ken blazet mad Chan Mar ar Rolland. An amann a oa aze war an daol evel just. Pep hini en em zervije, evel ma intente, hag ar vugale Durand o-doa aliez o hov goullou, a zebre a galon vad. Ma hoarezed a ziskarge ar hafe hag a ginnige ar gwin-ardant d'ar wazed.

War-dro unneg eur, toud ar famill, heuliet gand Mai Guyomard, ah ee da friko an deiz kenta 'r bloaz ti ar vamm-goz ar Rolland, e Pevar-Avel e Langoad, eur c'hweh kilometrad bennag diouz Seveon. Ma breudeur ha ma hoarezed ah ee war velo, ar re all e charabañ sachet gand spazard bihan Seveon. Rustig, solud evel eur roh, dous evel eun oanig ha penneg evel eur mul.

Er Pevar-Avel, toud ar famill Rolland en em gave bodet : pemp breur ma zad, o friejou hag o bugale, hag ivez he diou hoar Frañsin hag Aoustina. Toud asamblez, e reem eur strollad a hweh pe zeiz warn-ugent gand eun deg yaouank bennag. Ne oam na kar na par d'ar famill ar Rolland, med evid ar vamm-goz, pa 'n-oa ano Jolu pe Voal, e oam toud bugale wirion he mab Fañch. Kredet am-eus dalhmad on degemere mamm-goz gand eun evez dibaot. Marteze e oa dre gendruvez evid he mab e-noa, eñ, degemeret eur famill a bemp a vugale.

E-pad eur pennad, ar "bloaveziou mad" hag ar pokou en em eile niveruz. Ne oa ket kision evid ar vamm-goz loja toud an dud-se e-barz diou zalig he zi. Evel ma oa eur vaouez bepred a-wel, he-doa greet sevel eul logenn dol ouz ar pignon. Ha setu peleh e vije dreset an daol. Ar re vraz en em lakee e leh ma karent. Med ar vugale a gemere plas e penn an daol. En on asied, mamm-goz he-doa pozet eur baner vihan baper, enni eur mabig Chezuz sukr. Ar galanna-ze, zoken ma teue beb bloaz a-nevez, a ree on dudi.

Pa en em gavem e-barz al logenn, e veze divennet din kregi er mabig Chezuz a zlee beza miret evid ar meuz diweza. Aotreet e vezem hepken da zelled outañ ha da zourenni. Red e veze dalhmad eur pennad amzer evid en em lakaad ouz taol. Kement ha kement a draou a oa da lavared. Pa veze eet toud an dud en o hoarez, unan euz on tintinou a zegase eur pezh pladad soubenn war an daol. Ar brasa vad a ree din ar zoubenn.

Ne veze ket gwall domm deiz kenta 'r bloaz, e-barz eul logenn dol. Med pep hini e-noa en em gemeret evid se : ar wazed gand o botou-koad sired, karget a blouz heiz fresk, ar re yaouanka gand o galochou bourellet gand an heveleb plouz, hag ar merhed, int, o-doa lakeet o botou grosa ha doublet o loereier gloan. Gand eur seurt gwiskamant, den ne en em glemme morse diouz ar yenienn.

Ar pred a veze servijet heb koll amzer. Goude ar zoubenn, e veze chaosis fresk, anduill gand yod patatez ha goude-ze ar plad braz : kig lapin gand legumach. Ar re yaouank ne joment ket pell ouz taol. Adaleg ar plad kenta, e nijem kuit. E-keit-se ar famill a helle komz heb beza diêzet.

Ar wazed a gomze diouz an hada o paouez echui, ha dreist-oll diouz ar hezeg. D'ar mareou-ze, peizanted bodet asamblez ne hellent ket marvaillad e-pad eur hard-eur heb na zeufe ar gaoz war ar hezeg. Ar merhed a gomze diouz o bugale, diouz priz ar moh bihan, diouz an dimeziou da zond. War-dro fin ar pred, unan euz on zintinou a halve ahanom :

-« Hastit buan, friko boulou a zo ! ».

Da lavared eo e teue momed ar meuz frouez ; prun mirabel koñserv. Goude ar hafe hag ar bannah hini kreñv, e tistroem d'ar gêr. Da goan ar bloaz nevez, n'on-oa nemed eur zoubenn rata hag eh eem goustadig dezi. Med ar re furra o-doa miret o zammig mabig Chezuz sukr.

Beilladegou karter

Beilladegou ar bloaz nevez a gemere eul lodenn vad euz miz genver ; goude koan eiz eur, evel just. Ar mare nemetken euz ar bloaz ma helle ar beizanted en em gavoud etreze. Boulha a reem dalhmad dre Zeveon, d'ar bevar pe bemp euz ar miz. Va zud a reseve menajerien Boud-Ilio, Keralig ha Kêr-Rivoallan.

Ar pennou-famill en em lakee e kambr on zud a ree zal-degemer evid an degoueziou braz. Greet e veze eur horadenn vad a lann. Lod a hoarie kartou hag ar re all 'gonte kaoziou o lipad bolennadou chistr. Kaoz war ar hezeg, evel just. Peb menajer a anaveze kezeg e amezeien : o oad, o stummou mad, o zechou fall, o orin. Ma 'nije gwerzet eun amezeg, ha ne veze ket eun ezel euz ar bagad, eun aneval, n'o-dije fin ebed gand o haoz. Pep hini a roe e ali war abegou ar werz, evid kavoud fall pe, a-wechou ivez, evid meuli.

War-dro deg eur, pe deg eur hanter, ma veze red gortoz fin eur barti hartou, e tebrem on adkoan : bara, amann, anduill ha gwastell ar rouanez. En em guitaad a reem war-dro unneg eur hanter. Ar re goz a felle dezo beza en o gwele a-raog hanternoz... evid beza war o zu an deiz war-lerh beure.

Ne veze greet nemed eur veilladeg ar zizun, d'ar merher, pe d'ar yaou. Beilladegou ar gwener a oa, koulz lavared, divennet gand ar vijil.

Triad Boud-Ilio

E-touez ar re a gemere perz e-barz beilladegou ar bloaz nevez e oa tud menaj Boud-Ilio. Dleet e vefe bet dim rei deze "Meneg ar stumm divoutin".

Daou vreur, Yann, Reun hag o hoar, Anna-Ivon, a laboure douarou eur menaj, eur pemp-kant metrad bennag diouz Seveon. Ti menaj Boud-Ilio a oa bet savet e fin an naontegved kantved. Troet e oa d'ar hreisteiz gand prenestou braz. Eun dra dibaot e-barz ar hanton.

E rez an douar, e oa eur gegin ha diou zal all. War-laez, teir gambr hag eur gambrig emwalhi ha ne zervije morse. Ma 'n-oa an diavêz kalz a stumm, kramennet e oa an diabarz a loustoni heuguz. Digemeruz-tre e oa an ti... evid al loened ! Eur minihi evid toud ar yer. Ar chas hag an daou gaz en em zervije o-unan e kig-sall ha kig-bevin pa chome digor dor al listrier.

Beb an amzer, Yann, an hini hena, ha moarvad an hini futeta, a skube ar gegin. Med Triad Boud-Ilio a blije d'an oll. Zoken, ma veze red, e teue Seveon d'ober ar menaj a-raog ar veilladeg... evid galled serviji ar chistr e bolennou bet gwalhet.

Yann a jike evel ar jikerien all, na mui na mez. Reun, eñ, ne baoueze ket da chikad. Teir jikenn e-noa dalhmad : unan en e henou ha diou o hortoz dindan e dog. Ar ju aneze a zivere war e ziouskouarn ha war e jodou ! Ann-Ivon, hi, ma ne jike ket, a brize a-hed an amzer. Ma teue beradou da zivera diouz toullou he fri, e tape aneze gand eun taol-teod trumm hag o skope a-nevez dioustu war al leurenn.

Al labourerien diouz an devez

Komzet am-eus diouz ar famill Durand a zeue da Zeveon da heti ar bloavez mad. Ar famill-ze a oa ar baourra euz parrouz ar Vinihi. Per, an tad, a oa karrer. Ne houeze na lenn na skriva. Med gouzoud a ree muzulia. Limoniou, rojou, emrou eur harr greet gantañ ne chañchent ket euz eur milved-metr.

Loja a ree gand e wreg hag o femp bugel e-barz eun toull-ti bihan teñval ha diyeheduz. Pa zeue da labourad da Zeveon, eh arrue abred-kaer diouz ar beure, kalz a-raog lein, e zahad oustillou war e gein. Per a labourer heb ehan, o kas en-dro an heskenn, ar rabot hir hag ar morzol gand eun ampartiz ha ne oa da zen all ebed. Harta a ree e-pad pemp munutenn er veurevez, amzer eur chopinad. Da greisteiz, e wreg hag o femp a vugale a zeue da Zeveon. Evid va mammig, se a ree seiz a dud ouspenn da voueta. Med Monik ne helle ket ober a-hend-all. Er bloaveziou 20, ar "profadou tiegez" ne oa ket c'hoaz kaoz aneze.

Er goañv, zoken, e veze labourerien e Seveon. Ma ne veze ket Per Durand, e veze Frañsin Lamezeg pe Soaig Allan. Frañsin a oa or hemenerez. Va mamm hag hi a ree eur houbladig korrigerzed : Frañsin gand he metr tri ha daou-ugent, ha Soaz Seveor gand he metr ha daou-ugent, med Frañsin en em bake e ledander. Ken teo e oa ha kuza a ree kement he gwaz, jardiner ti bourhizien euz Langoad, ken ne hovezem ket zoken e ano. Pa gomzem dioutañ, e lavarem heb muih : "Gwaz Frañsin an Amezeg". Eur menaj hag en em gleved mad-tre Batist, gwaz Frañsin, a zente kement war ar ger.

Frañsin he-doa eur mekanik da wriad Singer, ha ne oa nemetañ e-barz ar barrouz a-bez. Pa zeue da Zeveon, unan euz ma breudeur ah ee da gerhad anezañ gand ar charabañ da Langoad. Frañsin a beñselie porpantou, jiletannou ha bragou ma zad ha ma breudeur. Labourad a ree ivez evid ar beorien. Ober a ree dillad nevez gand ar re goz dastumet gand ma mamm ti hiniennou euz koñversanted ar Roh. Med al labour a gave ar gwella a oa dresa mantellou, korsajou ha broziou ar

merhed. Ober a ree a-wechou dillad nevez evite. Med jamez evid ar baotred. Hen nah a ree groñs.

-« Labour ar hemener eo an dra-ze ! », emezi.

Ouz taol, e oa eur blijadur he selaou. Derhel a ree ar gaoz, heb ehan ; distagellet mad e oa ha plijadur a ree dezi fentigella.

Anavezad a ree toud keloioù ar hontre, med ne gomze ket aneze nemed asur e veze euz o gwiridigez. Re galoneg e oa Frañsin evid beza eun teod fall. Beb noz, da goulz koan, eh errue Batist d'he herhad. E-pad ar goañv e kemere e letern. Med ne veze alumet nemed en distro, dre zoursi espern, ha diwall na lakfe Frañsin he zreid e-barz poullou-rod an hent.

Soaig Allan a oa ivez kustum da zond da Zeveon. Taper gozed e oa... etre kalz a draou all. O chom e oa e karter ar Geñdi, e penn all ar barrouz. Ezomm ebed da lavared dezañ dond. Soaig e-noa e glianted. Tremen a ree e koulz, rag anavezad a ree toud parkeier ar hontre. Ar peurliesañ, eh errue e Seveon, d'abardaez-noz, da goulz koan, goude beza bet oh ober eun dro dre nebeud a barkeier ha stignet pechou el leh ma c'hoarie ar gozed.

-« Lakeet am-eus pechou e Park an Tog », a lavare Soaig o tond en ti.

An deiz war-lerh eh errue evid lein, gand trapou all hag e bigellig. Digor e oa ar chase. Soaig, gand e votou ler bourret gand plouz heiz, a gerze goustadig ha sioul e-barz ar park, o spia gand evez al leh ma kleuze ar hoz. Hag, en eun takad pigellig, e tenne ar hoz diouz an douar. Ha n'en-doa ken nemed kregi enni. Echu e labour gantañ, e tenne kuit an trapou lakeet an deiz 'raog. Ar peurliesañ e veze eur hoz e peb pech.

Soaig a ziskrohenne neuze ar gozed er park. Eur feur prizet braz gand ar belleterien e oa ar hrohenn goz, d'ar mareou-ze. Pae Soaig a oa hini eun artizan diwar ar mêz. Kalz diwezatoh, marhad ar hrohenn gozed a gouezas, den ne oar perag. Soaig Allan ne viras nemed e glianted wella evel Seveon.

E-pad treuzad ar patatez, Soaig a zeue da veza kourater evid ar varhadourien a-vraz. Pa dremene marhadourien lien e-barz ar vro, eh ee Soaig gante diouz eun ti d'eun all, rag anavezad a ree mad an terrour. Kaoud a ree c'hoaz kalz a fredou all hag e helle evel-se dond a-benn da zevel e famill en eun êz madig a-walh.

En e amzer dilabour, Soaig a oa eur c'hoarier akordeoñs. Evel ma oa eur muzisian euz ar henta hag eun didueller-ar-bobl, e teuas da veza eun artist brudet dre Vro-Dreger a-bez.

An dremenidi

Seveon en-doa aliez bizit marhadourien a beb tra. Hervez ar pezh a oa ezomm, e vijent degemeret mad pe welloh. Paotr ar Haifa hag Anna Arhant a veze mignet dalhmad gand Soaz Seveon.

Penna pourvezer traou da zebri, bet kaset d'ar gêr war-eeun, a oa eun den anvet Debre. Dond a ree diouz kostez an Naoned hag o chom e oa e Landreger. Labourad a ree evid Ti ar Haifa. Degas a ree e draou en eur wetur vihan, heb

moteur nag aneval. Evid harnez, e-noa eur hi, eur pezh loen menteg, eun spes dogez, ledan mad e vruched.

Ar hi a zache ar wetur teir-rod. Debre a vounte warni. Eun emgleo dreist a rene etre an den hag e loen. An den a oa ar mestr, med ar hi a oa ar blenier. Klask a ree dalhmad an hent gwella evid pellaad diouz an toullou hag ar rigolennou re zon. Ma seblante dezañ gweled eun dra bennag hag a-nije lakeet harz oute, e paoueze da zacha. Ar patron a gomprens hag a chañche roud d'ar wetur. Hag ar hi a adkroge gand e zach.

Paotr ar Haifa a deue da Zeveor beb gwener, war-dro c'hweh eur, hañv-goañv. Beb tro, ma mamm a brene digantañ kafe, chikore, sukr, pebr, eoul, gwinegr hag eun nebeud artiklou all evid ar menajou diwar-dro.

Debre a groge e droienn war-dro eiz eur diouz ar beure. Bemdez e ree evel-se tregont kilometrad bennag a-dreuz mêziou Bro-Dreger. D'ar zadorn ne labourere ket, med sikour a ree e wreg en he stal e Landreger. Eur stal Kaifa, evel just.

Anna Arhant a zeue, hi, da Zeveon, d'ar meurzh, gand he harr-bihan savet war beder rod kaoutchou peuruzet. Poania ha klemm a ree, trouzal a ree ivez evid dibab he hent a-dreuz ar poullou-rod d'he harrad presiuz. Anna a oa dastumerez-uou. Mond a ree dre ar mêziou evid eur hoñversant euz a Wengamp.

Beb meurzh, en em reñke evid beza e Seveon a-benn merenn unneg eur. Gouvezed a ree he-doa eur plas mad ouz an daol-famill. A-raog mond ouz taol, eh ee en he hoazez war bank-tosel an oaled, a zehe he dremm leun-hwez gand eur mouchouer braz karrezet, hag e konte dim keleier diweza ar hontre.

A-raog ma kuitae an ti, e houvem ar pezh a veze bet c'hoarvezet abaoe ar zizun a-raog war toud ar hornad-bro he-doa redet drezañ. Med Anna a jome ivez selluz en he homzou hag evezieg.

Diskuzet ha war he gwalh, Anna a gonte, c'hweh-ha-c'hweh, an uou a roe ma mamm dezi en eur baner. Paea a ree hervez ar priz lakeet gand ar henwerzour. Rag Anna a oa paeet diouz ar feur. Pa veze ar priz war diskar, koumanant an dastumadeg a ziskare ivez hag a-wechou eh ee da hesk. Er hontrol, pa veze war gresk, ar henwerzour ah ankouae derhel kont diouz se.

Daoust dezi da veza dimezet da Imai Sevenneg, deveziatær hag ivez dreser paipluiou euz an eil penn d'egile d'ar bloaz, Anna Arhant he-doa dalhet d'he ano plah-yaouank ; eun dra ral e Bro-Dreger ! Anna, evel just, e-kerz he zroiou, a zastume ar paipluiou da dresa hag a rente d'o ferhenn ar re a oa bet aozet.

An dornadeg

Eun devez-dorna e-barz eur menaj a dregont pe daou-ugent devez-arad a houlenne sikour eun tregont bennag a dud, gwazed evid an darn-vuia. Setu ar pezh a veze anvet ar skipaill. D'ar mare-ze, e Treger, eur menajer hag a-neve ezomm eun taol-zikour, a helle c'hoaz konta war e amezeien. Peb menaj a gase, hervez ma helle, en deiz choazet evid an dorna, tri euz e dud evid rei eun taol-zikour d'e amezeg.

Diêsaad a ree an traou, pa ne ree ket tud ar skipaill o dorna gand ar memez embreger. E gwir, eun embreger-dorna, evid tremen e-biou da re hir mond-hadond gand e vejanik, a glaske heulia spiz e roll-labour. Evuruzamant, lod euz ar menajou o-doa o dornerez hag a helle evel-se dibab o-unan o deveziou-dorna.

Peb menajer, evid diwall en em gavoud berrig-berr gand e zornerien, a glaske en a-raog sikour pevar pe bemp a dud ouspenn, kerent pe vignoned. kement-mañ evid kaoud, pa zeuje an devez merket, toud ar sikour deread ha red.

An dorna a oa devez-braz ar bloaz. Diouz an eost eo e veze stad an arhant dizolo er menaj evid miziou-ha-miziou. Ma veze stummet mad an traou, e helled prena benviachou, gweled en a-raog al labouriou da ober hag an arhant red evid gwellaad ar menaj. Divuna a reed aliez en a-raog, med ne oa prouenn ebed euz frouez an eost, nemed pa veze echu an dornadeg.

Kempennet e veze peb tra en a-raog : skubet e veze plas ar berniou plouz, aozet ar grignolou evid reseo ar milieriou a hreun, goullonderet ar grañchou evid bernia ar pell, kaset ar binviou hag an ostillou d'ar verjez.

E Seveon, an deiz a-raog, dioustu goude merenn, Maria Lukaz, Matilda Pommelet ha Karolina Nouel a brepare an taoliou, ar mirhi-koad, ar bankou, ar gweleou ouspenn. Fañch ar Rolland a houlenne ivez sikour e zaou vreur : Batist hag Aleksandr, bete-gouzoud.

An tad ar Rolland a brepare ivez gand evez ar glaou evid vateur Bourva. Ar vilin-wenterez a oa en he flas, pazennou ar skeulioù a oa bet gwelet a-dost. Prest e oa ar vateur hag an dornerez da drei. Eur soursi nemetken : an amzer evid an deiz war-lerh.

Deut an devez, an hini kenta war al leur a veze embreger kustum Seveon : Ar Bourva. Imai Bourva e-noa diou vicher : bouloñjer e Kergwiomar ha dornar an eostou. Dall e oa, med kas a ree e aferioù hag e ostillou en-dro evel eun den hag a wel mad. Red e oa dezañ nemetken kaoud eur spizverk. Goude, plasa an dornerez a oa evitañ eur c'hoari a vugel. N'e-noa ezomm ebed a vuzulioù. Pazata a ree douar al leur ha dioustu e wele peleh lakaad ar vateur. Imai Bourva a vlenie e-unan e vejanik : dre an drouz eo e tivune hag-eñ e veze eeun an dornerez pe hag-eñ e veze red he diblas eun tammig bennag.

Selled a ree spiz ha ne veze deut den war-dro ar vateur abaoe an deiz-a-raog ; digeri a ree neuze toull an tan hag e garge a hlaou. Tud ar skipaill ah errue a-vagadou, lod gand eur benveg war o skoaz, falh pe rastell. Pa veze erruet toud an dud war al leur, mestr an ti a bede an dieien all, hervez o oad, d'en em garga d'ober ar bern plouz. Ma ne vezent ket niveruz a-walh, e veze choazet an deveziaterien gosa ah afe d'o heul. Sevel eur bern-plouz a oa eul labour diêz hag a houlenne bloaveziou skiant-prena. Setu perag e veze dibabet paotred kustum d'hen ober.

Ar re yaouank pemzeg-seiteg vloaz a veze karget da dostaad feskennoù ar bernioù-ed ouz an dornerez. Ar maouezed hag ar plahed yaouank a lodenne al labourioù skañva kenetrezo : karga ar zahadou greun, dastum ha dougen ar pell d'ar hrañj. Evid ar postou all e vez red terchal : lakeet e veze eur forh pe eur rastell

a-led war al leur hag ar baotred a daole o hontell an tosta posubl da benn troad ar benveg. An hini tosta a ree e joaz ha bepred evel-se hervez reñk pep hini.

Sevel ar zahadou greun d'ar hrignol a oa ar post ar muia goulennet. Hennez a oa an uhella ha choazet e veze evel-just gand an tri genta. A-wechou, an dougerien a houlenne groñs ma vefe karget o zeier beteg o genou (beteg kant kanter-kant pe eiz-ugent lur), evid ma hellfe ar re all en em renta kont euz o nerz. Med ar borterien a oa gouniduz da gaoud eun diskuiz digoll : tri baotr solud o-doa eur garg ha ne houlenne nemed daou ; ha galled a reent evel-se diskuiza pep hini d'e dro.

Ar postou all ar muia prizet a oa dalhet gand an troher kevrou, an hini a zispake goude ar feskennou hag a dremene aneze d'ar bouetaer, an hini o zaole war an daol dirag an troher, ar re o douge diouz ar bern beteg an dornerez. Ar re ziweza a zlee en em gontanti gand al labour a veze greet an displijusa anezañ : dougen ar plouz gand eur wif diouz an dornerez d'ar wrahell.

Teir gwech an deiz e veze terchet evid rei e bost da bep hini : d'ar beure, goude merenn hag adverenn. Pa veze pep hini en e bost, e lakee Bourva ar vateur da hwistellad hag an dornerez a groge beteg eiz eur hanter ; adlein a bade eun hanter- eur bennag. An embreger a guitae an daol da genta evid rei da houvezed e veze poent adkregi gand al labour. E vad a oa da gas al labour war-raog ar muia posubl e-pad ar veurevez. Rag dre ma'h ee an devez, e tisterrae an ampled gand skuizder an dornerien hag.... efed ar chistr.

War-dro deg eur, diou vaouez a ree tro ar chistr. Da unneg eur hanter, eur hwistelladenn a lavare mond da verenn. Ar bouetaer a baouez kerkent e labour. Netra n'eh ee ken e-barz an dornerez. Trei a ree goustatoh-goustata ken ma harte. An dougerien greun a zave o zahad diweza d'ar zolier. Lod euz ar wazed ah ee ëtrezeg ar puñs evid en em walhi, dremm ha douarn. Med an darn-vuia ah ee war- eeun ouz taol. Toud an dud a veze prestig en o hoazez. Goullo e veze ar picheradou chistr a-raog ma veze krog an dud da zebri. Keit ha ma pade ar pred, e veze karget eur vaouez da zegas chistr war an taoliou. Ar maouezed a zebre o merenn ouz eun daol vihan en eur horn euz ar zal gumun. Goude ar zoubenn, e teue ar ragoud : eur meuz ispisial aozet gand Soaz Seveon.

Ha da adkregi gand al labour war-dro eun eur da greisteiz, goude ma veze bet terchet adarre. Daou baotr a veze en-gortoz evid kraped e-barz ar harr lakeet ouz troad ar wrahell a uhellae tamm-ha-tamm. War-dro div eur hanter, chistr adarre. Da beder eur hanter, eur hwistelladenn da rei da houvezed e veze poent mond da glask adverenn : bara, kig-sall, amann, hag all hag ar picheradou chistr a zileunie buannoh-buanna.

Da bemp eur nemed kard, Bourva, e zorn e-barz hini e hentcher, ah ee ëtrezeg an nor ha toud an dornerien a adstage gand o labour. An nebeud a vabouzerien ha n'o-doa ket fin gand o hafe e yennae gand eur bannah chistr. Teirved ha diweza tennadeg ha pep hini a adkemere e blas. Ar hirri ouz ar wrahell a oa bet tennet kuit hag en o flas e oa bet lakeet skeuliou... Pintet war ar pazennou, daou baotr solud a dremene ar forhadou plouz an eil d'egile evid o zevel beteg kwreh ar wrahell.

Ha setu ma teue koan, añfin ! Patatez, anduill, kig bevin zall, restachou ragoud kreisteiz ha chistr, pep hini pezh a gare.

E Seveon, ar pred-se ah echue gand eur skudellad vraz a win. Koan a bade pell. Ar baotred a gemere o amzer. Dre berz ar chistr hag ar gwin, e veze draillet kaoziou. Kaozeet e veze diouz ar hezeg, eost mad unan pe unan all, bloavez fall egile, ha n'e-noa roet temz ludu a-walh d'e zouar pe gwellaet e had, dra ma oa an dra-ze eun dispign inutil, a zoñje gantañ. Evel-just ar gaoz ah ee ivez war gein ar venajerien ha ne oant ket izili ar skipaill.

Hag eh eed d'ar gêr, gand eur spered sklêr pe sklêrroh, evid en em gavoud adarre, an deiz war-lerh beure. An eil devez dorna e Seveon ah echue dre vraz war-dro c'hweh eur d'abardaez. Bourva a oa kustum da lakaad an dud da labourad stard an devez kenta, bete gouzoud e skoillfe e vekanik.

Nebeud goude ma veze bet dornet ar feskenn diweza, Imai Bourva a gase endro c'hwitellerez ar vateur e-pad eur momed evid kemenn d'ar menajou tro-war-dro e oa echu an dornadeg e Seveon hag ar wastell o vond da gomañs.

Ar wastell

Ar ger brezoneg-ze a dalveze kement ha : fin an dornadeg.

Med ar wastell a zo da genta eur "gouignenn domm". On zud koz, evid lida fin an dornadeg, a aoze gand bleud ed-du, amann hag uou, gwestell da lodenna etre an dornerien.

E Seveon, al labour ah echue dre eun taol skubell d'al leur.

Ar bern plouz a veze roet dezañ eun taol rastell-grib ha goude-ze, toud an dornerien a ree eun tamm diskuiz da hortoz koan.

Ar baotred hag ar plahed yaouank a hoarie asamblez : ebatou a beb sort - onest, pe dizonest a-wechou ivez. Ar re all a varvaille, en o hoazez war al leur, o hein ouz ar bern plouz. Evet e veze chistr a-bicheradou, da hortoz koan.

Founnuz e veze keusteuenn ar wastell e Seveon : soubenn, teod bevin gand hili broud, ragout. E-touez tud ar skipaill e veze ordinal eur haner bennag, unan koz ar peurliesa, eun tammig tommet dezañ gand ar chistr, ar gwin hag ar mik. Rei a ree an ton da ganaouennou gwechall-goz. Darn all a gonte istoriou. E Seveon, ar wastell ah echue dre zañs ar skubellou kaset endro gand Reun Boud-Ilio.

An dañserien, paotred ha merhed, a ree eur helh. Er hreiz en em lakee Reun gand e zaoulagad mouchet. Eur vaouez pe eur plah yaouank a zalhe eur skubellenn en he dorn. Reun a zlee divuna piou e oa en eur dastornad he skoaziou hag he dillad. Med hini ebed ne glaske kaoud eur pok digand Reun... Ha pa dostae, ar skubellenn a jañche dorn, an oll o c'hoarzin.

Evid echui, eur plah bennag en em ouestle. Aliez, Karolina Nouel. Toud ar helhiad a stlake daouarn, e-pad ma torche Karo glaouenn chikennou ar Reun war he chodou. Neuze, pep hini ah ee d'ar gêr evid en em gavoud an deiz war-lerh beure en eur menaj all euz ar skipaill. Fañch ar Rolland en em zalhe ordinal en e

zav en toull an nor evid starda e zorn da beb dorn hag e drugarekaad euz e zikour.

A-boan ma 'nije roet an dorn d'an hini diweza, ma treuze al leur hag e save er zolier. Aze, e-pad hir amzer, e pare e zellou war ar greun : frouez a gement a boan, a gontchou hag a zoursi. Hag e plante don e zorn er bern gwiniz, meur a wech hag e meur a leh, o kemer ar greun e palv e zorn, o pouezata anezo hag o lezel da zila etre e vizied.

Goude e roe eun taol-lagad diweza evid muzulia ar bern. War gazi daou-ugent milier, en em dromple a-veh eun nebeud sahadou. Echui a ree e dro dre zolier ar gegin e leh ma veze berniet ar herh hag an heiz. Neuze hepken e tistroe davedom, habask, kaled evel eur peul : laouenidigez ebed na kerse, da weled.

Ouz goulenn ma mamm :

-« Ha bet eo mad an eost ? », e responte dalhmad :

-« N'eo ket bet fall ».

Seveon a oa brudet da veza eun douar gwiniz. Med an tad Ar Rolland n'e-nije ket en em veulet, morse. Re zen a benn e oa, re fur evid leda evel-se talvoudegeziou e zouar. Ma lavare e amezeien dezañ :

-« Bet 't-eus eun eost mad ? » e responte :

-« Vid ar bloaz, e oa en douar mad. »

Fañch ar Rolland a oa eur wir Vreizad. Den izel e oa hag euz a oa gantañ poufal.

Ar bara loued

Goude an dorna, fin miz gwengolo, e kasem d'ar miliner tregont sahad gwiniz a zeg lur ha kant. En distro, hemañ a roe tregont lur vrenn dre zahad hag a zouge d'ar bouloñjer, er Roh, ar bleud red evid or bara. Beb sizun, eh eem ti ar bouloñjer da gerhad seiz torz vara deg lur. A-wechou, e chome restachou hag en em gavem neuze aliez a-walh gand eiz pe nao dorz vara evid ar zizun (pevar-ugent pe deg lur ha pevar-ugent).

Ezomm ebed da lavared deoh, adaleg ar bevare pe ar bempved deiz, ar pez a vane a vije louedet - muioh pe nebeutoh - pe ken zeh ne veze ken mad da zebri. An tad Ar Rolland a veze eüruz : debri a reem nebeutoh.

Pa gavem on zro, ni eo ah ee da gerhad bara. Distrei a reem d'ar gêr gand teir pe beder mouchenn d'ar muia. Ma houlenned diganim, or respont a veze dalhmad ar memez hini :

-« Ne oa ket ken ar re all. »

-« Hen gouvezed a reen en a-raog ! P'ah it da gerhad bara, ne vez morse muioh. »

Kemend a vara debret beb sizun, a hell beza kavet dreist. Med debri a reem bara beb pred : da lein gand ar zoubenn, da verenn ha da adverenn evel da goan. Roll ar meuziou a jeñche hepken d'ar gwener, hag e-pad ar hoaraiz. Ouspenn pevar-ugent dre gant a Dregeriz a ree vijil d'ar mare-ze. Beb gwener, on-oa droed d'ar moru. D'ar zul da noz, Soaz Seveon a roe dim he lêz kaouled brudet. Al lêz saouruz-se,

ha ne zegase ket kalz a vagadurez, ne oa ket fetiz a-walh evid ar wazed. Setu ma veze miret da genta evid ar merhed hag ar vugale.

Eun deiz, evid diskouez e oam skuiz gand ar bara loued, e rejom eun taol farserez d'an tad Ar Rolland. Ar gwener e oa hag amann a oa war an daol. Bara fresk ivez, peogwir e oam bet ar beurevez-se ti bouloñjer Ar Roh, an Aotrou Toupet. Eet 'oa on zud ouz taol a-raog dim hag echuet o-doa gand ar bara koz. Red mad e oa ëta boulha eun dorz fresk a zeg lur. Jolu, e baotr-harnez reiz, a gemeras an dorz, a reas eur zin ar groaz warni gand beg e gontell, a zellas ouzim ha goude ouz an dorz hag a reas dim eun taol-lagad a lavare sklêr : « Dond a rafom buan a-benn diouti. »

Eur wignadenn euz or perz, ha ni da gregi ganti. En ugent munetenn, ar seiz ma oam o-doa lonket deg lur bara. An tad Ar Rolland a zellas ouzim o sevel diouz taol. Ne lavaras ger ebed, med diwar neuze, ne veze ken nemed eun hanter dorz vara war an daol. An torziou miret a-gostez a helle evel-se loueda goustadig.

N'eo nemed war-dro 1923 e wellaas da vad bevañs peizanted Treger. Meuziou nevez a groge da veza gwelet e-barz ar menajou : piz-bihan, karotez ha dreist-oll patatez nevez da veza gwerzet en tu all da Vor-Breiz, gwir greun aour tennet diouz douar Bro-Dreger.

Ar patatez

E Seveon, e veze lakeet war-dro eun devez-arad dindan patatez prim da werza. War-dro an ugent a viz mae e kroged da denna ha da werza war bord an aod. Menajerien bord ar mor o-dije dija gwerzet o re eur priz kalz uhelloh pa grogem-ni da zastum or re. Marhadourien Landreger ha diou pe deir barrouz all diwar-dro o-doa eur bureo evid on treuzad war gae ar porzig-mor, e leh ma'h errue gand ar mare eul lestr-karg saoz pe daou.

Abred diouz ar beure e kroge an dennadeg. Toud an deveziaterien diwar-dro heb labour a veze galvet da rei eun taol-zikour. C'hweh pe zeiz gwaz a denne ar patatez. Daou rumm a veze greet euz ar merhed a beb oad hag ar grennarded. Eur rumm a heje ar haolaj evid distaga ar patatez hag ar rumm all o zerre diwar an douar, o dibabe hag o harge e-barz eur baner goad. Ar re a veze re vihan evid ar werz a jome war an douar da hortoz beza serret diwezatoh.

Echu e veze an dennadeg evid advern. Ar varhadourien a dutae daou pe dri gourater ah ee diouz eur menaj d'eun all da rei da anavezad ar priziou a cheñche beteg diou pe deir gwech e-kerz an deiz. Goude adverenn, debret prim-ha-prim e-barz ar park, e veze pouezet ar patatez. Karget e veze ar zahadou en eur harr skañv hag ar patatez dibak e-barz eun dumporell. Ar hirri a gemere hent Landreger evid o degas d'ar henwerzour-prener, dirag ar hourater e-noa lakeet e briz. Eur hannad euz peb kevredad-kenwerz saoz a heulie gand evez ar brenerien a boueze o fatatez. Pep hini a houeze pegement e-noa prenet.

Pa veze uhelloh ar hinnig evid ar goulenn, ar priz ah ee war diskar euz a zeg da ugent dre gant. Hag e kroge neuze arguzou heb fin ebed etre ar honversant hag ar

peizant. Hemañ a blege dalhmad. N'e-noa gounid ebed o tond en-dro d'ar gêr gand e varhadourez.

E-touez ar beizanted e oa, sklêr deoh, eur c'hwib laer bennag. Peb gwerzer a zlee diskarga eur zahad pe daou dirag ar prener, e-barz eur baner vraz evid diskouez doare mad e varhadourez. A-wechou e veze eur gwall-daol : lod gwerzerien n'o-dije greet dibab ebed, mesket gante ar patatez bihan heb gwerz gand ar re vad. Lod all a lakee er zeier, e-touez patatez deread, kaolaj, douar pe patatez ar bloavez a-raog. Nahet e veze evel just ar hasadennou-ze hag ar floderien lakeet dindan gourdrourz al lezvarn. Darbet e oa bet d'ar Zaozon, goude an taoliou fall-ze, dilezel a-grenn porzig mor Landreger. Med eur zulvez e oe lennet war ar groaz goude an overenn eun embann zinet gand marhadourien Landreger hag an traou a oa bet degaset adarre en o reiz.

Brudet e oa an Tad ar Rolland evid e onestiz, kement gand ar marhadour Ar Gwillou ha gand e gourater. Beb bloaz, Fañch ar Rolland e-noa droed da ziu vadelez : ar priz lavaret gand ar hourater a veze dalhet hag e batatez degemeret e Koad-Uhel, ar pez a ree dezañ gounid kalz a amzer. Med buan-meurbed e oe plantet re a batatez hag ar priziou a ziskennas da netra, evid dizesper ar venajerien o-doa lakeet o spi e-barz ar patatez prim.

Kustumou

Seveon a veze greet anezañ eur menaj-skwer euz a Vro-Dreger a-bez. Dreist-oll goude ar brezel, founnuz e oa ar bevañs ha ma zud n'o-doa ken kudenn arhant ebed. Gallet on-oa bet zoken plega Soaz Seveon d'ober gand he asiedou. Med euz eun tu all, lod euz ar hustumou a oa dalhet piz : kenkoulz re al lezenn gristen ha c'hoaz muioh re al labourerien-douar evel ma ho-peus gwelet.

Va breur ha me, da skwer, a gouske e-barz marchosi ar hezeg. Seveon e-noa daou varchosi, eun dra ral e Bro-Dreger. An hini kenta a oa hini pevar aneval ar menaj. An eil, kalz bihannoh, e-noa diou speurenn : unan evid ar vamm gazeg, eben evid an eal pe, e diouer, evid eur hole yaouank. Eul lodenn euz ar hraou-mañ a ree ivez evid eur gambr hag eur gambrig emwalhi evid en em raha. Bez' e oa ivez eur gwele-kloz evid ar mevel hag eur pres. Ar gwele on-oa Yann ha me, e-noa eun doare dibaot da veza diazezet e-barz an daou varchosi war eun dro : eur hostez anezañ o rei war graou ar hezeg hag egile a-uz da speurenn ar gazeg.

Sevel a reem en or gwele gand eur skeul. Pa'h eem da gousked, evid on diwiska, e oa eun tammig pladenn a zaou blankenn stag ouz ar gwele, eur metrad a-veh diouz an doubl. En em ziwiska a reem e-barz an toull-ze teñval-dall. Divennet e oa kaoud eul lamp gand Fañch ar Rolland, da genta evid diwall d'ober noaz da gousk ar hezeg, d'an eil evid pellaad ar riskl tangwall. Ken bihan e oa ar bladenn-ze ken na hellem ket en em zerhel warni on-daou asamblez. E-keit ha ma en em ziwiske unan, egile a hortoze. Goude e hellem kousked. Gand ma zreid, e hellen floura e gein da Rustik, marh bihan spahet ar menaj. An tredan ne oa ket anezañ. E Seveon, ar gegin nemetken a oa sklêrijennet gand eul lamp petrol, in-pign ouz eun treust.

Dre eur zoursi d'erbedi, al lamp-se ne veze alumet nemed da goan. D'an deiziou a zegemer, Soaz Seveon a gemere goulaou-rousin a ree gand soav teuzet ha rodellet groz en-dro d'eur vechenn. Evid alumni ar goulou-ze, ar vammig a ree ivez alumetez gand korzennou kanab dineudennet. Daou benn an ibilenn-ze a veze lifret gand soufr teuzet hag a-walh e oa lakaad eur penn euz an alumetezenn e glaou an oaled evid kaoud flamm.

Ar glaou beo ne vanke ket ganim. Maget e veze an tan war an oaled noz-deiz. Or heuneud kenta a oa al lann. Evid kaoud lann e veze red kempenn douar ha hada. Trohet e veze beb tri bloaz. Med ar gwella keuneud evid derhel tan war an oaled 'oa ar halastr, tammou korzennou lin palluhet. Ne gouste netra. Ha ne oa nemed mond d'e gerhad d'ar rnilinou lin diwar-dro.

Ne oa, koulz lavared, tamm yehedez ebed. Ha neuze da betra he-defe servichet peogwir ne oa ket a zoavon, ma ne oa an hini a veze implijet nemetken gand ar merhed... d'ar zul. N'anavezad ket ar zaliou-gwalhi, na kennebeud ar priveziou. Pep hini e-noa e gornig er verjez pe er park.

D'ar beure, ar wazed en em gontante da denna eur zaillad dour diouz ar puñs evid en em walhi... gand o daouarn. En em dorcha a reent gand torchour ar gegin. Dour ar puñs a veze saotret aliezig gand dour hañvouez-zil. Ar vevelien en oad hag an devezataerien n'en em walhent jamez. A-wechou, d'ar zul d'ar beure, eh eent d'ober lemel o baro. Gwalhi ar rest diouz ar horv ne oa ket anavezad.

E Seveon koulskoude, pa veze brao an amzer, ar re yaouanka a lamme o roched hag en em walhe gand dour braz. Ar roched-se hag he-doa servichet e-pad ar zizun dremenet, a oa ivez an torch. En em raha a reem, pep hini d'e dro, e-barz ar marchosi, e leh ma oa, tra pompaduz ha souezuz, eur meleour bihan stag ouz eun tach.

Ar beizanted ha n'o-doa ket eur razour ah ee, d'ar zadorn da noz, pe d'ar zul d'ar beure, ti peruker ar bourk pe ar harter tosta. Hemañ, dre laer, a oa a-wechou ar fakteur, ar hantonier pe eul labourer-douar yaouank. An troh, pe gentoh an touza, ne oa ket diouz ar henta, med ar priz a oa ken dister !

E Seveon on-oa ar chañs dibar da gaoud eul lenn-neuial en eur brouskoadig glazur, didro meurbed. Ma hellje ar piñsin-ze konta toud ar pez en-doa gwelet ha klevet e-pad eun hanter kantved bennag, e vefe peadra da ober meur a romant ! Serviji a ree ouspenn da boull-kanna d'ar menajou diwar-dro. Kerkent ha ma veze stumm amzer vrao, eh eem d'ar piñsin goude beza tapet eun torchour prop digand Soaz Seveon. Ma ne oa kazi yehedez ebed evid al labourer-douar tregeriad hag e famill, ne oa ket memestra evid e gezeg.

Beb beure, goude o zamm-kerh, ar paotr-harnes o skrivelle hag o brouste. Diou pe deir gwech ar zizun, e selle ouz o hern. Karza a ree ar marchosi ha gouzilla a ree dindanne. Kerkent ha miz even, kezeg Seveon ah ee d'en em zouba ha da neuial er Yodi, d'eur al lano. Gwir eo, al loen kezeg a oa eun nerz talvouduz evid ar menaj.

Ar moteur Japy

E 1924, e prenas ma zud eur moteur Japy nevez-flamm hag eun dornerez dre-zegouez ti Kermareg, mekanisian ar Roh. Urz-prena ar moteur a oa bet roet e miz ebrel, med ne deue ket buan. Adaleg miz even, e talhem stard war ar gwerzer, beb sizun. Ken chalet ha ni e oa. Seveon a oa kenta prener eur moteur da zorna ha Kermareg e-noa spi vad e rafe or prenedigez kalz a vrud dezañ tro-war-dro.

Erfin, e penn kenta miz gouere, e teuas ar mekanisian da zegas dim ar helou mad : ar moteur Japy a oa aze. Amzer dezañ da zresa ha da zegas an dornerez war-wel ha toud an traou a vefe prest adaleg ar zizun war-lerh. Ma zad ha ma breur Yann ah eas d'o herhad eun nebeud deiziou goude.

D'abardaez-noz, e teuas ar mekanisian da Zeveon evid rei e gelennadurioù : penaoz kas ar moteur en-dro, e ziwall ; erru an esañs, an dour, pouez an eoul : penaoz distrolla ar flister, hag e-se.... Fañch ar Rolland e-noa pedet ahanon d'e heul evid selaou an erbedadurioù... ha derhel zoñj dioute dreist-oll.

Yann ar Moal, an notenn en e zorn, a zeblante intent mad a-walh ; ma zad, eun tammig bennag ; med evidon, estreged ar mir-dour, e oa red e adleunia beb teir eurvez labour, ne gomprenis mann ebed. Roet gantañ an disklêriadurioù, e lakaas Kermareg ar moteur da drei. Loha a reas, d'an eil taol dornigell. Kermareg a bouezas war ar buannaer hag a-greiz-toud ar moteur a grogas d'ober lampou en a-raog. Ar mekanisian a rankas troha an êzenn-dan. Ankouaet e-noa hepken sankar ar strapennou e-barz an douar d'e stabillaad.

Deiz a-raog an devez-dorna, e teuas en-dro d'abardaez-noz. Ma zad am fedas da garga ar mir-dour. Tri-hant litrad a oa red evid harz ar moteur o trei da domma re. Fañch ar Rolland a gavas zur a-walh e oa al labour-ze diouz ma doare, peogwir e chomas ganen goude-ze e-pad tri bloaz da heul.

An 22 a viz eost a oe eun devez istorel. Evid ar wech kenta, e Seveon, e troe eur moteur dre esañs o kas eun dornerez d'e heul. Peb tra a droe mad hag ar moteur a oa dim. Toud an dud a oa abred war-zav, kerkent hag an heol. Ma breur Yann n'e-noa ket koulz lavared serret eul lagad e-pad an noz en abeg d'ar beh a goueze warnañ. Lenn a reas eur wech c'hoaz an notenn, trei a reas en-dro d'ar moteur, digeri a reas an duellenn esañs, trei a reas an dornigell... hag ar moteur a vrammas.

Tud ar skipaill a oa erruet eun tammig a-raog evid bami ouz ar moteur hag a oa c'hoaz eun dra dianavezet er hontre. Yann ne baouez ket da rei deze disklêriadurioù dre ar munud. Goude an tenna plouzennig kustum, pep hini a grogas gand e labour. Ma zad en em lakaas e stad da voueta an dornerez. Tostei a reen dezañ ar feskennoù dizamaret. Ober a reas din chom en e gichenn da zeski boueta evel m'eo dleet. Eun eurvez goude e laoskas e blas ganin.

Evid ar henta tro em buhez, e fizied ennon eur garg a uhel gred. Hervez ma ampartiz, ha ma ziz e vefe mad pe fall an dorna ha labour toud an dud war al leur. Kemer a reen kalz a evez da lakaad an tañvouez e genou an dornerez, goustadig da genta, hag o kreski ar muzul nebeud-ha-nebeud goude.

Boud an dornerez a oa eur blenier prisiuz. A-benn eun hanter- eur, e vouetaen ma dornerez evel eur bouetaer koz... ha beteg eiz eur hanter. E-pad ma oa toud an dornerien ouz taol gand o adlein, ma zad hag a oa paouez kemer tommder dour ar

moteur, a zigoras warnañ hag am hargas da adleunia anezañ gand dour yen. A-veh echu an truach, ma teue a-nevez ar wazed d'al labour.

Eun tamm bara prim-ha-prim; lakaad esañs ar Japy, pemp munutenn a ziskuiz hag e kemeren plas Yann evel bouetaer, ha beh dezi adarre. An tad ar Rolland enoa dilezet e bost. Evêsaed a ree bremañ ouz toud ar sañtier, ha lakaad an traou da zerhel da vond mad en-dro. Evel ma pade merenn ouspenn eun eurvez, e kargen a-nevez gand dour yen an hanter euz ar mir-dour, e-pad ma oa ar re all ouz taol, ha memez tra, da goulz adverenn.

An deiz-war-lerh da noz, eh echuem diwezatoh evid ar bloavez a-raog. Ne oa ket ken dillo on dornerez hag hini Bourva.

An deiz-war-lerh e tleem dorna e Boud-Ilio. Yann ha me, on-oa da houllonderi ar mir-dour, da chañch plas d'an dornerez, da gas anezi gand eun aneval beteg ar menaj all, da zond en-dro buan da lakaad ar Japy war e garr, d'e gas da Voud-Ilio, d'e lakaad e plas evid beza peurbrest 'benn an deiz-war-lerh beure.

D'on distro da Zeveon, e oa deut an noz hag echu ar wastell. Ne jome ganim nemed debri on-unan ha mond da gousked. Kelhad daonet an eostou a badas diou zizunvez hanter. Dorna a rejom eostou c'hweh menaj.

Trempet gand ar hwezenn, gand dour ar moteur, o lonka poultrenn a-hed an deziou, dirañvet gand ar zehed, eh echuem beb bloaz ar mareou-ze, diviet, skuizmaro ha tapet meur a dro gand an dipa-dapa.

Ar hleuziou

War-dro triweh vloaz eo am-eus boulhet gand ar vicher dispenner kleuziou. Al labour-ze a veze greet e-pad ar goañv (e miz genver hag e miz c'hwevrer). E Seveon e veze dispennet beb bloaz tost da gant hanter-kant metrad kleuziou. Eun den deut a zlee ober pemzeg troatad bemdez. Ped gwech n'am-eus ket klevet an tad ar Rolland lavared din a-raog kuitaad « mar dout eun den, deuz d'az koan pa 'to greet da bemzeg troatad ».

Fañch ar Rouz a oa eur mestr war ar vicher-ze. An tort a zispenne a-wechou beteg seiteg pe driweh troatad heb en em veuli. Evid ar "mous" ma oan, pemzeg a oa eur halvar. War-dro teir eur, da adverenn, em-oa dija kalz a zilerh. Selled a reen e palv ma daouarn ar hrohenn diframmet war ma biz-yod ha ma biz-kreiz gand eun oustill ha ne oan ket kustumet outañ. E fulor, o leñva, e tifonten ma hleuz.

An noz deuet, ne zaven ma fenn nemed ma labour greet. D'am distro da Zeveon, ma zad ne houlenne netra diganin. Ha felled a ree dezañ 'ta suja ahanon da ober ar pemzeg troatad, pe ne oa an dra-ze nemed eur froudenn ? Evidon-me e oa eun urz ha james n'am-befe digarezet. Ar hleuziou pladet ha kempennet a helle resev an had ha Fañch ar Rolland kregi gand e labour dezañ.

An dehadenn

An tad ar Rolland a houlenne diouzin eul labour divent ha ne helle beza greet nemed gand eun den solud hag akuit war ar vicher. En em rei a reen diouz toud ma nerz d'am labour a beizant, med zoken gand ma gwella bolontez, an degouez ne blije ket aliez d'am zad. Taer e oan koulskoude da labourad, med ne oan ket akuit a-walh ha kemer a reen aliez evid flemmaduriou ar froudennou diwar ma fenn. Kement-se a oa eun argas evidon, a gement muioh ma ne vezen jamez kuzuliet na kalonekaet.

Eun nozvez, goude eur rebech all c'hoaz, eh een da gousked heb debri. Daoust din da veza skuiz, da gaoud poan em hein, ne hellen ket kousked. Trei ha distrei a reen em gwele. Setu e lakeis em fenn kuitaad Seveon hag ar vicher daonet a beizant.

Soñjal a reen em hoar Chann ar Jolu a oa o terhel eur menaj gand he den e Pabu. Med gouvezed a reen ivez ne zegemerfe ket ahanon hag e rebechfe din beza eet kuit diouz ar gêr. Soñjal a reen neuze en ma zonton ar Goaziou euz Lannuon.

An deiz-war-lerh, e labouren evel kustum. Goude beza lonket ma merenn prim-ha-prim, eh is d'ar marchosi. Gwiska a ris primmoh c'hoaz ma dillad da zul hag e kuitais ar gêr en eur heda dre a-dreñv an ti hag ar hrevier.

Ha setu-me war droad, war hent Lannuon. Teir eurvez goude, en em gaven ti ma zonton, gwasket ma halon. Displega a reen dezañ am-oa kuitaet ar gêr ha ma mennoz da glask labour war-dro Lannuon. Med an tonton a jome diskreduz.

-« Ne zlefes ket beza kuitaet da dud a-greiz-toud, evel-se. An dra-ze ne reer ket. En em renta a rez kont diouz ar boan hag an drubuill a rez deze ? Da glask a zleont a beb tu, ha 'vid an noz, e soñjint marteze e-teus greet eur zotoniez. Gwelloh e rafes distrei d'ar gêr.. ».

Selaou a reen an tonton, mezeg a-walh. Hag e kendalhas :

-« Dleet e-tefe da vihanna beza klasket labour war-dro Landreger ha beza aotre da dud a-raog o beza kuitaet. Minor eh out c'hoaz ha dindan o galloud. Añfin, peogwir e-teus greet an hent war droad, e tleez beza skuiz ha kaoud naon ».

Va zintin a aozas din eur banne kafe mad. Tremen a ris an abardaez-noz o varvaillad gand ma zonton. Dreset e oe din eur gwele mad er gambr. N'am-oa c'hoaz kousket morse en eur gambr. En despet d'am fromou, e vanis kousket kerkent.

An deiz-war-lerh beure, ma zintin a heulias an tonton evid ma helenn war ar mad hag atiza ahanon da zistrei da Zeveon. Lavared a reas din, o veza ma oan re yaouank, ne hellent ket ma degemer ouspenn eun nozvez pe ziou. Koulskoude, eh aspeden stard evid ma rofe an tonton din anoïou ha lehiou-chom liez embreger mañsonerez hag anoïou daou pe dri otel ha ti-debri. Ha gand ma halon a driweh vloaz, eh is da glask labour, en eur gomañs gand an oteliou.

E-barz ar menaj e reen war-dro ar hezeg, perag neuze ne hellfen ket ober kenkoulz e-barz eun otel ? Zoken o hounid nebeud, e vefen bevet ha lojet. Kinnig a reen ma divreh e pevar pe bemp otel euz Lannuon. E peb leh, am-oe eur habestr, en eun doare seven, med heb mar.

- « Bez' on-eus paotred marchosi, ha n'on-eus ezomm den ebed. Ha neuze, kalz re yaouank eh out. Ne heller ket fizioud kezeg er henta krennard a zeu d'or gweled. Triweh vloaz out ? Ha beza 'teus aotre da dud evid beza gopret ? »

Kerkent ha 'mije nahet, e respontent :

- « Med 'teus ket droed da guitaad ar gêr heb o aotre ».

Unan euz an otererien, deuet war an oad, a lakeas ouspenn :

- « Te a zo 'm-eus aon eur penn berveg, eur chelpetaer⁷. Sell, dleoud a rafen gervel ar jañdarmed evid da gas en-dro d'ar gêr ».

Parfoeltret e oan. Ouspenn eun eurvez all, e troen e ruiou Lannuon, kazi en argoll, netra nemed o soñjal hepken en archerien. Goude beza en em zoñjet, a gave din, er stad ma oan, ne risklen ken kalz a dra ha marteze eur mañsoner e-nefe ezomm euz eun darbarer a houlennfe aotre ma zad evid ma hemer. Siwaz ! an heveleb respont dre oll :

- « N'on-eus ezomm den ebed. Beb sizun e teu deveziaterien diouz ar vro da houlenn labour ganeom ».

Skuiz ha kollet kouraj ganin, war-dro teir eur goude kreisteiz e tistroen ti an tonton ar Goaziou. Oh erruet ru ar jañdarmiri, e soñjen e vefe eun archer o hortoz ahanon, evid ma has en-dro da Zeveon. Gand eun dristidigez wirion, eo a welen, e-kichenn ti ma zonton, ar marh bihan Rustik ha charabañ ma zud.

Rei a ris eun taol-lagad tro-dro ; ne oa archer ebed en toull an nor. Skei a ris e ti an tonton. Dond a reas d'am digeri hag e lavaras din e pleg ma skouarn :

- « Neb aon, kaozeet am-eus d'az tud. Ne vi ket gourdrouzet. Mond a ri en-dro didrouz gante ha peb tra a yelo mad ».

Antren a reen er gegin, stouet ma fenn ganin. Ma zad ha ma mammig a oa aze. Houmañ a lavaras din kerkent :

- « Klasket on-eus ahanout e-barz ar parkeier en-dro d'ar gêr, e-barz ar hrevier, ar solierou. Da dad e-neus gwelet e-toa cheñchet dillad. Doaniet e oa hag aon e-noa e-tije greet eur zotoniez bennag. Dond a rez ganeom d'ar gêr. Gouvezed a reom e labourez euz da wella ha Fañch e-neus prometet din ne raio morse dit ken eveziaduriou displijuz. Da donton e-neus roet da houvezed deom, deh da noz, e oas amañ. Arabad e vo komz da zen a gement-mañ anez e vefe kaoz diouz se dre ar hontre, hag an dra-ze a rafe gaou ouzom ».

An dintin a ginnigas deom kafe ha bara-amann. Hag e tistroem d'ar gêr. Rustik e-unan a zeblante ivez eüruz. Ha goude-ze e oe greet ouzin gand muioh a vadelez.

Nebeud a viziou goude, eost ar patatez o veza founnuz, Fañch ar Rolland a ginnigas din eur velo nevez flamm.

Rustik

E Bro-Dreger, pouez eur menaj a vez kontet e kezeg. Lavared a reed : eur menaj daou, tri pe bevar a gezeg. Red e oa konta eun aneval dre zeg devez-arad. E

⁷ eur chelpetaer eur baleer-bro.

Seveon, on-oa pevar loen-kezeg. Bichounet e vezent bemdez. Ne oa ket unan o tougen eur merk-skourjez. Divennet e oa o skei gand Fañch ar Rolland.

Rustik eo sur a-walh an hini e-neus ma merket ar muia. Eul loen fin e oa ! Bihan, med kigenet, araoget ledan, divesker solud dezañ ; troet da boanial an nebeuta ma helle, red e oa dalhmad e gaoud en ho sell. Med dalhmad ivez e veze aze evid ober eur vourellad⁸ pa veze red dizac'ha eur harr. Habask e oa ivez hag aliez diduelluz. Kustum e oam, Yann ha me, beb sul ar beure, da rei dezañ eun tamm sukr. Ma veze ankouaet ganeom, e houveze dond da houlenn. Rustik a oa al loen-mestr, an hini a veze staget da vond d'ober ar homisionou hag ouz ar charabañ nemetken. Troter ar menaj e oa. Ma plije kalz dezañ trolal, e-noa avad euz euz an daoulamm hag hen nahe.

Eun abardaevez, goude taoliou-c'hwistell treñ teir eur, e tistagen Rustik evid dond d'am adverenn da Zeveon. Erru en toull-karr, e lampis war e gein. D'am goulenn kenta, e partias d'an trot evel kustum. Meur a wech e klasken e lakaad da zaoulammad, med heb penn-mad ebed. Erruet tost da Zeveon, e ris eun taol-êsa diweza en eur ober dao dezañ war e flankou gand kil ma zreid. Rustik a dehas kuit evel eur bir. Eun ugent metr bennag a-raog ar menaj, e fellas din e lakaad da vond war e horregez. Daoust da doud ar boan a gemeren, Rustik a zalhas da haloupad hag e-leh mond er porz, war an tu dehou, e skoas war an tu kleiz, e lammas dreist eur poull dour louz, leun a vouillenn. En eul lamm-zail, o sevel e benn a-dreñv en e uhella, e kasas ahanon da blava e kreiz ar poull. Eun tammig pelloh e hartas, e reas eun hanter-dro evid dond d'esmea ouz e joke leun a vaill. Neuze eh eas 'trezeg e graou hag e hortozas ahanon d'e zevrida ha da rei dezañ e damm kerh. N'am-oa ken d'ober nemed plega.

Ar mell-droader bihan

War-dro goueliou Pask 1925, e lakeen ma ano evel rag-c'hoarier e patronaj "Krennarded Sant-Erwan" e Landreger, e strollad ar yaouankidi c'hoarierien vell-droad. Gourdonet e vezent, d'ar zul dioustu goude kreisteiz, a-raog lezel an dachenn-hoari gand mell-droaderien ar skipaillou A ha B. Mond a reen war velo d'an abadennou-gourdonerez. Kemer a ris perz en teir abadenn hag ar gourdoner a gavas e oan barreg d'ober evid eur c'hoarier euz ar skipaill B, da-geñver eur hrogad etre yaouankidi Landreger hag eur skipaill all euz Gwengamp "En Avant" hag a gemered dija d'ar mare-ze evel unan euz ar gwella lazou-c'hoari mell-droad euz an departamant.

An dro genta 'oa em buhez, n'am-mefe an enor da ober eur hrogad, war eun dachenn-hoari wirion, hini "diaouled ruz" "En Avant", dirag sellerien wirion ivez. Red e oa din eta beza diouz ar fiziañs a ginnige din ar gourdoner.

⁸ ober eur vourellad : ober eur hrogad.

E-kerz an ehan-c'hoari e teuas da lavared din, braoig ha tra, am-oa roet ar gwella ahanon e-pad al lodenn genta, e tleen beza skuiz hag e oa gwelloh e rofen ma flas d'eur c'hoarier all.

- « Bez' am-eus meur a hoarier barreg d'ober evid eun all », emezañ, « hag eh eo red oll e kemerfent ivez o zammig chañs ».

E gwirionez, ne oa daou nemetken. Komprenet am-oa. Chomet e oa ma fri war ar gloued. Distrei a ris teir pe beder gwech all d'an abadennoù gourдона hag amzer ar hrogadou mell-droad ah echuas e fin miz mae.

E-pad an hañv, eur strollad paotred euz ar Roh a deuas añfin a-benn, goude meur ha meur a guzuliadeg, da gaoud gand ar goñseillerien an arhant red da zevel eur laz-c'hoari fobal. Eun dachenn a oe kavet da feurmi ha kempennet. Toud ar pez a oa red evid c'hoari fobal a oe prenet, hag ar paperiou-meradurez lakeet reiz. Ganet e oa "Unaniez Sportel Ar Roh", dindan ar sigl : U.S.R.

Ar c'hoari a helle boulha adarre. E penn kenta miz gwengolo, e reseven a-berz an aotrou J. S., mab d'eur hoñversant euz Ar Roh, eur galv evid mond d'eur vodadeg en eur zal euz an Ti-kêr evid sevel daou laz-c'hoari. En em gavoud a reen eno gand kalz a gamaraded euz Ar Roh ha diwar-dro. J. S. a houlennate ar hoarierien da zond war o danvez a vell-droaderien. Ha setu e teuas ma zro. Respont a ris, ha ne oa ket heb lorh, e oan bet kabiten ar 4^{ved} e Sant Jo. J. S. a lavaras din e oan lakeet en eil laz-c'hoari, evel araoger-kleiz. Feuket e oan da veza evel-se lakeet a-gostez.

Anavezet a reen an darnvuia euz c'hoarierien ar henta laz-c'hoari ha ne gaven ket e oant barrekoh evidon. Brasoh e oant marteze. Med, hervezon, netra muioh !

Ne deuen ket a-benn da houzañv ar stad-se, a gement muioh ma oan anavezet mad gand J. S., o veza ma oa Seveon pourvezer amann e dud ha ne helle ket hemañ, e-unan, gouzañv amann all ebed, nemed on-hini. Soñjal a ree din e oan reuziet gand an displealded pe eur havaill bennag. J. S. am diboanias eun tamm, ha lavared dirag an oll :

- « Greet on-eus on daou laz-c'hoari, med beteg gouzoud nemetken, goude beza kemeret aliou dastumet amañ hag a-hont. Galled a refet kemer ho saeou, ho potou, hag ho kwiskamantou all, disul da veure, en Ti-kêr ».

D'ar zul, da ziv eur, e oan war an dachenn-hoari, em fost araoger-kleiz, soñj mad ennon diskouez am-oa ma flas er henta laz-c'hoari. Goude diou lodenn-hoari a dregont munutenn pep hini, al laz-eneb a gonte pemp taol-pal... Dond a reem a-benn memestra da verka eur poent. War an unneg c'hoarier euz or skipaill, daou a oe savet el laz kenta... ha c'hoaz ne oant mad 'med d'ober evid eur c'hoarier-e-karg. Mired a reen ma flas e-barz an eil skipaill.

Evid ar pennadou hent a hweh pe zeiz kilometrad, eh eem war velo. Pa veze red mond pelloh evid ar hrogadou, e vezem douget evid netra en eur hamion dizolo gand rodou war vandennou-c'hwezet, lakeet en or zervij gand eur marhadour gwin euz Ar Roh. Ne oa na skaon, na bank. En em vernia a reem ennañ, pemp warn-ugent hag a-wechou tregont. Aliez e tegoueze da skoazellerien yaouank dond ganeom evid or halonekaad. Ar blenier ne oa ket selluz war niver ar

veajourien. Soñjal a ree zoken e oa eur gounid kaoud muioh. Muioh e vezem aze stard an eil ouz egile, ha muioh on-oa a jañs da jom en or zav.

Ar sportvaou - ma heller ober gand ar geriou braz-se - n'o-doa na breliñsadennoù, na taol emwalhi, na priveziou hag ar paliou ne oa an disterra roued a-dreñv deze. Dre amzer-hlao, goude ar hrogad, pep hini en em zehe evel ma helle, pe lakee e zillad war varr e wiskamant mell-droader. Evel-se e oa ma stad, peogwir e Seveon, ar bragouiou-dindan ne oant ket anavezet c'hoaz. Lod c'hoarierien ne gavent ket diêz en em ziwiska dirag an dud - ne vezent ket niveruz, gwir eo - dreist-oll dirag ar plahed yaouank a droe evelato o fenn, goude eun taolig lagad. Hag e tistroem d'ar gêr. Bez' e veze dalhmad en or zouez nebeud a ganerien. Hag ar ganfarted-mañ ne ganent ket ordinal kanaouennou kolisted. Koll pe gounid, en distro, e vleujem :

“Nann, nann, nann, an U.S.R. ne varvo ket,
Larda ra bepred, larda ra bepred”.

Ar Charivari

Hanter-kant pe dri-ugent vloaz 'zo, ar charivari a oa eur gustum anavezet e meur a gorn-bro pa veze dimeziou kemeret gand an dud evel dimeziou dindan ar reñk pe divergont - (eur pried torr-dimezet, eur riboter, eun tamm mad a oad etre eun intañv hag eur vaouez yaouank). Evuruzamant eo bet kollet ar hiz-se e Bro-Dreger, goude ar brezel 1939-45.

Pipi Haro, or hantonier euz Traou-an-Dour, a dostae diouz e dri-ugent vloaz. Skuiz, sur a-walh, da veza 'n e-unan en e di bihan, a reas eun torfet gaou-meurbed o kinnig repu d'eur paour-kêz maouez a zaouzeg pe bemzeg vloaz kosoh evitañ.

Toud kêriadenn Traou-an-Dour a oa bet gwall-skweriet, dreist-oll dre ma 'n-oa penn-ti Pipi Haro nemed eur gambr ha ma 'n-oa ket ar hantonier kavet mad en em stroba gand daou wele. Red e oa eta harta ar wall-skwer d'ar buanna. Lod gwraze ha plahed koz-yaouank a oa krog da aspedi maledelez an Neñv, evid ma ne gouezfe ket eur gwalleur war ar hontre. Divizet e oe bet ober eun dro a gastiz. Divennet e oe groñs ouz peb maouez beza war al leh en despet da liez gwrahe koz iset eun tammig re.

Va zonton Batist a oa e Seveon d'ar mare-ze hag a-drugarez dezañ e oan bet aotreet d'arvesti ouz ar safar-noz. Kas a reas gantañ eur zaill goz difoñs hag eur penn-baz. Va breur Yann, kenta klas kleroner e-pad e goñje, ne helle ket ober netra welloh evid degas e gleron gantañ. E-kichen Seveon, e hortoze ahanom Emilig hag eun amezeg all. O tremen dirag Kerrivoalan, tri genseurt all a deuas ganeom. Unan aneze e-noa gantañ eur strakerez. En em gavoud a reas an oll war-dro kant metrad bennag euz Traou-an-Dour.

Eur pemzeg bennag e oam gand pep hini eur benveg a helle ober trouz. Bez' e oa zoken eun daboulin goz euz ar brezel 14-18. G. euz Zant Renaod a oa rag-aozer an dro drist-se. Rei a reas e urziou : an daboulin a dlee digeri an argad ha va breur gand e gleron son an arsaill.

Noz-du e oa hag ar wall-dro ouez a oa dirag eur stankig-lin, a-dal da benn-ti Pipi Haro. Sioul e oa toud an dud. Evid en em vired diouz an teodou fall, den ebed e-barz ar hartier ne oa bet roet da houvezed dezañ an taol.

G. a skoas war skoaz an tabouliner. Kregi a reas ar charivari. Eun dourni vouzaruz kastelodennou koz, kafetierennou, golveziou kannerezed mesket gand kriou, c'hwistelladennou, youhadennou a zraillas sioulder an noz... hag ivez kousk tud Traou-an-Dour. Ar re yaouanka en em veskas en or strollad, gand ar muia evez ma hellent evid en em vired diouz kaoud diwezatoh stokadou gand ar paour-kêz Pipi a oa brudet da veza gourvennet ha prim da fulori. Hag ouz ar youhadennou e stagas dizale an dismegañsou war ar houblad koz direiz ha spouronet moarvad.

Ar vandenn ganaillez a dostaas ouz an ti bihan. G., gand e letern, a welas Pipi hag e vignonez er memez gwele. Prouet e oa an torfet hiviziken. Red e oa kastiza. Hiniennou, tomm mad deze gand toud ar chopinadou o-doa lonket, a youhe evel loened gouez. En eur zerr-lagad, dor an ti a oe divarhet ha torret gwer ar prenesti.

Tri amprevan ah antreas ti Pipi Haro, kollet gante o skiant vad, eet e gouez ha diaouleg. Lod all, fuloret, a felle deze tenna an daou goz diouz o gwele, hag o zaol 'barz ar stank, evid, emeze, distana gwrez direiz an daou hastaouer. Red e oe neuze da G., eur paotr solud, ha d'am zonton, hanteri buan hag a nerz o horv evid harz ar ganfarded d'ober eul lazadeg.

An daou zivenner a zeuas a-benn, diêz a-walh, da zoñvaad ar stourmerien ha da daol aneze er-mêz diouz an ti, heb galloud koulskoude herzel oute da veuzi Pipi hag e vignonez dindan diou zailad vad a dour yen. Añfin, ar vandenn ganfarded ah eas kuit, skignet en noz.

Distrei a ris da Zeveon gand va zonton ha va breur, mezuz da veza kemeret perz en eur c'hoariva euzuz hag heuguz ha ne oa ket en enor d'ar re o-doa savet anezañ. Eul lodenn vraz euz ar barrouz a glevas komz diouz ar charivari. Displeget e oe evel just a beb mod, toud muioh pe nebeutoh diwirheñvel.

Pipi Haro, o veza ma oa kantonier ar gumun, en em glemmas d'ar mêt ha hemañ a reas perz d'ar hoñseiller tosta. Eur hlemm a oe kaset d'ar jañdarmiri. Eun enklask a zeuas d'e heul. Med war houlenn ar mêt, e oe torret ar hlemm. G. an hini e-noa kaset an traou en-dro ne hellas ket en em ziwall euz an dihaou dirag barner ar peoh e Landreger. Rankoud a reas rei daou-hant lur da Bipi Haro. Reñket e oa bet an afer en a-raog etre ar mêt, ar barner hag ar jañdarmiried. Gwelloh e oa en em reñka mad eged ober eur prosez fall. Hag e oa saveteet an enor.

Daoust ad ze e-nij karet Pipi komz anezi. Soñjal a ree memez e vefe bet kaoz deuz se e-barz « L'électeur des Côtes-du-Nord ». Houmañ a oa unan euz an nebeud kazetennou lennet gand peizanted Bro-Dreger, d'ar mare-ze. Med ar mêt ha dreist-oll ar re o-doa savet an taol a fellas deze en em ziwall euz ar wall-skwer. Ar mêt a roas da gompren da Bipi e rene eur vuhez fall o tegemer en e di eur vaouez kalz kosoh evitañ. Setu perag, emezañ, e oa bet distaget an afer... ha ma felle dezañ derhel e glemm, ar gumun diouz he zu, ne hellje ket e vired. Ar mêt a lavaras ivez dezañ n'en-doa gounid ebed o kas G. dirag ar barner rag n'en-dije ket

nemed hanter-kant lur a zihaou... med ma tegemere mad ar Pipi an emgleo kinniget dezañ, e rofe G. dezañ daou-hant lur. Pipi ne hellas eta nemed degemer ar pez a oa bet mennet gand pennou braz ar gumun.

Ar "Rodig-a-dro"

Beb an amzer, e Seveon, e kreske va zud va gwerz-butun zizunieg. A-hend-all e oa kustum e-touez ar beizanted da lezel ar baotred d'ober gand al lapined. Karget e oant d'o maga. Galled a reent kemer en trevadou ar menaj evid o beva ha priz ar werz a jome gante. Gand va lapined ha gwerz pichoned Yann - hemañ e-noa karget ahanon da daol pled d'e loened e-pad e goñje - em-oa eta eun nebeud arhant evidon va-unan. Kenta didu or bandenn kamaraded (Yann, Emilig, an daou T/Dremel, FG. E. ha L.P.) a oa ar c'hoari-kartou. Karga a ree, koulz lavared, toud on abardaeveziou sadorn ha sul, e-pad ar goañv.

C'hoari a reem jeu ar bank hag ar pakadou bihan. Sevel a reem reolennou, heb derhel kont ebed diouz ar re gustum. Seblantoud a ra din zoken n'ouvezem ket aneze. An taoliou-chañs a oa a-du ganin. Aliez em-oa zoken eur chañs dreist-muzul. Skañvaad a reen evel-se godellou va hamaraded. A-wechou, F.G. hag Emilig a jome da veza va dleourien beteg kont gwerz daou pe dri lapin.

Med degouezed a ree din ivez beza kalon vad-oll hag ober donezon d'am mignoned diouz an hanter euz o dleou. Va brud a honezer a oe eet e diavêz or strollad. Eur zulvez, goude merenn, e penn an diskar-amzer, tri gamarad ganin, e tistroem war velo diouz Gwengamp e leh ma oam bet o weled eur hrogad mell-droad. Treina a reem en hent ha war-dro eiz eur eh erruem en ti eur henderv da unan euz va hamaraded a oa e dud o terhel menaj e Peurid-Ar-Roh.

An ti a oa leun a dud, seiz pe eiz marteze ; ha leun a gaoz, na petra 'ta. E-touez an dud-se, eh anaven pevar baotr euz kostez an aod (Paotred ar mor, evel ma veze greet dioute). Red eo din lavared, abaoe nebeud a vloaveziou, e ree peizanted bord ar mor aferiou aour o werza o fatatez-abred d'ar Zaozon. Brudet e oa Paotred ar mor evid o finvidigez hag o lorh dre vro-Dreger a-bez. Eun dibab, med ivez eur "hlañ" e-touez ar beizanted, o stumm, o gwiskamant dibistig, o haoz eun tammig dismegañsuz, a zeblantas din, an nozvez-ze, diazeza o brud. An darempred-se ne blije ket din.

C'hoari a reent ar "Rodig-a-dro". Kalz a beziou moneiz ha zoken billejou a oa war an daol.

- « Med, setu Jobig Seveon, a lavaras kenderv va hamarad da baotred an aod ; al liper kartou, an hini a skrap ar yalhou dre oll e-leh ma tremen ha ma c'hoari ! »

- « Ma 'n-eus arhant da goll, ma teuio 'ta da hoari ganeom », a lavaras eun all aneze.

Evel ma ne brizen ket an doare komz-se, ne zavis ket an heg hag e kinnigis d'am mignoned distrei d'ar gêr.

Med ar henderv ne felle ket dezañ diskrava, kinnig a reas deom eur bannah gwin... a nahen. Med aspedi a reas :

- « Te hag a zo ken chañsuz war ar hartou, bez 'ta eur c'hoarier a oar en em ober ha deus da lakaad ganeom eur gwenneg bennag er "rodig-tro". Bez' 'to c'hoaz marteze chañs da hounid. »

- « Pe da goll », a lavaras dichek unan euz paotred ar mor.

- « Ne gollin netra 'vid an noz, peogwir am-eus dispignet toud va moneiz 'vid an abardaez. »

- « Pe teus dispignet kalz, pe ne roer ket dit kalz tra evid mond da vale. »

Ne respontis ket. Va mignonned a oa krog da en em hegasi. Lavared a reen adarre e oa poent distrei d'ar gêr. Heb dond a-benn.

Eur hamarad a dennas ahanon er-mêz, war digarez mond da staotad. Sila a reas din em dorn liez pezh moneiz ha daou villed.

- « Klask da jañs ! emezañ. Kement a hoant am-mije o weled ahanout rei eur gentel vad d'ar babored-se ! »

Ne houlennen ket gwelloc'h. Taolet o-doa pled e oam eet er-mêz.

- « Da gamarad e-neus, sur a-walh, da lardet eun tamm. Galled a rez 'ta c'hoari bremañ ? », a lavaras din d'e dro gonider an abardaez, dirakañ, eur bern sebezuz a beziou hag a villejou.

Heb eur ger, e tostais diouz ar rodig-tro. C'hoari a reen ar c'hweh. Ar rod a droe, a harte, ar gonider a zastume ar skodou hag ar rodig a zroe adarre.

O selled spiz outi e-pad eur pennad, en em lavaren ouzin va-unan e oa imposubl evid gwir gouvezed en a-raog ar poent e-leh ma harte ar rod pa veze bet kaset prim war-raog. An degouez a veze ivez an heveleb hini, ma ree ar c'hoarier d'ar rod trei goustadig a-walh.

Med er hontrol, ma veze roet d'ar rodig eur poulz skañv evid ober pemp pe hweh tro, eh harte an nadoz etre an niverenn deg hag an niverenn pemzeg, war-dro kreiz ar bladenn. Kinnig a ris neuze kemer perz er jeu, war an diviz ma vefe izel a-walh ar skodenn : eiz real d'ar muia evid komañs. Diouz kleved, e oa ar skodenn izella.

Ma degemer a rejont hag e roent din an enor da gas ar rodig en-dro. Ar pezh a reen gand nerz. Ar rodig a hartas war an niverenn daou warn-ugent. C'hweh kwech da heul, e kollis va eiz real, muioc'h pe nebeutoc'h a galon vad. Va hamaraded ne houezent ken e pe leh en em lakaad. Med me a brederie ennon va-unan. Dond a reas a-nevez va zro da gas en-dro mekanik an diaoul. Kinnig a ris lakaad deg lur dre niverenn.

- « Va billed diweza eo ! Ha hast am-eus da vond d'ar gêr ! »

Toud ar hoarierien a lakaas war diou niverenn. Lakaad a ris va billed war an niverenn unneg hag e rois eur poulz skañv d'ar rodig-tro. Harta a reas war an niverenn unneg. Serri a ris va billed... hag an daouzeg all heb lavared eur ger. Daou hoarier a gilas. Chom a reem pemp, pevar "baotr an aod" e-touezom.

Ar skodenn a gouezas da ugent real. Koll a ris peder gwech. Hag evid an deirved gwech e teuas va zro da drei ar rod. Kinnig a ris deze gopra ugent lur war beb niverenn, da lavared eo daou-ugent lur pep hini. En em guzulia a rejont, en entremar bremañ. A-benn ar fin, e oe savet an heg gante. Lakaad a ris ugent lur

war an daouzeg hag ugent all war ar pevarzeg. Kas a ris a rod en-dro. An nadoz a hartas war va niverenn. Serri a ris an daou-hant lur. Paotred ar mor a fuhe glaz. Goullo e oa o godellou.

Gand kalz a zevenadurez e houlennis digante hag-eñ e c'hoarient aliez ar rodig-tro. Den ebed, na zoken kenderv va hamarad, ën-oa dizoloet e oa digempouez ar hoariell.

Tintin hag an "Dougou-paperiou"

Yann ha me a zaremprede an daou vreur P. euz Peurid-Ar-Roh. En em gaved a reem a-wechou goude an overenn deg eur, en ostaleri an Deu, e Kêr ar Roh. Ar breur hena, Tinig, a oa anavezet tro-war-dro evid beza troet war ar jeu hag ar farsadennou. A-wechou, e-pad an hañv, pa gavem hir an amzer, ha ma veze plad or yalh, e kinnige deom kemer perz e jeu an "doug-paperiou".

En em lakaad a reem war bord hent Landreger da Wengamp, e kostez Peurid-Ar-Roh pe Minihi-Landreger, 'dreñv d'eur hleuz, kuzet mad e-mesk ar hlazvez, ha kentoh en eur horn-tro. Tinig a lakee neuze eun doug-paperiou koz e-kreiz an hent... e penn eur fiseleñ hir ha moan, a zalhe en e zorn.

Eur zulvez, goude ma oa bet lakeet an doug-paperiou war an hent, eh erruas gand tiz eur vaouez war velo. Gwelet ganti ar garitell-ler, e stardas war rod ar marh-houarn. Kalz a re, sur a-walh, rag koueza a reas a-hed he horv eun tammig pelloh.

- « Kaoh ! » ar skolaerez, eme Tinig.

Tinig ah êsaas serri an doug-paperiou ar primma posubl, med strafuillet ma oa, e fiseleñ en em rouestlas er bodou.

Ar houzañverez, ne oa ket dre vurzud re vloñset med he broz a oe mastaret a gaoh-saout. Tapet a reas ar yalh in-pign e-mesk ar bodou. Kleved a rejom or seiz seurt ganti hag evid echui e hourdrouzas dougen klemm d'an archerien.

- « Evid proui an droug-ober, a youhas-hi, e viran ar yalh. Serviji a raio da dest. »

- « N'eo ket din, a respontas Tinig ; na n'eo ket muioh deoh-c'hwi. N'ho-poa nemed he lezel el leh ma oa ! »

Ar skolaerez a hrozmolas geriou digomprenuz, e dehas kuit gand he hent.

D'ar zul war-lerh e oa gouel ar hezeg-koad e Landreger. Ar veloioù a oa niveruz ha Tinig a zoñje gantañ kaoud eun abardaevez euz ar gwella. En em lakaad a rejom e ged etre Ar Roh ha Landreger, tost da Zeveon. Teir gwech, strolladou bihan merhed yaouank a oa bet tapet. Ar yalh, e-kreiz an hent, a zedenne o evez. Amzer da harta, da zond war o hiz, hag an dra a hoantaent a oa nijet kuit.

A-raog ma oa savet en-dro ar plahed war o veloioù, e vezem en em ziskouezet. Tinig a heje neuze ar yalh en eur lavared :

- « Setu anezi. Me am-eus he kavet en ho raog. He rei a rin, evelato, med gand ma savo unan diouzoh war ar hleuz da rei din eur pokig brao. »

Tinig a vire bepred e yalh. Nebeud a vunutennou goude, a-boan ma oam-ni en-dro en em guzet er hlazvez, setu m'ah erruas eun oto vihan. Ar blenier, eur Ballam, a oa marhadour kig-sezon e-kichenn Milin-Zeh. Gantañ, e niz Kefellou. Hemañ a welas ar yalh hag a reas d'e donton harta groñs. Souza a reas beteg al leh ma oam kuzet. Tinig e-noa bet amzer a-walh da zacha gantañ abeg ar farsadenn. Ha dre evez, e oam diskennet er park. Goude beza klasket war ugent pe bemp metrad warn-ugent a hent ha 'barz an toufleziou, eur gaoz euz ar muia entanet a zavas etre an tonton hag e niz :

- « Me a zo sur beza gwelet anezi ! » a lavare Kefellou.

- « Huñvreal a rez, a hoapae Ballam. Ar yalh n'eo ket nijet kuit he-unan... Ha den n'eo tremenet abaoe war an hent. »

Goude beza klasket en aner, e savjont en-dro en oto, an niz o toui e-noa gwelet ha gwelet mad ar yalh war an hent, an tonton o lavared n'eus ket brasoh klañvourien evid ar re a zo touellet gand ar strobinnellou.

Paotr ar harr-nij hag ar chiminaler

Bez' am-oa eur hamarad er Roh, an tad anezañ a oa luh-skeudenner. A memez oad e oa ganin. Eur beurevez, e roas kelou din diouz eun dra hag a reas din bama.

- « Er zizun dremenet, emezañ, a zo deuet da weled ahanon eun tonton hag a zo adjudant e-barz an arme. Lavaret am-oa dezañ va hoant da vond da zoudard war ar hirri-nij. Gwelet e-neus hag-eñ e vefe posubl. Ha greet e-neus din ober ar paperiou. Galvet e vin dizale. »

- « Med evid mond da zoudard war ar hirri-nij eo red moarvad kaoud skridou-testeni, da vihanna ar vachelouriez, ha c'hoaz sur a-walh eun tammig mad a harp. »

- « Netra ebed diouz-se ! N'eus nemed sina eur goulenn enroll, karga eur roll-goulennou, rei da heul aotre da dud hag eur fichenn stad-den. Sell ! Te ha ne fell ket dit chom da zerhel menaj gand da dud, perag ne houlennfes ket mond da zoudard ? »

- « Re ziêz eo an dra-ze, » a respontis.

- « Nebeutoh evid na zoñjez. Mar dout a-du, e skrivan d'am zonton hag e houlennan digantañ kas din toud ar paperiou red. Kerkent hag am-mo resevet aneze, e lavarin dit hag e sikourin ahanout da ober ar pezh a zo red. »

En aon na gontfe din va hamarad flugezennou, ne lavaren tra da zen, na d'am hamaraded na d'am zud. Koulskoude, eur pemzeg deiz bennag goude, ar paperiou a oa aze. Ha pa oa red kaoud aotre va zad, e kemeren warnon erfin da doulla kaoz gante.

Kudenn ebed evid va mamm. An traou o veza greet na vefen ket beleg, ar peurrest eviti a oa a nebeud a bouez.

- « Ne fell ket dit beza labourer-douar, a lavaras din va zad. Da vreur a zistroio diouz an arme, dindan nebeud a viziou, ha te a dle ivez mond d'ober da goñje a-benn bloaz. Mar deo da vamm a-du, e sinin dit da baperiou. »

En em bourchas a reen 'ta euz ar paperiou goulennet hag o hasen evel dleet. Va hamarad e-noa dija tremenet an arnodenn hag ar medisin e-noa gwelet anezañ. Degemeret e oa evid beza zoudard-nijer. Ar helou-ze a roas kalon din. Eur miz goude, e oan galvet da ospital an armeou d'An Naoned. Dre ma tostae deiz an arnodenn, e kreske va enkreuz.

Ne oan nemed eun tammig peizant ha 'n-oa morse kuitaet e Dreger ginidig. Va derez deskadurez ne oa ket diouz ar re wella hag en em welen fall o terhel penn d'an arnoderien : ofiserien ha medisined an arme. Mond a ris d'ar heloioù da gar Ar Roh : an hent da ober, an euriou-treñ ha priz ar veaj. Me, ha na oan ket eet pelloh evid Gwengamp, a wele fall a-walh ar veaj-se euz Seveon beteg An Naoned. Evuruzamant am-oa arhant a-walh evid paea va beaj heb goulenn sikour va zud.

Hag an devez braz a zeuas erfin. Va mamm a breparas din va boued evid an ergerzadenn varzuz-se : teir grampouezenn, bara, amann, peder jelkenn anduill paket en eun torchouer propr. Ne gemeris ket re a zillad med lakaad a ris va habit kaerra ha... berr-loerou bleunioù treset warno hag a oa o paouez ober o degouez e Bro-Dreger. Em godell, paperenn va galv, e kemeris eta an treñ er Roh. Chañch a reen e Ploueg-Pontrev hag e Gwengamp e saven e-barz an treñ-espres Brest-Pariz. E gar Roazon e rankis gortoz e-pad peder eur an treñ evid mond d'An Naoned. Ar gar a zeblantas din braz divent... Tenna a ris va montr... Deg eur deg ! n'am-oa netra em hov abaoe c'hweh eur diouz ar beure. Diflaket e oan gand an naon.

Mond a ris em hoazez war eur bank, hag e tigoris va zah lien koaret. Displega a ris va zorchouer war va daoulin hag e trohis daou bez damm bara a larden gand eur gwiskad teo a amann zall hag evid peurechui ar geusteuenn e kemeren diou jelkenn anduill. Nebeudig goude e oan war va gwalh med sehed am-oa. O vond hag o tond war ar hae, e kavis eun davarnig hag eh even eur werennad limonad. Teir eur a jome din da hortoz.

Ar paotrig diwar ar mêz e oan e-nije karet mond d'ober eun dro e kêr vraz Roazon am-oa klevet kement ha kement komz diouti. Med eur gêr ken braz e oa evidon, ken am-oa aon da en em goll enni. En em drei a reen 'ta da hortoz war ar hae, o vond hag o tond, o seblantoud taol evez ouz an treñioù a harte, ar veajourien o tiskenn pe o sevel, paotred an hent-houarn o labourad. A-greiz-toud en em gavis dirag eur panell a roe da houvezed euriou an treñioù ha war du peleh eh eent. Ne welen e neb leh hini An Naoned. Nehet va fenn, e houlennis digand eur paotr euz an hent-houarn eun tamm sklêrijenn :

- « Me a zle mond d'An Naoned ha war ar panell aze ne welan ket al linenn-ze merket. »

- « Evel just ! peogwir emaout war linenn Pariz da Vrest. Ma fell dit mond d'An Naoned, treuz dre ar vanell a-zindan douar ha sav war ar hae niverenn A. »

War ar hae-ze, e houlennen a-nevez va hent gand eun implijad. Diskouez a reas din, hanter kant metrad pelloh an treñ evid An Naoned, difiñv oll, o hortoz ahanon. Dizammet e oa ma spered adarre.

Goulenn a ris va hent eur wech c'hoaz. En treñ-ze eo am-oa da zevel. Mond a ris em hoazez e-kichenn eur paotr yaouank gand eun habit eun tammig teuhet. Digeri

a reas eur valizenn vihan hag e kemeras eun tamm bara da zebri. Ober a ris kemend-all gand va restad bara. Ar paotr yaouank a voulhas kerkent ar gaoz.

- « Chañs 'teus, emezañ. Da vamm a zle beza aozet dit eun adverenn vad. Me am-eus prenet eur "sandwich" e predleh ar gar. »

Goulenn a reas ganin a be leh e oan, a be leh e teuen, piou e oan, da be leh eh een, pe vicher oan.

- « Me ivez, emezañ, a ya d'An Naoned, med evid klask labour. Eur hamarad e-neus roet din chomleh eur patron ha bez' am-eus eun tamm chañs da veza gopret gantañ, war doareou kalz gwelloh evid e Roazon e-leh ma n'on ket paeet mad. "Fumist" eh on-me.

O klevet ar ger-ze, e oa darbet din lonka a-dreuz. Me a oa aze eta e-kichenn eur "fumist" ha kaozeal a reen gantañ. Me a oa o tebri gand eur holl-e-vara, eul laer marteze... añfin, eun netra vad, eur paotr hag e-noa moarvad kuitaet Roazon, evid achap d'ar polis, war-lerh eul laeroñsi pe eun taol fall bennag.

Ar c'hoant da guitaad dioustu ar hompartimant a grogas ennon. Med, aonig a-walh, ne greden ket fiñval an disterra e-kichenn al lampon dañjeruz-se. Lakaad a ris va dorn em godell evid en em asuri e oa bepred va yalh e-barz.

Pa errujom en Naoned, ar "fumist" a houlennas diganin e pe ostaleri e oan en zoñj da vond da loja.

- « En ospital an armeou, a respontis dezañ. Eun adjudant a vo moarvad o hortoz ahanon. »

- « A ! A ! ha perag 'ta ne vefe ket eur habiten ? Sell mad ouz da baper-galv. Ma tle unan bennag dond d'az kerhad, eo merket sur mad warnañ. »

E gwir, galvet e oan da nav eur... an deiz war-lerh. An adjudant ne oa anezañ nemed eur faltazi. Diskenn a reem diouz an treñ ha ni o vond da zal-veur gar An Naoned. Sklêr deoh, ne oa ket an disterra adjudant.

- « Peogwir e hede eun adjudant, ne teus ket sur a-walh dalhet eur gambr, a lavaras din ar "fumist". Ma fell dit, e hellez dond ganin. An dra-ze a zell ouzit. Anavezet a ran eun ostaleri vihan e-kichenn ar gar. Ne vezer ket fall enni ha n'eo ket ker kennebeud. »

Ar "mad-da-netra" a zeblante din bremañ dedennuz a-walh. En em drei a reen d'e heul hag eur hard eur goude, ar "fumist" a zalhe eur gambr gand daou wele.

- « Evel-se e kousto deom nebeutoh ! »

Sevel a reem on traou ha diskenn a reem en-dro da zebri eur zoubenn, eun alumenn-uou hag eun tamm fourmaj a dañvaen evid ar wech kenta em buhez. Goude e savem a-nevez en or hambr.

En eur en em ziwiska, e-pad ma oa ar "fumist" a-gostez er priveziou, e kuzen va yalh dindan malatasenn va gwele. Daoust da zoare mad va heneil, ne oan ket c'hoaz dizoaniet. Evid ar wech kenta em buhez, da naonteg vloaz, e kousken e-barz eun ostaleri, gand eur henvreur kambr... eur "fumist". Goude lein, an deiz war-lerh beure, e paeem pep hini e hanter euz ar gont.

Ar "fumist" a houlennas diganin goude e pe ospital e oan galvet.

- « Anavezet mad a ran An Naoned peogwir am-eus labouret amañ meur a wech. Mond a ran 'trezeg ar memez tu ha te. Ober a raim eul lodenn euz an hent asamblez. »

Tremen a reem dirag eun uzin.

- « Gweled a rez an tri chiminal uhel-ze e-barz an uzin ? En diabarz, toud al lodenn izella a zo da adober. An embreger-brikenner a zlean mond da weled bremaig, a zle kaoud ezomm - ha pres a zo warnañ - diouz fumisterien. Ha fiziañs vad am-eus da veza gopret war diviziou kalz gwelloh evid e Roazon. Med mond a ran da genta d'az kas d'az ospital. »

Sabatuet e oan. Ar "fumist" a gemeren evid eul lampor mad da netra a oa, e gwir, eur micherour yaouank kaloneg, karget da repari chiminalou. En degouez-ze, me eo an hini a oa ar "fumist".

Oh antren en ospital, e houlennten eur jardriner hag e tiskouezen dezañ va faper-galv.

- « Te a fell dit mond da zoudard-nijer ? Dit toud ar blijadur, paotr ! Me a zo eun nijer bet ha gwall hloazet on bet, deg vloaz 'zo. Va harr-nij e-noa eilpennet o touara hag eet e oa d'en em frika ouz e harr-di. Med an darvoud-se e-neus, marteze a-walh, saveteet va buhez din. An darnvuia euz sturierien kirri-nij va amzer-me a zo maro hirie. Med, erfin, gwellaet eo bet an traou abaoe. Na rez ket re a wad fall. »

Goude al lavariou dizoaniuz-ze, e tiskouezas din ar zal e-leh ma tleen mond :

- « Ale ! chañs vad dit ! » eme ar jardriner.

D'ar galv, e oam eun ugent bennag. Eur sekretour a roas deom eur roll-goulennou da leunia, hag eun testeni all euz or goulenn mond da zoudard evid eur pennad êsa a dri miz. Ha goude, e oe eur rummad bizitou medisin hag ah echuas dre ar pouezadur. Me a ree kant c'hwezeg lur.

Amprouennou all a hortoze ahanom goude merenn. Eun otokarr koz euz an arme a oa ouz or gortoz dirag an ospital evid or has war gaeou "Ar Fosse", war ribl ar ster Liger. Goude beza greet eur gaozeadenn, eur medisin euz an arme, tri galoñs dezañ, a reas deom kraped, pep hini d'e dro, war eur pont-troer, uhel fromuz, evid en em renta kont ha ne droe ket or penn deom. Darbet e oa bet da dri ahanom koueza d'an traoñ hag evel just e oent bet kavet dihouest.

Distro d'an ospital, eun iñfirmier a roas deom da houvezed ne oa ket echu an traou ; rag ankouaet e oa bet muzulia or ment.

Pa deuas va zro, e reas din mond dindan an tez. Muzulia a reen eur metr c'hweh ha hanter kant.

- « Keuz am-eus, emezañ ; med red e oa dit ober d'an nebeuta eur metr ha tri-ugent. An nebeuta rekiz eo ! »

Va ment ne aotree ket din 'ta beza eun nijer. An noz-se e nijas kuit diouzin va huñvreou hepken ha va hoantegeziou.

Trede lodenn

Ar hask-brañskell

An tenner-kleizard

Nebeud a zizuniou war-lerh, ar hirri-nij a oa ankouaet. Krog e oan da zoñjal en ma hoñje. Er Roh, eur retreted euz an arme a gase en-dro eur "greizenn-tennagand-ar-fuzul" hag a gemere galvidi ar bloaveziad da zond. An arme a roe dezañ an danvez red hag eñ ar roe kenteliou evid en em brepari d'ar vicher zoudard. Beb sul, ar ragsoudarded hag ar re a blije deze tenna gand eur fuzul-vrezel ah ee da Goad al Louarn, war ribl ar Yodu e leh ma veze arnodou an dennadeg.

Gwall-reuzuz e oe ma henta êsa ! Heulia a reen koulskoude, ger evid ger, ar huzuliou a roe din ma helenner. Ne oe ket unan euz ma boledou o vond er pal. Med mond a reent toud da bourmen... tro-dro. Va helenner, eun den mad ha leun a basianted, a oa krog da goll kouraj.

- « N'eus nemedout hag a zo divarreg da skei eur boled er pal. Marteze 'teus eur gweled fall ? »

Ne oa ket e-unan o koll kouraj. Va hamaraded a ree goap diouzin. E gwir, ne oan mad da netra.

D'an eil tra, e oa deut eur helenner all da weled on taoliou-êsa. Ha war an deg boled a dennen, ne oe ket evel just unan hepken o tizoud ar pal.

- « Tra-walh evel-se, emezañ... Laosk da gamaraded da denna, med chom aze. Da guzulia a rin bremaig pa vo echu an dalh-labour-mañ ! »

Kerkent ha ma oa eet ar re all kuit, e pedas ar paotr karget d'aficha ar poentchou da vond en-dro d'e blas, da lakaad eur pal a-zoare ha da vond en e ziklutenn :

- « Mad ! Bremañ, gwelom on-daou. Lavared a rez din eh out dehouiad ? »

- « Ya, avad ! Skriva ha labourad a ran euz ma dorn dehou. »

- « Mad ! Sellet mad am-eus ouzit, dehouiad out. Med evid tenna gand eur fuzul, e soñjan e tleez beza kleizard. N'out ket da-unan evel-se. Ral tre eo beza dehouiad ha kleizard da denna, med en em gaved a ra kement-se. Mond a rez d'en em lakaad e stad da denna ha cheñch da fuzul a skoaz. Kemer toud da amzer, ha dreist-oll, chom sioul. Dalh mad da fuzul, reiz mad anezi ha tenn. »

Heulia a ris, penn da benn, e hourhemennou. Strakal a reas an taol. An aficher a ziskouezas an niverenn c'hweh. Souezet e oan ! En em reiza a reen a-nevez hag e tennen ma deg boled. Er pal, e oant toud. Unan zoken a vankas ar helh-kreiz a nebeud a vilimetrou nemetken. Ar re all a oa kendastumet brao en-dro d'ar hreiz.

- « Setu aze ; mad-tre ! eme ar helenner. Chom a rez a-ziazez ha biza a rez mad. Nebeud a zalhiou-labour all hag e vi euz ar re wella euz ar bagad. »

Eur miz goude, d'am brasa diveh hag ivez brasa estor ma hamaraded, e oan unan euz ar wella dennerien. Kemer a reen perz e tennadegou ha kenteliou evid

beza zoudard, e Koad al Louarn. Hag e miz genver 1927, e oen galvet da dremen ar hoñseill.

Sant Rafael

En em gaved a reen gand eun hanter-kant danvez soudard e sal vraz ti-kêr Landreger, noaz-beo evel on tad koz Adam, dirag ar souprefed, mêred ar hanton hag ofiserien. Eun eur hanter e padas ar vizit. Pep hini a dlee lavared hag eñ ne oa ket skoet eun droug iskiz bennag. Ar "hlevata"⁹ a bade diou vunutenn dre baotr. Neuze e tremenem war ar vaskul ha dindan an tez. Abaoe ma beaj-Naoned, n'em-oa ket kresket tamm ebed. Kavet e oen "mad evid ar zervij".

Pa guitaen an ti-kêr, diou werzerez ma zaolennas a durubaillou hag a rubanou kustum. Adkaved a ris ma hweh ken vroad euz bloaveziad 27 Ar Vinihi. Kavet mad da vond da zoudard e oam bet toud. Ha ni d'ober tro seiz ostaleri Landreger. Enne toud, e oa red eva. Pep hini a bae e droiad en eur chañch ostaleri beb tro.

E-barz an hini genta, ma hamaraded a hourhemennas eur "Pernod" pe eur "Ricard". Pa n'am-oa morse evet an disterra "aperitif" e houlennis eur werennad limonad.

- « Bet out kavet mad evid ar zervij ; an dra-ze a zle beza lidet en eur eva eun "aperitif" hag unan diazezet mad. Ober a ri eveldom, peotramant e laoskom ahanout da goueza. »

Aon am-oe o-defe greet "eur mad da vann" ganin. N'am-oa c'hoant ebed da zistrei ma-unan da Zeveon. Ha daoust hag e oa ar momed da gonta deze, a-dreuz hag a-hed e oa kaoz eur vamm-goz ma heugen an alkol, hi hag he-doa greet din lonka eur volennad flip pa oan c'hoaz eur paotrig bihan. C'hoarzet o-dije toud an dud. Kemer a reen 'ta warnon eva eur werennad Sant-Rafael.

Trinka a rejom. Tostaad a reen ma gwerenn ouz ma muzellou... med ar zoñj am-oa dalhet euz ar flip a zeuas en-dro, kreñvoh evid biskoaz. Lakaad a reen a-nevez ma gwerenn war an daol. Trinka a rejom evid an eil gwech, hag o lakaad toud ma bolontez ha toud ma nerz kalon, e lonken ma "Zant Rafael" a-stok-penn, heb kemer amzer da denna ma alan na da dañva anezañ.

Goude beza bet o trinka e-barz ar c'hweh ostaleri, unan diouzim a brenas eur voutaillad... Sant Rafaël. Ha ni o vond ti dud O.P. tost da vourk Ar Vinihi. Kana a reem a-bouez-penn o tremen e-biou da vagadou all a baotred yaouank, danvez-soudarded eveldom ha ne oa ket gwelloh o stad evidom. Bez' on-oa or veloïou, med ne oa ket kistion da zavel warno. Servij a reent deom... da chom en or zav en eur gerzed. Debri a rejom or merenn ti dud O.P.... Pep hini a brizas ar pred hervez ma oa gouest pe gouestoh e galon da zougen meskaduriou boued fetiz hag evaj a beb sort. Ranked a reas hiniennou mond er-mêz da zislonka ar pez a oa a re. Derhel a reem mad a-walh, ken e oam sebezet.

Da fin ar pred, c'hoar on ostiz a zervijas deom eur volennad kafe - kafe, heb chikore nag alkol hag a reas deom adkaved eur bale dres evid sevel war or veloïou... ha derhel gand on tro.

⁹ hlevata : ger savet diwar "klev"

Divizet e oa bet e tleem mond a'n eil ti egile. Abaoe ma oa bet red da beb den yaouank d'ober e goñje, e oa bet kemeret ar boaz da rei daou zevez vak d'ar re a dremene dirag ar hoñseill. Lavared a reed e-noa droed ar zoudard da zond da gaoud eun devez laosk evid en em vezvi hag eun all evid en em zivezvi.

E Langoazou, tost d'ar bourk, e oa eun ostaleri. Harta a rejom da zaludi ar patron ha ne hellas ober bravoh evid rei deom da eva. Va hamaraded a zilezas neuze an aperitif evid ar gwin ruz. Me a jome fidel d'am "Zant Rafael". Prena a ris zoken eur voutaillad gand aon da veza rediet d'eva eun evaj all bennag e-pad or bizitou da zond.

Ti J.C. e rankis distouva ma boutaill. Bez' e oan en ma naved gwerennad. Krog e oa dija an deñvalijenn da zond pa oem degemeret e Seveon gand ma mamm.

- « Evet ho-peus tra-walh, emezi. Aozet am-eus deoh eur bannah kafe mad. Tomm mad eo ! Bez' e oan o hortoz ahanoh. »

Aotreet e oe ma hamaraded da gemer eur mik. Ha ni da g/Kerpuñs, ti T.C., e leh ma oam gortozet da goan. Laosket am-oa ma velo e Seveon, med n'am-oa ket ankouaet ma boutaillad Sant Rafael. Ti T.C., e oam degemeret c'hweg. Or hamarad e-noa breudeur ha c'hoarezed. Ar re-mañ a oa plahed koantig brao hag ar vreudeur a oa liperien. Red e oa din diskouez deze ma boutaill. Diwar neuze n'am-eus soñj a vann ebed ken.

Divuna a ris, an deiz war-lerh beure, e marchosi Seveon, en eur glask krafignad ma fenn ha ma skoaziou. E-pad ouspenn eur miz, netra nemed gweled eur voutaillad Sant Rafael, pe zoken eur werennadig euz an evaj euzuz-se, a roe din eur heug spontuz. Hag en em lakaad a ris a-nevez d'al limonad.

An dichapadenn-vraz

Evuruzamant e oa bepred ar chañs ganin er hartou, rag abaoe ma oa echu e goñje gand Yann, em-oa ranket restaol dezañ e zubeed hag... ar gounid da heul.

Kemeret am-oa memestra evez da greski ma staliad-lapined ha ma yalh a oa ront a-walh e penn kenta miz ebrel 1927 pa oen galvet da vond d'ober ma hoñje e-barz ar c'hwehved ha daou-ugent rejimant soudarded-war-droad da Zant Avold.

Daoust din da anavezad mad a-walh douaroniez Bro-Hall, gand anoioù an departamantou, o frefekturiou hag o is-prefekturiou, ne houvezan ket tamm ebed e pe du e oa Zant Avold. Dond a ris a-benn añfin da houvezad e oa an "toull"-ze kêrbenn eur hanton a eiz mil den hag eur gêr-warnizon e pastell-vro Forbach. Deski a ris ivez e oa red eur peder eur warn-ugent bennag a dreñ evid mond diouz Ar Roh da Zant Avold.

Ha d'an daouzeg a viz mae 1927, e kimiadis evid eur vro dianav. An avañtur vraz evid peizant bihan Bro-Dreger ha n'e-noa james c'hoaz kuitaet e vro-gavell, nemed eun dro evid mond d'An Naoned. Evid an degouez, ma mamm a brenas din eur zah-lien-siret hag a gargas a nebeud a beziou tammou bara hag amann evid ar veaj.

Daoust din da veza dianav, e oan aketuz da gas ganin eur razour bihan am-oa gounezet e Langoad, deiz Yaou-Fask, hag eur broust baro gand ar zoavon.

Ma zad a fellas dezañ dond ganin beteg ar gar. Eur galonad-anken am-oa da guitaad ma mamm, Frañsin, Yann, ha doud tud Seveon.

- « Na zaleom ket », a lavaras Fañch ar Rolland. Kemer a reas ma zah ha ni kuit dre ar wenojenn, a-hed al linenn hent-houarn. Fresk e oa ar beure. Eun tamm reo gwenn a holoe ar yeot hag ar bokedou gouez.

Ral e oa kement-se, d'ar mare-ze, war bord ar mor.

- « Ar haol patatez-abred a zleem tenna a-benn pemzeg deiz amañ, en em gavo gwaz euz ar reo-mañ ! eme ma zad. Tennet e vint diwezatoñ ha rei a refont nebeutoñ evid ar bloaveziou all. »

O tremen war bont Ar Yodi, e tigoras din e galon :

- « Emaout o vond da ober da driweh miz e-barz an arme. Triweh miz a dremen prim. Soñj dit am-eus kollet, me, gand ma hoñje ha ma harlu en Alamagn, an eiz miz gwella ha pevar-ugent euz ma buhez, e servij Bro-Hall. »

Derhel a reas pounner war ar ger "Bro-Hall".

- « Kenlabouret am-eus marteze, evid eul lodennig, da zistro an Alzaz hag al Loren en or mamm-vro. En em houlenn a ran a-wechou, hag-eñ eo bet prizet hervez o zalvoudegez wirion roadou paotred ma amzer gand ar gouarnamantou-bremañ. »

Tevel a reas eun nebeud... hag e kendalhas :

- « Goude toud, ma plij dit an arme, kemer eun angajamant a-youl-vad, goude da goñje. Ma heuliez ar "peloton", a-benn eur bloaz, e helli ober da vennoz da vad. »

Evid plijed dezañ e respontis e soñjfen ervad en dra-ze. E gar Ar Roh, e oa eun deg all bennag a baotred yaouank, galvet ivez d'ar hazarn. Med hini ebed ne oa da veza rejimantet e Zant Avold. Lavared a ris kenavo evid an deiziou, hag e savis e-barz an treñ bihan.

E Gwengamp on-oa eun eur da hortoz a-raog treñ Pariz. Plijadur am-oa oh adkavoud eur hamarad koz euz Sant-Jo, Ar Penneg. Kaset e oa d'ar memez rejimant ha me. Pemp bloaz oa n'on-oa ket en em welet.

A-raog errued e Pariz, e lavaras din e oa eun tonton o hortoz anezañ e gar Montparnasse hag evel on-oa teir eurvez dale e Pariz, e pede ahanon da vond gantañ di. An tonton a oa aze, er gar. Ha goude ar gourhemennou kustum, am fedas d'o heul.

Tud ar Penneg a oa perhenned pinvidig o terhel eur menaj braz. Setu perag e soñjen en em gaved gand eun tonton gwisket kaer ha kravatennet. Med ar paotr a oa koz, razet fall, teuhet e habit, heb an disterra kravatenn ha gand eur boned plad war e benn.

O kuitaad ar gar, or hasas d'ar metro a gemeren, evel just, evid an dro genta. Ne gomprenen netra ken. E-leh kerzed dre ruiou Pariz e valeem dindan kêrbenn Bro-Hall. Gariou ar metro a zeue, an eil war-lerh egile ; an dud a zave e-barz, a ziskenne, en em vounte, toud dianav etreze, heb ger ebed.

Eüruz e oen oh adkaved an êr yah, da vale dre ar ruiou, da halled estlammi dirag ar staliou braz mantruz.

Goude beza kerzet e-pad ugent munutenn, eh erruem dirag ti leh-chom an tonton. Sevel a reem pevar estaj dre eur skalier koz, uzet e bazennou, a-raog errued en eun tammig lojamant e daou bez gand paperiou-moger, koz a-dost da gant vloaz. A-boan ma hellem mond on-zri en or hoazez er gegin ! Ne zeuen ket a-benn da gompren penaoz e helle an den-ze beva en eur seurt lochig. Pebez kemm gand zal-vraz Seveon !

An tonton a ginnigas deom or pred. Soñjet e-noa zoken er houignou. Kaoud a ree din beza dirag eun den speredeg, a galon aour, med heb bolontez na c'hoant beva ; eun den hag a zlee beza en e galon eur gouli koz-tre. Goulenn a reas kelou digand e niz diouz toud ar famill. Kompren a reen eun tamm e-noa kuitaet e Vreiz goude beza bet kudenn gand e dud.

Eun eurvez bennag a-raog kimiad an treñ, e kemeras eun taxi evid galled deom taol eur zell war Bariz. Goude or hasas da har ar Zav-Heol. Leun e oa a baotred yaouank galvet da vond d'ober o hoñje. An tonton a jomas ganeom ken ma partias an treñ. En eur zerri dezañ e zorn, e drugarekaen evid e zegemer kaloneg. Jamez ken, ne welis anezañ.

An treñ a oa leun-chouk. Chañch a rejom e Metz. E Sant Avold, e oa iz-ofiserien o hortoz ahanom. Dleed a ree beza war-dro seiz eur diouz ar beure. Tri mekanik d'ober kafe, anvet "perkolater", savet en eun "tiig-karr" gand eun aneval stag outañ, a zivogede dirag ar gar. Servijet e oe eur hartad da bep hini, a-raog boulha gand ar galv. Kleved a ris ma ano ha hini ar Penneg. Rejimantet e oam on-daou e-barz ar memez bataillon ; me, e-barz an eil kompagnunez hag eñ e-barz an hini genta. Eun hanter kant bennag e oam en or strollad, eul lodenn vraz ahanom Breiziz diwar-dro Gwengamp ha Lannuon.

Dastumet en eur reñkadennad dre dri, dindan urziou eur serjant hag eur haporal, e kemerem hent ar hazarn. A-benn eun hanter-eur, setu-ni dirag eur pezh porrastell, digor braz evid on degemer. Ar "plantan" a deuas er-mêz diouz e hedig hag a zaludas gand e fuzul. A-uz d'ar porrastel e oa eur skritell : "Ardant du Pic". Kleved a ris diwezatoh e oa an den-ze eur skrivagner. Hag adarre, ouspenn eun eurvez gortoz, e porz ar hazarn. Hag adarre eur galv all dre gompagnunez. E-barz an eil, e oam eur pemzeg bennag.

Bleniet e oem gand eur haporal beteg lojamant an eil kompagnunez. Ober a reas deom sevel en eil estaj e leh ma tiskouezas deom or hambr. Bez' e oa enni c'hweh gwele houarn gand "somerrou" ken houarn all. 'Uz da beb gwele, e oa stag eur plankenn ouz ar voger, evid lakaad ar zah-kein. C'hweh soudard nevez e oam e-barz : eur Breizad, an Doyen, euz Plounerin, eur paotr euz ar "Saône et Loire", eur paotr bleo ruz euz an "asistañs" ha Bransard, eur Parizian bihannoh c'hoaz evidon. Selled a reen spiz eur wech all ouz ar gambr a vefe e-pad triweh miz ma repu. He niverenn a oa "ar pevare ha tregont".

D'an drizeg a viz mae 1927, war-dro unneg eur hanter, ar zoudard a eil klas Ar Moal Josef - c'hoaz en e wiskamant kêr - a zebre e bred kenta en unan euz diou zal-

debri an eil kompagnunez. Servijet e oam gand eur zoudard euz ar bloaveziad a-raog. Komañs a reas dre lodenna deom ar "pinard" brudet. Klask a reen harz anezañ da garga din ma hard... en aner ! Dond a reen koulskoude da ingala ma lodenn etre daou pe dri amezeg ouz taol, souezet a-walh euz ma hinnig.

Nebeud goude, e oe servijet dim eur zoubenn flêriuz. Ha goude, kig bevin gand "fayo". Eur serjant hag eur haporal a oa en o zav, e peb penn euz an daol d'on evezia. Ar haporal a gargas hiniennou euz ar re a oa galvet da droha ar bara. Debret e oe merenn prim-ha-prim.

- « Taolit evez mad ouz ar plas a gemerit bremañ, a vlejias ar serjant. Roet eo deoh beteg ar henta kemenn. »

Diouz kleved, e oa ar serjant o paouez resev e haloñsou ha fier e oa ar paotr. E benn a leue iz-ofiser ne blije ket din, e gwirionez.

Ar hask-brañskell

Goude kreisteiz, e oam kaset da vagazin ar gwiskamañchou. Antren a reem e-barz, c'hweh ha c'hweh. Paotr ar magazin a boanie diouz e wella da glask da bep hini eur botou-ler hervez e droad hag eur hask hervez e benn. Pa deuas ma zro, ne chomas ket toud an dud dibres... Ment ma zroad a garge brao eur votez eiz ha tregont. Med bihanna niver-ment botou ar magazin a oa unan ha daou-ugent. Ar "mir-tartouz" a daolas din tri re votou e-kreiz ar magazin.

- « Gwelloh eo dit kaoud ar botou-ler re vraz evid re vihan. En em denn a gavi, gand an tri re-ze... ha gra buan. Kaoud a ra dit n'am-eus ken traou all d'ober nemed pleal gand da votou ? »

E sal ar gwiskamañchou, e roas din eur zoudard eur hased :

- « Dal da zillad. Seblantoud a reont beza euz da vent. Kas toud an traou-ze ganit d'az kambr ha deus en-dro da gemer da gask ha da galod. »

Pa zistroen d'ar magazin, al letanant a gomande ar gompagnunez a oa oh ober e dro-ensell. Toud ar zoudarded a oa en o zav-zonn. Me, avad, ne houvezan ket penaoz en em zerhel. Al letanant a zistroas war-du ennon hag e saludis anezañ e-giz ar zoudarded.

- « Repoz ! » a hourhemennas al letanant Renard.

Soudarded ar magazin a adkrogas gand o labour. Galvet e oen evid êsa ma hask. Unan euz ar zoudarded a lakaas unan din war ma fenn, ha goude eun eil, ha goude eun trede. Med ma fenn na 'h ee e-barz hini ebed. Ar "mir-tartouz" a zeuas d'e dro, a gemeras an tri hask brasa... med ma fenn ne zeblante ket beza greet evid ar sort kinkladur-ze. Ar serjant-major a heulie al letanant ah êsaas d'e dro... Kazeg adarre !

- « Anad eo, eme ar zoudard a oa deut a-benn d'am boutaoua, ne gomprenan mann ebed. Bremaig toud ar boutou a oa re vraz evitañ, ha bremañ toud ar haskou a zo re vihan. »

Al letanant en em emellas euz an traou :

- « Êsait dezañ an hini brasa. » Kazeg eur wech all !

- « N'heller ket koulskoude ober e gask dezañ war e vuzuliou. »

Al letanant a vousec'hoarzas.

- « Kemerit hemañ memestra, da hortoz kaoud gwelloh ! »

Hag o selled ouzin, e lavaras ouspenn :

- « N'eo ket eur hask eo... med eur vranškell eo ho-peus war ho penn ! »

Distrei a ris d'ar gambr "pevar ha tregont" da wiska ma dillad soudard. Evid ar wech kenta en em zilis en eur bragou-dindan en mezer groz. Ha goude beza troket nebeud a zilladou etrezom, e oam bremañ, on-hweh, gwisket kazi deread. Da hweh eur, ar hleron a "zonas ar zoubenn".

Ar hartad-gwin

Dibabet e oan evid heuill bagad an "danvez-kaporaled". E-keñver ar re all, ma derez studi a oa zoken uhelig a-walh. An darn-vuia euz soudarded ar c'hwehved ha daou-ugent rejimant a oa Bretoned, Morvandied, Bourgignoned ha Parizianed.

Euz ar re boaniusa e oe ar miz kenta. Ar "vleued" a ranke ober toud ar horveennou ; an darn-vuia aneze a oa e gwirionez inutil. Bez' e oam eun abeg a drebaserez, a hoap, a zispriz, zoken a-berz ar re "goz". Ne zegemereren tamm ebed an dra-ze. Evidon-me, e oa evel eur fae droug-wisket am-oa kalz a boan o kompren anezañ. Or rummad e-noa eur serjant : Fauchoux e ano ha daou gaporal. Unan euz ar re-mañ, ar haporal Assicou, a oa atahinuz spontuz. Tremen a ree ahanom da haleourien. Kement-se a oa sur mad merk eur spered bihan, eur vrasoni dizereet.

Assicou a evese euz or bevañs euz taol. Hemañ a veze dalhmad heñvel. Soubenn flêriuz da verenn ha da goan, kig zoubenn pe materiet ha patatez poazet 'barz an dour. Pell e oa patatez Loren da gaoud saour re or bro. Heugi a ree ma halon euz ar fer. Ar "fayo" a drohe din krenn ma naon. Red e oa deom lonka peb tra, kousto pe gousto. Assicou a veze dalhmad war evez.

Gweled a ris buan ne blije ket ma fenn dezañ. Marteze abalamour d'am hask-branškell ? Ma ne zebren ket toud ma fladad, en em blante dirakon ken e vije eet toud ar fer pe ar "fayo" d'an traoñ.

Eun deiz, da goan, e teuas da weled e lodennen ma hartad gwin etre ma amezeien-taol. A-lamm e oe kerkent warnon.

- « Pep hini ahanoh e-neus droed da gaoud e gartad gwin ha netra muioh. »

Felled a reas din disklêria ma mennoz, gand kalz a zevenadurez.

- « Kaporal, ne evan jamez a win ha setu perag e lodennan etre ma hamaraded. »

- « N'eo ket eur "bleu" evel d'out a raio al lezenn amañ. Te 'fell dit marteze e vefe servijet champagn dit ? »

Gourhemenn a reas d'ar servijer karga din ma hard.

- « Ne zavi ket diouz taol a-raog beza evet da win. »

- « Kaporal, ne guitain ket marteze an daol-mañ, med ar gwin-ze n'hen evin ket, na gwin all ebed kennebeud zoken. Ha pas muioh a jampagn. »

Eneberez ar "bleu" bihan Ar Moal a lakaas er-mêz anezañ.

- « Gwelet am-eus ho paperiou deoh toud. Gwelet oh bet gand ar major pa'h oh bet rejimantet. Ha da baperiou-te ne zougont ket ne dleez ket eva gwin. »

- « Morse n'eo bet greet ar goulenn-ze ouzin. Med lavared a ran deoh : ne evin ket ho kwin. »

Klevet e vefe bet eur gelienenn o nijal e-barz ar zal-debri. Chom a reen sioul hag e savis diouz taol.

- O paouez beza rejimantet emañ, hag o veza eur "bleu" n'on ket aotreet d'ober an disterra goulenn. Ne vefen ket selaouet. Gouvezed a ran ivez e tle peb soudard senti ouz ar re a zo a-uz dezañ, ha ma na zent, e vez kastizet groñs. Med eur soudard e-neus koulskoude an droed da houlenn mond da gaoud ar major, ma soñj gantañ emañ e yehed e riskl. Kement-mañ evid lavared deoh n'evin ket a win ha kerkent ha warhoaz beure, e houlennan mond da weled ar medisin.

Daou zeiz 'raog, eun adjudant e-noa greet din eur gaozedenn diwar-benn deveriou ar soudard ha roet e-noa deom da gompren pegen grevuz e oa dinah senti.

Dihortoz, ar haporal Assicou ne houveze ken petra ober. Kaoud a reas gwell kuitaad ar zal-debri gand ar serjant Fauchoux. Nebeud goude, e oam toud er-mêz ha ma hartad gwin a jomas 'n e-unan, war an daol, leun-raz. Va heneiled-kambr a addisplege an degouez, o hortoz eun distag fall. Klask a reen o dizoania :

- « Bezit dizoursi. Ne vezin ket skoet en toull. Ar haporal a zo marteze muioh doaniet evidon gand an afer-ze. Ma houlenn an iz-ofiserien ganeoh, me ho ped da lavared rik ar pezh a zo bet c'hoarvezet. »

Toui a rejont toud lavared ar wirionez. Ha ma divenn ouz red. Evid ar boan o fedis d'ar genbrenez (Coopé) hag e kinnigen eur werennad vier da bep hini. Eun eurvez goude, toud ar gompagnunez he-doa klevet komz diouz an afer.

Soudarded an diou zal-debri all a glaske gouvezed piou oa ar paour-kêz loukez e-noa nahet senti evid eur hartadig gwin euz ar gwella winiennad ha blazet mad.

A-benn ar fin, toud an dud a houvezas e oa Soudard-ar-Hask-Brañskell.

- « Eur paour-kêz diod, a lavare lod euz ar zoudarded. Bez' e-neus da vihanna evid tri miz... gand eur penn evel e hini... »

- « N'eus forz, eme re all, stanket ën-eus e glapez da Assicou. Lavaret e-neus zoken en em lako war roll ar re glañv, warhoaz beure... hag e houlennan gand ar major skriva d'ar horonal... »

Eur serjant euz eur rummad all a deuas d'am havoud.

- « Te eo ar soudard Ar Moal ? Da glask a reer eur pennad 'zo. »

- « Ne welan ket perag. N'eo ket ma zro d'ober ar horveou fenez ha n'on ket e soñj da zistrei a-raog ar galv. »

- « Kared a rafem kaozeal ganit. Deus ganin ha me 'ya da blënnaad an traou etrezom. »

- « Setu ar pezh a evañ abaoe pevarzeg vloaz a zo, emezon-me, en eur ziskouez dezañ ma zasad chokola. Lavarit d'an hini ho tegas, ma kav dezañ am-eus nahet senti outañ, ra roio an abeg eneb din. An dra-ze a zell outañ. Gouvezed a ran eo mad eur "bleu" d'ober pont ha plankenn dindan an oll. Degemer a rin, ouz red,

toud an heskinadennou, med felled a ra din tenna gounid euz ma gwiriou ha dreist-oll hini divenn ma yhed... n'am-eus netra all da lavared deoh, serjant ; na bouezit ket muioh. »

Ma huitaad a reas, mezeg a-walh. E-pad an noz, em gwele, e prederien war an enkadenn. Sur e oan da gaoud rêzon. N'am-oa ket a zroug ouz an Assicou, med evid netra er bed, ne felle din kila. Enor a Vreizad !

An deiz war-lerh beure, kerkent ha ma tregernas ar hleron, eur haporal a dremenas er gambr d'ober ar goulenn kustum :

- « Ha bez' zo klañvourien amañ ? »

Goulenn a ris digantañ lakaad ma ano war al listenn.

- « Taol evez. Gouvezed a rez e koust ker tenna da yenna. »

- « Goulenn a ran mond d'ar vizit », a lavar ar barz.

- « En em gav 'ta en traoñ ar skalier evid mond d'ar hlañvdi. »

Pemp soudard klañv e oam. An adjudant Taburet a oa ouz or gortoz.

Taburet

An "adjudant-chef" Taburet a oa eur "Vojian", tad a familh, distroet d'ar gêr yah ha salv, e fin ar brezel 14-18. Gand ar grad a "adjudant-chef" e-noa tapet an derez uhella euz e vicher-zoudard ha hast e-noa bremañ da gemer e retred. Euz toud iz-ofiserien ar gompagnunez e oa an hini ar muia karet gand ar "vleued". Komz a ree ouzim evel ma 'nije greet eun tad a familh, ha lavared dim alieze e-noa an oad da veza tad dim. Tri bloaz ha daou-ugent e oa.

- « Ahanta, Ar Moal, bepred mennet da vond da gaoud ar Major ? »

- « Ya, ma adjudant. En em zoñjet am-eus kalz koulskoude e-pad an noz... med mennet 'or bepred. »

- « Penneg out evel eur wir Vreizad, te ! Añfin, marteze a-walh ema ar gwir ganit. Mond a ran ganit. »

Eun ugent bennag e oam o hortoz, e klañvdi ar bataillon. Teir zal a oa. Iñfirmierien, gwisket gante o flotantenn wenn, a gemere derez-gwrez ha stennadur gwazied-kas ar glañvourien, goude beza goulennet digante perag e oant deut da gaoud ar medisin. Taburet am hemeras a-gostez, e-barz an trepas :

- « Me 'garfe e chomfe kement-mañ etrezom. Galled a rez hen prometi din ? »

- « Rei a ran deoh ma ger. N'on ket heb gouvezed perag eh oh deut ganin. Ma fell din gweled ar Major, n'eo ket evid ober noaz d'ar haporal Assicou. Ne houlennan nemed eun dra : ma laosko ar peoh ganin e-barz ar zal-debri, ha ma ne gemero ken ar "vleued" evid chas pe sklavourien. Setu aze ar pezh a blijfe din ho kweled rei dezañ da intent. »

- « Asur e hellez beza e rin dezañ ma hentel. Hag ar vizit-se, derhel a rez dezi c'hoaz ? »

- « Feiz a Vreizad, derhel a ran dezi bepred. Felled a ra din kaoud eur skrid digand ar major evid va diskarga da eva gwin. »

Nebeudig goude, e oam dirag ar major. Estonet e oam eun tamm oh en em gavoud dirag eun den gwisket evel eun nann-zoudard. Muioh souezet e oe c'hoaz an "toubib" pa zisklêrias dezañ an tad Taburet ar pez am degase.

- « Ma feiz, an dro genta eo din da weled eur soudard a houlenn diganin beza aotreet da dremen heb eva gwin. »

Selled a reas em "leorig-soudard", a ginnige dezañ eun iñfirmier.

- « A ! C'hwi a zo eur Breizad ! ha du-ze ne vez evet nemed chistr. Gwaz-a-ze ne zervijer ket an evaj-se deoh ouz taol. »

- « Er gont-se, zoken, e houlennfen c'hoaz ganeoh rei din an heveleb aotre. Ne houzañvan ket ar boeson. »

- « Evid gwir, c'hwi a zo eur paotr iskiz, c'hwi ! »

Kuitaad a ris ar Major gand ma faper em godell. Diwar neuze, ar haporal Assicou a laoskas ar "vleued" e peoh.

War-raog...kit !

Krog e oan da heul bagad an "danvez-kaporaled". Da zeiz eur diouz ar beure e vezem war an dachenn, eur park braz-tre a hanter-kant devez-arad, e leh ma oa bet greet red-lehiou evid ar veloioù. Unan dioute a zervije da vicherourien-mengleuzioù-glaou Merlebach, e-kichenn Sant Avold.

Teir pe beder gwech ar zizun, e vezem war an dachenn-ze. Ha setu ma oe kroget gand ar baleadennoù ken brudet er rejimant. War hirraad eh eent diouz eur zizun d'eben. Sammet e vezem evel muled : or gourizou-tennoù a zlee beza karget a dammou plom. Ensellet e vezent, beb an amzer, gand adjudant or strollad. Ha ma veze dizentadenn, ar horveou a goueze puill. O veza a youl vad evid an truachouze, ne gargen ket aliez ma gouriz-tennoù. Ar re futeta en em zizamme euz eul lodenn euz o beh e-kerz an hent.

Toud ar strolladoù a gemere perz er memez bale hag an adjudanted en em lakee e penn o hini. Al letanant, war varh e penn ar zoudarded pa guitaem ar hazarn, ah ee hag a deue a-hed an hent. A-benn eun hanter eurvez, e tehe kuit evid dond endro da adkemer ar vestroniez, eur hard eur a-raog an distro d'ar hazarn.

Skuizuz-divi e oa ar baleadennoù-ze. Bloñset e veze on treid gand or botoiou-ler-kaled ha pounner. Heuliet e vezem gand eun ambulañs. Med a-raog beza aotreet da zevel enni, e veze red da genta beza kouezet skuiz-marzo war an hent.

An tenner-kleizard adarre

Ar bataillon e-noa eul leurenn-dennata en eur penn euz an dachenn-hourdonerez. Daouzeg tenner e oam e-barz ar gompagnunez dindan kred eur serjant galvet eveldom d'ober e goñje ha daou gaporal. Evid an dennadeg kenta, an tad Taburet a gavas mad dond ganim. Mond ha dond a ree war al leurenn... hag... o hortoz bepred e retred.

Ar serjant a ziskouezas din, penn-da-benn, penaoz gouvezed diouz ar fuzul Lebel, an doare d'he harga da denna war ar bluenn... En em astenn a reas goude-ze war an douar, prest da denna ; rei a reas dim toud ar helennaduriou kustum, o tisplega eur wech c'hoaz an tu da gemer, ar feson da zerhel ar fuzul. Tenna a reas tri daol. Tri zoudard euz or bagad en em astennas d'o zro hag a dennas tri boled pep hini. Siwaz, hini ebed aneze ne dizas ar pal. Evuruzamant, e oa kalz lehiou er goudor war an dachenn ! Ken fall e oe an eil êsa.

Hegaset, ar serjant a reas deze sevel hag a lakaas en o flas tri "bleu" all. D'an dennadeg kenta, ar bolejou ah eas d'en em goll e mêziou Sant Avold. Memez tra, d'an eil êsa ! D'an trede, tenner ar hreiz a lakaas eur boled er pal. D'ar pevarved, e lakaas diou. Ar hampion, a-raog beza zoudard, e-noa bet an dro da denna gand eur garabinenn e-barz ar pardonioù.

Hag e teuas ma zro. Rei a reen eun taol-lagad war an tenn-leh... An tad Taburet a oa bepred dre aze. Kement-se am dizammas. Brouezet e oa ar serjant hag ar gaporaled n'o-doa morse gwelet, diouz kleved, eun tenner o c'hwita ar pal, eiz gwech da heul. Eur haporal a bleas ganin. Ar serjant a vutune e zigaretenn agostez, evid klask en em divroueza. Selaou a reen displegaduriou "penn" an dennadeg. En em astenn a ris hag e lakis ma fuzul stok ouz ma skoaz kleiz. E oan o vond da denna pa yudas ar haporal warnon, rust ha rog :

- « Setu tost d'eun eurvez ma ver o rei deoh displegaduriou. P'eh out bouzar, pe rez goap ouzim ? Gwasoh 'h out c'hoaz evid ar paour-kêz dioded-se, emezañ, o tiskouez ar vleued all... Ne houvezez ket zoken penaoz e vez dalhet eur fuzul... Evid gwir, hirie avad eo ar gwella. »

Sevel a ris goustadig ha pleñ :

- « Ma digarezit, Kaporal. Dehouiad eh on e pep tra, med klezard evid tenna. »

- « Petra ? petra ? a grias hemañ a-bouez-penn. Ma'h eo evid ober goap ouzim, emaut o vond da zeski piou 'h on-me. »

- « Chomit sioul. Adlavared a ran deoh eh on dehouiad, med klezard da denna, ha pa ve evid chaseal, pe evid tenna gand ar garabinenn. »

- « Amañ, n'emaon ket o tenna gand ar garabinenn ha nebeutoh c'hoaz o chaseal. En em astenn aze hag en em lak en tu da denna. Kemer da fuzul Lebel ouz da skoaz dehou ha reiz mad. Eun urz eo ! »

Senti a ris.

- « Tenn 'ta ! » a youhas ar haporal.

Tenna a ris pevar boled, heb kemer ar boan da reiz. Goulenn a ris neuze, lentig toud :

- « Ha galled a ran êsa pevar boled all ? »

- « Sav 'n ez sav ! Ne 'teus ket zoken bizet ar pal. Hag evid kregi ganti, e lakaan dit pevar devez kastiz. »

Sevel a reen ken habask ha biskoaz. Ha ma daouarn e korn-boud, e halven :

- « Adjudant Taburet, ma plij ! »

Tostaad a reas neuze. Fuha a ree ar haporal. Ar serjant hag ar gaporaled all a grafigne o groñch.

- « C'hwi eo ho-peus ma galvet, Ar Moal ? Petra a hoari ganeoh c'hoaz ? »

Displega a ris dezañ ar pezh a oa c'hoarvezet.

- « Mond a rit eun tammig re brim », a lavaras neuze d'an iz-ofiserien.

Ha din, en eur vousec'hoarzin :

- « Perag 'ta n'ho-peus ket lavaret deze ? »

- « An dra-ze a zo sklêr... abalamour, amañ, n'on-eus nemed eun aotre, an hini da zerri or genou. »

- « An dehouiaded, kleizarded da denna, a zo ral a-walh. Setu ma karfen en em renta kont euz hoh ampartiz. Roit dezañ c'hweh boled, » a hourhemennas d'ar serjant.

En em astenn a ris a-nevez evid tenna hag e lakis ar c'hweh boled e traoñ ar pal, war an tu dehou.

- « Ezomm 'n-eus ma fuzul da veza adgwelet gand eun armurier. Re izel e sko ha n'eo ket êz reiza he zenn. Kared a rafen e vefe chañchet pal. »

Goulenn a ris c'hweh boled all... hag o lakeen e-kreiz ar pal.

- « Mad ! Kredi a ran eo inutul derhel ar hastiz... », a lavaras an tad Taburet o taol eur zell garo ouz an daou iz-ofiser.

Kelhiou en dour

Eur merhervez, e penn-kenta miz gouere 1927, e-kreiz merenn, kaporal-sekretour ar gompagnunez a deuas d'ar zal-debri. Kerkent ha ma oa antreet e-barz, ar serjant karget da evêsaad ouzim a reas dim tevel. Ar haporal a houlennas :

- « Piou a houvez neuial, amañ ? »

Den ne zavas e zorn. Aspedi a reas :

- « Piou a houvez neuial, amañ ? N'eus ket ano euz korveou med euz neuerez. »

Petra an diaoul a vroudas ahanon ? Eur hevrin eo c'hoaz hirie evidon. Sevel a ris :

- « Me, ma haporal. »

- « A ! Setu unan, da vihanha. Ha bez' a zo reou all ? » Den ne respontas.

- « Hoh ano hag ho niverenn-enrolla. »

- « Emgav : disadorn d'ar beure dirag ar gompagnunez. » Hag eñ kuit !

Va hamaraded a adkrogas da zebri. Klask a reen ober kemend-all, med netra ne ziskenne ken. Distroet d'am hambr, en em astennen war ma gwele da brederia war an enkadenn. Va heneiled a vizer am goulennate, gand c'hoant gouvezed.

- « Te a zo eta unan en or strollad o houvezed neuial ? Penaoz 'teus desket ? Ha diêz eo kement-se ? »

- « Va zud a zo o chom e-kichenn eun aber e-leh ma'h een da neuial gwech ha gwech all. »

Ha setu toud ar pezh a zisklêrien deze.

D'abardaez-noz, e klevis e oa daou zoudard all euz ar gompagnunez hag a zlee dond ivez da neuial.

Eun deiz e oan bet e tro da gaozeal gand tri zoudard all - daou aneze euz ar genta kompagnunez hag an trived euz ar gompagnunez "a-vêz-reñk" - hag unan aneze e-noa lavaret din eh ee da neuial, eur wech an amzer, en eul lenn damdost d'ar hazarn.

Mond a reen 'ta d'ar genbrenezer e spi da en em gavoud gand unan euz an tri neuier-ze. Dre eurvad, e kavis Bellinger, eur Vojian, sportour brudet ha... neuier dispar.

- « A ! Dond a rez da gemer da jokola ? »

- « Ya ! ha kinnig a ran unan dit ivez, ma karez. Nemed gwell e ve ganit eur banne bier vad ? »

- « Feiz vad ! n'eo ket da nah. »

Ha ni da vond en or hoazez ouz eun daol vihan. Ha kerkent e tisplegis dezañ ar pez a oa war ma spered hag e ris meur a houlen war an êsaou. Anaoudeg e oa a beb tra ha rei a reas din da hovezed on-nije da gemer perz en eun neuiadenn a gant metrad frank adaleg eur splujader a zaou vetrad a uhelder, en eul lenn ha ne oa ket re zon.

Klask a reen displega dezañ em-oa roet ma ano evid an neuiadenn med... ne hovezen ket neuial ha n'em-oa greet morse an disterra splujadenn. Lavared a ris dezañ em-oa c'hoant da weled al lehiou en a-raog :

- « Netra êzetoh ! warhoaz da noz, goude koan, en em gav 'ta dirag dor ar genbrenezer hag eh aim beteg al lenn. Eun hanter-eur vale ahann. »

Sklêrraad a ree an traou em fenn hag e promet en eur banne bier da V/Bellinger 'vid an distro. An deiz war-lerh, hervez on diviz, eh eem war al leh. Bihan e oa al lenn hag an neuiadenn a zlee beza greet e-barz he lodenn a ree eur pevar horn. Merket e oa ar pennad da dreuza gand seiz pe eiz post simant gand eur jadenn o vond diouz an eil penn d'egile. Diouz kwreh ar spleujader a oa er zav-heol, e klasken muzulia donder al lenn. Ar Vojian a zivinas ma enkrez :

- « Aon 'teus da jom er foñs ? Na gemerez ket aon. Spluja a rin a-raog dit ha kerkent ha ma vin distroet war horre, en em laoskin da goueza en dour. Dreist-oll, na glaskez ket spluja ; kap a-walh e vijes da en em hloaza. Kerkent ha ma vi er foñs, me az tapo. Ma hellez neuial eun ugent metrad bennag, emout mad. Eun tammig pelloh, n'eus nemed eur metrad tregont a zour, a-veh ! Mond a ri war-raog war droad, en eur astenn da zivreh... ha setu c'hoariet an dro ! A-hend-all, rei a rin da hovezed d'am faotr euz ar genta kompagnunez hag evel-se e vezim daou o taol pled ouzit. Eur Vojian eo eñ ivez. Feiz a Vojian ! Feiz a Vreizad ! Na lavar grik da zen ebed a gement-mañ. Rekiz eo evidon ha ro din da her. »

Toui a ris eta gand kement muioh a blijadur ma n'am-oa c'hoant ebed ma-unan d'ober an disterra vruderez war gement-se.

- « Eur vrud vad spontuz e-teus abaoe afer ar hartad gwin ha hini al leurenn-dennata. Arabad e vefe bremañ d'an afer-mañ dond da freuza toud ar stal. »

Kement a fiziañs am-oa er Vojian ken eh erruen da zeg eur, ar zadornvez war-lerh, fresk ha brao, dirag ar gompagnunez. Eur pemzeg bennag e tleem beza. War

bord al lenn, pep hini a roas e ano hag e niverenn-enrolla d'ar serjant a oa en e goazez ouz eun daol vihan e-kichenn ar zavenn-spluja.

Sevel a ris warni pa blijas ganin. Eur haporal a oa sañset da heul an traou. Eun iñfirmier en em zalhe e-kichenn ar serjant. Eun adjudant karget da gas an abadenn en-dro ha da daol pled d'an traoñ, a valee war riblou al lenn en eur vutunad sigaretenn goude sigaretenn. Toud ar zoudarded, en noaz e-giz on tad kenta Adam, a grogas da spluja. Dond a reas tro ar Vojianed a bedas ahanon d'o heul. Bellinger, a vouez izel, a roas din ar huzulioù diweza hag a splujas. Dond a reas war-horre, pevar pe bemp metrad pelloh. Lammad a ris kerkent hag e chomen dindan an dour.

Kaer am-oa difreta treid ha divreh, e chomen e foñs al lenn. Krog e oan zoken da lonka dour pa zeuas an eil Vojian hag e-noa splujet em goude d'am zavel dre ma skoaziou ha d'am rei da V/Bellinger. An eil goude egile e reent din mond war-raog war eun deg metrad bennag.

- « Neui eun tammig bremañ, » a lavaras din Bellinger.

Adkavoud a ris ma alan. En em zifreta a reen e-barz an dour, med Bellinger am gortoze.

- « Eun tammig krogad c'hoaz. A benn pemp pe hweh metr e tleez kaoud zont. » Goude eur hrogad all c'hoaz, e oa al leh kaled dindan ma zreid. An dour a zeue din beteg ma groñj. Med savateet e oan.

- « Tenn da reor ganit bremañ... Gra an neuz da neuial, en eur gerzed... Ne welint netra. »

Va daou zavateer am huitaas, o tistrei beb an amzer evid gweled hag-eñ e reen hent. Gortoz a reent ahanon dirag al linenn-bal e leh ma verke ar serjant Faucheux anoioù ar genstriverien.

Bellinger a lavaras dioustu :

- « Ar Moal e-neus en em baket fall o spluja. Setu perag ma hamarad ha me on-eus kavet gwell taol pled outañ. »

Faucheux ne respontas ket. Rei a reas da bep hini e "Vreved-zoudard a neuiadenn frank war gant metrad", sinet en a-raog gand an ofiser karget da gas an traou en-dro.

Ar bermision-eost

Ar serjant a-vicher Brivet a lavaras din, eun devez, e helle mibien al labourerien-douar kaoud eur bermision dreist-reol e fin miz Gouere, derou miz an Eost, evid sikour o zud d'ober an eost. Med evidon-me ne oa ket ano, dre ma heulien ar "peloton". War ma goulenn, e skrivas kerkent eur sertifikad da houlenn ma diskarg war digarez ma oan "dihouest".

Evid kaoud an aotreadenn dreist-reol, e oa red kaoud eun testeni gand mêt or parrouz a warante e oam bugale eur menajer pe eun deveziataer a labore en eur menaj. Adaleg kreisteiz, goude merenn, e-pad an diskuiz, e skrivis da vêt Ar Vinihi evid goulenn digantañ ar paper-ze. Ha da fin miz Gouere, ti-kêr Ar Vinihi

her hasas din ; ha tri deiz goude, e kemeren an treñ e Sant Avold evid eur bermision-eost a bemzeg deiz.

Nebeud a zoudarded divorfil a hellas kaoud an aotre-ze.

Ar Vretoned a dapas en em voda e-barz ar memez vagon hag e hellis evel-se starda liez liamm a vignoniez. E gar Ar Roh, e-leh ma tiskennen war-dro seiz eur d'abardaez-noz, den ne oa o hortoz ahanon. Gouvezed a reen e oa boulhet an eost ha ne felle ket din diêsa den ebed euz ma famill.

War droad, a-hed linenn an hent-houarn, e tistroen da Zeveon. Pa'h erruen er gêr, Fañch ar Rolland a oa war al leur-dorna. Seblanted a reas din e oa skuiz. Goude beza bet saludet ganin, e lavaras :

- « Da bermision a deu mad-tre. Talvouduz-tre e vo da zikour dim. Fin e vo da droha prestig hag e raim mad ober or gounid euz an amzer vrao, ha diouzit-te ganim, evid dastum an eost ar buanna ma vo gallet. 'M-eus aon n'helli ket mond da vale gwall aliez. »

- « Dond a reas ganin d'an ti e leh ma oa ma mamm oh aoza koan. Frañsin ha Maria Guyomar a oa o horo ar zaout hag an deveziaerien a oa c'hoaz er park. Goude beza kaozeet eun tammig gand ma zud, eh is 'trezeg ar marchosi. Reñket mad e oa al lodenn miret din e-barz ar pres. Fotoiou ar sportidi pe get e diabarz an nor a oa bepred en o flas. Reñka a ris ma fakajou, tenna a ris ma dillad-soudard hag e lakis ma reou labour.

Goude beza greet kêzig d'am hi Fifi eh is da renta vizit d'am lapined. Gand plijadur eo e niveren diou zousenn ha daou neziad reou vihan. N'am-oa ket taolet pled d'am zad, 'dreñv din.

- « Loeizaig Durand ha me eo a ra war o zro, » a lavaras din. « Ne hellan ket, evid ar momed, ober al labouriou stard. Evel-se e hellan tremen eun tammig amzer vak. Greet am-eus gwerza meur a hini ha da vamm he-deus lakeet a-gostez arhant ar werz. Evel ne 'teus ket goulennet e vefe kaset gwenneien dit d'ar rejimant, en em glev gand Soaz evid an arhant-se. »

Da goan, eh adkaven gand eur wir blijadur toud tud Seveon : Fañch ar Rouz, an tort ; Fañch Kadiou, Mai Sevenneg euz Sant Renaod, an dreser paipluiou hag eun nevez-deut da Zeveon, Edouard Nikol, martolod a goñvers o chom e karter ar Gwindi e Minihi, en koñje evid tri miz ha gopret evid ober labour eur mevel eost.

Nikol a oa bet eun toullad bloaveziou e Seveon, a-raog mond da verdei d'ar hoñvers. Da beb permission e teue d'ober eur gwel ha da ginnig dim e zikour. Edouarz a oa eun oristal, laouen evel an heol ; med ivez eul labourer diouz ar henta. Adkaved a reen ivez Maria Lukaz, merh Chan-Vai Vaou, an hini a fere ar hoefou, ha Karolin Nouel.

Laouen e oa toud an dud, evel evid eur gouel, ha ma mamm a zegasas diou voutailad win euz he huziad, da fin koan. Konta a reen toud ma avanturiou-zoudard : istor ar hartad gwin, hini al leurren-dennata... Va zad a zelaoue, heb ger ebed. Ne gomzas nemed da fin ar pred :

- « Evel da anavezan, n'out ket greet evid ar vicher-ze. » Ha pep hini ah eas d'ar gêr, pe d'e wele.

An deiz war-lerh beure, da hweh eur, ma zad a zivunas, an didrousa ma helle, ma breur hag Edouarz Nikol. O hleved a ris oh ober war-dro ar hezeg hag e tiblouzen kerkent evid mond da rei deze eun taol zikour. Eun hanter eurvez goude, eun tamm gwalhi prim-ha-prim er puñs, e oan adkrog gand ma micher a labourer-douar.

Va zud a oe estonet d'am gweled war-zav, ken abred.

- « Beajet e-teus eul lodenn euz an noz a-raog heb serri da zaoulagad. Setu ne felle ket din da zivuna. »

- « Gouvezed a rit mad, e Seveon, ne jomer ket da ziveurei. »

Gouvezed a reen e rafe ar respont-se plijadur d'am zad. Chom a reas ma daoulagad warnañ. Kosaet kalz e-noa hag e ken berr amzer !

Eun eur diwezatoh, e heulien ar gwazed all d'ar park. Nebeud amzer a-raog merenn unneg eur, e wiskis ma dillad-soudard heb ankouaad al lienennou kov-garr, ar gravatenn hag ar boned polis. Pa oe toud an dud ouz taol, en em ziskouezen deze hag e saluden e-giz ar zoudarded :

- « Soudard a eil klas Ar Moal, niverenn-enrolla 1718, c'hwehved rejimant ha daou-ugent, kenta bataillon, eil kompagnunez... »

Karolin a lammas d'am briata.

Goude merenn e oe staget tri a gezeg ouz al lieurz¹⁰. Edouarz Nikol hag a zikoure Yann da droha an eost em leh, a ginnigas din adkemer al labour a reen er bloaveziou all. An deiz war-lerh, toud an eost a oa endrammet. Da fin ar zizun, an Dremeled a zeuas d'am gweled. Klevet o-doa e oan e permission. Ma fedi a rejont da vond d'am merenn gante 'benn ar zul war-lerh.

Ar zul-ze, e adkaven Emilig ha kalz a gamaraded en ostaleri An Deu. Ne lavaris ket kalz tra diwar-benn an arme. N'am-oa tamm c'hoant ebed da gomz euz rejimant, kompagnunez, hag all... hag eh een d'am merenn ti an Dremeled. Eur friko roue aozet en enor din gand ar vatez kaloneg am gortoze. Kaer meurbed e oa an amzer er miz Eost-se ha buan, e oem a-du da vond da neuial da drêzenn Trestel. Da vond, e oe diêz ar veaj. Ne oan ket bet savet war eur velo abaoe tri miz. Erruet war an drêzenn, eh eem 'trezeg or hornig kustum, e-kreiz ar rehell hag en em ziwiskem evid mond da neuial.

E-barz an dour, tostig dim, teir blah yaouank diwar-dro a gemere êr ar mor. Kabouillad a reen eun tammig, distro diouz an Dremeled, pa zeuas eur Rohad, eur farser-ganet, war-du ennon. Marvaillad a rejom e-pad pemp munutenn... Lavared a reas din :

- « Deus er-mêz an dour ha heul ahanon. Gweled a ri eun arvest dudiu. »

Souezet gantañ, e heulien e-touez ar reier. Aze, e kemeras dillad an teir blah yaouank.

- « Euz a Langoad eh int, emezañ. E leh em-eus koachet o dillad, e soñjo gante beza pell diouz ar zellou eferuz.

¹⁰ al lieurz : ar mekanik troha ar gwiniz hag a liamm ar mandos war eun dro.

Sevel a reas uhelloh e-touez ar reier hag en em zilas en eur fraill.

- « Amañ, e vezim e plasou gwella. Hemañ eo ma arvest-leh. Dond a ran beb an amzer da zaouri an arvest. Na lavarez ger ebed d'an Dremeled, anez, abred pe diwezad, e savo kudennou. »

An teir blah, doareet flour, a zeuas er-mêz an dour. Mond a rejont war-du ar herreg da glask o dillad. Pa ne vezent ket kustum da zond da drêzenn Trestel, e furchent e-touez ar reier. Añfin, e kouezent d'o haoud. Ne zeblantent ket beza souezet gand o diblas.

Soñjal a ree gante beza dienkrez aze. Tenna a rejont o zaeou hir hag o lakjont war ar reier. Hag evid ar wech kenta em buhez en em gaven dirag teir blah en noaz. C'hoari ha c'hoarzin a reent... Seha a reent o dremm, o bleo, o horv ha goude e kinnigjont o hrohenn gwenn da vannou an heol.

Er hontrol da L., ne blijte ket din an arvest. Gwelloh e vefe bet ganin o gweled en eun habit-gouel. Diwezatoh am-oe an dro da zañsal gand unan aneze e-barz eun eured. Flour e oa, gwisket deread meurbed, hag e kaven anezi kalz koantoh evid en noaz, e Trestel.

Goude beza debret eun tamm, e kuitaem trêzenn Trestel. Laosken a reen ma hamaraded evid distrei ma-unan da Zeveon. Prizet mad e oe ma distro abred. Goude beza greet korveou ar zul, e tistagis Fifi evid mond d'ober eun dro er berjezou. Karget e oa ar gwez-avalou ha stumm vad a oa gante. Distrei a ris neuze d'an ti. War ludu tomm an oaled, al lêz-kaouled a hortoze.

An deiz war-lerh beure, da lein, e seblantas din e oa chalet ma zad. Tostei a ree an devez dorna ha red e oa dezañ rei e labour da bep hini.

Felled a ree dezañ ivez, d'am zoñj, rei din eur plas mad abalamour ne oan ket boaz d'ober eul labour stard.

- « Ma karez, e ri ar charreou hag Edouarz a zo kreñv ha kustum a gargo ar hirri-eost. »

E drugarekaad a ris med nah a reen e ginnig.

- « Karga ar hirri eo al labour pounnerra. Toud an dud a houeze kement-se. Med ugent vloaz 'h on ha gouvezed a ran e hellan hen ober heb poan. »

Fañch a zelaouas heb lavared ger. Evid ar wech kenta, e welis eun daerenn e korn e lagad.

- « Greet 'vo 'vel 'gari. »

Diouz al lun-beure beteg ar zadorn da noz, e kargen war ar hirri-eost pevar devez-arad warn-ugent a winiz, kerh ha heiz.

E Seveon, ma zri devez diweza er gêr a dremenas prim. En em rei a reen d'eun toullad labouriou diouz ar beure ha d'abardaez eh een da weled kamaraded koz din.

Mond a ris ivez ti ma hoar Chan da Babu ha ti ma mamm-goz d'ar "Pevar Avel". D'an dro-ze hepken e lakis ma dillad-zoudard. Mamm-goz n'he-dije ket komprenet e teufe eur zoudard da weled anezi, gwisket evel eur peizant. Disterroh e vefe bet ivez ar gwerz-butun, anad deoh.

D'ar merher da noz, ma mammig a breparas ma bitaill evid ar veaj. Roet e oe din eun toullad gwerz-butun, hervez gourhemennou groñs an tad Ar Rolland. Ar veaj a zeblantas din hir-meurbed goude an deiziou ken plijuz tremenet e Breiz-Izel. An deiz war-lerh beure, e tiskennen e Sant Avold hag e tistroen d'ar hazarn. Hadkaved a reen ar gambr 34. Va hamaraded a oa oh ober eur bleustradenn-zoudard. Mond a reen d'ar bureo. Resevet e oen gand eur haporal-sekretour. Rei a ris ma fermision dezañ.

- « Bez' 'zo kelou nevez evidoh, Ar Moal. E houvezed a refet bremaig, er "galv". »

Er "galv", eiler ar serjant-major, goude meur a hourhemenn heb pouez diwar-benn an urziou, an emzalh, hag all, a lavaras :

- « Soudard Ar Moal, niverenn-enrolla 1718, lakeet oh er-mêz euz bagad "an danvez-kaporaled". N'oh ket diouz ar gefridi-ze. Adkemer a refet pleustradennnou ar gompagnunez. Ouspenn-ze, galvet oh, evel toud ar re o-deus bet o breved "kant metrad neuñv-frank gand splujadenn", da vond disadorn da Strasbourg d'ar genstrivadeg neuñverez ha splujadenn. Galled a refet, ma karit, mond da en em hourdona e-barz al lenn. »

D'ar gwener, eh een d'ar vizit. Displega a ris d'ar Major e oan brevet goude labouriou an eost ha n'en em gaven ket barreg da genstriva. Ma diskarga a reas evid pevar devez. Evid an eil gwech e oan saveteet euz ar veuzadenn.

Ar bouldrennerez

Goude ma fevar devez diskuiz, e oen kaset d'ober ar ged dirag porrastell ar hazarn. Pemp e oam, pemp zoudard euz ma hompagnunez. Pep hini a ree ar ged d'e dro ha beb tro a zlee padoud diou eurvez. Tremen a reem an eurveziou diskuiz en eur zal euz an ti gward leh ma tebrem ivez or prejou.

War-dro nav eur hanter eh erruas ar horonal Poirel, komandant ar rejimant. Taol a reas pled ouz ma hask ha souezet e oe moarvad. Goude ar geriou-gourhemenn kustum : "Sonn ! - Repoz" hag all... e teuas war-du ennon :

-« Sonnait ho kask. »

Klask a reen, en aner, ober dezañ chom sonn war ma fenn. Koucha a reas a-dreñv... war ma chouk. Ar Horonal a halvas an adjudant :

- « Plijet ganeoh pedi serjant-major ar gompagnunez da bleal gand an dra-ze. »

Ne houzeze ket, evel just, eh anaveze mad ar serjant-major ma istoriou-kask ha penn. Setu ma oe ma henta ha ma diweza tro-ged dirag porrastell ar hazarn. Eur zizunvez diwezatoh, e reen adarre ar ged, med ar wech-mañ, er bouldrennerez, hag e-pad an noz. Homañ a oa war-hed tri gilometrad bennag diouz ar hazarn, e-kreiz ar hoajou, en eur hloz a zaou-ugent pe kant arad, diwallet gand daou roued-orjal.

Ar voltennou ar muia sorhennuz a zave diwar-benn ar bouldrennerez vrudet-se, maget euz o gwella gand ar re "goz" a felle deze ober aon d'ar "vleued". Meur a wech, diouz kleved, mohataerien - Almanted evel just - o-doa klasket ober dezi

tarza. A-wechou, e-kreiz an noz, e weled skeudou o kantreal ; gedourien a oa bet zoken gloazet...

Ar vizit ar muia doujet er bouldrennerez a oa hini Titinn, eur hast koz, en eun doare a zoñjer, heuguz da weled hag a zeue da ginnig he madeleziou d'ar zoudarded, hag en noz kenkoulz hag en deiz.

Evid gervel an ti-ged, ne oa nemed poueza war bouton ar zonerez elektrik. Kement-se am dizoanie. Ar ged-noz a groge da eiz eur diouz an noz evid echui da eiz eur diouz ar beure.

Kuitaad a rejom 'ta ar gompagnunez, war-dro seiz eur, dindan urziou eur serjant hag eur haporal. Greet e oe ar cheñchamant gedourien heb kudenn ebed. Ar serjant a zinas ar haier goude beza skrivet warnañ : R.A.S. (Netra da rei da houzoud). Anvet e oen evid ar genta tro. Eur zoudard all a zlee ma heul. Roet e oe dim ar gourhemennou kustum.

-« Dreist-oll, ho fuzul a zle beza karget. Arabad he dilezel gand digarez ebed. »

Ar serjant a droas dim e gein. Warnom e koueze ar beh da daol evez ouz ar bouldrennerez. En em lakaad a ris dirag ar porrastell e-pad ma ree ma hamarad euz ar "H/Creusot-kreiz-kêr" e genta tro-noz, hervez an urziou on-oa resevet. D'an drede dro, e tennis ma hask evid lakaad en e blas ma boned daou-gorneg, kalz skañvoh. An traou ah eas mad e-pad eun hanter eurvez. Siwaz, eur gaouenn am dihunus hag a hopas. Eur gloud a respontas dezi.

Va hamarad euz ar "H/Creusotkreiz-kêr" a ziredas, pennfollet. Prest e oa da gas en-dro ar "galv d'an evez". Kregi a ris prim en e vreh.

- « Teus ket klevet ? Mohataerien almant a deu da enkelhia ar bouldrennerez. Klevet a rez o hopadennou evid en em adboda. »

- « Ro peoh din. Ar hizier-noz hag ar haouenned eo e-teus klevet. »

Va heneil a grene evel eun delienn. N'am huitaas ken nemed pa welas lamp elektrik ar haporal oh errued evid an adsav.

E-pad or peder eurvez diskuiz, ma hamarad a dapas dond dezañ e-unan. Da ziv eur hanter diouz ar beure, e oa red dim distrei d'ar bouldrennerez. Habaskoh e seblante ar paotr. Hopennou ar "zaboterien" almant ne reent ken aon dezañ. Klevet a ris eur vandenn lern o speunial. Paotr ar H/Creusot a bennfollas evid an eil gwech hag en em breparas da denna gand e fuzul.

- « Na glevet ket ar bleizi ? Dond a reont moarvad diouz koajou an Alamagn ha ma'h int marnaoniet, e teuint a-benn diouzim. En em lakom e stad d'o degemer. Gwelloh e rafem marteze mond da glask gwarez e-barz an ti-ged ? »

Hegaset, e respontis :

- « Kee... med kee 'ta d'en em repui e-barz an ti-ged. Riskla a rez tri mizvez en toull evid beza dilezet da bost. N'emaom ket e stepennou Rusia amañ. N'int nemed lern. »

- « A gav dit ? »

- « Sur on ! »

War ze an adsav ah erruas da beder eur. Kemer a ris eur hartad kafe oh errued en ti-ged hag en em astennen war ma gwele-kamp. Ar haporal on dihunus da eiz

eur nemed kard hag a ginnigas dim kafe, fourmaj ha bara, pezh a garem. Da eiz eur nemed pemp, ar strollad a zlee kemer or plas ah erruas hag e tizroem d'ar hazarn... ha pep hini d'e gambr.

O kuitaad an hini a gomande ar post, e rois dezañ da hovezed e oan prest d'ober eur ged-noz all - gedourien-noz ar boultrennerez o veza diskarget a beb labour, an deiz war-lerh o ged.

- « Komz a rin dezho ho kinnig, » a lavaras din hepken. « Petra a oa 'ta er boultrennerez vrudet-se ? » Goulenn a ris gand an tad Taburet. Lakaad a reas e viz-yod war e vuzelloù hag a respontas din :

- « Segred an arme ! »

Drezon ma-unan, e soñjen ne oa e-barz poultrennerez vrudet ar 46^{ved} rejimant soudarded war-droad nemed avel, dreist-oll. Hag e servije da amproui difrom ar baotred nevez galvet d'ober o hoñje.

Paotr ar horveou

E-pad ma hoñje, toud ma aket a oa an aon da veza dilabour. Felled a ree din, kousto pe gousto, kaoud eun dra bennag da ober, labour a spered pe labour-dorn. Ober a ris 'ta ma mennoz da studia ar hounidegezh-douar, dre lizer. Ne heulien ket ar studiou-ze gand kalz a entan, med dedennet e oan gand deski penaoz maga al loened hag en em welen mad a-walh, goude ma hoñje, o vond da baotr-saout e Normandi.

Er hazarn, e vezen dalhmad prest d'ober beb seurt korveou : skuba, nêtaad pe peillad ar patatez. Adkaved a reen aliez ar memez kamaraded ganin : Korveller, Bellinger... Kement-se ne vez ket gwelet mad ordinal gand ar zoudarded all; med klask a reen, gwelloc'h pe falloc'h, kaoud ma digarez ha displega talvoudegezh truachou a oa.

Ne gomzen ket evid netra rag nebeud goude, ma bolontez vad ha hini meur a gamarad all e oan deut a-benn da hounid, a oe priziet gand an diskarg euz toud baleadennoù ar gompagnunez.

Nebeud deziou goude, e oe goulennet diganin kemer perzh er skipaill karget da stumma an dennerien. Hen degemer a ris gand joa. An tad Taburet a zlee, sur a-walh, beza e kement-se evid eun draig bennag. Galled a ris evel-se en em renti kont diouz ar basianted a oa red kaoud.

Soudard ar Moal, niverenn 1718, brasa kampion ar bed.

An "adjutant-chef" Picard, lesanvet "Pik-Pik" ganin, ne oa ket moarvad eur spered kaer a zen. Tremenet e-noa ar paour-kêz meur a vloavezh en Norz-Afrika ha seblanted a ree din e oa eet en êzenn eul lodenn vraz euz galloudeziou e spered, dindan heol ar Sahara. Pik-Pik a oa leun e spered gantañ e-unan. War e veno, e oa bet sebezuz e red-vuhez soudard. Evitañ, kement paotr galvet d'ober e goñje ne oa nemed eun inosant.

Pik-Pik a zeske din "teorienn an armeou". Toud e genteliou a voulhe gand ar memez randonenn :

-« Ha me, adjudant-chef Picard, iz-ofiser-dreist, ha koulz lavared ofiser, ya, me eo an hini a lavar deoh. » Med ken teñval e oa ar sklêrijenn ken ne gomprenne den an disterra tra, zoken ar re a oa donezonet dreist. E faltazi a zouge 'nezañ a-wechou diouz al leh ma oam beteg trevadennou an Afrika.

Kemmeska a ree an disklêriaduriou, ar re zimpla euz urziou an arme gand toud an taoliou-kaer a zoñje gantañ beza greet en Afrika. Evel just, eo a-drugarez dezañ ma rene ar peoh en douar-braz-se !

Sotoh evid droug e oa Pik-Pik. D'ar muia, eur penn-skort. Ne gastize morse, zoken pa hoarze goap warnañ unan "galvet" bennag, a-wel da doud ar zoudarded, pa houlenne digantañ petra e oa d'ar just an taoliou-kaer greet gantañ en Afrika. Evidom, kenteliou Pik-Pik a oa eur wir fest, eun didu dihortoz el lehiou enoeüz-se. Lakeet a-gostez an taoliou-kaer faltaziet gand an adjudant-chef Picard, ne zeskem foultr netra.

Beb c'hweh miz, e veze galvet ar zoudarded e-pad o hoñje da striva kenetreze evid ar gourenelez. An arnodou : redadegou-tiz ha war bemp mil metrad, ha beb seurt kenstrivadegou all en em zibune war "park-egzersiz" kazarn Ardant-du-Pic. Ar genstriverien a veze aliez rediet war urz hag an arnodou a veze renet gand Picart, "iz-ofiser dreist ha koulz lavared ofiser".

An arvesterien, gand se niveruz a-walh, a oa toud soudarded. Ar hleron a zone ar galv ha Pik-Pik, skoazellet gand daou zerjant ha daou gaporal, ah embanne e oa digor c'hoariou sportel ar henta bataillon.

An arnodou evid diskonta ar re zisterra a voulhe gand ar redadegou a gant metrad plên. Ar wech kenta ma kemeris perz enne, e oam eun ugent bennag e diou rummad a zeg. Tizoud a ris an trede plas e-barz an eil rummad, hag evel-se kaoud an droed da gemer perz er redadeg diweza etre c'hweh reder.

D'an daou-hant metrad plên, e oan an eil euz ar rummad kenta ha setu-me mad a-nevez. D'ar pevar-hant e oan ar pemzegved. An deg kenta a oe dibabet. Ar pempved e oan.

Evid pez a zell ouz an arnodou all, ne oe dibab ebed rag ar genstriverien ne oant ket niveruz a-walh. Ar redadegou war harzou a oe ivez dilezet dre ma ne oa reder ebed. An dibab evid an arnodou pouez, morzol ha goaf-bann a droas ken krenn all ivez. "An traou a nij hag a anavezer", e-leh mond da zouara e-kichenn ar pal, a nije a beb tu e-touez an arvesterien.

D'al lun war-lerh, e oa gouel braz ar sportou, e kenta bataillon ar 46^{ved} rejimant. Da ziv eur goude merenn, ar hleron a zonas ar galv. Pik-Pik ah embannas dirag an oll e vefe anvet kampion an hini a deufe ar maout gantañ e peb arnod hag e hellfe en em veuli e peb leh hag e peb mare dre ma vefe skrivet an titl-se, e lizerennou teo, war e fichenn e bureo ar gompagnunez.

Ar c'hoariou olumpik a voulhas gand ar hant metrad. On-hweh en em reñkem war al linenn-loha. Pik-Pik, e amzer-vuzulier en e dorn, a lavaras :

- « Pa hourhemennin "prest", en em lakit prest-kloz da bartia. D'an taol-c'hwistell, lammit war-raog. » Ugent metrad a-raog ar pal, e oan an eil. Echui a reen, an trived.

Ken diêz e oa spered on adjudant gand ol loha ken eh ankouaas distigna e "grono".

- « N'eus forz ! Se ne cheñch netra er reñkadur. Med bezit zur, evid an daou-hant, gand ar "hrono" nevez-flamm-mañ, prenet 'vid ar beure, me a roio deoh amzer an hini e-no gounezet, war vete eun degvedenn a rann-vunutenn. »

Leun a estlamm, e parem or zellou war grono Pik-Pik, a-raog kemer plas war al linenn-loha, prest evid an daou-hant metrad plên. Lammad a reen da genta war al linenn-degouez, pa zavas an adjudant-chef Picard, iz-ofiser dreist ha koulz lavared ofiser, e zorn dehou hag ah embannas, o selled piz ouz e grono, en degvedenn rann-vunutenn dost :

- « Ugent rann-vunutenn hag eur bempvedenn. » Pik-Pik e-noa distardet e grono. Embannet e oe an taol-dreist dirag kant hanter-kant arvester. Toud ar zoudarded a stlakas o daouarn... d'an adjudant-chef, iz-ofiser dreist ha...

An eil, Gransard, e-noa eñ ivez bruzunet ar brasa taol dreist er bed. Med ne ree van ebed diouz se. An hini diweza zoken a oa "Kampion ar bed oll". Bellinger a zeuas davedon.

- « Bravo ! Bravo ! Greet 'teus ar brasa taol dreist er bed ha ne vo biken trehet... da vihanna e-pad an hanter-kant vloaz da zond ! »

Ar re genta da veza dizoudardet

Nebeud a zeziou goude, e oen dibabet evid mond d'ober, da V/Metz, eur staj pemzeg deiz a gelenner a hourenelez evid an arnodou redadeg war droad. Va zaol-dreist a oa, heb douetañs ebed, kaoz d'am anvidigez. Mond da Vetz gand toud kelennerien an "divizion" ne ree plijadur ebed din, a gement muioh ma risklen en em gavoud e kevezerez gand strivadegourien all ha n'o-doa ket marteze trehet brasa taol-dreist ar bed, med o-doa bet eur paotr gwellohig da zerhel an amzer-vuzulier.

Mond a ris memestra d'ar vizit. Ar major, bepred ar memez hini e sivil, a gammas e veg dirag ma ment... re vihan moarvad. Lakaad a reas e fri 'n em fichennou, ober a reas din diwiska, selled a reas piz ouz ma zreid, hag en em gontantas da skriva war ma faper-galv :

- "Dihouest, treid plad !"

Kuitaad a reen e vureo, divehiet a-walh. Bellinger nemetken ah eas da Vetz.

Eun nebeud deziou goude, e roas din ar haporal-sekretour da houved e oan dibabet evid c'hoari en unan euz daou laz-c'hoari mell-droad ar rejimant. Oh errued war an dachenn-hoari, e welis eur bagad c'hoarierien oh em hourdona hag en em renten kont buan ne oan ket barreg. Koulskoude, ar serjant karget da evesaad ouzim ah aspedas :

- « C'hoari a refed e-pad ar hrogad kenta evel araoger kleiz ha gwelet e vo goude. Bez' am-eus c'hoarierien dreist niver. »

Komañs a reas ar hrogad. Teir pe peder gwech e tapis skei e-barz ar volotenn a roen kerkent d'eur henc'hoarier. Med kabiten Sant-Jo n'oa ket e blas amañ. Kerkent hag echu ar hrogad kenta eh is da gaoud ar serjant. Gwelloh e oa, a gave din, lavared dioustu dezañ :

- « En soñj e oan da lakaad eun all en ho plas, emezañ. Med galled a refet chom en adstrollad, evid kemer plas eun all diouz red. Ma karit, e hellfeh dond d'ar gourdonerez, diou wech ar zizun. »

Pemp sizun e padas kement-se. Pa vanke eur c'hoarier bennag, e kemeren e blas. Pa vije al laz-c'hoari en e bez, ma drapo bihan em dorn, e reen barner a-hed linennou harz an dachenn. Med setu... daleet e oe ar gourdonerez. Ne houvezan ket c'hoaz hirie perag.

An deziou a dremene a-nevez, habask ; ha setu-ni e hanter miz Du 1927. Greet am-oa c'hweh miz soudard. Re ar bloaveziad 1926 a oa o vond da veza kaset d'ar gêr. Ar re-mañ a nije gand al levenez. Renti a rejont o dillad-soudard da vagazin o hompagnunez. An darnvuia o-doa gwisket eun habit kaer ; kalz o-doa prenet unan nevez evid an degouez. An distro d'ar vuhez nann-zoudard a dalveze eun dispign bennag.

An deiz-se, toud ar re a oa bet dizoudardet (lakeet a-gostez ar re a oa dalhet evid o dizentidigez) a oa 'ta o vond da guitaad ar hazarn. Bodet e oant toud dirag ar porrastell braz. Ha ni da zevel or fri evid gweled ar himiad braz. Mentet bihan evel ma oan, e teuen a-benn da en em zila er reñk kenta : just 'dreñv d'ar re a oa o vond kuit.

Marteze eo aze e kemeris koustiañs pegen dizeeun e oa stad an dud etreze. Ar re binvidig o-doa gwisket o dillad-lid : gwiskamant war-varr, mantilli nevez. Unan aneze e-noa zoken eur ganenn. Ar re a reñk-etre, ma o-doa a-wechou dillad nevez, stumm ha troherez an danvez a oa kalz izelloh, anad mad e oa. Ar re baourra a oa êzet da anavezad gand o dillad uzet muioh pe nebeutoh, aliez peñseliet, jamez feret.

Kimiad ar re "zizoudardet" a oe eur wir lid. Laz-seni ar bataillon peurglok en em reñkas dirag kael ar hazarn. Deg munutenn goude, ar horonal Poirel hag ar homandant Bertchi a zeuas da lavared kenavo d'ar re ah ee kuit. Al laz-seni a hoarias eun ton brogar. Bertchi a hourhemennas eur "zonn" diweza d'ar baotred ha Poirel a reas eur brezegenn war ar garantez dleet d'ar vro. Ar gward a zaludas gand ar fuzulioh hag ar baotred dizoudardet, dindan urziou ar habiten a-zervij, a dremenas porrastell kazarn Ardant-du-Pic.

Kleved a ris unan bennag o hrozmolad 'dreñv din :

- « Ma n'eo ket diod toud ar charre-ze! »

Mandore ha simbalennou

Eun deiz, soudard an urziou ma fedas da vond da vureo ar gompagnunez.

- « Merket eo war ho fichenn ho-peus c'hoariet war eur benveg-seni. »

- « Ya, c'hoariet am-eus bet eun tammig war ar glarinetenn pa oan er skolaj, med paouezet am-eus abaoe pemp bloaz. »

- « Mond a refet da weled al letanant karget euz al laz-seni, warhoaz da ziv eur. »

An deiz war-lerh, eh een da gaoud al letanant. Hemañ ma fizias en eur serjant, hag hennez d'e dro ma lakaas e gourhemenn eur zoudard a genta klas a roas din eur glarinetenn ha nebeud a beziou-zonerez. Lentig, e roen da glevet, eur wech c'hoaz, ne oan ket donezonet kaer.

- « En em denn gand se... Pleal a rin ganit devez pe zevez. »

En em lakaad a ris 'ta da hoari war ma benveg, o klask heul ar peziou. Med c'hoari a reen aliesoh soniou ah anavezen mad, evel "Ar Bempoulezenn", "Kantikou Sant-Erwan", "Mir da goef, Maivon". Gortoz a ris e-pad eiz deiz. Amzer am-oa bet da vond da zevel ma fri e-barz toud saliou ar vuzisianed. Eiz deiz goude, e teuas ma helenner da weled ahanon. Goude beza greet din c'hoari eun nebeud notennou, e kammias e veg :

- « N'eo ket dreist ! N'eo ket skañv da skouarn. Gra euz da wella. Da weled a rin diwezatoh. »

An traou a badas beteg an 22 a viz Kerzu, p'am-oe ma fermision goueliou fin ar bloaz. Em distro, e derou miz Genver 1928, ouspenn ar glarinetenn, e oe roet din ar simbalennou, dre ma ne oa den ebed d'o hemer, d'am zoñj. Evel-se, gand ma daou venveg, en em gaven a-rez gand gwella sonerien al laz. Evid pezh a zell ouz al letanant karget da gas an traou en-dro, ne zegouezas morse din en em gavoud gantañ. Muih douget e oa moarvad da rei kenteliou prevez da vugale bourhizien kêr.

Kemer a ris koulskoude perzh e meur a zibunadeg e-barz ar hazarn hag e kêr, gand ma zimbalemmou. En em akuitaad a reen gand paotr ar vandore, eur meleneg braz a Barizian, douget tre da en em ober gand ar re all en eun doare iskiz... med eur muzisian euz ar gwella.

E-kerz an dibunadegou, daoust d'or mentou digempouez, e veze leun a stad ennom o kerzed e penn al laz-seni. Ar Parizian braz gand e vandore hag ar Breizad bihan, gand e ziu zimbalemm. D'ar mare mad, e roe din eun taol-lagad a-gostez, hag a dalveze da lavared :

- « Diwall ! En em lak' a-du... Dit eo bremañ ! Hag e skoem war or binviou... evel daou zen dall. »

Doyen a ya kuit

Eur zadornvez beure a viz c'hwevrer 1928, va amezeg-gwele, Doyen e ano, mab d'eur menajer bihan euz Blounerin, a glemmas diouz eur boan-benn spontuz. Rei a ris e ano evid mond d'ar vizit, an deiz war-lerh. Gouzañv a ree, mantruz ; hag e talhis da vond gantañ d'ar hlañvdi. Lavared a ris d'eun iñfirmier e kaven e stad grevuz, dre ma 'n-oa gouzañvet kalz e-pad an noz.

Ar medisin ne reas nemed lakaad 'nezañ en diskrog e-pad pevar devez ha rei dezañ eun nebeud kachedou. Doyen a zistroas d'ar gambr. An droug ah eas war wasaad. Va hamaraded ha me a lakaas serviedennou glebiet dezañ war e dal evid distana e boaniou. D'ar zul, e c'hoantaen lakaad ar re "hradet" war evez. Med eet e oant toud kuit, zoken an ofiser sizunieg.

Mond a reen goude kreisteiz d'ar post-polis da houlenn digand an adjudant a zervij telefoni d'ar medisin. Med e kasas ahanon d'an iñfirmier, eur serjant. Hemañ ivez a oa eet kuit. Displega a reen stad va hamarad d'e geneil, eur haporal, o lavared spiz dezañ ne dremenfe ket marteze Doyen an nozvez o tond. Selled a reas war ar haier bizitou an deiz 'raog ha goulenn a reas ganin hag-eñ e kemere mad ar hlañvour e gachedou.

- « N'eo ket evid hen ober, » a respontis dezañ. Aspedi a ris evid ober dezañ telefoni d'ar medisin o veza ma oa grevuz-tre stad va hamarad.

- « Ober a rin ar gomision d'ar serjant-iñfirmier kerkent ha ma vo distroet d'ar hazarn, emezañ. Med n'eus forz penaoz, red e vo gortoz warhoaz beure. »

Va hamaraded ha me ne hovezem ken petra ober. Tremen a reem toud an nozveziad ouz troad-gwele Doyen. Klask a reem e ziboania evel ma hellem. Med d'al lun ar beure, ar paour-kêz a rambree.

Gedal a reen al letanant Renard, en trepas. Dond a reas kerkent ganin d'ar gambr pevar ha tregont. Kompren a reas añfin stad ar hlañvour. Eun hanter eurvez goude, Doyen a oe douget, dihortoz, gand eur hlañvdi-red d'an ospital da V/Metz. Mervel a reas gand eur "meniñjit" e-pad ar veaj.

Doyen a oa eur paotr kaloneg, prest ordinal d'ober toud ar horveou. Ne gomze ket kalz. Seblanted a ree dalhmad beza leun a zoursi. A-wechou, pa houlennateen anezañ, e komze din diouz e famill ha ne baoueze ket da adlavared e oa Breiz kalz re bell evitañ. Doyen e-noa moarvad kleñved ar gêr.

Ha maro eo a gement-se, abalamour eo bet laosket da vervel gand pennou-braz ar rejimant.

Digor e oa ar vordell

Kamaraded dibabet e-barz ar gompagnunez : adjudant-chef Taburet, eur serjant, eur haporal ha c'hweh zoudard galvet euz or strollad en o zouez, Gransard evel penn-kambr ha me evel kenvroad dindan urziou eul letanant euz "uhel-strollad-ofiserien" a oe kaset da V/Metz da gemer perz en eun ofis lidet e koun an Doyen. Pemp soudard hag eul letanant euz eur rejimant all a oa aze ivez. Fromuz meurbed e oe al lid.

An arme a reas an enoriou da Z/Doyen, mab d'e vamm-vro. Ar paour-kêz n'e-noa ken siwaz mann ebed d'ober gand se. Da fin al lid, eur harr euz an arme a hortoze e-kichenn ar japel. Doyen a zistroas d'e vro. Maro ! E interamant a oe lidet e-kreiz ar brasa from, nebeud a zeziou goude, e Plounerin.

Eun eurvez gortoz on-oa a-raog adkemer an treñ evid Sant-Avold. Pep hini ah eas diouz e du. Or haporal, eur Parizian nevez-zavet d'an derez-se, ha Gransard,

am fedas gand eur hamarad all da vond d'ober eun dro gante e ruiou Metz. O veza n'on-oa jamez lakeet on treid e-barz ar gêr-ze, ha gand an aon on-oa da en em goll, e heuillem aneze. Gransard hag ar haporal ah eas eeun war-zu eun ti ar stumm diavêz anezañ am zouezas. A-raog mond e-barz, ar haporal parizian a houlennas diganin presta pemp skoed dezañ. Gouvezed a ree moarvad ne oa ket plad va yalhig.

- « Felled a ra dezañ kinnig eun draig-koun d'e garantez, » a zoñjen.

Presta a ris an arhant dezañ, evuruz da renti servij d'eur haporal, parizian war ar marhad. Hag eh eem en ti. A-draoñ an ti iskiz-se e oa teir zal sklêrijennet gand boulou-tredan a beb seurt liou. War leur an ti, e oa bankou-divan a zaou blas ha kadoriou-breh izel. Ne gomprenen ket c'hoaz e pe leh e oan kouezet.

Nebeud goude, teir blah, noaz-beo, ah erruas. Kement e oa livet o begou ken ne oa ket posubl rei eun oad bennag deze. Unan a oa braz ha dem-zu ; eben, meleneg ha bihannoh hag an drede bourounig a-walh. An hini vraz a azezas war daoulin ar haporal hag ar velenegez war re Gransard. An drede a deuas da en em lakaad 'n he hoazez war vreh kador va hamarad. Floura a reas e jodou. Lammad a reas neuze agostez, o laosken ganti ar gador-vreh. Ne glaskas ket muioh. Ober a reas din eur mousc'hoarz ledan en eur dremen dirazom hag eh eas añfin kuit 'trezeg eur zal all.

Neuze e welis an daou Barizian o vond d'al laez gand o diou verhodenn strobinnelluz. Gwall skweriet ha kounnaret e oan gand o doareou, ha dreist-oll gand hini Gransard hag a oa o paouez kemer perz, a-boan eun eurvez a-raog, en interamant eur hamarad-kambr. Kemer a reen eun doare-ober ken digas evel eun dismegañs vraz ouz memor Doyen, va henvroad.

Kuitaad a ris kerkent an ti-kloz. Va hamarad a oa ken heuget all gand foutre-kaer paotred ar gêrbenn. Beteg-henn em-oa bet en em hreet mad a-walh gand ar Barizianed med adaleg an deiz-se e pellaen dioute. O gortoz a ris war riblenn ar strêd evid distrei da har Metz.

- « Ha neuze, Ar Moal ? N'eo ket fellet dit profita diouz an dro az-poa evid tenna 'n taol ? »

- « Me 'gav din ne oa ket ar momed... Galled ho-pije memestra gortoz eun dro all ! »

Ar gaoz a jomas aze. Heb eur ger e tistroem d'ar gar. Pas eur ger ouspenn e-barz an treñ e-pad ar veaj. Eun izlonk a zispartie Pariz diouz Bro-Dreger, en abardaez-ze.

Bleuniou Priel

Degouezoud a reas din en em gavoud, e porz ar hazarn, gand eur Marreg euz Tredarzeg. Hemañ a oa e-barz ar genta gompagnunez. Hen anavezed a reen a-raog mond d'ar rejimant evid e veza gwelet e-barz goueliou Bro-Dreger hag e Bleuniou Priel, er bloaz a-raog.

- Soñj 'teus, emezañ, arlene e oam on-daou e gouel ar Bleuniou e Priel hag on-oa kaozeet e-pad eur momed gand Erwan, Per, Yann... Er bloaz-mañ adarre, e vin er

gouel, med te ne vi ket. Keuz am-eus evidout. Bet on-nije bet marteze an dro da gaozeal gand ar memez mignoned.

Feuket em beo e respontis :

- « Me ivez, a vo e Priel, er bloaz-mañ. »

Ar Marreg a darzas da hoarzin.

- « Estonet e vijen. Bez' e oas dija e permission d'an deiz kenta a'r bloaz. E glevet am-eus gand unan euz da gamaraded kambr. »

- « Gwir eo ! med, a-nevez, e vin e permission 'vid sul ar Bleuniou. »

- « Ma welan ahanout e Priel, e pedan ahanout da zond da dapoud eur bannah hag e kinnigin unan ivez da doud ar gamaraded a vo ganit. Med, er hontrol, te a baeo eun droiad d'an oll e-barz ar genbrenered. Mad eo 'vel-se ? »

Hag e oe tonket da vad heb an disterra arguz. Troet e oa va mennoz war an tuze hag eur zoñj a oa deut din. Red e oa din, a forz pe briz, cheñch êr. Hini ar 46^{ved} rejimant soudarded-war-droad a zeue da veza mouguz. Ne hellen ket dizeria pelloh evel-se. Seveon am galve.

D'ar zadorn d'ar beure, eh is d'ar vizit. Eun iñfirmier a gemeras va derez-gwrez ha va stennadur-gwad. Toud an traou a oa euz ar gwella.

- « Leun a dud a zo amañ, 'vid ar beure, emezañ. N'on-no jamez fin a-raog merenn. Me 'zo o vond da rei dit eur skrid evid da ziskarga a zervij e-pad pevar devez hag e rin e zina gand ar medisin. »

- « Gortoz a rin keit ha ma vo red, med gweled a rin ar major. »

- « Ne roio ket muioh dit. »

- « Greet 'teus ar memez tra da Z/Doyen... hag euz an dra-ze eh eo... maro... »

An iñfirmier a gollas e liou.

- « Penaoz e houvezez an dra-ze? »

- « Me eo an hini a zo eet gantañ d'ar vizit ha ne fell ket din mond gantañ d'ar bez. Felled a ra din beza kaset dioustu d'an ospital. »

Pemp munutenn goude, bleniet gand an iñfirmier, eh antreen e bureo ar medisin alsazian : an doktor Schaeffer.

- « Ar soudard-mañ 'n-eus ket terzienn. E stennadur a zo reiz med felled a ra dezañ mond d'an ospital. N'eo ket livet fall med poan-benn e-neus, emezañ. »

Heb sevel e benn, ar major va goulennatas :

- « Petra 'hoari dit ? »

- « Abaoe eun nebeud nozveziou, ne gouskan kazi tamm ebed. N'am-eus ket naon hag aliez am-bez poan-benn. »

Selled a reas ouzin. Seblanted a reas am anavezad.

- « A ! med c'hwi eo Ar Moal ha ne ev ket gwin. Mad ! ober a ran kas ahanoh d'an ospital hag ho kweled a rin emberr d'abardaez. »

Eun eurvez goude, e oan evid deg devez en ospital an armeou e Sant-Avold. D'abardaez noz, an doktor Schaeffer, heuliet gand eun iñfirmier, a deuas da weled ahanon. Selled a reas ouz ar fichenn staget ouz troad va gwele :

- « Reiz eo peb tra : derez-gwrez, stennadur, a lavaras an iñfirmier. Med n'e-neus debret tamm ebed da greisteiz ha nahet e-neus eva e win. »

- « Ar hontrol e-nije estonet ahanon, » a vousc'hoarzas ar medisin.

Pell-pell am zelaouas. Ma goulennata a reas ha kemenn a reas louzou din :

- « Grit taol evez dezañ ha, dreist-oll, ma klemm diouz e benn, hen roit din da hovezed dioustu. A beb mod, e teuin da weled 'nezañ bemdez beteg e bare. »

O kuitaad ar gambr, e lavaras din, a-gostez :

- « Ma hetit eun dra bennag ispisial, na jomit ket en arvar evid hen goulenn diganin, Ar Moal. »

- « Me 'garfe kaoud eun dra bennag da lenn. »

Eun tammig goude, e tegased din teir helaouenn-gelh nevez embannet ha daou leor a zanevellou, dre ar munut, taoliou kaer ofiserien hall e-pad ar brezel ollvedel.

An deziou a dremene med an naon ne zeue ket din. Ne oan ket gwall dechet da lenn ha ne reen nemed trei ha distrei 'n em gwele e-pad an noz. Ar medisin a deue koulskoude d'am gweled, bemdez d'abardaez. Va stad a zeblante e lezel en arvar. Enkrezet, e tivizas kas ahanon d'an ospital da V/Metz, d'ar c'hwehved devez. Med kement-mañ a oe eun diskrog. A briz ebed, ne felle din mond da en em goll e Metz. D'ar seizved devez, ar c'hoant-debri a zeuas en-dro. Adkavoud a ris va hoant lenn ha tremen a ris eun nozvez vad.

D'abardaez-noz e houlennen digand an doktor Schaeffer berraad va amzer-ospital, evid distrei d'ar gompagnunez.

Kuitaet ganin an ospital, e kantreen eur pennad e ruiou Sant-Avold... a-raog mond etrezeg ar ru e-leh ma oa an doktor Schaeffer o chom. Son a rin. Eur vatez a zeuas da zigori an nor.

- « Me a garfe gweled an doktor. »

- « Ne resev ket ar zoudarded, a respontas-hi, seh he ger. Warhoaz e hellfet hen gweled er hazarn. »

- « Re ziwezad e vo warhoaz. Red eo din e weled fenez. Klañv on. »

Ar vatez am fedas da hortoz eur vunutenn hag eh eas kuit. Gwreg ar medisin a zeuas da lavared din e helle he fried va degemer dioustu. En e vureo, eh een eeun d'ar pal :

- « Bremaig, em-eus bet eur falladenn er ru, o kuitaad an ospital, hag em-eus soñjet dond d'ho kweled. Amezeg gwele Doyen e oan ; ar paour-kêz Breizad he-deus an arme laosket da vervel... »

- « Ya, gouvezed a ran, » a respontas ar medisin, gand eun êr grevuz.

- « Me eo an hini e-neus e zikouret da vond d'ar hlañvdi, an hini e-neus klasket ober toud an difreiou evid ma hellfeh hen gweled. Med ken bouzar hag eur hleuz e oa toud an dud. Den ebed n'eo fellet dezañ selaou eur soudard eil-klas. Soñjal a ran e-noa Doyen ar pezh a anver "kleñved ar gêr". Komz a ree din diouz e vro heb ehan. Maro eo a gement-se ! N'am-eus ket adkavet va yehed abaoe ar mare-ze, doktor. Breizad eh on, eveltañ. »

- « Hag ho-peus kleñved ar vro ? »

- « Ne hovezan ket, doktor ; med bez' e oan bet war-dro Doyen e-pad daou zevez. Hen gwelet am-eus o houzañv hag o vervel. Gwelet am-eus ne oan ket evid

dond d'e zikour. E varo e-neus greet din eun taol ken fromuz ma santan an ezomm da jeñch êr ha da adweled va famill. »

- « Mar deo evel-se en em ziskouez kleñved ar gêr, c'hwi ah a da zistrei dioustu d'an ospital hag e teufet er-mêz warhoaz beure gand pemzeg devez evid peurvarea. Ha ma n'a ket gwelloh an traou ganeoh e Breiz, it da weled ho medisin-famill ha lavarit dezañ kas kelou din dioustu hag e sinin deoh eun astenn a bemzeg devez all. »

An doktor Schaeffer a roas din e gartenn ha niverenn e delefon ha d'am zro e roen dezañ va chomleh e Seveon. Lavared a reas ouspenn :

- « Me garfe e chomfe an afer “Doyen” etrezom. Me ivez am-eus bet kalz a boan goude e varo. Med kaoud a ra din n'on ket kablu. Ha koulskoude me eo medisin ar rejimant hag ar gaoz a red buan. Galled a rit rei ho ker din ne refet ken ano a gement-se ? »

- « Her prometi a ran deoh. »

- « Mersi ! Kerkent ha ma vefet distroet d'ar hazarn, deuit d'ar vizit. Felled a ra din hoh adgweled. »

- « Nehet on, doktor... Med n'am-eus ket an arhant red evid ar veaj. »

- « Na vezit ket chalet. Me a raio ar pez a zo red gand mestr an hent-houarn. N'ho-po nemed diskouez va hartenn vizit en dorikell ar gar hag e vo roet deoh ho pilled mond-ha-dond. »

Mond a ris en-dro d'an ospital, hag an deiz war-lerh beure, va billed em godell, e kemeren an treñ war-zu Landreger evid eun tammig diskuiz a bemzeg devez. Va zud a oa o vond da veza souezet braz.

Da zul ar Bleuniou, gand Emilig hag unan euz an D/Tremeled, e oan e Priel, o klask Ar Marreg. Poan e-noa o kredi. Fellet e vije bet dezañ kaoud eur sklêrijenn bennag med derhel a ris war va zeod.

- « Kollet 'teus da glaoustre, » a responten dezañ hepken.

- « Hag e paean dit an droiad ? »

- « Ya, med gortoz 'ta pemp munutenn. N'ema ket toud an dud aze. »

Gweled a reen, a-bell, daou pe dri baotr euz Langoad ah anavezen a-veh. Ober a ris sin deze. Tostaad a rejont :

- « Ar Marreg a bae eun droiad d'an oll, a lavaren. Ma ho-peus kamaraded hag a blijfe deze eva eur bannah... »

- « Mad... mad eo, evel-se, lavaras ar Marreg. Koll on... Med n'eo ket eun abeg da bedi toud an dud a zo e-barz ar pardon da drinka ! »

An toull

Tremen a reas prim va femzeg deiz hag an deziou diweza a viz meurz, eh een da har Ar Roh da dapoud an treñ da zistrei da Zant-Avold. E gar Gwengamp, o hortoz eun treñ all, e ris va mennoz da vond da weled va hoar da Babu. Kaer e oa an amzer ha tennet am-oa va mantell-zoudard. Eur ged-tro euz ar 48^{ved} rejimant a

oa er gar, dindan urziou eun adjudant. Hemañ am galvas hag e kemeras va ano, va ano-badez, va niverenn-enrolla, en abeg, emezañ, d'am "dalh-difurlu".

Deiz war-lerh va distro da Zant-Avold, an adjudant a lavaras din e oan kastizet evid va emzalh-direiz e ruiou Gwengamp, en Aodou-an-Hanternoz. D'abardaeznoz e tiskennen en ti-gward evid mond da gousked d'an toull. Ar serjant a lennas ar fichenn gand abeg va hastiz.

- « Med sod-nay eo an adjudant-se euz Gwengamp... Fellet e-neus moarvad d'ar horonal ober eur skwer... ha bet eo dizamant ! »

- « Red mad e oa d'unan bennag "trinka". Gwasa zo, me eo an hini a bae. Ar pez am chal, eo ma felle d'an doktor Schaeffer ma gweled, kousto pe gousto, kerkent va distro. »

- « Mad ! Mond a ri d'ar vizit, warhoaz. Bez' ez an d'êsa plênnaad an traou.

War-dro eiz eur hanter, an deiz war-lerh, Schaeffer ah erruas er hazarn. Ouz va gweled ouz toull dor an ti-gward, e chomas souezet :

- « Daou zeiz zo, eh on o hortoz ahanoh. Ar Moal, petra a rit amañ ? »

Displega a ris dezañ ar pez a oa c'hoarvezet ganin e gar Gwengamp, heb ankouaad lavared dezañ pegement va fermision goude kleñved he-doa greet vad din, kement a gorv hag a spered. Gand asant serjant ar ged ma hasas gantañ d'e vureo. Fuha a ree an doktor. Telefoni a reas dioustu d'al letamant Renard :

- « Ar zoudard Ar Moal euz ho kompagnunez a zo amañ ganin. N'oh ket heb gouvezed eh eo bet kaset d'an ospital hag am-eus roet dezañ pemzeg devez goude kleñved. Chom a ra dindan va diwall, hag adaleg hirie e ran dezañ kuitaad e brizon. Gouvezed a rit ar pez a zo bet c'hoarvezet gand e gamarad-kambr ? N'am-eus c'hoant ebed da adweled an dra-ze. Ar zoudard-mañ e-neus ezomm da veza heuliet. Red eo dezañ ouspenn kaoud eun dra bennag d'ober. Abaoe eur bloaz ema Ar Moal dindan hoh urziou, hag e tlefeh hen anavezad gwelloh evidon. Setu 'ta, klaskit kaoud dezañ eur post diouz e zoare. »

- « Kavet ha toud eo! Ne welan zoken den all hag a hellfe kemer ar garg a zoñjen kinnig dezañ, a-raog ma oa bet kaset d'an ospital. Pedit 'nezañ da zond d'am bureo, adaleg m'ho-po fin gantañ. Med gouvezed a rit, doktor, ar horonal an hini eo e-neus roet ar hastiz... »

- « Hen gouvezed a ran ha me gav din eh eo eet dreist ar muzul. Evidoh-c'hwi, e karfen adaleg ar hreisteiz-mañ e rofeh da houvezed d'an oll, er galv, penaoz e teu kastiz Ar Moal euz eur fazi, ano-heñvel, da skwer, pe a rejimant, pe a draou all evel-se. En em dennit ! Ha deuit ivez d'ober eun dro beteg du-mañ, fenez. Me garfe c'hoaz komz diouz an afer-ze ganeoh. »

Hag an doktor Schaeffer a houlennas sekretouriez ar horonal. Eul letanant a respontas :

- « Kemerit paperiou Ar Moal, niverenn-enrolla 1718, eil kompagnunez, a gemennas ar medisin, ha lavarit din toud ar hastizou abaoe ma'h eo bet rejimantet. »

Diou vunutenn goude, al letanant a respontas :

- « Ar soudard-se n'eo bet morse kastizet, med daou zeiz 'zo, ar horonal e-neus barnet 'nezañ da zeg devez prizon evid e “emzalh direiz” e ruiou Gwengamp, en Aodou-an-Hanternoz. »

- « Gwelloh e vefe deoh taol ar paper-ze er voest-lastez... Ar hastiz-se a zo dreist muzul hag o veza ma'h eo fall e yehed, Ar Moal ne hello ket gouzañv eun devez muioh en toull. Ouspenn, eh on o paouez rei da hovezed d'al letanant Renard, e tennen Ar Moal, er-mêz dioustu. »

- « Ha petra lavaro ar horonal ? »

- « Lavared ha soñjal a raio ar pez a garo. Ar horonal a zo karget da gomandi ar rejimant, ha me da ziwall yehed ar zoudarded. »

- « Marteze e hellfe beza torret a zoudard, war ho mennad. »

- « Ne fell ket din. E blas a zo er gompagnunez ha chom a raio dindan va diwall. Al letanant Renard, a-hend-all, e-neus ezomm dioutañ. Kas a ran deoh eur skrid-testeni a verkan reziz warnañ stad yehed Ar Moal. Goulenn a ran ivez ma tistoo d'ar hazarn dioustu hag e vo dalhet e-barz ar gompagnunez. N'eo ket red marteze e welfe ar horonal ar skrid-se ; evid ar momed, da vihanna. »

Ar major a gendalhas gand e aliou prisiuz.

- « Eun tamm paper a hell beza kollet êz e-touez toud ho paperiou... ha kement-se a zo heb riskl ebed evid divenn-ar-vro. »

Hag an doktor ken mad a bedas ahanon da return d'e weled a-benn eun deg devez. Distrei a ris d'ar gonpagnunez. Ne oan ket re dizaonaet pa skoen ouz dor ar zekretouriez. Al letanant Renard ma gortoze :

- « A ! Setu-c'hwi, Ar Moal... Mad ! Bezom siriuz. Bez' am-eus eur post da fizioud ennoh. Prestig eh erruo ar hlas 1928. Va gward-magaziner a zo o vond da veza dizoudardet. Red e vo 'ta eun all en e blas. Ho karg a vo a gement muioh pouezuz ma vefom karget euz bitailladur toud an adofiserien e kazarniou Sant-Avold. Red e vo pleal gand ar butun, ar hafe, ar sukr, ha toud al lodennou-boued o-deus droed. »

- « Ha gand ar gwin ivez, moarvad ? »

An diskrouger-anduill

Diskenn a ris kerkent d'ar vagazin. Seblanted a reas din e oa souezet ar gward o weled ahanon oh errued ken buan.

- « Aotreet out bet da guitaad da doull, evid eur pennadig ? »

- « Echu eo va hastiz. »

- « Ne heller ket terri eur hastiz evel-se, pe neuze avad eh out harpet abominabl ! »

- « Ar horonal e-neus, ken êz ha tra, kemeret va ano gand hini eur soudard euz eur rejimant all. »

- « A! mad ! Ahanta, amañ, al labour ne vanko ket dit. Ar “vleued” a zo o vond d'errued prestig hag ivez an “danvez-adofiserien” ha karget e vefom diouz o bevañs. »

Kuitaad a ris ar vagazin evid mond d'am hambr e-leh ma felle d'am hamaraded goulennata ahanon. Chom a reen mud o pedi aneze da hortoz eur ar galv.

Da greisteiz, an tad Taburet ah embannas ar helou mad :

- « Souezet oh moarvad o weled Ar Moal en ho touez. An deg devez kastiz tapet gantañ a zo frouez eur fazi. Ano Ar Moal a zo eun ano boutin e Breiz hag evel-se eo bet kemeret evid eur Moal all. En ano ar “strollad-gourhemenn” e kinnigan dezañ on digareziou. »

Eur wech c'hoaz e oe komzet euz Ar Moal, soudard e gask-brañskell, dre oll er hazarn.

Goude eur bloavez e servij ar Frañs, e krogen bremañ da zeski va micher a vagaziner : derhel reiz ha kempenn lod kaierou, plega ha reñka an dillad-soudard, o dibab hervez o derez-teuhadur... Ar magaziner a fizias ennon eun toulladig brao a draou da houvezed.

- « A-benn eun nebeud deiziou, emezañ, ar re a dle beza dizoudardet a rento din o dillad-soudard hag e rafes mad distaga toud ar boutonou alaouret a zo traou-fantezi ha lakaad en o flas boutonou hervez ar reolennou. Galled a ri gwerza ar re alaouret d'ar “vleued”. Ugent real e vezont gwerzet amañ. »

- « Ar priziou n'o-deus ket kresket abaoe arlene ? »

- « Mad a rafes ivez en em glevet mad gand kemenerien ar gompagnunez “diavez-reñk”. Bez' zo en o zouez kemenerien a-vicher ha ne houlenont ket gweloh evid da zikour... evid eun draig bennag, evel just. Bez' zo zoken eur Breizad en o zouez : “Ar Marreg”, e ano ! »

- « En em anavezad a reom dija. »

Goude beza dizoloet leh ma oa miret ar bitaill hag ar sigaretennou, e oa bet choazet eul leh ispisial evid ar gwin. Lakeet ar zoubenn hag ar meuziou tomm agostez, toud ar bevañs all e oan karget dioutañ.

Adaleg an deiziou kenta a viz Mae 1928, ar re a oa dizoudardet a zeuas a-heuliad d'ar vagazin ; gand al levenez vrasa e-touez an oll, o farsal, oh ober o cholori, eüruz-braz da renti o dillad-soudard. Pa on-oa kalz a labour, e teuas daou

zoudard all da rei din eun taol-zikour. Toud an traou ah eas mad ha tri devez goude, an hini a oa en ma raog a lavaras din kenavo en eur heti chañs vad din.

Ha setu ma'h erruas rummad kenta ar bloaveziad 1928. E penn eun abardaez, e welis o tond d'ar vagazin, etre eur serjant hag eur haporal, eur pikol pezh den : daou vetr eiz, daou-hant tri ugent lur, eur chouk dreist muzul.

- « Me a zoñj, eme ar serjant, on-no kalz a boan o kaoud dillad a-zoare d'an hini nevez deut-mañ. En em houlen a reen, a-hend-all, perag hen digaser dim. Añfin, gwelit 'ta ar pezh ho-peus a vrasa e peb tra. »

- « Emaon o vond da glask. »

Siwaz e dreid ne'h eent ket zoken en eur votez a bemp ha daou-ugent.

- « Klaskit ar haskou. Marteze on-no muioh a jañs. »

O weled e benn divent, e houezen e kollen va amzer. Red e oe din pignad war eur skabell da lakaad e gask dezañ war e benn.

- « Ne dalv ket 'boan kenderhel, lavaras ar serjant. Mired a refet ho tillad "sivil", beteg gweled. »

D'abardaez noz eur hemener euz ar gompagnunez "diavêz-reñk" a gemeras muzulioh an diskrouger anduill evid e wiska a-nevez. Eiz deiz goude, e oe kaset d'ar 51 rejimant kanolier.

Ar marhad du

Lodennet e veze ar bevañs dindan evez ar serjant zizunieg. Nemed an tri devez kenta euz va hrog-karg, ne welis anezañ morse. Ar "mestr-keginer" a digase din ar bevañs evid toud ar gompagnunez. Din da ingali goude.

Goude teir pe peder zizun, en em rentis kont ne gemere ket an "danvez-ofiserien" o frejou d'ar gwener ha d'ar zadorn. Goulenn a ris o doareou hag e klevis o-doa an aotronez-se eur bermision eiz eur ha daou-ugent diouz ar gwener da noz beteg ar zul da noz.

Chom a ree ganin eun tamm mad a vevañs-ouspenn hag e welis gwell brim toud ar gounid a hellfen tenna diouz se. Ne adgoulennent diganin nemed o lodenn zigaretennou. Gwall-geustereun ar rejimant ne oa ket moarvad diouz ar zoudarded-se genidig euz famillou pinvidig. Tri-ugent bennag e oant ha pa vezent eet kuit e hellen adkavoud c'hweh-ugent lodenn zizunieg a gafe, sukr, chokola ha... gwin. Gras da ze, nag a baotred eüruz e-touez ar "vleued" e roen deze al lodennou-ouspenn.

Eun nebeud deziou goude digouez ar "vleued", Marreg a deuas d'am gweled d'ar vagazin :

- « Ma fell dit gounid arhant, ema ar mare. »

- « Gand ar boutonou alaouret ? »

- « Ya. Med n'eo ket toud. »

En em lakaad a reas da furchal war lañsedou ar vagazin hag e kavas eun ugent bragou bennag, reñket e-barz an trede reñk.

- « Gweled a rez ar bragouiou uzet-se ? Ahanta, ne 'teus nemed o lakaad e-barz reñk ar re a zo er-mêz a zervij. Kont ar gourizou hag o has din. En distro, me roio dit bragouiou nevez. Chañch a rez kañsed deze. Eur jeu a skrituriou nemetken, ha c'hoariet an dro !... Gand sikour eur hamarad, me a dreso aneze ; te o adwerzo d'ar "vleued" evid pemzeg lur hag e roi din ugent real. Mad eo evel-se ? »

Heulia a ris kuzuliou prisiuz Marreg. E-pad miziou, e troken hag e reen ar marhad du. Deut e oan da veza (goude al letanant) brasa soudard a-bouez an eil kompagnunez. En va hambr va-unan, 'kichenn ar magazinou, netra ne vanke. Eur wir stal spiserez. En em leunia a ree va fod-espenn hag aliez, d'ar zul da greisteiz, e paen e verenn da G/Corveller en eun ti-debri. Hemañ a oa war eur vicher hag a ree gand an taillou war ar madou. Kaozeal a reen gantañ aliez. Dedennet braz e oan gand e vicher. Kalonekaed a ree ahanon da heul an heveleb hent hag eñ, ha da brepari ar genstrivadeg goude va hoñje. Ha toud an traou-ze a drote em fenn.

Ar zerjanted zoken a ree din selladou flour. Renti a reent vizit din er vagazin, eur wech an amzer. Mond a reent kuit gand unan pe daou lur kafe, diou pe deir dabletenn jokola pe bouedou materiet all. Unan aneze, serjant a vicher, dimezet ha tad daou a vugel, am fedas da vond di, goude koan.

- « Marteze, e tigasi din ivez eun tammig kafe ? »

Fier da veza pedet ti eur serjant euz ar gompagnunez, va daou lur kafe ha va feder dabletenn jokola kuzet en eur zahig-beaj, dindan nebeud a gazetennou, e treuzen karter ar gompagnunez "diavêz-reñk", ha goude, eur bodad gwez evid degouezoud e-barz ar ru vihan e-leh ma oa ar serjant o chom. Ouz va gortoz e oa, hag am ambrougas dirag e wreg. Rei a ris ar pakajou dezañ. Kaozeal a rejom a dra pe dra hag e tistroen d'ar hazarn.

Ar zizun war-lerh, ar serjant am fedas adarre med e houlen a reas lamm-penn. Ne greden ket nah hag eh is adarre di, mennet mad an taol-mañ da harta an troiou-ze. Pemzeg deiz war-lerh e oen pedet adarre. Naha a ris groñs.

- « Re vraz eo ar riskl a gemeran evid plijed deoh ! »

- « Med n'eus ket an disterra ged-tro e-barz ar harter. »

- « Nann. Me bez' ho-peus amezeien ha ma weler ahanon o tond amañ gand va zahig-beaj, e risklan da veza eveziet. Inutul deoh, am aspedi, serjant. Ne lakin ken va zreid en ho ti. Re zañjeruz eo, ken evidoh hag evidon-me. Konsanti a ran hoh aotren da zond eur wech ar miz d'ar vagazin. Med arabad deoh goulenn ganin ouspenn daou lur kafe ha pemp tabletenn jokola. »

- « Rezon ho-peus, marteze. »

Eur wech, o renta vizit din, e kaozeas din euz e famill, euz koust an traou, euz e bae dister, euz e spi da veza anvet adjudant. Ha goude e lavaras din, war guzuliou e wreg, ne deufe ken d'ar vagazin.

Frankiz

E fin miz Here 1928, ar serjant-major a zegasas din an hini a zlee kemer va flas evid ma rafen dezañ ober anaoudegez gand ar verouriez. Hemañ a oa unan

meleneg braz diwar-dro Pariz. Eüruz-tre e oa da veza anvet er vagazin. Siwaz, daou zevez goude, em distro goude beza bet er-mêz e-pad eur pennad amzer, hen kaven beuzet en e win e-mesk dilladou a-stlabez war ar leurenn. Tapet a reas eur mizvez prizon.

Goude-ze, an adjudant Taburet a lavaras din e tleen ober daou zevez ouspenn. Ar reolenn e oa evid eur soudard hag e-noa tapet eur hastiz a zeg devez prizon. Lezvarn an arme a gretaas ar zetañs. Al letanant karget d'am divenn e-noa ankouaet lenn va "dossier".

Ne felle ket din echui va hoñje er giz-se. Gouvezed a reen, pa 'm-oa kemeret va harg er vagazin, e-noa ar serjant-major ankouaet renabli ar sigaretennou hag ar butun. D'abardaez-noz, end-eeun, daou-hant pakad sigaretennou hag hanter-kant pakad butun a oe ingalet etre daou gamarad dizoudardet euz kostez Landreger evid eur gwerz-utun a zeg dre gant.

A-benn tri deiz, ar serjant-major a zegasas din va eil warlerhiad. Rei a ris dezañ toud ar sklêrijennou heb laosken a-gostez ar boutonou alaouret ha penaoz addressa ar bragouiou. Renti a ris dezañ, goude-ze, va dillad-soudard ha va hask-brañskell.

D'ar zeiz a viz Du 1928, ar henta rummad euz ar bloaveziad 1927 a dremene porrastell braz ar hazarn Ardant-du-Pic, en e benn laz-seni ar rejimant. Nebeud a zoudarded euz an heveleb rummad n'o-doe ket an enor-ze. En o zouez, an eil klas Ar Moal ha ne dremenas anezañ nemed daou zevez all war-lerh, en e unanig, e sivil, e zah bihan siret en e zorn... med rond mad e yalh !

Errued a ris e Seveon, d'an deg a viz Du, frank euz va deveriou e-keñver Ar Frañs. Adkaved a ris va zad kosaet, skuiz. Motet e oa hag ar hleñved a oa dija krog da ziskar tamm-ha-tamm an den solud hag ampart a oa bet Fañch ar Rolland.

PEDERVED LODENN

Cheñchamant roud

Ar re ruz hag ar re wenn

Pa zistrois diouz ar rejimant, e oa amzer ar votadeg en he hreñva e Bro-Dreger. Unan euz ar re genta eh is da weled a oe va maeronez Maria Jegou. He hared a reen kalz. Kenitervez e oa d'am mamm. Da hweh vloaz warn-ugent, anoazet gand he harantez, e oa eet da zeurez ti Seurezed ar Spered Santel en em garg dreist-oll da gelenn ar vugale ha da zoagnal ar re glañv.

Nebeud a vloaveziou goude beza gwisket ar ouel, va maeronez a gomprenas buan n'eh ee ket buhez ar gouent diouz he zemz-yehed. Plega d'ar reolenn a oa re ziêz eviti ha re vraz an dizeeunded. Med dre zoujañs evid he gouestl, e plege beteg zoken ma veze an urziou a-eneb d'he hredennou a gristienez. Speredet lemm, gand ivez evid ar mare eun deskadurez vad, e kelennas e-pad deg vloaz er parrouziou diwar-dro. Karet e oa kalz gand ar vugale, gwelet mad gand o zud, ha dalhmad e veze gand keuz e veze gwelet o vond kuit gand an dud.

Goude, Maria a bledas gand ar re glañv. Kaset ha degaset diouz eur barrouz d'eun all, va maeronez a oe degouezet e Lanvilin, diou leo diouz Lannuon, e-leh ma ree katekiz ha war-dro ar re glañv.

Emroet eston, e veze dalhmad a-zevri o pleal gand he hlañvourien. War droad pe gand gwetur eur peizant, e rede hentchou o soagnal aneze, o dizamma a boan gorv pe a spered, o tistaga fentigellou ha ne vezent ket ordinal, pa gave aneze talvouduz, euz ar muia lipet flour.

E 1928, e-pad amzer ar votadeg, va maeronez a zlee mond da gerhad louzou da Lannuon, evid eur hlañvour. Red e oa difraea. Ar velo ne veze ket aotreet d'ar seurezed hag aneval ebed ne oa libr, war droad eo ez eas gand hent Lannuon. A-boan m'he-doa greet daou gilometr, ma klevas eun oto o tond. En em lakaad a reas en he sav e-kreiz an hent o hejal he divreh evid ober sin dezi da harta. Ar blenier ne oa nemed an Ao. Ar Bais, resevour an taillou e Landreger. Hennez a oa anavezet mad evid beza a-eneb d'ar veleien hag en deiz-se e oa oh ingali afichou evid unan ruz, anad deoh.

An Ao. Ar Bais, e kounnar, a zigoras dorig en oto hag a reas eur hrog war va maeronez.

- « Ne welit ket 'ta an afichou emañ o lodenna ? », emezañ o tiskouez ar pakad ruz ledet a-dreñv dezañ, war an azezenn. « Me am-mo eun êr fin o pourmen gand eur seurez. »

- « Ingala a rit afichou evid unan ruz ; hoh afer eo ! Me a zo o pleal gand eur hlañvour ha red mad eo din difraea da vond da Lannuon ti eun apotiker da gerhad dezañ e louzou. N'am-eus ket kemeret amzer da zelled outañ hag-eñ e oa ruz pe wenn e roched. »

Divarhet, Ar Bais a deuas er-mêz diouz e oto hag a bedas va maeronez da zevel e-barz, en e gichenn. Ha n'eo ket hepken kas anezi da Lannuon a reas, med chom a reas ivez d'he gortoz en e wetur-dre-dan evid he degas en-dro ti an hini klañv.

O tiskenn diouz an oto, hen trugarekaas.

- « Galled a rit antren. Marteze e-neus eur roched ruz. »

En deziou war-lerh, eun degouez all euz brezel ar votadeg a lakaas an tan dre ar vro. L.G. a zalhe eun ostaleri gand ispiserez, charkuterez ha kalz a draou all c'hoaz, e bourk Peurid-ar-Roh, e-kichenn an iliz. Eur farser dispar e oa L.G. med bez' e-noa, en tu all d'ar blasenn, eur gwall gevezer a zalhe ivez eun ostaleri hag eur bureo-butun. Hemañ a oa Ar Roig. Kredenn bolitikel L.G. a oa a-du gand ar veleien. Unan gwenn e oa. Egile avad, Ar Roig, a oa unan ruz hag unan rik.

Goude oferennou ar zul, an darnvuia euz ar baotred ah ee ti L.G. - ar relijion a boueze - da lipad o chopinad jistr, evel kustum. War dreuzou e zor, Roig, ar paotr ruz, a ree a-walh evid dedenna eur re bennag all en e di, en eur ginnig deze chopinadou evid eur bennoz-Doue. Ar hrogou etre L.G. hag Ar Roig ne baouezent jamez, zoken pa veze echu amzer ar votadeg. E-pad eur pennad, L.G. ah eas zoken beteg mond de brena e vutun d'Ar Roh ha da werza anezañ ar memez priz d'e glianted evid o harz da vond da en em bourveza - hag eta d'eva - ti e gevezer. An hini ruz ah enebas dre al lezenn ouz ar hoñvers displeal-ze - daoust dezañ da veza dizarhantuz - hag an hini gwenn a rankas paouez da werza butun. Med an afer-ze a jomas a-dreuz korzailenn an hini gwenn. Ha mennet mad e oa, pa gavje an tu, da dalvezoud eur gwall outañ.

Mêr Landreger a oa war ar reñk evid beza depute ; choazet e oa bet gand ar re ruz hag e geneil e-barz ar barrouz ne oa nemed Ar Roig. Dre unan euz e vignoned o chom en eur barrouz douar-ha-douar gand Landreger, hag unan gwenn evel just, L.G. a reas telefoni d'e gevezer, sañset a-berz mêr Landreger, evid lavared dezañ e teufe d'ar zul war-lerh, war taol teir eur goude kreisteiz, an danvez-kannad ruz d'ober eun divizadeg ti Roig. Hag e oa dleet, evid an degouez-se, rei bannahou - zoken aperitivou - da doud ar glianted a zeufe d'an ostaleri, dreist-oll goude an oferenn-bred. Karga a reas anezañ, a-hend-all, evid gounid war an dud, da bedi toud e vignoned euz e gostezenn ha ne wele ket aliez a-walh da zul er bourk.

Ar Roig a gargas ar zakrist da embann an nevezinti vraz, war ar groaz, goude an oferenn. Echu an ofis, Roig, war dreuzou e zor, eur minhoarz beteg e ziouskouarn, a ree jestrou ken ledan all evid aspedi toud ar baotred d'al lipadeg vraz digoust. Kemend a dud e oa ken ma oa red en em hasta da lonka e vannah evid rei plas d'eur bagad all a voterien e galloud... Goude beza kemeret o dle ti an hini ruz, ar re wenn a zeue da gonforti o hamarad. Hemañ en em glemme :

- « Evuruzamant ne zeu ket mêr Landreger re aliez amañ, anez da ze e hellfen serri va ostaleri... Añfin... pa 'ma an degouez evel-se, e kinnigan eur chopinad deoh. »

Goude kreisteiz, an hini Ruz hag e vignoned a hortozas en aner degouez an danvez-depute... Ne oa ket diêz da gompren... peogwir e oa o veaji. Mêr

Landreger, war bedennou stard Ar Roig, a zougas klemm. Med gand ar gourhemenn, da ziwall beza re bounner.

En amzer ar votadeg, ne dalv ket ar boan taol eoul war an tan.

Ar henteliou

Pa zistrois da Zeveon, e kaven adarre va zud, Frañsin ha va breur Yann hag o-doa traou all da ober eged souba en aferiou politikel. Mai Guyomard he-doa kuitaet ar menaj evid mond da Bariz da labourad. Adkaved a reen ivez Perig Durand, ar paotr-saout, Louizig e hoar, hag an deveziaeter I. Mai ar Picard - o chom en Traou an Dour.

Fañch ar Rolland, ha ne oa ket war e du abaoe eur pennad, e-noa karget va breur Yann da gas en-dro labouriou-douar ar menaj. Labouriou an ti ha war-dro ar gêr a oa bet kemeret gand Anna Loueded, va mamm ha Frañsin. Anna en em garge dreist-oll da horo ar zaout ha d'ober en-dro da doud al loened, sikouret gand Perig. Louizig a zalhe kompagnunez d'am zad. En he zrizeg vloaz e oa... ha bresk e oa he yehed.

A-hed ar veurevez, o-daou e traillent boetrabez ha ruta evid ar zaout, o degase en eur hrañj vihan e-kichenn ar hraou hag a denne plouz heiz ha kerh diouz ar bern. Asamblez e vezent dalhmad, Louizig ha va zad. Fañch ar Rolland a zante e yehed e guitaad hag e weled ivez o tisterraad a zeiz da zeiz. Al Louizig, ken dous ha ken laouen, a roe nerz kalon dezañ. Eur veillerez-klañvour dispar e oa. Ne baoueze ket da varvaillad, da hoarzin ha zoken da lakaad va zad da hoarzin ganti.

- « Fañch, deus dre amañ... Ankouaet zo tenna plouz... ». Sentuz, va zad ah ee d'he heul.

Eur wech an amzer, e-pad ma reent eun tenn-alan - ar re-mañ a oa red oll ha dond a reent aliesoh-aliesha - e konte marvaillou dezi. Ne oa ket gwall founnuz frouez labour o hevredigez, med dister-dra ne oa ket ! Va zad ah ankouas da vihanna, e-pad eur pennad amzer, e skuizder hag an droug a grigne anezañ. Va mamm, hi, a labour e ivez nebeutoh-nebeuta. Med miroud a ree, dreist-oll eviti, ar hefridiou ti an amezeien, gand evel just, beb sizun, marhad Landreger.

Goude va zriweh miz zervij, ne oan ket akuitoh war ar vicher a labourer-douar. Ma oa kreñvaet eun tammig va nerz-korv, am-oa miret kement a zoñjer evid al labour-douar.

Labourad a reen aliez gand I. Mai ar Picard, an deveziaeter, ar pezh a reas din priza e skiant, e ampartiz ha kalz a berziou mad all c'hoaz... Divizoud a reem aliez on-daou... Meur a wech, e-noa greet ano euz stad dister an deveziaeterien er menajou. Koulskoude, morse, ne oe meneg euz ar gopr e-noa e Seveon. Arguzi a ree nemetken diwar-benn ar hemm etre buhez al labourerien war ar mêz eveltañ hag hini implijidi lod euz ar goñversanted vraz diwar-dro Landreger.

Evel ma'h anavezen mad ar stad-se, ne hellen nemed klemm anezañ hag her huzulia da glask labour e leh all. Med I. Mai ar Picard a oa a-raog toud eun den diwar ar mêziou, stag e galon ouz ar glad. N'e-noa nemed eur pal : kaoud, eun

devez, eun tammig menaj diou pe deir buoh hag a hellfe kreski a-nebeudouigou. E wreg a labour e a-bennadou e Seveon, dreist-oll da goulz al labouriou braz : planta ha tenna patatez, ober ar foenn hag an eost. E-pad al labouriou-ze, I. Mai hag e wreg a veze bevet hag o diou bae ah aotree deze lakaad eur gwennegig bennag agostez. Hag evidon-me, ar hontribusionou am dedenne. Ne hortozen nemed an dro da gomz gand va zud diwar an dra-ze... e spi ouspenn e komzfe va zad da genta diouz pezh e oan e soñj d'ober diwezatoh. Eun devez e fin miz Du 1928, e oan va-unan gand Fañch ar Rolland. En em lakaad a reem da zivizoud :

- « Gouvezed ar rez eh on skuiz ha ne hellan ken labourad kalz. Gwelet am-eus, en deiziou diweza, an Ao. ar Pichard, sekretour Ti-kêr Landreger, gouvezed a rez : an hini a gemer e amann e Seveon. Laosket e-neus din da gleved e hellfen kaoud eur bañsion a vrezel. Ha setu, da vamm ha me, on-eus greet or mennoz da laosken ar menaj d'ar gourmikêl 1930. Evel ma'h out an hini yaouanka, ar menaj a zle dond dit. »

Evel-se e oa ar hustum d'an amzer-ze : menaj ar re goz a zlee dond d'ar re yaouanka pe d'an hini a zimeze an diweza. Ha Fañch ar Rolland a gendalhas :

- « Da hoar a zle dimezi da vloaz ha kavet he-deus eur menaj. Ne van nemed da vreur ha te, ha ne fell ket din beza displeal. Bremañ eo dit da en em zoñjal. Ma teus c'hoant da jom e Seveon, ha da gemer ar menaj war ol lerh, dit eo choaz. Med red e vo dit dimezi. Gouvezed a ran e karfe da vreur kemer ol lerh, med dit eo choaz da genta... nemed chom a rafes gantañ hag e labourfeh ar menaj assemblez ? Med evid beza leal, ne guzilian ket dit an diskoulm-mañ. »

Trugarekaad a ris va zad euz e ginnig. Rei a ris dezañ da houvezed am-oa kemeret dija va diviz hag e oan e soñj d'ober kaoz dezañ war ze d'ar bloaz nevez. Lavared a reen dezañ e berr gomzou an darempredou kemeret e-pad va hoñje gand ar H/Corveller, en eur lakaad dezañ krak-ha-krenn e oa evid ober an heveleb micher hag an Ao. Alain, reseour an "taillou dizeeun" er Roh, da lavared eo karget da zastum an droejou war an alkol, ar plakou-velo¹¹, an dirennou-tan, h.a... Va zad, a zeblantas din, a-greiz-toud, prederiet ha diskredig :

- « Felled a ra dit ober da vicher e-barz an evajou, ha ne helles ket o gouzañv ? Gwelloh e vije bet ganin da weled o chom e Seveon. Te fell dit 'ta beza eun aotrou ? Na gomzez ket diouz se da Yann. Laosken a reom ganit eun nebeud miziou evid soñjal ervad, mad gand ar volontez 'teus, eun devez bennag e vi eun den doujet. Karet am-mije bet memestra gweled ahanout o chom e Seveon, ober ahanout eur peizant, kentoh evid eun aotrou. »

Evid Fañch ar Rolland, kuitaad an douar a oa en em nah. Sanket don en den-ze e oa karantez al labour-douar... beteg mel e eskern. Derhel menaj da genta a dremene a-raog peb tra all.

D'ar zul war-lerh, e oan paotr ar gêr gand va mamm. Kerkent ha ma oe echu merenn, va zud ah eas d'ar Pevar Avel, ti va mamm-goz Ar Rolland. A-boan o-doa

¹¹ ar plakou-velo : en amzer-ze e oa red prena eur blakenn-velo digand ar Stad evid peb velo.

kuitaet Seveon, ma'h is d'ar marchosi da vounta va fri e diellou war an tellou dizeeun roet din gand H/Corveller e Sant-Avold. Rei a reent toud an disklêriaduriou resiz war ar programm, ar genstrivadeg, roll al leoriou red, o friz, koust an enskrivadur d'ar henteliou-dre-lizer. Ober a ris va hontchou buan. Gand arhant gwerz va lapined, am-oa tra-walh evid an enskrivadur. Ar skol-ze a brepare konkouriou mererez liez doare. Ober a ris va goulenn hag an deiz war-lerh eh een da bost Ar Roh da gas va lizer hag eur paper-arhant.

Kement-mañ a oe greet e kuz. Ne lavariz ger da zen. Pempzeg deiz diwezatoh e resevis eur hemenn da vond da gerhad eur pakad da Bost Landreger. Mond a ris 'ta. Pounner e oa ha braz. D'ar zadorn, ouz taol, e lavariz :

- « N'eo ket va zro da veza paotr ar gêr warhoaz. Med resevet am-eus paperiou hag ezomm am-eus d'o lenn. Mennet mad on da heul kenteliou eur skol dre lizer. Hag, evid ma ne zireñkin den, am-eus greet va mennoz da veza paotr ar gêr, bep sul, beteg gweled. Gouvezed a ran eo berr an deiziou bremañ, med en em denna a rin evid galled mired diou pe deir eurvez bemdez, da labourad war va henteliou. »

Eur vouez hepken a zavas, hini va zad :

- « Felled a ra dit beza paotr ar gêr warhoaz ? Mad eo ! Med en em houlenñ a ran hag eñ e helli kaoud amzer a-walh da lenn toud da baperiou. 'Vid pezh a zell ouz ar zuliou da dond, gwelet 'vo diwezatoh. »

I. Mai ar Picard, ha n'e-noa tra ebed da lavared, a zelaoue ar gaoz gand evez. E-pad an abardaez on-oa an dro da labourad asamblez.

- « Ma teus paperiou da lenn ha goude kenteliou dre lizer da heul, en em houlenñ penaoz e helli beza paotr ar gêr da-unan, d'ar zul ? Dreist-oll bremañ, pa deu an noz da bemp eur. Forz penaoz, adaleg warhoaz, e vin e Seveon da deir eur. Debri a refom on advern asamblez ha goude e rin war-dro al loened, gand ivez goro 'r zaout. Evel-se, 'to toud da amzer da lenn ar sakre paperiou-ze. »

Felled a reas din sevel va mouez, med en aner !

- « Evid bremañ, n'am-eus netra d'ober e-barz ar jardrin... dilabour on goude kreisteiz, ha neuze, evid lavared dit peb tra, kared a ran ivez beza a-gevred ganit. Bep tro ma vi paotr ar gêr d'ar zul, e roin eun taol-zikour dit evid al labouriou d'abardaez-noz. »

- « Ne hellin jamez da baea, I. Mai. »

- « N'eus ket ano a baeamant ! »

Arabad klask tabutal. Den, er bed-mañ, n'e-nije gallet laked I. Mai da zistrei diwar e veno ma soñje gantañ e oa eeun ha ne ree gaou ouz den. En em ober mad a reen gantañ hag eñ ganin ivez. Gouvezed a reen pegenn selluz e oa en e gomzou ha setu perag ne dandonen ket da zisklêria dezañ ar gudenn am-oa da ziskoulma abaoe em-oa resevet va fakad paperiou : kaoud eur zal-labour evidon va-unan.

E gwir, ne oa ket kision evidon da studia e-barz ar marchosi, el leh ma kousken. Divennet e oa alumni ar goulou, war var eun tan-gwall a zoñje va zad. Ne welen nemed eun diskoulm : goulenn digand va zud mond da gousked er zal gumun evid ma hellfen labourad en o hambr.

- « Komz da genta diouz se gand da vamm », a guzulias din I. Mai ar Picard. « War fallaad eh a da dad. Kemer a ra bremañ he hreñv warnañ. Anez da ze, e chom eun diskoulm diweza hag a vefe da zond du-mañ, em zi. N'on-eus ket a vugel evid ar mare ha bez' on-eus eur gambr houlo. Prop eo, gand eur gwele mad ha kadoriou. Med gwelloh e vefe en em vired diouz kement-mañ, rag da dud o-dije droug ouzin. »

- « Ya sur ! Eun ide hag a rafe deze soñjal ervad. Ar re genta e vefent ken sur all, da veza doaniet ma lavarfen deze va mennoz da vond da studia ha da gousked e leh all. »

An deiz war-lerh, eh een d'an oferenn-veure d'Ar Roh evel ma oa ar hiz evid paotr ar gêr, d'ar mare-ze. O kuitaad an iliz, en em zigarezen d'am henderv Tremel ha da zaou gamarad all ne hellen ket mond gante da gemer eur bannah kafe evel kustum. Distrei a reen war-eeun da Zeveon hag e krogen gand va studi. Toud ar famill a oe muioh pe nebeutoh souezet o weled ahanon o tistrei ken buan d'ar gêr. Goude merenn, Anna a lavaras din e vefe-hi aze evid goro ar zaout. He zrugarekaad a ris en eur lavared dezi koulskoude ne oa ket red ; greet am-oa va mennoz da respeti ar pezh am-oa prometet, da lavared eo ober toud al labour.

- « Gouvezed a ran ar pezh am-eus d'ober », emezi. Inutul klask dislavared.

Goude ma oa eet kuit, va-unan erfin, eh is buan d'ar marchosi da gerhad va fakad-paperiou e traoñ ar pres. Leda a reen toud ar stal war daol ar zal.

Gand kalz a evez, e lennis toud an disklêriaduriou. Reñka a ris poelladennou an tri miz kenta hag e studien va henteliou evid an dever kenta.

Da deir eur, I. Mai ah erruas evel prometet. O weled leoriou ha kaierou ingalet war toud an daol, e laoskas eun harmadenn :

- « Ahanta...! Evuruzamant eo hir an nozveziou bremañ... 'Teus ket fin da gia... Ma aotreez ahanon, e karfen rei eun taol lagad. »

Ar Picard a oa unan euz an devezetaerien e Bro-Dreger o kaoud e "zantifikad", eun dra dibaot d'ar mare-ze.

- « Ne gomprenan ket ar problem. Med ne gav ket din e vefe gwall diêz ar skrivadenn ! »

Dastum a ris va faperiou e penn an daol hag e tebrem eun tamm.

- « Chom aze gand da baperiou, emezañ o sevel diouz taol. Me ah a d'ober dindan ar zaout ha goude eh in d'o has d'ar hraou. N'am-eus ket ezomm diouzit. Ne fell ket din da weled er-mêz. »

Anna ah erruas war-dro pemp eur, souezet hi ivez, o weled toud ar bern paperiou-ze. Mond a reas d'he labour ha va zud ah erruas d'o zro.

- « Lavaret 'toa dim deh hag adlavared 'vid ar beure e kontes chom 'n ez-unan er gêr hag ober al labour, n'eo ket gwir ? »

- « Soñj mad am-oa, med I. Mai hag Anna o-deus aspedet kement evid dond d'am zikour ! »

- « Mad-tre evel-se, a lavaras va mammig. En em dennit, goude toud. Me a zo o vond d'aoza koan. »

Tenna a reen, evel just, va mad a gement-se hag a lavaren :

- « Lennet am-eus toud ar paperiou am-eus resevet evid prepari ar genstrivadeg eh on em zoñj da dremen. Ober a rin al labour er menaj, da noz. Red e vo din emichañs dioueri pemp pe hweh eur beb abardaez-noz hervez an deveriou am-mo d'ober. Ha gouvezed a rit mad ne hellan ket studia er marchosi. Ezomm am-eus da veza va-unan evid deski. Ha koulskoude e karfen ho tireñka an nebeuta posubl. »

- « C'hoant 'teus da lavared e fellfe dit e rofem dit or plas ha ma tehfe unan bennag ahanom diouz ar gêr evid ober plijadur dit', a respontas va zad, hegaset.

- « Studia eun hanter-nozvez heb galled diskuiza e-pad an deiz, n'eo ket eur blijadur evidon, med eun dra red. A-hend-all, ma tle unan bennag kuitaad on ti, eo me an hini eo, ha den all ebed ! Ouz red, e rin va fosubl evid kaoud eun amezeg a hellfe presta din eul leh-studi, beb abardaez-noz. Distrei a rafen da Zeveon, beb beure, evel just. Med soñjal a ran ivez e rafe an dra-ze flipata an teodou fall. Deoh-c'hwi eo d'arvesti ouz ar gudenn. Rag mennet mad eh on da brepari ar genstrivadeg-se. »

- « Bepred ar memez hini ! ha ne ra nemed hervez e benn , a respontas va zad, sioullaet. Gweled a rin gand da vamm penaoz reñka an traou. »

Ar gaoz a chomas aze. An deiz war-lerh beure, goude lein, va zad a roas din e ziviz.

- « Pa gari, e helli mond en or hambr. Da vamm ha me a gousko e-barz ar gwele kloz e-kichenn an oaled. Louizig a zavo war estaj an eil gwele-kloz ha Frañsin a gemero he flas. Evel-se e helli studia e peoh, evel ma c'hoanteez. »

Fañch ar Rolland a davas, toud en e zoñjou.

- « Da anavezad a ran tra-walh. Ma 'teus lakeet en da benn studia e-pad an noz, e houvezan mad e ri ha ne fell ket dim, a briz ebed, e kuitafes Seveon. Ar pezh a hoarvez amañ ne zell tamm ebed ouz an amezeien. N'en em emellom ket euz o aferiou ha ne zleont ket en em emelloud en or re. Pep hini a zle chom er gêr. »

D'an daou a viz Genver 1929, goude koan, en em lakaen gand va leoriou, va haierou, va helh-liziri ha va foelladenou e kambr va zud. Hag e voulhen an "daou-ugent eur" war an tu gin.

Al labourer-noz

Eur gambr vraz e oa hini va zud. Al leur a oa simantet. Bez' e oa enni daou wele-korn, daou vraz hag eur gomodenn, eul listrier, eun daol ha c'hweh kador, hag eur mekanik da wriad. Hemañ, war urz va mamm, a zlee ober evid va bureo.

- « Evel-se, e hellin kemer an daol pa vo tud da zegemer. » Evid ma sklêrijenni, em-oa droed da gaoud eul goulou-lutig... war urz Fañch ar Rolland.

- « Re a betrol a zev al lamp vraz ha kemer a rafe re a blas war ar mekanik da wriad... Galled a rafes hen diskar ha lakaad an tan en ti. »

Toud ar famill a gemeras eur perz bennag em doareou nevez.

Bez' e oam e-kreiz ar goañv, ha ne oa ket kision da domma ar gambr. Evuruzamant, o kuitaad ar rejimant, em-oa degaset ganin pevar re loerou nevez ha

teo. A-raog koan, e lakais plouz heiz fresk em boutou-koad hag e wiskis eur jiletenn hloan tomm. War-dro seiz eur da noz, e kemeris plas ouz va bureo hag e stagis gand ar poelladennou a zleen renta a-benn ar pemzeg da zond.

E-pad teir eur e labouris war an ekonomiez politikel. Goude beza lennet hag adlennet ar skrid, hen dastumis e nebeud a heriou. Divizoud a ris hen peurzevel an deiz war-lerh. Staga a ris goude gand ar problem-jedoniez. Lenn a ris al lakadennou, prederia a ris warno, o adlenn a ris, med ne gomprenen mann ebed. E-pad ouspenn div eur e reñken sifrou e leiz. Tri goulenn am-oa da ziskoulma. An trede am laoske heb tu ebed warnañ. Skuiz, e sellis ouz an orolaj : eun eur hanter diouz ar beure, dija. Bez' e oan o paouez tremen c'hweh eur hanter o kleuza va fenn. Mond a ris da gousked. An orolaj a skoas div eur... teir eur. Derhel a reen da glask diskoulm va hudenn. Ar sifrou... a gornigelle em fenn.

Sevel a ris en-dro ha setu-me adarre ouz va mekanik da wriad. Taol a ris eun taol lagad diweza ouz goulenn ar problem... Kavet am-oa ! Peder eur diouz ar beure ! N'am-oa ket serret eul lagad med an evurusa euz an dud e oan !

Da lein e houlennas va mamm diganin ha kousket mad am-oa. Daoust d'am zeir eur vihan a gousk, va spered a oa sklêr a-walh. E-pad an deiz, va horv a oa e labour ar menaj, med va spered a oa bepred er henteliou. Ha mall a oa ganin gweled an abardaez-noz o tond.

A-raog koan adarre, plouz fresk em botou-koad... ha war-dro seiz eur, ouz va bureo a-nevez. Komañs a reen gand va foelladennou ekonomiez politikel, oh astenn pennad an deiz a-raog. Goude kalz a cheñchamañchou, e stagen da skriva anezañ evid ar wech kenta war eur haier koz euz Sant-Jo. Adkemer a ris va froblem d'hen adgweled penn-da-benn. Seblanted a ree din e oa just an efed. An orolaj a zonas hanternoz. Mond a ris da gousked. Skornet e oan. Va mammig he-doa lakaet evez da daol eun tapis teo hag eur plueg-treid, war va gwele.

An deiz war-lerh d'abardaez-noz, e houlennis digand Frñsin rei din ar skrivadenn. Evid en em vired ouz beza temptet, e lavarais dezi kemer ganti ar skrid moulet... ken ma 'mije kaset va deveriou d'ar skol-dre-lizer. Abaoe eiz vloaz n'em-oa greet an disterra skrivadenn hag e rankis, a-nevez, en em lakaad da studial ar yezadur. Lenn hag adlenn a ris va foelladenn, he lakais e kempenn hag he sinis. Kregi a ris goude gand leor an "taillou dizeeun". Med war-dro unneg eur e vanis kousket warnañ.

Keit ha ma padas va henteliou, ne gemeris ket perz eur wech e beilladegou an deiz kenta 'r bloaz. Gwell e kaven chom en va studiou ker. Pa veze ar veilladeg e Seveon, ne hellen ket koulskoude en em denna... Kemer a reen perz e c'hoariou kartou, med daoust d'ar chañs da veza bep taol ganin, ne gemeren ket an heveleb plijadur ha setu perag e welen gand eur wir diveh an abadenn oh echui. D'ar zul e vijen paotr ar gêr bep taol. Ha bep tro, I. Mai ar Picard hag Anna a zeue d'am zikour. Goude zoken, ma houlennen chom dalhmad da ziwall ar menaj d'ar zul, ne oa ket kement-se evid derhel gand va henteliou, med evid en em zidui.

Adaleg ma vezen va-unan, e tistagen va mignon fidel Fifi hag eh eem on-daouig d'ober an dro e liorzou pe a-hed al linenn hent-houarn. An diwall-ze am mire ivez

ouz darempredou va hamaraded koz. O hoariou, o bartiadou-kartou ne blijent ken din kement-se. Dond a reen, muioh pe nebeutoh, da veza gouez. En em gloza a reen warnon va-unan, va spered moustret gand va henstrivadeg a dorrfe añfin chadennoù milliget va buhez a labourer-douar.

Pa veze re ziêz va deveriou, eh een da weled an Ao. Alain, reseour ar hontribusionou er Roh. Bet am-oa aliez an dro d'en em gavoud gantañ ti Kermareg, an hini e-noa gwerzet ar moteur Japy dim. Mignoned vraz e oant. An Ao. Alain, hanter-kant vloaz bennag, gwelet mad gand ar Rohiz, a oa eun den-e-karg a goustiañs hag aliez e tiskoueze kalz a boellegez e-keñver "paotred-al-lambig".

Va halonekaad a ree ha lavared a ree din dreist-oll nompas dizoñjal evid mond d'e weled evid eur huzul bennag. Kavet am-oa ennañ eur helenner a volentez vad gand eur skiant-prenet hag eur ouiziegez a rente din eur zervij euz ar henta.

Bep pemzeg deiz, e kasen va foelladennoù da zifazia hag ar skol-dre-lizer o distroe gand deveriou nevez, e-kerz ar pemzeg deiz war-lerh. Ne vijent morse notennet, evid mad ar skolidi, diouz kleved. A-wechou e veze roet eur brizadenn dre vraz. An tri miz kenta a oe ar re boaniusa, dreist-oll evid ar jedoniezh hag ar fizik, gand diêsteriou o vond war greski dalhmad. Med studia a reen stard, eurveziou hag eurveziou, evid dond a-benn dioute. Mond a reen da gousked, sevel a reen en-dro, alumni a reen a-nevez va goulou-lutig hag en em lakaen e-barz va hontchou beteg... skuiz-marzo.

Eur veurevez, va mamm am havas dinerz ouz troad ar mekanik da wriad, grisiet gand ar riou. Eur volennad gwir kafe tomm am lakaas a-nevez war zao. Med ranked a ris rei va ger d'am zud da gemer liez nozvez a ziskuiz. N'eus forz penaoz, Soaz Seveon a lamas va lamp diganin, e-pad pevar devez.

D'an eil trimiziad, an diêsteriou ah eas war zigreski. Evuruzamant ! rag an nozveziou a verrae bremañ. Pa veze re fall an amzer da labourad, va zad a aotree din va labour-studi :

- « An aotrou a hell mond d'e labour ! »

Gand ar miziou, e wellae notennoù va helennerien. Zoken evid ar matematik hag ar fizik. Adaleg ar pevare miz, toud va henteliou a oa adskrivet ha adgwelet buan.

Goude-ze, an Ao. Alain a reas din lakaad va ano evid ar genstrivadeg. Ha nebeud a zeiziou war-lerh, e oan galvet da vureo ar hontribusionou evid eun astenn d'am faperiou o veza e oa va chomleh e dalh gand Landreger. Roet ar sklêrijennoù, ar reseour, an Ao. Ar Bras, a houlennas diganin :

- « Ha pesort studiou ho-peus greet, c'hwi ? »

Respont a ris groñs :

- « Studiou Skol-Veur. »

Seblanted a reas beza souezet.

- « Hag e pe leh ho-peus greet ar studiou Skol-Veur-ze ? »

- « E skolaj Sant Josef Lannuon. »

An Ao. Ar Braz a zellas spiz ouzin, oh en em houlen - a zoñje ganin - ma n'oa ket afer, aze dirakañ, gand eun tammig paotr kollet e benn gantañ. Gand kalz a zevended, en em gontantas da respont din :

- « Ne hovezen ket e helled ober studiou Skol-Veur e Sant-Josef Lannuon. »

Ar groaz aour

Studia a reen stard hag heb ehan hag e Seveon an traou a zalhe da vond, dalhmad ken ingal. E penn kenta a viz Mae, va mamm a resevas bizit person Ar Vinihi. Dond a ree da rei da hovezed e ree din an enor da zougen ar groaz-aour, deiz prosesion Sant-Erwan, d'an naonteg diouz ar miz.

- « Ar hiz eo ma vez douget ar groaz-aour gand eur paotr yaouank distroet diouz an arme hag ar groaz-arhant gand eun den nevez-dimezet. »

Va mamm, anad deoh, a oa leun a stad enni. Nijet he-dije ! Rei a reas din ar helou mad kerkent hag an abardaez-noz.

- « Red e vo dit 'ta kaoud eun habit nevez ; warhoaz eh in ganit ti kemener Ar Roh. »

Eüruz ha fier e oan da zougen ar groaz aour... ha muih c'hoaz da gaoud eun habit nevez !

Ar person, eun den santel, warlerhiad dign Sant Erwan, a ree din eun enor braz. Ne gomprenen ket mad perag e-noa ma dibabet, me, pa oam seiz o paouez echui or hoñje, e-barz ar barrouz. Diwezatoh, e teuen da zoñjal e oan bet choazet dre ma oa Soaz Seveon eur plah brokuz evitañ. Teir gest ar bloaz a ree ar Person e-barz ar barrouz : hini an ed, hini an amann hag en arhant, hini diner an Iliz. Ouspenn an hanter dioute a veze ingalet etre ar beorien hag an dud dibourvez diwar-dro. E-touez ar re founnusa e oa profou va mammig ha me 'zoñj eo evid an abeg-se e oan bet dibabet gand ar person.

Nebeud a zeziou goude, am-oe va habit nevez, eun habit du, evel ma oa ar hiz vraz, d'ar mare.

D'an naonteg a viz Mae, goude treñ seiz eur, e kasis va zaout en unan euz al liorzou. Oferenn pardon Sant Erwan a zlee beza da zeg eur. E soñj e oan da guitaad ar gêr goude treñ nav eur hanter. War-dro eiz eur hanter, e oan er porz, e-kichenn ar puñs. Va roched, er-mêz va bragou, en em walhen. Bez' e oan o zoavoni va bizaj evid lemel va baro, pa glevis eun toullad taoliou c'hwistell. Kompren a ris dioustu ar pez a hoarveze. Va zaout a dlee beza eet war al linenn. Lammad a reen etrezeg al liorz. Digor e oa ar gloued. Hag ankouaet am-oe e oa daou dreñ ouspenn, deiz pardon Sant-Erwan.

Pa hartas an treñ, ar veajourien a ziskennas ar prenestou-red hag en em lakaas da hoarzin leiz o genou o weled ar paotr-saout gitet evel-se, e lostenn war e vragou hag e vizaj leun a spoum. E-kreiz goapaded ar birhirined - Sant Erwan d'o fardono - e klasken diarbenn va zaout.

Ar mekanisian - ne hovezen ket e ano - droug en e reor, a zalhe da lakaad e varh-du da hwistellad. Krog e oa va zaout da bennfolla. En em blanta a reen just

dirag e vekanik, o trei va biz-yod dezañ war va ividig. Leun a fulor e tiskennas war skalierig e venveg. Med kemer a ris an diaraog gantañ :

- « Ma kendalhez evel-se, me a zo o vond kuit ha da laosken da en em denna... N'eo ket dre va faot ma tremen da dreñ dre va liorz. E-leh ober c'hwistellad da vekanik e-giz-se, evel eun diod, e rafes gwelloh mond gand da hent. Ne welez ket e stank da dreñ an toull-karr ? Ha ma ne fell ket dit chom re bell amañ, lavar d'az tommer dond da rei eun taol-sikour din da zastum va loened. »

- « Me a raio eur renta-kont dre skrid oh errued e Landreger », a youhas ar paotr.

- « N'ankouaez ket dreist-oll lavared eh eo digouezet kement-mañ e Seveon. Da hortoz, kerz war-dreñv peotramant eh an kuit. »

Feuket, med ne helle ket ober a-hend-all, e plegas ar mekanisian. An tommer a ziskennas ha gand sikour eun nebeud pirhirined a galon-vad - pe preset da vond da bardona - ma zikouras da zistrei ar zaout diouz al linenn.

Ar veajourien a zavas en-dro e-barz an treñ. Mond a reas adarre gand e hent e-kreiz youhadennou ha stlakadou-daouarn ar bardonerien.

Galled a ris echui da en em lakaad en va haerra. E-barz ar brosesion, e kerzen e penn-kenta gand va hroaz-aour... ha va habit nevez... Morse c'hoaz n'em-oa gwelet Soaz Seveon, kement a lorh en he daoulagad.

Ar glaskerien-vara

E penn-kenta ar hantved-mañ, e Breiz-Izel, ar glaskerien-vara a oa niveruz braz. Mond a reent du-mañ, du-hont, dre an hentchou, o klask o zammig bara. A-walh e oa d'eur hlasker-bara en em ziskouez e toull-dor eun ti, n'e-noa netra da houlenn ; e visah-linad a zouge dalhmad war e skoaz dehous a lavare sklêr e stad. Eur paour e oa ! Evid toud ar beizanted hen digemere d'an noz pe her pede da lodenna gante o fred, e oa, sklêr hag anad, eun den ha n'e-noa ken netra.

Dleed a reed dezañ an doujañs da genta, gand eun D braz. Aze e oa ar reolenn, kement e Seveon ha dre oll e Bro-Dreger.

Ar beorien a rede ar vro, o bisah war o skoaz, o zreid noaz en o botou-koad. O zaludi a reed dre eur gerig. Ar paour a responte ha pep hini a gendalhe gand e hent.

Piou 'oa ar beorien ? A be leh e teuent ? Ne hovezem tamm ebed ha den ebed n'e-nije bet ar zoñj da houlenn digante. E-touez kantadou a beorien tremenet dre Zeveon, gwech ebed n'em-eus klevet va zud o goulennata war an dra-ze. Koulz lavared, e oa evel ma vije bet divennet gand al lezenn.

Ar paour ne houlenne jamez e vara e-barz ar barrouz e-leh ma veze bet o chom. Daoust d'e ziskar, e vire eun tamm lorh hag e kave gwell foeta hentchou ar parrouziou e-leh ma ne oa ket anavezet. E vale-bro a oa diêz da heul, ar peurliesia ; med distrei a ree d'ar memez ti, beb teir pe beder zizun. Choaz a ree e ehan-lehiou eur wech evid mad, hervez doare an degemer hag eveziegez e ostizien.

Errued a ree, peurvuia, da zerr-noz, asur evel-se da gaoud eur goan vad. Beb noz, ched ar paour a veze kempennet. Degemeret mad e veze e Seveon. Ma vije plas, e tebre ouz an daol famill. Anez, eh ee, anezañ e-unan, war ar bank-tosel, en oaled. Rei a reed dezañ an heveleb soubenn ha d'ar re all.

Ne gemere ket perz er gaoz. Selaou a ree nemetken, e seblante aliez kaoud e spered e leh all, en e zoñjou, evel soubet en eur bed all. Evel ma veze gwelet ar memez peorien, deg pe pemzeg gwech ar bloaz, e oam kustum d'o gitaj. Ha daoust ma ne houvezem ket o ano famill, ne oant ket tud dianav evidom. O dillad e druillou, o baroiou hir, o moustachou braz hag o fennou kreouicheneg on harze da rei eun oad deze, med bep ploaz, meur a hini euz or boazidi ah ee... diwar wel. Daoust ha cheñch kontre o-doa greet ? Pe maro e oant e-barz eur hraou-zaout, eur marchosi pe eur hrañj bennag, pe zoken war an hent ? Ne houvezem jamez.

Ne oa, d'ar mare-ze, nag ospital na ti ar re goz, hag evel-se, emichañs, eo e veze gwelet kemend a beorien o vond dre an hentchou. Lod aneze a ree eur vicher euz o stad. Kaoud a reent gwelloh beva diwar aluzenn evid beza gopret en eur menaj, e-leh ma riskle ar mestr goulenn groñs digante eul labour poaniuz evid eur pae dister. An darnvuia aneze a oa bet, diouz kleved, mevelien er menajou ha dimezet. Kalz a venajerien a gase kuit eur gwaz a oa krog da goll e nerz gand an oad. Ar vaouez hag a helle renti zervij c'hoaz a chome er menaj. Evel n'o-doa ket a di, ar gwaz ah ee neuze war an hentchou, aliez gand asant e wreg.

Darn all a oa paotred yaouank-koz o-doa labouret abaoe dalhmad ti ar memez menajer. Pa laoske hemañ e venaj gand e vugale, ar micherour ah ee da greski niver ar glaskerien-vara.

Va mamm a blee aliez gand ar beorien o tremen. E-leh o dillad eet da druillou ha ne helled ken ober gante, e roe deze dillad all nevesoh, dastumet en ti koñversanted pe bourhizien Ar Roh. Rei a ree ivez deze, eur wech an amzer, eun tammig butun karot hag ar paour he huitae laouen.

Brasa emwel ar beorien a oa, sur mad, pardon Sant-Erwan er Vinihi, d'an naonteg a viz Mae. Ma teue ar birhirined a-vilierou, ar beorien, gwir pe faoz, a oa dre gantchou. Peorien an naonteg a viz Mae a oa kalz niverusoh evid ar glaskerien-vara gwirion. Dond a reent a beb tu. An darnvuia, abaoe an derhent, a gouske war ar plouz e-barz ar menajou diwar-dro Ar Vinihi evid galled en em reñka mad war hent ar brosesion.

Hag an deiz war-lerh, ar skouted karget diouz an urz o-doa, ar peurliesa, trawalh a boan da zistanka an hent. Ar fals peorien a oa teir gwech niverusoh evid ar re wirion. Bez' e oa kammerien faoz war o daoulin, war vord an hent ; reou dall ken faoz ivez, gand peziou lunedou du, gwragez yaouank, en o druillou, gand bugaligou amprestet evid an devez ; gwragez koz o klemm en eur zibuna o chapeled.

A beb tu e veze klevet ar memez randonenn : "Ho pet truez ouzim ; Sant Erwan ho paeo...". Astenn a reent neuze o dorn, hag evel ma'h eo Sant Erwan patron ar beorien, ha ma oa ar birhirined aze evid pedi anezañ, ne hellent ket ober a-hend-all nemed taol nebeud a wenneien e-barz ar hokennou.

Goude merenn, ar fals beorien en em rente dirag diou zor-dal iliz veur Landreger, da vare ar Gousperou, evid resev aluzennoù adarre. Ar re all a jome e bourk Ar Vinihi, en-dro d'an iliz e-leh ma'h ee hag e teue heb ehan ar birhirined. Da zerr-noz, echu ar Pardon, e oa neuze al lonkadeg vraz e-barz an diou ostaleri, troet bremañ en tier debri.

A-hed an deiz, ar peziou hag ar billejou a oa kouezet ha d'abardaez-noz gand toud an arhant-se, lez ar burzudou a ree chervad. Ar fals peorien, mezo-dall, en em gunujenne, en em ganne, a ruille dindan an taoliou. Ar re wirion, ind-i, a gouske dija en eur hrañj bennag, war ar mêz. Gouvezed a reent eh adkemerfent o hent a vizer, an deiz war-lerh, oh esperoud e-nefe Sant-Erwan klevet o fedennoù.

Dimezom

Fin miz even 1929, va hoar Frañsin a zimezas gand Yasent Logiou euz Penn ar Hra, er Minihi. En em zarempredi a reent abaoe eur pennad amzer ha gortozet o-doa ivez pell a-walh evid kaoud eur menaj. A-benn ar fin, en em lakajont en eur menaj a hwezeg devez arad, e Langoad, tri gilometr diouz Seveon.

Va zud, a hrad-vad gand an ozah nevez, ha 'n-oa ket kement-se a vadou, a gavas gwelloc'h rei d'an dud nevez ar chatal, ar meublaj hag ar binvioù red evid o menaj kentoc'h evid ober frejou braz evid an eured. Diskennet e oa niver an dud pedet euz a zaou-hant hanter da hweh ugent.

Eur wir gudenn e oa eun eured peizanted e Bro-Dreger, kement evid ar gerent hag evid an dud nevez. Gourhemenn a ree ar hiz koz, e tlee an danvez-priedou, a-raog mond dirag ar mêr hag ar person, kaoud eur menaj ken braz war vete nebeud hag hini o zud. Dre red, pa veze skuiz an dud nevez o hortoz, o zud ah aotree o bugale da gemer eur menaj bihannoc'h. Setu ar pezh a hoarvezas gand Frañsin ha Yasent. Med ar reolenn "tiegez ebed, dimezi ebed", a jome striz. An dimeziou buan, bloaz pe zaou goude beza en em zarempredet, a oa ral. Hag an traou a ziêsa e c'hoaz e famillou c'hweh pe zeiz a vugale.

Evel just ne zimezed ket gand nep piou bennag a felle deoh. Mab eur menaj braz ne zlee ket darempredi eur plah yaouank euz eur reñk tud izelloc'h evid e hini. Ar zantimañchou a zlee dond goude an aferiou. An taoliou-kurun a drid-kalon a oa... evel divennet.

Adaleg ma taremprede eur paotr yaouank, a ree ano d'e dud hag e tiskoueze dezo, euz e wella, gounidoù an unvaniez da zond. Niver chatal tud an danvez-pried a gonte evid kalz. E gwel da zimezi tost unan euz o bugale, ar gerent a greske niver o chatal braz, saout ha kezeg, o vired annoarezed, koleed ha ebeulezed a veze, dre gustum, gouestlet d'ar werz. Red e oa diazeza an dud-nevez ha pa ne veze ket ar "skiant vad" c'hoaz kement-se gante, e veze red kempoueza en eur mod all bennag.

Eur bennherez - ar pezh a oa ral - a oa eur gudenn evid he zud, ken niveruz e veze an amourouzien. Ar plah yaouank he-doa ar choaz, med an diviz ne zeue ket dezi... siwaz. An dra-mañ a oa ar pezh a anved "ar gador-vrao", med evid galled

mond en e goazez warni, e veze red beza titouret-mad. Ral braz e veze ivez gweled eur paotr yaouank o timezi gand eur plah yaouank euz ar menaj tosta. Er-mêz an darempredou a amezeged vad, e rene aliez eur wir gevezerez etre an daou venaj. Ar re yaouank o-doa aliez an tu da en em weled ha ma prizent nemeur euz o ferziou mad, en em anavezent aliesoh dre o ferziou fall.

Eur wech kavet ar ched, ar famillou en em gave evid ar goulenn-dimezi... hag evid kaozeal euz natur, perz-mad ha talvoudegez ar chatal a roe peb menaj d'e herez. Diskoulmet ar gudenn, e veze choazet deiz an eured. E-touez ar beizanted, an dimeziou a veze, alies, e miz Even pe Wengolo, goude an eost. An devez gwella a oa ar meurzh.

Pa ne veze ket eur harr-di braz a-walh evid ar friko-eured, e veze red klask eun dinell. Red e veze ivez kavoud eur c'hoarier-akordeoñs, gand ma ne vefe ket eured all ebed er harter, evid diwall n'o-defe ket tud an eured da gemer perz e daou friko ar memez deiz hag añfin kaoud asant person ar barrouz.

Kement-mañ greet, e helled kas ar pedadennoù dre ar post. Al lid, dre vraz, a veze dalhet evid ar yaouankiz dreist-oll. Pep famill a gase daou baotr yaouank pe diou blah yaouank d'an eured. Kerkent resevet ar bedadenn, ar paotr yaouank en em lakae da glask e gavalierez. Ar gudenn-ze a houlenne ma vefe pouezet ervad. Piou da houlenne ? Ne vezed ket o vond da gaoud eur begad yod ? Ne vezed ket o vond d'errued re ziwesad ? Ne vezed ket o vond da goueza war eur gavalierez o hortoz he danvez-pried ?

Ar re a veze dilezet - hag aliez e vijen en o zouez, dreist-oll goude va hoñje - ah errue ti tud ar plah nevez eun hanter eur a-raog ma tlee an eured kuitaad an ti. An dud-enor a glaske neuze koubla o zud. Med ordinal e veze muioh a blahed evid a baotred.

Ar plah nevez he-doa droed da gaoud ar wetur gaerra a veze kempennet gand leun a vleuniou. En em lakaad a ree e penn an heuliad gand he zud. Ar bank a-dreñv a veze d'ar vamm ha d'eur har all. Goude e teue gwetur an dud a enor. An ozah yaouank hag e vamm a gloze an ambrougadenn. An heuliad-mañ, eun ugent da dregont gwetur bennag, ah ee d'ar piltrotig etrezeg ar bourk e-leh ma hortoze an dud all pedet d'an eured.

Ar plah nevez, he bleo ganti e kilpenn, a zouge katiolenn dantelezet Bro-Dreger, eur horvenn ha war he broz ledan eun davanjer wenn seiz brodet. An ozah yaouank, eñ, a oa gwisket e du, gand eur gravatenn du war e roched wenn ampezet. Darn euz ar merhed a zouge eur gatiolenn ha darn euz ar bourhizeded mouchouriou tapis pompuz, e kachmir.

E keit ma'h ee an dud-nevez, kerent ha mignoned, d'ar bourk, er menaj, e veze berv evid aoza ar friko. Servijerien ha servijerezed a veze war al leh abaoe an deiz a-raog. O niver a veze hervez niver tud an eured ; war-dro eur servijer evid deg kouviad. Stigna a reent an dinell pe er harr-di liñseliou gwenn ha kinkla a reent al leh gand plantennou glaz, gand brankou kelenn pe lore, gand garlantezennou pe gand bleuniou, gand muioh a evez c'hoaz en-dro da blas an dud-nevez. An taoliou a zlee ivez beza goloet gand liñseliou gwenn.

Goude an oferenn e veze greet tro ostaleriou ar bourk e-leh ma veze bet gourhemennet pep tra en a-raog. Goude, e helled mond gand hent an distro. Er menaj, ar re a gase ar gweturiou a zistage ar hezeg evid rei o lodenn friko deze : diou lodenn gerh.

Darn euz tud an eured, priejou yaouank gand bugale vihan pe an dud oajet, ha ne oant ket eet beteg an iliz, ah ee war-eeun d'ar pred friko. Hemañ a helle komañs.

Ouz an daol enor, e lakeed an dud nevez. En o hichenn, an dud enor hag ivez ar gerent. An dud all en em reñke hervez o nesanded. Plah yaouank ebed ne zlee chom a-gostez. D'an dud enor e oa da bleal gand se.

O kregi gand ar pred e veze sioul an dud. Pep hini o kaoud naon, ar plajou kenta a ziskenne buan a-walh. Goude ar plad braz, ha meur a werennad win - an dud kustum d'eva chistr ne reent ket a gemm etre ar gwin fin hag ar gwin ruz boutin - an teodou a zistage hag e veze galvet ar ganerien. Paotr an akordeoñs ah errue da vare ar meuz diweza.

Kalz a baotred o veza evet muih evid dre gustum a horjelle war o zreid, o sevel diouz taol, hag e veze tamallet dezo o stad dizeread.

- « Ne 'teus ket a vez dirag an dud ? »

Ar peurlies, ar paotr n'en-doa an ket disterra mez.

Ar bal a groge a-raog serr-noz. War-dro hanter-noz, eh eed adarre ouz taol da goania. An taoliou hag ar bankou tennet kuit evid ober plas da zañsal a veze lakeet en-dro en o flas ha red e veze adkregi gand eur pred founnuz, diêz a-walh da gas d'an traoñ.

Ar ganerien, aliez ar memez re, a lakae buhez er veilladeg evid harz lod euz ar gouvidi da venel kousket ouz an daol. Div eur da nebeuta e tlee padoud koan. Ha pa veze pep hini war e walh, e helle ar bal adkregi... e-ser ma'h ee lod euz an dud d'ar gêr. Ar havalier a zlee degas e gavalieriez-eun-devez, war droad, da di he zud. An dud-nevez hag ar gouvidi diweza a zañse heb startijenn, beteg goulou-deiz. Pa zeue an deiz, e kemerent beb a vannah kafe. Ha red e oa neuze soñjal en anaon.

Skuiz hag o varvaillad heb ehan, eh eent en-dro d'an iliz da bedi evid o zud eet da anaon. An deiz war-lerh an eured, e veze an adeured, gand eur friko evel hini an deiz a-raog. Hemañ a veze evid menajerien vihan, artizaned, devezetaerien ha mevelien diwar-dro hag o-doa darempredou a vignoniez gand famillou an dud nevez. Evid ar friko-ze, an dud nevez hag a enor a gemere en-dro o flas.

Hag an dud-nevez a zlee soñjal rei eun nozvez da Zant-Josef - tad mager ar Mabig Chesuz ! - Ar wreg yaouank a yee en-dro e-barz he gwele dezi, hag ar gwaz ah ee da gousked ti e dud. Ar zervijerien hag ar servijerezed a zistroe an trede devez da reñka an traou ha da gaoud ivez o friko, d'o zro. Ar restajou ne vankent ket. Goude en em ziduent asamblez, eh eent da bourmen ha ne veze ket ral gweled danvez priejou-nevez oh en em ober. D'an drede nozvez, añfin, e helle an dud nevez rei kabestr d'o ebatou amourouz.

Ribouliou-milliget

E fin miz even 1929, e kasen va foelladennou diweza. En distro, o resevis, reizet, d'ar bemzeg a viz Gouere, gand an notenn : "Labour euz ar re wella !" E derou miz Eost, e-kreiz al labouriou braz, unan euz kenlabourerien an Ao. Braz a zeuas da Zeveon.

- « Deus d'an ti, eme va mamm, an aotrou-mañ a fell dezañ da weled, te da-unan. »

Rei a reas din eul lizer.

- « An Ao. Reseour e-neus karget ahanon da rei deoh, en ho torn, ar pleg-mañ. Plijet kemer anaoudegez anezañ. »

Hen digeri a ris. Er pleg e oa va engalv da vond e deiziou kenta miz Gwengolo da "Renadur ar H/Kontribusionou" e Sant-Brieg evid tremen arnodou ar genstrivadeg.

Reñka a ris va engalv gand evez hag en em lakaad a reen da adgweled toud ar programm, e diou pe deir eurvez, beb abardaez-noz. Dre ma tostae an deiz, e oan muioh prederiet ha ne reen nemed trei ha distrei 'n em gwele, e-pad an noz.

Skriva a ris d'an dintin Mevel, eur hoar d'am Zad ar Moal, a oa o terhel eun ti-debri, war blasenn ar C'hoariva e Sant-Brieg, da lavared dezi e teufen d'am merenn ganti, deiz ar genstrivadeg.

Dond a reas an deiz braz. Da eiz eur ha kard e tiskennen e gar Sant-Brieg hag eun hanter eur goude, en em gaven e "Renadur ar Hontribusionou". Eur porzier am blenias beteg sal ar divizadegou. Eun den a garg on pedas d'azeza pep hini ouz e daol. D'an taol a nav eur, eun enseller en em lakaas ouz e vureo hag a reas sin dim da devel. Eun all a reas ar galv. C'hweh warn-ugent a oe galvet. Pemp warn-ugent a respontas.

Rei a reas an enseller e gelennadurioù gand eur vouez ken manouz ken on-oa poan o kompren ar pezh a lavare. Ar genstrivadeg a voulhas gand ar skrivadenn. "E Bearn" e oa an titl. Med an enseller a vanouze kement ken am-oa komprenet "E became", da lavared eo "war velo" e brezoneg. Eur henstriver a houlennas :

- « Aotrou Enseller, n'on-eus ket komprenet titl ar skrivadenn. Setu ma houlennom diganeoh komz goustadig. »

Poania a reas da êsa distaga gwelloc'h e heriou, o lenn goustad, en eul lavared diou wech toud ar frazennou. Daou-ugent minutenn on-oa evid ar skrivadenn. Seblanted a reas din beza êz a-walh, hag amzer am-oa da adlenn anezi diou wech a-raog he rei.

Kerkent, an eil enseller a ingalas eur skrid all a bede ahanom d'ober eun displegadenn diwar-benn ar "hontribusionou dizeeun". Kement am-oa gwelet hag adgwelet ar gentel-ze, ma lakis toud ar pezh am-oa desket, du war wenn, war va follenn e nebeutoh evid eun eurvez. Siwaz, ne oa ket evel-se evid toud an dud. D'an eur, an adskridou a oe dastumet hag an enseller a roas an emgav dim, a-nevez, da ziv eur goude kreisteiz.

Da greistez, e oan en ti va zantin. Lakeet he-doa din va asied war eun daolig en he hichenn, ha goude beza goulennet kelou diouz toud ar famill, e houlennas ivez diganin perag e oan e Sant-Brieg. Respont a ris am-oa komisionou da ober ha

paperiou da leunia e gwel eur genstrivadeg e oan e soñj da gemer perz enni. Med o lavared ivez, n'am-oa ket kemeret diviz ebed c'hoaz. Goude ar hafe gand va hendirvi, eh is en-dro da zal an divizadou. Diank e oa tri ahanom. Kavet o-doa moarvad e oa inutil evite kenderhel.

Boulha a reem gand an ekonomiezh politikel. Renta a ris eur skrid-klok war eun destenn ah anavezen dre eñvor. An traou a zeuas da veza diêsoh goude, gand ar jedoniezh. Ar problem a houlenne tri diskoulm diêz d'ober en eun eur ha kard. Goude beza prederiet eur pennadig, e teuas din da zoñj, a-greiz-toud, am-oa bet eur problem damheñvel, e-kerz va femped miz studi. Bez' am-oa anezañ em eñvor, penn-da-benn. Ne jome ken ganin nemed reñka ar sifrou. Ar genstrivadeg a oa war he diwez hag en em weled a reen sur da hounid. Stad a oa ennon, fier dija da weled va labour priziet war e rez.

Ha setu ma oa erru tro an dever diweza : ar fizik. Eun enseller a roas dim ar skrid. Diêz kaoud êzetoh. An darnvuia euz ar genstriverien a frote o daouarn. Hen lenn a ris. Med en eul lenn, e kollis va liou hag en em lakis da grena. An destenn a oa ken kaer ha tra... war ar ribouliou, a zalvoudegez, ped seurt a oa aneze, hag all... Gwall darvoud ! Ar skol he-doa kinniget din an deveriou, he-doa ankouaet o menegi en he leor, ha n'he-doa eta kaset dever ebed din war ar plomennou... Hag, ouspenn da ze, biskoaz n'am-oa, me, gwelet eur blomenn a-dost. Sabatuet e oan !

Daoust da ze, e tastumen toud va nerz kalon. Rentet am-oa pevar dever e-touez ar re wella, hag e krogen da zoñjal e vefe ar varnerien damantuz ouzin, en va femped dever. E-pad eun eurvez, en em lakaen da skriva war ar plomennou. Lavared a reen e oa lod aneze a zune ha lod all a strinke an dour ; o-doa o zalvoudegez e-barz ar hêriou med nompas war ar mêziou ; e oa dour ar puñs kalz gwelloc'h evid hini ar plomennou ; e oa, en ti-arsav an hent-houarn, e Langazou er Vinihi, eun spes plomenn ispisial evid rei dour da unan euz treñiou bihan an departamant.

Kerkent hag e kuitais sal ar genstrivadeg, e kemeris hent ar gar. Sevel a ris e-barz an treñ hag e kouezis war ar bank. Soñjal a reen en toud ar boan am-oa kemeret, er hantadou a eurvezioù tremenet o studia e-pad an noz, o krena gand ar riou e-keid ma kouske ar re all. Toud se evid mann, dre ma 'doa aotronez ar hontribusionou o-doa aozet ar mennoziou-skrid evid ar genstrivadeg ankouaet en em glevet gand o heneiled koz a rene ar skol dre lizer.

Va zoñj ah eas goude war-du deziou kenta miz Gwengolo 1923 pa 'n-oa ma harzet va zad da zerhel gand studi e Sant-Jo-Lannuon. Distroet da Zeveon, e lavaren d'am zad e oa tremenet mad ar genstrivadeg hag e vefe anavezet an efed a-benn eur miz pe war-dro, e vefe roet ar postou e diou lodenn, tri miz goude an efed, evid ar re genta, ha c'hweh miz goude evid ar re all. Evez am-oa ouspenn da lavared e risklen kalz da veza e-barz an eil rummad.

Ijinet am-oa an taol-ze evid ma vefe saveteet an doare nemetken. E derou miz Here, unan euz keneiled an Ao. Ar Braz a zeuas da Zeveon evid an eil gwech. Her pedi a ris d'am heul d'ar marchosi. Rei a reas din eur pleg a zigoren buan. Rei a reed din da hovezed e oan rasket.

Ar steredenn vad am-oa lakeet enni toud va fiziañs a oa eur steredenn-red.

Ar senedour

Trimiziad diweza ar bloavez 1929 a oe unan euz ar re boaniusa em buhez. Bloñset dor gand va zro-wenn, en diskred ganin va-unan, e chomen eur pemzeg deiz bennag heb sevel va fri, goude em-oa bet gouvezet e oan rasket. Ne houezen ken penaoz en em gemer evid kuitaad ar menaj ar primma ar gwella.

An Ao. Picard, sekretour kenta ti-kêr Landreger ma zitouras d'ar mêr, ar senedour Gustav a G/Kergezeg. Asanti a reas ma reseo, eur merhervez. Ne oan ket va-unan o houlenn e weled. Pemp pe hweh all, en o hoazez e-barz an trepas, a hortoz e zro da veza degemeret. Errued a reas va hini. Ar senedour a reas din kalz a houlennou :

- « Anavezet mad am-eus ho tad, emezañ. Med bremañ e vez goulennet labour diganin gand eun toullad tud. Ober a rin va zeiz posubl ha skriva a rin deoh a-benn eur miz pe war-dro. »

E gwir, eur miz goude, e kinnige eur garg din war hent-houarn an departamant, evel kantonier war linenn Landreger-Ploueg-Pontrev. Eur miz am-oa evid respont. An dro-mañ, em-oa kavet labour : micherour war al linenn a dreuze liorzou Seveon. Me, hag a oa bet e-pad kenta bloaveziou va bugaleaj, touellet gand an treñ bihan o tremen dirag menaj va zud, me hag am-oa gallet ivez mond e-barz, yaouankig c'hoaz, setu ma kinniged din e weled a-nevez bemdez, pleal gantañ, gand e raillou...

Toud al labourerien-douar diwar-dro, toud ar re o-doa klevet, muioh pe nebeutoh, komz diouz va nozveziou tremenet o studia, toud va hamaraded, o-dije greet goap ouzin, toud o-dije soñjet ne dalveze ket ar boan da Jobig Seveon beza tremenet kement ha kemend-all a nozveziou en e skridou, evid beza kantonier an hent-houarn... Toud an dud o-dije c'hoarzet leiz o genou !

Ar vicher-ze, gand se ken enoruz ha n'eus forz pesort micher all, ne helle ket beza miret evid mab eur menajer euz Bro-Dreger. Ar senedour mad a houeze pegen lorhuz e oa peizanted ar vro. E-touez anezo n'en-oa ket kalz a vignoned euz e gostezenn - ha bremañ c'hoaz e soñj din e-noa kinniget al labour-ze din e sell nemetken da feuka va fouge ha va lorh. Gouvezed a ree, en a-raog, na me na va zud ne zegemerfem ar garg-se.

“Paotr yaouank siriuz, labourer, mad e peb doare, a glask fred !”

E hanter miz Genver 1930, va zud en em glevas gand va breur Yann evid laosken gantañ o menaj d'ar gourmikêl da zond, ha da en em denna goude en eun ti bihan anvet “Penn ar Pont”, dirag ar pont a lamm dreist d'ar Yodi, oh errued er Roh. Divizet o-doa gwerza eul lodenn euz an eostou diwar o zav, eul lodenn euz o binviou ha darn euz o loened.

Va breur a vire al lodenn all euz an eost, daou euz ar pevar loen-kezeg, pemp buoh hag ar foenn. Ar peurrest, da lavared eo al lodenn vrasa euz ar chatal, a vefe gwerzet diouz ar hresk, a-wel d'an oll, gand eun noter, eun urcher pe eur grefier a beoh.

An Ao. Tachen, grefier ar barner er Roh, kuzulier ha karget gand va zad da bleal gand aferiou Seveon - va mamm a gase e amann dezañ beb sizun - e-noa dija greet e ginnigou evid ar werz. Med evel ne oa nemed eur grefier bihan a beoh, ne helle ober nemed en e ganton, hini Ar Roh. Er hontrol, eun urcher a justis e-noa karg da ober, hervez al lezenn, e-barz toud pastell-bro Lannuon. Chomet e oa 'ta va mamm war vete-gweled.

- « Ni a zoñjo ennoh pa vo deut ar houlz », en em gontantas, hi, da respont d'an Ao. Tachen. Soaz Seveon he-doa, sur mad, eun ide a-dreñv d'he fenn.

Gouvezed a ree, n'eus forz penaoz ne oa nemed an Ao. Jullo euz Landreger, bet anvet e diou garg a urcher hag a hrefier, doareet evid ober ar werz publik war gresk.

Eur paotr fin e oa an Ao. Jullo !... euz ar re onesta ivez, ha kustum dreist-oll da werza traou an douar. Kemeret e oa gand toud an dud evel ar gwella gwerzer war gresk euz toud ar hontre. Eun tamm dre oll, e-noa kouraterien hag a roe dezañ da houvezed en a-raog ar gwerzedigeziou a helle beza greet en darnvuia euz ar parrouziou.

Hen anavezad a reen nebeud a-walh, o veza gwelet anezañ o tremen war hent Landreger d'Ar Roh en e oto "Donnet-Zedel". Eun abardaevez, d'an ugent a viz Genver 1930, eun tamm goude advern, eh erruas, en oto, e Seveon. Ha goude beza salutet tud an ti, e krogas dioustu gand e destenn :

- « Klevet am-eus, en deziou-mañ, ho-peus greet ho mennoz laosken ho menaj gand ho mab ha da werza an eostou, ar binviou hag ar chatal, war gresk. O tremen e oan e-barz ar harter ha soñjet am-eus dond da ginnig va zervijou deoh. Gouvezed a rit emichañs, e vezan karget gand an darnvuia euz ar venajerien a laosk o menaj da bleal gand ar werz. Kared a rafen ho kweled ober ivez evelte. »

- « Beteg-henn, n'on-eus kemeret mennoz ebed, a respontas va mamm. N'on-eus ket goulennet e ali zoken gand an noter a-raog goulenn gand perhenn Seveon aotrea terri al lizer-feurm ha rei on dilez. Soñjet am-eus laosken ar menaj gand va mab ; med daou vab am-eus, evel hemañ hag a zo ar yaouanka, a lavaras-hi, en eur ziskouez ahanon... ha n'om ket ali da laosken ar feurm gand e vreur a-raog ma ne vo ket bet plaset. Ouz red, her rofem d'an daou vreur. Neuze e reñkfem an traou etrezom ha ne vo gwerz ebed. Med pehed e vefe, rag ar vicher troher-buzug n'a ket da Jobig. Koulskoude eo siriuz, plijed a ra dezañ labourad, bez' e-neus eun diskamant mad... Ha daoust ha ne hellfeh ket, c'hwi, kaoud eun dra bennag evitañ, dre zegouez ? »

An Ao. Jullo a zeblantas souezet eun tamm. En em zoñjal a reas eun nebeudig a-raog goulenn diganin :

- « Ha bremañ, petra a fell dit ober ? »

- « Al labour ne ra ket aon din. Me a garfe kaoud eur garg, hag a hellfen, o poania, sevel, gras dezi, beteg eur reñk deread. »

- « Te a zeblant din beza eur paotrig uheleg, te ! » Hag o trei war-du va mamm :

- « Ma kavan eul labour dezañ, ha rei a rafet ar werz din ? »

- « Ma plij al labour nevez-se dezañ, ne lavarin ket nann. »

- « Selaouit... a-benn nebeud a viziou, e vo red din emichañs kaoud eur sekretour all ; ha peogwir am-eus an dro, e kinnigan dezañ ar post, adaleg bremañ hag evel-se e hello komañs deski e vicher. »

- « Mar deo evel-se, deuit e-barz, Ao. Jullo, ha kaozeom eun tamm diouz on afer. »

Va mammig, fier diouz he zaol, a ziskargas eur werennad vad a win d'an Ao. Jullo. En eur vond kuit, e lavaras din :

- « Deus d'am gweled disul, war-dro deg eur, ha d'an deiz kenta a viz C'hwevrer, e helli kemer da bost. »

Eur wech c'hoaz he-doa greet Soaz Seveon, gand ampartiz eur mestr-jubennour.

Bizit ar hrog-labour

D'ar zul war-lerh, da zeg eur, e oan ti va fatron da zond. An Ao. Jullo a reas din antren en e studi :

- Da genta, e vo red dit deski elfennou ar vicher. Va hloareg, Erwan an Abad, en em gargo diouzit. Ne hellin ket da baea e-pad an amzer-ze. N'eo ket ar hiz. Med a-benn eun nebeud miziou, e prometan dit e vo adgwelet an traou. »

Sevel a reen va mouez, lentig.

- « Va zud ne gomprenfet ket e rafen eur vicher heb beza paeet. Goulenn a ran ganeoh soñjal ervad, eun tammig, ha rei din eur gwenneg bennag adaleg ar miz kenta. Ouz red, e rentin deoh an arhant-se, diwezatoh, pa vin e stad da veza talvouduz evidoh. »

- « Kompren a ran ahanout, emezañ. Rei a rin kant lur dit beb miz ha kresket e vo da bae, hervez da dalvoudegez. »

Kant lur, d'ar mare-ze, a oa kement ha priz pemzeg pred en eun ti-debri deread.

- « Eun dra all am-eus da houlenn diganeoh, Ao. Jullo. »

- « Selaou a ran. »

- « Ne evan na jistr, na bier, na gwin : bannah alkohol ebed. Ar medisin e-neus kuzuliet din eva e-kerz ar veurevez ivez. Kared ar rafen kemer eur bannah kafe war-dro deg eur. Anaoudeg braz e vefen deoh. Bezit sur ne gollin ket amzer. »

- « Goude toud, emezañ, estonet, ma talhez kement-se d'az kafe, e helli en em glevet gand Chann-Vari, va matez. Hag evid boulha, deom da eva unan dioustu. »

Kenta karg

D'an deiz kenta a viz c'hwevrer 1930, da nav eur, e oan en ti va mestr - an hini nemetañ. D'ar beure-ze, ar porz a oa leun-kouch gand eur pezh bern koad dero hag

oulm. Eun den war an oad, braz, gand eur gasketenn goz a vartolod a goñvers, a oa en e goazez war unan euz ar heviou.

- « Te a zo, emichañs, mab da Zoaz Seveon ? Me a zo euz ar Gwindi. O hortoz ahanout e oan. Gweled a rez toud ar bern-koad-se ? Leun eo ar porz gantañ hag ar patron ne hell ket zoken lakaad e wetur e-barz. Red eo dezañ he laosken e-barz ar ru. Red e vo dit ma zikour da droha toud ar hoad-se a-bennadou. Goude eh esain en em denna evid her faouti gand ar vouhal hag hel loja. »

- « Me a zo deut da labourad er bureo », a respontis dezañ.

- « Marteze. Med red e vo dit koulskoude ober ar pez a lavaran dit... Ar glianted ne hellont ket dond er porz. A-hend-all, setu ar patron o tond ; ema o vond d'hel lavared dit e-unan. »

Goude beza stardet va dorn, e lavaras din piou a oa an hini a oa o komz ouzin :

- « Hemañ eo va jardriner ha va embanner evid ar gwerziou. Ar memez ano ha te e-neus : Job ar Moal. Glaharet on pa rank goulenn eun taol-zikour diganit, med emeon o paouez resev toud ar hoad-se. Stanket eo ar porz gantañ ha red eo her harza ar primma ar gwella evid ma hellin loja va gwetur ha ma hello an dud dond d'am bureo. Gortoz a ran eur harrad all. N'eus forz penaoz, an deziou-mañ, nag An Abad, na me, n'on-eus amzer da bleal ganit. Med na rez ket gwad fall. Adaleg ma vo bet draillet ar hoad, e refom eur plas dit e-barz unan euz ar bureviou. »

An daou zevez kenta, Job ar Jistr evel ma ree Chann-Vai dioutañ, a glaskas ma amproui. Sacha a ree war an treant, evel eun diaoul. A-boan ma veze dibennet eur pennad, ma lakae an heskenn war eur pennad all. Beb an amzer, eh ehane, evid lipad eur chopinad. Gortoz a reen gand pasianted, va dorn war dornell an treant... hag e heskennem a-nevez.

D'an eil devez, d'abardaez, Job ar Jistr a oa anad warnañ e oa skuiz. Muioh eh eve, ha muioh e c'hweze ha muioh e skuize... Dilerhia a ree da labourad. Gortoz a ree, emichañs, ma houlennfen truez. Med kement-se a oa ma anavezad fall. Ha setu ma en em rentas... da genta.

- « Nondedie ! Lavaret e vefe e rez an dra-ze a-hed ar bloaz. »

- « Buannoh eh efom hag abretoh e vo echu al labour ganim. »

Adaleg an deiz war-lerh e kemeras Job eul lusk goustadikoh. Goulenn a ree aliez ober eun tenn alan. An troha koad a badas koulskoude diou zizunvez ha ne oa nemed ar zadorn diweza am-oe droed d'am merenn.

En em lakaad a hellen erfin er bureo. Kemer a ris plas e hini An Abad, eur zal vihan e-kichenn kegin ar famill Jullo. An Abad a roas din nebeud a zisplegaduriou. Med ne gomprenen ger ebed enne. Lakaad a reas din, war an daol-ront, eur billed paea ha ne oa ket bet paeet ha daou-skrid-enebadenn, unan war baper gwenn ma ne bae ket an dleour pa'h ee an urcher da gaoud anezañ, hag egile, glaz-mor, da laosken gantañ.

- « N'eo ket diêz, eme An Abad. Ne 'teus nemed lenn ! Mond a ran da Lezardrev gand ar patron. Distro e vefom a-raog kreisteiz. »

Ma laosken a reas gand va filled-paea ha va daou-skrid-enebadenn. O lenn hag o adlenn a ris. Digomprenuz e oant evidon... Dre ar jardrin, eh is da vureo ar

patron, e spi da gavoud eno paperiou demheñvel evid gelloud o lakaad kemm-ouz-kemm. Siwaz, ne gavis netra. Fall an traou ganin, eh antreen er gegin. An Itron Jullo a oa eet d'ober he homisionou. Chann-Vai a oa heh-unan. Ober a ris perz dezi euz va ambloariou.

- Bez' eh an da weled an dra-ze ganit ha da glask da zikour. Reiza a reas he lunedou war he fri ha selled a reas ouz ar paperiou:

- « Ar paperiou-ze a zo diwar-benn unan bennag ha n'e-neus ket paeet », emezi.

Goude beza eveziet piz ouz an timbchou-gwiriou peget war ar billed-paea, e lakaas Chann-Vai he biz war beb timbr, a ziskouezas din lodenn uhella ar baperenn hag a lavaras :

- « Ma vijen te, e skrivjen aze, war laez, ar pezh a zo skrivet war an timbr. Med ne hellan ket lavared muioh dit. N'or bet morse er skol, ne houvezan na lenn na skriva. Ma ne gomprened ket, laosk da goueza ; bremaig e komzin diouz se gand ar patron. A-raog gouvezed e vicher, eo bet red ivez ma tisplegfe unan bennag dezañ, nann ? »

Pa'h erruas an Ao. Jullo, Chann-Vai e gemeras a-gostez.

- « Gopret ho-peus ar paotr-yaouank-mañ evid deski e vicher dezañ hag e eila ; hag e-pad pempzeg deiz e rit dezañ heskennad koad. Ha kerkent goude, e roit dezañ paperiou da leunia, heb an disterra disklêriadennou. Hirie marteze, en em lakait evel eun den zavand ; med me a oa aze en ho raog hag am-eus ho kwelet aliez gwall strobet hag o telefoni d'an Ao. Philippe a oa aze en ho raog evid... ho tivouillenna. »

Chann-Vai

Chann-Vai a oa o chom en eun ti bihan, nebeud a gammedou diouz he fatron. Malevuruz e oa bet pa veze dimezet gand eur pried jalouz, ever, rust, lochore, o labourad a-bennadou berroh an eil evid egile, o tispign e-barz an ostaleriou an nebeud a houneze, o klask jeu ouz e wreg evid netraigou, hag o skei warni ken aliez all. Ha setu ma oe gand eun diveh gwirion eo e welas anezañ o kuitaad anezi e 1927, o laosken ganti eur mab seiteg vloaz. D'unan euz heh amezegezed tosta, deuet nebeud goude maro he gwaz d'ober dezi he gourhemennou-kañv gand eun tamm pilpouz anezi, e respontas an intañvez ken didro hag an ordinal, ken seh ha tra :

- « Poent eo dit paouez gand da ardou. Gouvezed a rez mad ar pezh a hoarveze amañ, peogwir 'm-eus bet ranket klask repu du-ze, meur a wech, evid harz da veza pilet gantañ. Ranket am-eus bet labourad bemdez evid pourvezi da ezommou va famill ha paea ar gwin a eve. Rag me eo, ha me va-unan, an hini he-deus lakeet an tan dindan ar zoubenn. Ema aze bremañ, interet e vo evel peb kristen, med na gred ket eh in da leñva ha da glemm dirag an amezeien a deuio da weled anezañ evid ar wech diweza. »

Anavezet mad e oa Chann-Vai e kêr evid he zeod stagellet mad hag he marvailloù founnuz. A-wechou, pa'h ee itronezed Landreger da bourmen pe da

birhirinad en otokarr, e veze kinniget he flas dezi evid mann, evid c'hoari an diduerez. An alies, Chann-Vai ah asante, gand aotre he fatroned. Hag an itronezed ne vezent ket dipitet gand o beaj. Plijadur a veze ! Chann-Vai ne baoueze ket da gonta istoriou, kement e brezoneg hag e galleg... ha ne vezent ket toud gwirion, anad deoh !...

E-pad va rag-studi ti an Ao. Jullo, e fellas dezi ober he henta pirhirinaj da Lourdez. Med ken paour e oa, ken na helle paea nemed an hanter euz ar veaj gand an tammig arhant he-doa lakeet a-gostez. Hag evid netra er bed Chann-Vai n'he-dije amprestet pe goulennet eun tamm avañs war he houmanantou gand he fatroned. Dond a ris d'he sikour hag e rois dezi hanter-kant lur dioustu :

- « Soñj am-mo diouzit em fedennou, du-hont, ha ma vezan pinvidig eun deiz bennag, bez assur e paein ahanout en-dro. »

N'he-deus jamez ankouaet. Ped kwech n'he-deus ket adlavaret din :

- « Ma vezan pinvidig, her restaolin dit !... »

Chann-Vai a oa en em daolet spontuz d'an Ao. Jullo, d'e wreg ha d'o fevar a vugale. Med, euz an tu all, ne hwite jamez da lavared deze ar pezh a zoñje, e gwirionez :

- « Ma n'oh ket kontant, n'ho-peus med mond da vale. Me a oa amañ en ho raog, hag e choman. »

Chann-Vai ne hoveze na lenn na skriva marteze ; med donezonet-kaer e oa : eur spered-lemm a blah ! gand eur memor hag eur galloud souezuz d'evazia ouz an oll hag ouz toud an traou.

An Ao. Jullo a zastume ar billejou-paea evid an tier-bank, ti ar goñversanted. Karget e oan bet gantañ d'ober al labour-ze en toud ar parrouziou diwar-dro. Chann-Vai, daoust dezi da veza dizesk, en em garge diouz tud kêr : eun tregont billed paea bennag beb pemzeg deiz. Reñka a reen eviti eun deg bennag beb tro, karter dre garter, ru dre ru. O rei peb billed dezi, e tiskouezen dezi ano ar hoñversant hag ar gont arhant da zastum. Selled a ree piz ouz niver an timbchou-gwir ha penaoz e oant reñket war beb paperenn. Aze e oa he merk dezi !

Evel ma'h anaveze mad toud ar baerien fall, e lavare din a-raog mond :

- « Gand hemañ, e vo red din taol evez ! »

Ma veze unan ha 'nije ket paeet, eo dre ma veze degouezet dezi reñka fall he faperou. Ma he-deve an disterra douetañs war ar reñkadur, e houlenne digand eur hanfart, war ar ru :

- « Paotrig, ankouaet am-eus va lunedou... »

Hag e tiskoueze dezañ ar billejou-paea :

- « Lavared a hellez din ar pezh a zo skrivet war hemañ ? Ne zeuan ket a-benn d'hel lenn. »

Ha Chann-Vai a reñke reiz he billejou a-raog kenderhel gand he hent. D'he distro, e tastumen an arhant goude beza gwiriet. Da genta, evid farsal eun tammig, e lavaren dezi e-giz fourdenn :

- « Va faour-kêz Chann-Vai, n'ho-peus ket ho kont. 'N em drompla ho-peus greet en eun ti bennag. »

En em lakaad a ree neuze da grenad ha koll a ree he liou.

- « Kont buan en-dro. Bez' eh ez da ober din renta ma ene. »

Ober a reen seblant da adkonta en eur zizoania anezi. Med paouez a ris prim ar farsou-ze. An Abad a lavaras din, eun deiz, he-doa Chann-Vai... eur hleñved-kalon.

E-pad tri bloaz he-deus dastumet arhant eun daou vil billed paea bennag. Eur wech hepken, e reas eur fazi dister. En deiz-se, eh erruas en ti-studi, he dremm dislivet.

- « Job, emezi, me a zle kaoud kant lur re. Gastig Traou Meur a zle beza roet din eur billed re. »

Plah Traou Meur a zalhe eun ostaleri, eur hilometr diouz Landreger, en tu all d'ar Yodi. Ne oa ket brudet evid he onestiz. Bez' e oa, e gwir, kant lur re e kont Chann-Vai. Kemer a reas ar billed en-dro.

- « Mond a ran en-dro da weled ha da rei dezi eur gentel vad. »

Goulenn a reas digand ar goñversantez ha ne oa ket en em dromplet en he hont. Houmañ a respontas m'he-doa Chann-Vai greet faziou en he zro, e oa gwaz-a-ze eviti ; ha n'eus forz penaoz, hi, hag a zalhe ostaleri Traou Meur, he-doa paeet he dle, ha ne felle ket dezi ken kleved komz diouz an afer-ze.

Gand he neuz vad, evel a-vepred, Chann-Vai a respontas :

- « Ahanta, mad eo ar jeu ; rag kontchou toud an tiez all a zo bet adwelet. Hag emañ-me, eta, gand kant lur re. »

Sourprenet, ar goñversantez a skrabas he groñj :

- « Gortozit eur vunutenn. Mond a ran da adweled va hontchou. Galled a ran en em drompla, a-wechou. »

Med Chann-Vai a oa eet kuit dija. An deiz war-lerh, e welis plah Traou Meur oh errued em bureo, mezeg :

- « Tremenet am-eus ouspenn eun eurvez, deh da noz, da adober va hontchou, ha manked a ree din kant lur. Ne vefe ket ar billed am-eus roet ouspenn da Chann-Vai ? »

- « Evuruzamant, ho-peus bet d'ober gand onestoh evidoh », a respontis, en eur astenn he billed dezi.

An ti-studi

A-benn eur mizvez er bureo, e oan deut da gaoud kalz a anaoudegez hag ar billejou-paea n'o-doa ken an disterra segred evidon.

Eun deiz, An Abad am fizias e oa o prepari, dre lizer, eun "testeni-e-gwir" e Skol-Veur Roazon. En e eil ha diweza bloavez e oa, ha pa ne houlenne ar skol-veur testeni ebed evid lakaad e ano, e kuzulias din hen ober ivez.

Dleed a ree kenstriva e miz Even hag adaleg penn kenta miz Here, e-noa ar mennoz da vond da Bariz da labourad evel kloareg en eun ti studi braz a urcher, e-

leh ma hellfe, gand e desteni, beza paeet kalz muioh evid e Landreger. Kerkent ha distroet da Zeveon, d'ar noz-se, e lavaren d'am zad, e oan adarre o vond da studia dre-lizer hag e c'hoantaen, eta, adkavoud o hambr.

- « Mar deo red dit heul kenteliou adarre, se 'zo pa n'out ket sur da vired da garg ti an Ao. Jullo ? », a houlenent diganin, gand kalz a zoan.

- « Arabad kaoud aon... An hini a zlean kemer e blas, a gont mond da labourad da Bariz a-benn c'hweh miz ; ha red mad e vo kaoud unan bennag da gemer e blas. »

Dizoaniet, e lavarjont din e hellen, adaleg an deiz war-lerh da noz, adkemer o hambr.

Ar henteliou hag ar vuhez labour daonet a "zaou-ugent eurvez war an tu eneb" a adkrogas a-nevez. Bep kreisteiz e teuen d'am merenn da Zeveon. Pa zebre va zud hag an devezataerien da unneg eur, e kaven va fred, war glaou an oaled. Ar vammig a ree diouz he gwella evid ma mounouna. Peillet e veze ar patatez, amann e veze e foñs ar skudell hag ar hig-sall a gemere plas ar lard druz.

Tremen a reen va abardaeveziou ha lod euz va nozveziou o labourad. Ar mekanik da wriad a ree evid va zaol a-nevez. Adaleg an deiz kenta a viz Ebrel, An Abad am hargas d'ober toud al labour a zelle ouz ar barner-a-beoh. Ar patron e-noa prenet ar garg a "urcher barner-a-beoh" abaoe daou vloaz ha ne anaveze ket c'hoaz kalz a dra enni.

Beb miz, e veze eun aodiañs a bolis dindan renadur eur barner a beoh karget da gas ar barnedigeziou a zeue da heul ar hontravañsionou greet gand an archerien... Red e oa konta etre pemp prosez verbal ha tregont pe daou-ugent beb miz, ha kemend a varnedigeziou.

Ar memez re e oa bepred an torraduriou lezenn: sklêrijenn ebed war ar marhou-houarn, pe ne oa plakenn ebed, pe kannou e-pad an dañsou-noz, pe beza mezo war an hent...

... Me eo a zlee lakaad ar barnedigeziou war paperiou moullet, greet en a-raog, dre rumm torradur ; ober sina aneze gand ar barner ha goude skriva ar rollou. Eul labour inouuz ha briz-voazeg. En em garga a zleen ivez diouz ar huzuliou-famill. Lakaad eur hulator evid ar vugale minor pa oa eet o zud da anaon. Labour ar grefier a oa c'hoaz ouspenn aoza enklaskou darvoudou-labour, lakaad pe zevel ar siellou goude eur maro...

...An Abad a ree e vad euz va gouziegezh war-gresk evid prepari e "desteni e gwir", er bureo. Me a studie e-pad an noz, e Seveon, kement-se a oa reiz. E garg a oa deski ar vicher din. Va hini da ober al labour.

Berr ar peuri ganin

Ne gollis ket va amzer ha da fin miz even, e kasis va foelladennoù deuz ar henta trimiziad d'am reizer, da Skol-Veur Roazon. Ar studiou a zlee adkregi goude an eost. Tremen a ree ar miziou hag an degouezioù a stankae. D'ar henta a viz Gouere

e timezas va breur Yann gand Ivona Broudig, euz Priel. Evel just, e oan ar paotr-enor.

War-dro an hanter euz ar miz, e oe gwerzet war-gresk an eost war droad, hag eul lodenn euz binviou ar menaj. Siwaz, ral e oe ar brenerien. An dra-ze a hoarveze aliez pa gemere unan euz ar vugale dilez e dud. A-boan eun drederenn euz an eost a gavas prener. Divizet e oe eta e rafe va breur an eost war e gont : arhant gwerz ar greun a zeufe d'am zud hag ar plouz da Yann, evid paea e labour. Kement-mañ, evel just, a oa gouniduz dezañ. Gwerzet e oe eul lodenn euz an oustillou. Pa oe embannet ar priziou, Yann en em dennas kuit evid nompaz harz ar hreskou da zevel.

Evel ma ne oa ken red d'am zud chom e Seveon, e oant en em dennet, e fin miz Gouere, e Penn ar Pont. O heul a reen. An ti bihan-ze a oa bet da Yann-Vari-Boujet, "patriach an tog meloñs". Gand eun distridigez vraz eo e kuitaen al lehiou-ze. Enne e oan bet ganet hag enne am-oa bevet e-pad ar pennad brasa euz va yaouankiz.

Gand berz e tremenas An Abad strivadegou eil bloaz e "desteni-e-gwir". Distrei a reas euz Roazon gand e desteni en e hodell. Ober a reas perz din euz e vennoz da guitaad evid mad studi an Ao. Jullo, war-dro hanter miz Eost evid mond da Bariz d'an deg a viz Gwengolo, pa 'n-oa kavet labour en eur studi a-bouez.

Evel ma ne hoantaen ket chom re bell e karg va zud, e oan en em glevet evid va merenn gand Marharid an Diuzet, eur vignonez d'am mamm, bet o chom e Sant Renaod hag a oa addimezet gand Fañch ar Bail, kereer a vicher. Ar re-mañ a zalhe eur stal-vouteier, ru Sant Gwillerm e Landreger. Priz ar pred a oa bet lakeet da ugent real.

Abaoe va hrog en ti an Ao. Jullo, va fae a oa a gant lur en heh uhella. A-raog kemer va frejou ti an Itron ar Bail e rois dezi da hovezed e ranken derhel piz d'am gwenneien. Va dizoania a reas dioustu :

- « Anavezad a ran da vamm a-bell 'zo. Eun amzer a oe e tebren aliez evid mann e Seveon. Arabad dit 'ta ober gwad fall. Debri a ri ganim beb kreisteiz. Rei a ri dim ar pez a helli ha gwelet e vo diwezatoh. An Ao. Jullo a zeuio hag a gresko da bae deiz pe zeiz. Ha ma 'teus ezomm euz eur re voutou-ler, goulenn diganin. »

Med an Ao. Jullo, zoken goude ma oa eet kuit An Abad, ne ree ano ebed d'eur hresk a bae. Evel ne greden ket komz dezañ diouz se, e lavariz daou herig da Chann-Vai.

- « Ar patron ema e vennoz kreski da bae med d'ar bloaz hepken. Ne bae ket ker ahanout, gwir eo, med lavared a ra e oa evel-se evitañ ivez... »

N'em-oa ken nemed da gemer pasianted. Toud an tammou gwenneien am-oa lakeet a-gostez a oa eet kuit da baea va henteliou dre lizer.

Penn an hent-keo

E-barz ti Penn ar Pont... e oa bet miret evidon eur gambr dindan an doenn, er zolier. Eun daol-vihan a oa va bureo. Gwech ha gwech all e ree ano va zad euz an

“Aotrou he ne honeze ket zoken peadra d'en em vaga”. Soñjal a reen e meur a feson evid nompaz chom war gein va zud. Eun abardaevez-noz, o reñka peb sort paperiou em hambr, eh adkaven eur skrid-embann diwar-benn an “Asurañs war ar vuhez” bet roet d'am hoar, nebeud a-raog, gand eun den anvet Even, euz Landreger. Hel lenn hag adlenn a ris. Eun ide a ziwanas em spered. Her has da benn ne zaleas ket muioh.

Eur henderv am-oa, Yann an Helveder e ano. E dud a oa o chom e Kawan. Goude beza bet e karg e bank Peron e Lannuon, e-noa prenet euz garg a gourater e-barz kompagnunez “An Unvaniez” e kêr Lannuon. Mond a ris d'e weled hag e tisklêrien dezañ va mennadou. Chom a reas diskredig med kinnig a reas din memestra an disklêriaduriou hag ar paperiou red evid va hlask.

- « Ma teuez a-benn d'ober sina eur hontrad, emezañ, her hasi din ; red e vo neuze d'ar goulenner tremen eur vizit dirag eur medisin. Hemañ a ranko goude degas din e desteni hag ar gompagnunez ah asanto, pe ne raio ket ! »

E-pad ar zizun, e studien kelennaduriou va henderv. D'ar zul war-lerh, en em gaven gand an tri breur Tremel, goude an oferenn-bred, er Roh. A-greiz pep kreiz e tisplegen dirake toud talvoudegeziou eun asurañs war ar vuhez. Goude beza lavaret deze pegement o-dije da baea beb bloaz, penaoz e oa an asurañs war ar vuhez eun dra siriuz peogwir e oa red tremen eur vizit dirag eur medisin, en em zaskorent dirag va arguzennou.

Ober a ris da bep hini euz an Dremeled sina eur hinnig evid eur hontrad a ugent mil lur e-pad ugent vloaz. An deiz war-lerh beure, a-raog mond d'ar bureo, eh een da gaoud an Doktor Konan, er Roh, evid rei dezañ ar paperiou-medisin da leunia hag ar hinnigou-degemer evid beza medisin ar gompagnunez “An Unvaniez” evid toud ar hontradou d'ober tro-war-dro.

War va goulenn, e prometas din gweled an tri Z/Tremel, er memez devez. En eur zistrei da Landreger, d'an abardaez, eh een da gemer an dezrevellou-medisin.

En em gontantet e-noa da leunia ar paperiou heb beza gwelet an tri breur.

- « O anavezad mad a ran. Yaouank int, ha yah mat ha ma reer ano euz an disterra treuz d'eur gompagnunez-asurañs, e ra he mad evid kreski ar gopr. »

An deiz war-lerh, goude va labour er studi, eh is war velo beteg ti va henderv An Helveder. Braz e oe e eston ! Eiz deiz goude, e reseven al lizeriou-kretadurez evid an asurañsou a roen zina d'an Dremeled hag e tastumen arhant ar gopr. C'hweh-kant lur e oa va gopr-asurañs. Bamet e oan ! Kement e oa ha c'hweh miz pae evid nebeud a zifreioù. Distroet da Benn ar Pont, e roen ar c'hweh-kant lur d'am zad.

- « Setu... o paouez gounid an arhant-se eh on... en eur labourad goude va devez, en ti ar Ao. Jullo. Hen rei a ran deoh evid komañs ho paea en-dro peogwir emañ abaoe eur pennad mad en ho karg. Med soñjal a ran, ne vin ken evid pell, adaleg bremañ. »

Va mamm en em houlenne ervad petra ober gand toud ar billejou-ze. Erfin, o laoskas war al listrier. En em zantoud a reen dizammet diouz eur pouez mad : ar

vez da en em gavoud c'hoaz, da dri bloaz warn-ugent, e karg va zud hag ar priedou Ar Bail.

- « Ne hovezan ket penaoz e-teus gounezet ar c'hweh-kant lur-ze goude da labour, » a lavaras din va zad, an deiz war-lerh beure, da lein. « Med sur on eo gand onestiz. Ne fell ket din kaoud da arhant. Labouret 'teus e-pad eun toullad bloaveziou e Seveon heb espern da boan. Sikouret on-eus Jolu ha da ziou hoar da en em lakaad war o hont en o menajou goude o eured. Prestig e vo reizet an traou gand da vreur Yann, ha ne fell ket dim gaou ebed. Droed 'teus da gaoud da lod evel ar re all. Ar c'hweh-kant lur-ze a zo dit. »

Va mammig o adroas din kerkent.

O kemer va nij

A-benn fin ar bloaz, em-oa greet eun ugent kontrad-asurañs bennag, an ollad aneze a oa euz a ugent da hanter-kant mil lur. Va gounidou a zave da zeg mil lur. Anavezad mad a reen ar vro hag aze e oa va hartenn wella.

D'ar mare-ze, e ree an asurañs war ar vuhez he faziou kenta ha dedennet kalz e oa an dud gand ar mod-se da en em warezi. Ne oa kevezerez ebed. Da genta, ne renten vizit nemed d'ar venajerien ah anavezen. Aliez e vije red din pasianti ouspenn eun eurvez evid galled displega ar pezh am degase. Goude, e tleen kaoud kalz a basianted hag a gredenn stard. N'am-oa nemed eur velo evid ober va zro, ha beb abardaez-noz, e reen deg pe ugent kilometrad, goude va devez er bureo. Hag eur wech ar zizun, da vihana, e ranken distrei war droad, va velo en dorn, gand eur rod dihwezet. M'am-oa c'hoaz greet afer, an distro ne veze ket re boaniuz.

Goude-ze, e kreskis va oberou o vond da weled ar goñversanted, artizaned, martoloded an arme-vor pe a goñvers, ha lod euz ar micheriu-uhel. An doktor Konan, karget euz an dezrevellou-medisin evid ar gompagnunez, ne hellas ober a-hend-all nemed rei e zinadur din evid eur hontrad a gant-mil lur.

- « Dreist-oll, na rit ket eun afer a vruderez gand kement-mañ, a guzurias din. Anez e vo adlavaret c'hoaz e hounez ar vedisined re a arhant. »

Goude an Ollzent, gand asant ar barner a beoh, an Ao. Chauveau, va fatron, a reas din toui le, evel eil-grefier-touer. Anzav a reas ne oan ken, d'ar mare-ze, o teski va micher, med eun den e karg a roe eur zikour red-mad dezañ. Heb an disterra goulenn euz va ferz, en eun taol hepken, e kreskas va houmanant teir gwech. Neuze, e resevis eun engalv ivez evid kenstrivadeg ar bloavezh kenta a desteni-gwir. N'am-oa ket bet amzer da adweled ar program... ha prederiet e oan.

N'am-oa ket c'hoant da dremen toud va buhez e-barz eur gêr vraz hag ar vicher voutin a "louf-torchenn" ne zedenne ket ahanon. Skriva a ris d'ar Skol-Veur, ne rafen ket an arnodenn. Skiant an aferiou am-oa, al labour n'am diêze ket ha divizet am-oa mond gand va hent, va-unan.

Ar bañsion

Louizig Durand a gave hir an amzer gand va breur hag e wreg. Va zad, eñ, a houlenne groñs e veillerez-klañvour war e dro. Setu penaoz e teuas Louizig, e derou miz du 1930 da Benn ar Pont, ganim. Ar houblad "Louizig - va zad" a oe unanet adarre. Fañch ar Rolland, ar yehed anezañ ah ee war fallaad, a adkrogas da vinhoarzin.

N'en em guitaent ken ha setu perag e hellas va mamm mond d'ober eun dro, eur wech an amzer, da varvaillad gand he mignonezed. An Ao. Ar Picard, sekretour tikêr Landreger, a zeuas a-benn da gaoud eur bañsion vahagnet euz ar brezel, a gant dre gant, d'am zad ; ha gand ouspenn sikour unan all en-dro dezañ. Pa glevas an nevezenti hag ollad e dri miz a bañsion, ne fellas ket dezañ kredi. Lavared a reas hepken d'am mamm:

- « N'eo ket heb rezon eo paour ar Frañs. N'am-eus ket goulennet kement-se... Tra-walh hepken dim da veva on-daou. »

Bez' e oam e derou gwall-varead 1930-36, hini an arhant hag ar hoñvers.

Ar garriolenn-dre-dan

Va zroiou-noz war velo, a-dreuz ar mêziou, a zeue da boueza pounner war va yehed. Setu ma tivizen prena eun oto vihan dre zegouez.

E Penn ar Pont, e oam amezeien gand Kermareg, ar mekanisian e-noa gwerzet ar moteur Japy dim, eun nebeud bloaveziou a-raog. Eur zulvez goude an ofern-bred, eh is d'e weled. Siwaz, ouspenn eur pezh gwetur Renault, n'e-noa netra da ginnig din. Adaleg al lun veure, e oan e garaj Nicolas, e Landreger.

An Ao. Nicolas am anaveze mad. Kein ha roched e oa gand an Ao. Jullo. An heveleb kredenn bolitikel o-doa.

- « Errued mad a rez, a lavaras din. Bez' am-eus eur garriolenn Peugeot a raio da afer, sur mad. Greet am-eus toud an adgweladennoù red evid he lakaad e stad da vond en-dro. Ma prenez anezi, ne 'to ket a geuz. Setu anezi... A-benn tri devez all, e vo prest. Ma plij dit, arabad dit chom da dortal. Ar re a zo herr ganti, ne vankint ket. Gand ar frejou am-eus bet ganti, e oa em zoñj d'he gwerza eiz mil lur. Med evel ma'h out kloareg ti an Ao. Jullo, he laoskin ganit evid seiz mil hanter. »

Eur garriolenn fougeüz ma oa unan ! gand daou blas, kapotenn ha "spider" a-dreñv. War gostez-kleiz ar holoenn e oa stignet ar rod-zikour. Ar harroñsador a oa ruz tan, an eskell du hag ar marchepiou gwenn. Neuz kaer a oa warni daoust dezi da vezevelli eun tammig re.

- « Dond a rin en-dro, diriaou », emezon, o kuitaad an Ao. Nicolas.

Ober a ris perz euz va diviz gand e vignon d'am fatron.

- « Ma 'n-eus goulennet eiz mil lur diganit, 'to anezi evid seiz. Eun den onest eo ; med n'en em laoskez ket ober. »

Heul a ris kuzulioù an Ao. Jullo, ha d'ar yaou war-lerh e prenen va gwetur genta evid seiz mil lur. War ar memez tro, e ris d'am gwerzer prena teir asurañs war ar vuhez evid e vugale.

Desker drezañ e-unan.

Ar garriolenn a jomas eun nebeud deizioù c'hoaz er garaj. Unan euz mevelien an Ao. Nicolas a roas kenteliou din evid deski blenia an oto ha dornata ar benvegennou brasa. Evid ar gentel genta, e kemerjom hent Landreger d'Ar Vinihi. Padoud a reas war-dro eun eurvez. Y. S. a ziskouezas kalz a basianted ganin. Disklêria a reas din toud segredou ar garriolenn : divonta ar harburator, ar flister, ar hantoliou-elvenni, hag all. Red e oa dezañ ober an diskouez-se din d'ar mare-ze, rag an esañs a veze prenet a-vidoniadou a bemp litrad ne oa ket eur ar hini wella.

A-benn tri deiz, va hentelien a gelennas din ar reolennou simpla da zouja war an hentchou. Ne oa ket diêz. N'ho-poa nemed derhel mad an tu dehou diouz an hent, taol evez d'ho tiz, hag ivez memestra, douja war an tu dehou. E-pad an eil kentel-ze, en em gaven gand meur a gudenn, evel mond war-dreñv hag ober hanter-droiu.

E-pad an drede, e-leh rei din kuzuliou, va hentelien ne baouezas ket d'ober rebechou din. En eur hroaz-hent, e lavaras din ober eun hanter-dro. Diou wech, ar garriolenn ah eas e-barz an touflez. Eun tammig pelloh e hourhemennas din eun hanter-dro all. Ne welen ket aze nag ar red nag ar galloud d'heh ober... kement e oa enk an hent. Ar pezh a zlee errued ah erruas. Evid an drede dro, an oto a oa e-barz an touflez. Va helenner a darzas :

- « En em houlen a ran perag eo fellet dit prena eun oto, pa ne helli morse dond a-benn d'he blenia. Ne gomprened ket an disklêriaduriou a roan dit. Na gred ket e vin paeet gand ar patron e-pad eur mizvez evid klask deski dit charread. Forz penaoz, me, ne fell ket din ken pleal ganit. Distroom d'ar gêr. »

Ma zikour a reas koulskoude da denna va femp-a-gezeg er-mêz diouz an touflez hag e kemeras ar rod-stur. Ha ni da Landreger, eñ, droug ennañ, ha me daoubennet mad. Harta a reas an oto, e-kichen ar garaj.

- « Kemer anezi fenez, m'az-peus c'hoant. Dit-te eo bremañ. Dit d'en em zimerdi ganti bremañ. »

Diskenn a ris d'am bureo, trevariet, e kounnar ouz va helenner. Med gouvezed a reen ne gouskfe ket ar garriolenn war ar ru, an noz-ze. Lakeet am-oa don en va fenn distrei ganti d'ar gêr... ha va-unan kaer c'hoaz ! Gortoz a ris memestra an noz evid adretorn d'ar garaj. N'am-oa c'hoant ebed da veza goapaet... gand tremenidi.

Va oto a oa aze, bepred ken koant. Goude beza daouzoñjet eun tammig, e lakaen al loh-tiz en diskrog, da genta ; goude ar stok, goude beza digoret d'an esañs, hag e troen an dornigell. Teir zro heb respont. Sevel a ris ar holoenn, nêtaad a ris ar flister... Hag e rois eun dro-dornigell. Kerkent, ar moteur a droas.

Saveteet e oan... evid eur pennad da vihanna. Ober a ris va zin ar groaz, hag en hent ! Goude beza tremenet dirag ar skol Sant-Erwan, e kemeren hent Landreger d'Ar Roh. En em lakaad a reas da hlavia a-bil.

Mond a ree an traou kazi mad a-walh, pa oan bremañ o vond da zével grav Sant Mikael. Tremen a ris war an eil tiz. Med sonn e oa ar hrav ha red mad e oe din kas war ar henta tiz a-raog errued war al lein. Kemmeski a ris moarvad ar henta tiz

gand ar bale-a-dreñv pe gand al leh-marro... rag va strakell en em lakaas a-greiz-toud va nerz evid menel difrom hag e teuen a-benn añfin da lakaad mekanik-andiaoul da chom difiñv.

A-dastorn, e klasken kaoud ar henta tiz. En aner ! rag ar garriolenn a adkrogas da zouza. Ha setu bremañ, ar moteur o sac'ha. Dond a ree ar stal da veza mantruz ! Ar garriolenn daonet-se, daoust hag-eñ e paouezfe da ziskenn ar hrav ? Dond a reas din neuze eun ide lugernuz gand ar zoñj adkavoud ar henta tiz-se. Lakaad a ris ar moteur da drei a-nevez ha kaoud a ris añfin an tiz ken c'hoantaet. Goude beza distardet ar starderez dre zorn, e poulzen an droadikell-vuannaad da benn, hag an oto a lohas. Laosken a reen eun "ouf" a ziveh e kwreh ar hrav. Ne jome ganin nemed... mond da gerhad va botez am-oa laosket e hanter ar hrav.

Evid en em ziwall, e treuzen ar hroaz-hent a-raog mond a-gostez, war an diskenn... Hag e teuen en-dro, eun troad en eur votez, hag egile en eur jaosonenn, evid adkavoud va skor. Distrei a ris heb re a boan da Benn ar Pont, gleb dour-teil.

An deiz war-lerh beure, e pedis va zud d'arvesti ouz va braoig :

- « An taol-mañ, eme va zad, eh out eun Aotrou. O haloupad an hentchou da noz, gand da velo, az-poa ezomm a-walh diouz eun oto. Med kavet am-mije gwelloc'h ahanout ober eur peizant, koulskoude. »

An deiz war-lerh d'arbardaez-noz, eh is da gerhad va velo am-oa laosket d'an Ao. Nicolas, e Landreger. Hag e ris an hent... war droad !

Ar garriolenn-dre-dan kabestret

Bep peure, e lakeen eun hanter eur da zeski kondui va oto, war hent koz roman Milin Zeh da Zeveon. Goulo e veze an hent-se, an aliesa. Leun e oa a doullou med ar hosteziou a oa ledan, hag al leur solud. E ledander ah aotree ober hanter droiou ha baleou-a-dreñv. An toufleziou ne oant ket don ha pa'h ee va oto enne, he zennen er-mêz, êz a-walh.

Riskla a ris mond beteg Langoad, Ar Roh, ha Peurid-ar-Roh, da renti vizit d'am hamaraded evid ober deze bami ouz va frenadenn. Ober a ris zoken sevel eur harr-di e Penn ar Pont. Laosken a ris va marh-houarn evid mad ha bep peure e reen ar veaj Penn ar Pont de Landreger o terhel rod-vlein va harroñs. E-kerz va beaj, e kaven ar "Blanc-Misseron" war va hent, peogwir al linenn hent-houarn a heulie an hent braz.

Kemer a reen plijadur o tremen e-biou dezañ. Ar mekanisian am anaveze mad. E zaludi a reen gand an dorn, o vond dirakañ. A-wechou, e roe eun taol c'hwistell o poulsa an êzennoù, med va "femp-a-gezeg" a yee buannoh evid e vekanik pounner.

Er hontrol, o sevel grav Sant Mikael, e vezen aliez tremenet gand reou yaouank war o veloioù. Ober a reent goap ouzin en eur dremen ha sinou dorn e-leiz. Kement-se am lakee, muioh pe nebeutoh, e kounnar med ne hellen ket ober kalz a dra. Ne blije ket ar hraviou d'am harriolenn dreist-oll pa vezent eun tammig sonn,

hag erruet e kwreh, a reen diêz a-walh pemzeg kilometr an eurvez. Med en em baka a reen o tiskenn hag en eun tiz spontuz, e tremenen adarre e-biou d'ar ganfarded divergont. Ne renten ket o zinou dorn deze. Re a aon am-oa neuze da vond d'an touflez.

An aotre-da-gondui

- « Job, a lavaras din an Ao. Jullo, eur beurevez, te a ruill bemdez gand da "daxi". Tremen hag adtremen a rez dirag jañdarmiri Landreger... Med daoust hag-eñ e teus soñjet tremen da "aotre-da-gondui" ? »

- « Feiz, nann ! », a respontis.

- « Poent braz e vefe dit pleal gand an dra-ze ; ma rez eun darvoud, e to kudennou. »

An egzamin o veza eur wech ar miz e kêrbenn an arondisamant pe e Sant-Brieg, e kasen va goulenn da Wengamp. Galvet e oen, eun deiz, da beder eur. Va fatron a ginnigas din mond ganin. E-kerz ar veaj, e hartas evid mond da weled daou gliant, hag e-leh en em gavoud war vali gar Gwengamp da beder eur, e oam, war or goustadig, da beder eur ugent.

An enseller ne zeblante ket beza gwell gontant. Lakaad a reas e zah-ler war dorchenn e oto hag a azezas dreñv d'ar rod-vlein. An Ao. Jullo a lammas war-du ennañ, da en em zigarezi evid an dale en eur zisplega dezañ e oa bet sac'het ar flister... med an enseller ne felle dezañ klevet netra.

- « Galvet am-eus Ar Moal da ziweza. Eun all c'hoaz n'eo ket deut. Setu aze eun eurvez emañ o hortoz amañ. N'en-deus bremañ ho paotr nemed ober eur goulenn all ha paea an droejou a-nevez. »

Kaer e-noa va fatron sevel e vouez, an enseller a droas alhwez ar heflusker hag eh eas kuit evel eur gorventenn. Fuha a ree an Ao. Jullo.

- « En da leh, e rafen va goulenn nevez evid Lannuon », emezañ.

Daou viz goude, gand va henderv An Helveder, en em gaven dirag gar Lannuon. Eur yaouvez e oa, deiz ar marhad. Stank e oa an dremenidi. N'am-oa ket a jañs : an enseller a oa ar memez hini hag e Gwengamp. Nebeud goude beza resevet va galv, am-oa kemeret ar boan da vond da weled hent an egzamin : ar memez hini dalhmad ! An enseller a halvas ahanon hag e pedis anezañ da zével em harriolenn.

Ouspenn pevar miz a oa abaoe ma konduen bemdez. Habask e oan ha diarvar. Treuzi a ris tremen-a-rez an hent-houarn, mond a ris a-hed diou ru. Goude beza tremenet dre Bont-Kermaria, e ris eur bale-a-dreñv dibeh war vali al lezvarn, ha, war urziou an enseller eh een war-raog adarre. Gourhemenn a reas din kemer eur ru a-gleiz. Pep tra ah ee diouz ar gwella. Evel ne oa ket c'hoaz war an otoiou, boulou-dre-dan hag a vlinke, e houlennen, seven, digantañ :

- « Aotrou enseller, ha plijed a rafe deoh astenn ho torn evid rei da houvezed e troom war an tu kleiz. »

- « N'am-eus kentel-blenia ebed da resev diganeoh. Dleed a rit gouvezed ar pez ho-peus d'ober », a respontas din, rok.

- « Ne welan ket perag e lakfen va dorn-kleiz er-mêz. Pesked ar ster a vo hepken evid gweled anezañ. »

Petra n'am-oa ket lavaret !

- « Hartit dioustu ! »

Taeret-ruz ouzin, e lammas an enseller er-mêz va oto, o strakal an norig :

- « Kemerit kenteliou a zevenadurez a-raog dond en-dro d'am gweled. »

Hag ah eas war droad war-du ar gar. An dismegañs a oa warnon. Anad e oa n'am-mije 'ta jamez an aotre-ze da vlenia. Er bureo, e konten va istor d'ar patron. Dirolla a reas da hoarzin :

- « Bet 'teus, emichañs, da ober gand ar memez enseller. N'on ket souezet euz e berz. Añfin... Dleed a rees memestra lakaad da zorn kleiz er-mêz, zoken ma ne oa den evid e weled. Ne 'teus ket, moarvad, komprenet ne dlees ket goulenn an disterra tra digand an enseller. Ar gwella 'teus d'ober bremañ eo mond da dremen da aotre da Zant-Brieg. Nemed na ve adarre ar memez hini ? Komz a rin diouz se da Nicolas, ar mekanisian, d'or henta gwel. »

Eun nebeud deziou goude, e lavaras an Ao. Jullo din e oa ivez va enseller karget da rei an aotreou-blenia e Sant-Brieg. Med e oa o vond e retred.

- « Eun tamm pasianted, eur pennad c'hoaz, a guzulias din an Ao. Jullo. Eun all a gemero e blas. »

E derou miz c'hwevrer 1931, e kasen va zrede goulenn da Lannuon. D'an devez D, e oan dirag ar gar, gand, an taol-mañ, eur hard eur vad en a-raog, ha va-unan. An enseller a reas sin din da dostei.

- « A ! Setu-c'hwi eo adarre... »

- « Ya, Aotrou enseller, setu-me adarre. Dleed a ran deoh toud va digareziou evid ar wech a-raog. Med, gouvezed a rit, bloaz a zo, a-veh e oan c'hoaz eun tammig troher-buzug dianaoudeg euz reolennou ar zevenadurez. »

- « Abaoe on degouez diweza, ho-peus desket kondui, sur a-walh ? N'oh ket chomet keid-all o laosken hoh oto er garaj ? »

Tenna a reas eun aotre da vlenia, diouz eur pleg. Skrivet ha sinet e oa en a-raog. Ha ne reas nemed adskriva an deiz - ar bevar warn-ugent a viz c'hwevrer 1931 - hag her roas din.

Ar pañsionou

Va stad a gloareg e studi an Ao. Jullo e Landreger e-noa souezet ar beizanted diwar-dro ha dreist-oll ar re yaouank hag o lakeet da gaoud ivez eun tamm gwarizi ouzin. Mond a ree an teodou en-dro, dreist-oll pa oa bet klevet e oan anvet el lezvarn evid an aodiañsou a bolis evel sekretour ar barner gand an ano-karg pompuz a eil grefier dindan le.

Kreski a reas c'hoaz muioh ar warizi pa oen gwelet o vale gand va harriolenn-dre-dan Peugeot. Job ar Moal, paotrig-saout Seveon, a oa deut, a-greiz-toud, da

veza... eur penn-braz ! Ne hellen nemed laosken da lavared ha respont na ya na nann d'ar goulennou a reed din. Va zri labour a eil grefier, kloareg-urher hag asurer war ar vuhez ne laoskent ket kalz a amzer vak ganin.

Ober a reen va mad euz eun nebeud a bennadou-amzer a frankiz, evid kas va zud da weled ar famill ha dreist-oll ti ar vamm-goz Ar Rolland, d'ar Pevar-Avel. Yehed va zad ah ee war fallaad. Kerzed a ree diêsoh-diêsa. Eur gador wa rodou a oa bet roet dezañ. Evid ar pennadigou-hent, e Seveon pe ti amezeien Penn ar Pont, e vounten e gadorig ha va mamm am heulie war droad. Med va fennadou amzer vak ah eas prestig war verraad.

E 1923, eo e votas an deputeed eul lezenn hag a warante ouz ar gwall-darvoudou e-barz al labour-douar. Kalz a beizanted mahagnet hag a denne gounid, hervez al lezenn, euz eur bañsion evid ar re na hellent ken labourad, n'odoa anaoudegez ebed euz al lezenn-nevez-ze. Divizoud a ris eta pleal gand o stad.

Evid tenna gounid euz ar bañsion, e oa red evel just ober eun enklask dirag barner a beoh ar hanton. Evid eun niver braz a houniderien, e oa eun torr-penn gwirion, kement e oa red ober difreiou ha mond da weled liez gwech ar re a oa bet gwall darvoudet, an testou, an implijerien. Ranked a reen rei deze resiz toud an traou ha gwaranta aneze ne helle ket ar beh koueza warne 'vid pez a zelle ouz an arhant.

Va "femp a gezeg" n'he-doa ket greet kement a hent, morse. Morse ne oa bet ivez sac'het ken aliez. Distroet da di va zud ne veze ket ral din kaoud eun den gloazet deut da zisplega e stad din. Va-unan e oan o pleal gand an aferiou-ze e-barz ar hontre hag an telefon arab e-noa lakaet ahanon da veza anavezet. Ha va zad a oa kalz a stad ennañ :

- « Gweled a ran eun toullad tud o tond amañ da houlenn da ali hag adgoulenn da zervijou. En em renta a ran kont bremañ e hell mab eun troher-buzug ober eur vicher all ha kalz a vad en-dro dezañ... ha beza, nompaz eun Aotrou, med eur wir labourer. »

Ar goulennou-pañsion ne hwezent ket va yalh. An darnvuia euz va hlianted ne oant ket pinvidig, med re zign evid mond da glask o bara. Paeet e veze va frejou din hervez pezh o-deveze touchet, ar peurliesha c'hweh miz goude e veze bet kaset ar paperiou...

E-touez ar re a reas o mad euz va difreiou, eur vaouez vad trohet dezi he breh kleiz, he-deus dalhet anaoudegez vad din beteg he maro. E derou miz Genver, e reseven, beb bloaz, eul lizer o pedi ahanon da vond d'he gweled evid ma hellfe ma zrugarekaad a-nevez ha rei din war-dro an degved euz he fañsion. Ma nahen, e veze fachel, ha ma n'een ket da weled anezi, e reseven eul lizer-pedi all.

Falz an Ankou

Abaoe penn kenta ar bloavezh 1932, yehed Fañch Ar Rolland ah ee gwasoh-gwasa. Va mamm en em daole da ober en-dro dezañ en eun doare souezuz. Bep peure he sikouren d'e zoañgnal. Daoust d'e boaniou garo, n'em-eus ket e glevet

morse oh en em glemm. Mervel a reas d'an oad a eiz vloaz ha daou-ugent, d'an eil a viz meurzh 1932, deiz va femp bloaz warn-ugent.

An tad Ar Rolland e-noa roet dim toud eur gentel vraz a nerz-kalon.

Louizig Durand a oe moarvad an hini e-noa bet ar vrasa hlahar euz e varo. Eun nebeud sizuniou goude, e kuitaas ahanom, evid mond da vatez ti eun noter.

Ne ankouaas ket Penn ar Pont. Bep tro ma helle, e teue da weled ahanom.

Mathis

Mond a reen en tu-hont da roll va eurvezioù pemdezieg er bureo. Ober a reen va zroioù, heb an disterra kresk war va fae, med ne reen ano morse a gement-se.

Ar patron ne daole ket evez da niver va eurvezioù-labour. Ober a reen penn-da-benn gand ar hargou a fizie ennon ha galled a reen mond ha dond evel ma plije din.

Pa vezen distroet da Benn ar Pont, e tleen c'hoaz prederia war-dro va faperiou pañsion a-raog mond da gousked. Ober a reen kalz a hent gand va harriolenn-dredan ha komañs a ree beza anad e oa erru skuiz.

E-kerz miz even 1932, eh is gand an Ao. Jullo da lakaad eur werz-sezi war eur hoñversant euz kêr. E-touez an traou da zeiza, e oa eur garriolenn Mathis, du he liou. Houmañ a oa eur wetur nevez a-walh hag heb anavezad a reen. He ferhenn, eul liver, a gondue anezi dalhmad a-diz ha tremen a ree sur mad muioh a amzer en e oto evid en e chanterioù. Ar Mathis-se a oa bet kirieg d'e zistroioù fall.

Poueza a reas va fatron kement, ken he frenis evid deg mil lur. Ha setu-me gand diou oto. Med hini ebed ne oa diouz va hoant. En despet da doud an trubuillou am-oa bet ganti - sac'hadennou karburator, flister, kantolioù-elvenni -, ne zeuas ket an ide din d'am dispartia euz va F/Peugeot. Plijoud a ree din. Heh anavezad a reen, dizolei a reen prim ar sac'hadennou ha... ma degas a ree d'ar gêr dalhmad, heb beza ezomm da hervel Kermareg.

Ne oe ket heñvel gand ar Mathis. A beb momed, e ranken gervel ar mekanisian. Sac'ha a ree aliez, e-kerz an hent pe en noz. Tri miz goude eta, kenavo da V/Mathis. He gwerza a ris a-nevez, evid mil lur.

O lakaad gwerz-sezi war an traou

Da-geñver ar hrogou da ober ti an dleourien, e heulien dalhmad an Ao. Jullo :

- « Job, 'vid 'r hreisteiz, am-mo ezomm diouzit. Kemer an tu... evid galled dond ganin. N'am-oa ket ezomm traou resisoh all. »

Eur wech, e oam eet d'ober eur gezi ti eur hoñversant yaouank dimezet ha staliet abaoe daou pe dri bloaz hepken. Derhel a ree eun ostaleri gand ispiserez, dillad ha bouteier. Dre vank a skiant-prena, e-noa greet goulennou dreist ment hag an darvuia euz e villejou-paea a deue en-dro heb beza paeet. Anavezad a reen an dleour abaoe meur a vloaz o veza bet an dro da en em gavoud gantañ, meur a wech, e-barz ar foarioù hag an alezioù-boulou.

En eur errued er stal, an Ao. Jullo a lavaras dezañ penaoz e oa rediet da gregi e varhadourez hag a roas urz din d'enskriva meur a dra. Ar hoñversant yaouank a zavas d'ar zolier, kerkent ha diou vunutenn goude, e tiskenne gand eur bistolenn en e zorn, buket war-du va fatron. Gouvezed a reen e oa unan entanet hag an Ao. Jullo... eun tad a bevar a vugale. Mond a reen, sioulig, dirag paotr an ostaleri :

- « N'eus kision ebed da lakaad ar werz war dra-pe-dra du-ze, med hepken renabli ar pezh a zo er stal. Gouvezed a ran, seul ma'h eo me va-unan am-eus prepaet ar paperiou. Gwelloc'h e rafes or zikour hag e hellfem ober goude eur barti voulou asamblez. Ma'h antre klianted en ostaleri, e soñjint om deut da hoari broulou. »

Sebezet, ar hoñversant a ziskennas pazennou izella ar skalier.

- « Ha bremañ, ro din da hoariell... Keuz 'tefe e-pad toud da vuhez. »

Rei a reas e arm din, o sila din em skouarn :

- « Dreist-oll, na lavar mann da zen ! »

E zizoania a reen. Tenna a ris kuit an tri boled lojet e-barz an daboulin. E foñs va godell e lakis ar bistolenn. Eun hanter eur goude, e oam on-zri, o c'hoari broulou... Ar zizun war-lerh, e tremenis da weled ar paotr. Kuzulia a ris dezañ adkemer e vicher goz a goñversant war ar pave... Tri miz goude e oa adkrog d'ober ar marhajoù diwar-dro.

Eun dro all, on-oa d'ober eur sezi ti eur menajer yaouank ha n'e-noa ket paeet e hourmikêl abaoe daou vloaz. Hen anavezad mad a reen o veza ma oa euz Ar Vinihi. Dre lorh, pa 'n-oa kroget da zerhel menaj, e-noa prenet toud e oustillou nevez flamm. Fall daonet e oa e jeu. Errued a rejom di e koulz adverenn. E wreg hag-eñ a oa ouz taol.

Va fatron a roas deze da anavezad evid petra e teuem hag e houlennas diganin enskriva, war prosez-verbal ar sezi, ar chatal ha lod euz ar binviou brasa. Bez' e oam o kuitaad an ti evid mond d'ar harr-di, pa welis an dleour o lammad er-mêz, o vond d'ar marchosi ha kemer eur gordenn. Hegaset mad e oa. Harta a reas da lavared din :

- « Galled a rez merka toud 'pezh 'to c'hoant ; ha goude e helli konta da doud ar beizanted a weli, 'teus lakeet ar sezi warnon. Me, ne ran van a gement-se. Mond a ran da en em grouga. »

Kuitaad a reas ar porz oh ober tro al lojeiz evid mond etrezeg eur park e-kichen, e-leh ma oa eur hleuziad dero. Redeg a ris war e lerh :

- « Ma'h out en soñj da en em grouga, me da harzo evid bremañ. Med goude e vefom eet kuit, e helli hen ober... Soñj eun tammig memestra en da wreg hag en da vugel daou vloaz. Gouvezed a rez mad tre... en ti an Ao. Jullo eur sezi a zo "segred ar gador goves" ha ne 'teus ket aon da gaoud. Soñj ervad er stad m'emaout enni. Ne 'teus degouez all ebed nemed gwerza da vinviou evid paea da hourmikêlou ha da zleou all. Gand da asant, e heller ober eur werz diwar genemgleo. Galled a ran kaoud labour dit zoken e-barz eur menaj braz, ti eun denjentil, e departamant an ster "Oise". Lojet ha bevet e vi gand toud da famill. Kalz a Vretoned a labour dija e-barz ar menaj-se ha daou aneze a zo en em gavet en da stad a-vremañ. Mad e

vefe dit ober da vennoz buan hag en em gleved gand da zaou vreur, labourerien-douar eveldout, evid en em garga euz da venaj da hortoz ar werz. »

Ar sezi, troet en invañtor evid an dro, a oe greet kerkent. An ozah hag e wreg a zinas ar prosez-verbal hag a roas galloud d'an Ao. Jullo evid gwerza ar meublaj hag ar binviou war gresk ha dirag an oll. O kuitaad ar menaj, e oam eet da weled unan euz breudeur an dleour evid en em gleved war labour an douar beteg miz gwengolo. Ne oe tamm estonet ebed ar breur pa welas ahanom.

Diloja kuz ha muz a reas ar menajer yaouank, e-pad eun nozvez, evid mond da jom gand e famill ti menajer braz an "Oise". D'an deiz kenta a viz Here, e kemeras e garg a vicherour.

Gref Bear

War-dro hanter-Gwengolo 1933, e klevis e oa gref Bear e gwerz. Kerkent, en em lakaen war ar reñk. An Ao. Penanhood am degemeras eur zadornvez. Daou houlenner all a oa bet tremenet en a-raog : eun adjudant hag eur brigader-jañdarmiri.

D'ar mare-ze ne oa ket red kaoud eun testeni pe tremen eur honkour evid beza karget euz eur gref pe eur garg a ofiser justis ar peoh. Ar sertifikajou a veze zoken roet aliez gand eun asant lez-ober ha gouvezed a reen e oa mestr Penanhood prest da zina unan d'eur prener da zond, ha dreist-oll d'eun archer koz.

Adaleg ma oen en e vureo, e houlenner gantañ hag-eñ n'e-noa ket greet afer dija gand unan euz an daou all.

- « O-daou o-deus kavet mad ar priz a houlenner, med lavaret am-eus deze e chomen war vete-gweled. »

- « Neuze, koulz anavezad ho tivizou dioustu. »

- « Tri ugent mil lur : hanter-kant evid ar gref ha deg evid an asurañsou. »

- « D'ar gompagnunez eo karg an asurer ha ne hellom ket ober afer heb heb asant. N'eus forz penaoz, e tri-ugent mil lur, hoh afer ne da ket din. Gand daou brener akord war ar priz n'ho-peus ket da en em chala. »

Astenn a ris va dorn dezañ, evid mond kuit.

- « Gortozit 'ta... n'it ket kuit ken prim-ze. Galled a rafem kaozeal c'hoaz, marteze ? »

Mestr Penanhood a houveze e labouren ti Mestr Jullo.

- « An daou jañdarm a zo akord, e gwir, war ar priz. Med jenet on kaoud eur prener ha na oar mann ebed diouz servij ar gref. Red e vo din chom gantañ e-pad eun toullad miziou a-raog ma vo barreg da gas an traou en-dro 'n e-unan. Ganeoh n'am-mije ket ar gudenn-ze, moarvad ! »

- « Ne gredan ket... Setu bremañ tost da dri bloaz eh on touer hag e ran war-dro an enklaskou darvoudou-labour hag an odiañsou a bolis. »

- « Mad ! Med ma en em lakom akord war ar priz, penaoz e rafet evid paea ahanon ? Yaouank oh ha dizimez. »

- « M'am-eus ar mennoz da brena eur gref pe eur garg-urher, am-eus ivez ar mennoz da baea. Paea a rin war an taol, d'an deiz roidigez al le, hervez kustum, ha kinnig a ran deoh lakaad an hanter euz ar gont ti eun advoue, adaleg sinadur ar promesa. N'eus forz penaoz, n'eus ket kision evidon da baea hoh afer tri-ugent mil lur. »

En em zoñjal a reas eun tamm adarre.

- « Sur a-walh ho-peus greet priz va gref hoh-uann ? »

- « E gwir, a-raog dond d'ho kweled, am-eus klasket titouriou. Kinnig a ran deoh hanter-kant mil lur ha pas eur gwenneg muioh. Mestr Jullo n'eo ket preset da en em zizober diouzin... ha setu am-eus toud va amzer. »

- « Mad ! Akord om ! Gwelloh eo ganin koll deg mil lur hag ober afer gand unan bennag hag a zo aroutet mad war e vicher. »

Greet e oe an treuzvarhad e diou skwerenn ha sinet eun hanter eur goude. Ar zizun war-lerh e tegasen pemp mil lur warn-ugent da studi Mestr Leguistin, advoue e Gwengamp. Deuet e oa Mestr Pennanhoad ganin hag ober a rejom ar veaj Bear da Wengamp (tregont kilometrad mond-ha-dond), en e oto, unan euz ar re genta deuet er-mêz, goude ar brezel 1914-1918.

Eur hourater asurañsou a-bouez e oa mestr Pennanhoad. Asuri a ree e glianted evid ar "giriegez sivil-oto". Med evitañ, n'e-noa ket kavet talvouduz sina eur hontrad.

- « Evezieg ez on... n'an ket buan ! », emezañ.

Eun diaraoger e oa ivez evid espern an esañs. Kloza a ree an duellenn pa ziskenne ar hraviou hag he digore a-nevez eun ugent metrad bennag a-raog traoñ ar hrav.

- « Perag dispign petrol en aner ? », a lavare, stard e galon.

Fin miz Gwengolo 1933, e kimiadis diouz mestr Jullo. Trement am-oa pevar miz ha pevar-ugent en e studi. Eun toullad anaoudegeziou e gwir am-oa, o kuitaad anezañ. Dastumet am-oa skiant-prenet hag ivez... skiant an aferiou.

Goude ma oan eet kuit, e verh Marharid a gemeras va flas. Kleved a ris diwezatoh e-noa bet keuz din hag am-oa greet diouer dezañ. Setu perag moarvad e reas ar mennoz, eur pennad goude, da laosken e garg vrasa. Kinnig a reas din prena e studi urher. Med hen nah a ris dre ma oan dija en karg diouz hini Bear. E drugarekaad a ris deuz e ginnig.

- « N'on ket heb gouvezed en em zivennez mad e Bear. Kleved a ran komz diouzit, beb an amzer. Va studier a-wechall e-neus, emichañs, trehet war e vestr. »

Er bloaveziou tregont, ar hreferien a veze anvet dre "gemennadur Ministrerez ar justis". Kas a ris buan va faperiou da lez-varn Gwengamp ha prokuror ar Republik, an Aotrou Olivier, a halvass ahnaon... ha padoud a reas an egzamin a-boan deg munutenn... Anvet e oen e-kerz miz Genver 1934. Monig eo a roas din ar helou mad. E karg e oa e bureo-post Bear, hag e-serr va labour, em-oa an dro d'he gweled aliez.

Eun istor oto

Va harriolenn ne oa ken mad da vann, dreist-oll... evid bale Monig e oan krog da weled en diavêz va labour. N'am-oa ket peadra a-walh evid prena eur wetur nevez hag en em lakaen da glask eun okazion vad. An daou vekanisian deuz Bear n'odoa mann ebed a vad da ginnig din. Mond a reen 'ta da Wengamp, d'ar garaj Lezoraine, war guzuliou Mestr Leguistin...

- « Bez' am-eus unan hag a zlefe mond diouzoh. » Sabatuet, eh anavezen va "Mathis".

- « Med va oto goz an hini eo ! Eur bloaz 'zo em-eus bet gwerzet anezi... »

- « Bez' a zo pemzeg deiz, em-eus prenet anezi ha greet am-eus aozaduriou abouez. E ratre vad ema evid mond war-raog ha n'am-eus netra all da ginnig deoh evid ar momed. »

Goude eun nebeud a guzuliadegou diwar-benn ar priz, e prenen anezi evid unneg mil lur gand eun distaol a dri mil lur evid va "F/Peugeot". Paea a ris 'ta eiz mil lur, da lavared eo priz he gwerz er bloavez 'raog !

Mond a reas mad-tre en-dro e-pad daou vloaz. Goude, e krogas an trubuillou. E-kerz eur veaj mond ha dond da Z/Dinan, e tebras deg litrad eoul. Nebeud a zeiziou goude, e sac'has e Bulian, e-kichenn Lannuon. Eet e oa al loa dreist d'ar skudell ! An deiz war-lerh, e prenen eun oto nevez.

PEMPVED LODENN

War-raog, bugale ar vamm-vro !

Pontanezen

Mad e oa ar stal ganin hag al labour ne vanke ket. E 1939 e oan daou vloaz ha tregont. Dimezet e oan da Vonig. Diou blahig on-oa : Annaig, tri bloaz hanter, ha Maria-Sklêrder, daou vloaz.

E miz gwengolo 1939, armeou Hitler ah aloubas Bro-Bolonia. Ar Frañs a zisklêrias ar brezel d'an Alamagn hervez ar promesaou he-doa bet greet da warezi harzou Polonia. Toud ar journaliou a gomze diouz ar brezel, dre ar munut, o poueza war galloud-harz al linenn "Maginot" ken brudet, e-leh ma tlee beza bruzunet an Almanted ma tegouezfe deze dre wall-dro mond dreist d'on harzou.

Galvet e oen d'an arme, adaleg deiziou kenta miz Gwengolo. Eur mignon din, Ernest ar Gao, a zeuas d'am has da har Kerouan. Ernest a zachas ahanon diouz divreh Monig ha re va flahigou leun-daerou.

Kaset e oan d'ar 156^{ved} rejimant soudarded war droad, a zlee beza savet e penn-leh galvedigez Pontanezen, e banleo Brest. O kuitaad ahanon er gar, e kinnigas din Ernest ar Gao eur voutaillad "Sant-Rafael".

- « Setu amañ an evaj a gavez ar gwella. Ev eur bannah eur wech an amzer evid rei nerz kalon dit. »

Hag e teuas ar momed da gimiadi.

Perag 'ta ar brezel ?

Eaubonne

Kirri-tan marhadourez rekizisionet prim-ha-prim a oa o hortoz ahanom e gar Brest evid or has da P/Bontanezen. Lod euz an drede gompagnunez - an hini e oam bet lakeet e-barz - a oa lojet en eur housk-leh e-barz ar hrignol. Moug a reem gand an tommder. Tamm freskadur ebed ne helle dond e-barz. Evid en em walhi, on-oa er porz, eur pezh gwalhva gand eun ugent tuellenn bennag. Peb rummad soudarded a oe karget da doulla e breveziou.

A-benn tri deiz goude, e oe roet dim on dillad soudard. Memez farsadenn adarre evid kaoud eur hask. Na va fenn, nag ar haskou ne oant bet damgemmet abaoe 1927. Ha setu-me a-nevez gitet gand eur hask-branskell.

Lodennet e oe dim goude or harnezaduriou soudard : fuzuillou, kartouchennou, skudellou-houarn, kartou, hag e se.

En em gavoud a ris en eur bagad... soudarded-skañv pe voltijerien...

...Eun deiz e oen galvet da vureo ar gompagnunez. Eur serjant a houlennas va micher diganin :

- « Urcher a justis ha grefier a beoh », a respontis.

- « Med merket eo war ho leorig-zoudard eh oh eul labourer-douar. »

- « Marteze... med kuitaet am-eus ar menaj, deg vloaz 'zo. »

D'abardaez-noz, e oen kaset d'ar gompagnunez "er-mêz ar reñk" ha lakeet e gourhemenn ar serjant Lopez, eun adsoudad, menajer e Plouillo.

War-dro ar 15 a viz Gwengolo e kuitaas ar rejimant Pontanezen evid mond da gichenn Pariz. En em ziazeza a reas ar gompagnunez e Eaubonne, e-barz eun domani braz dizarempred ha rekizisionet gand an arme. An domani-ze a oa diouz kleved d'eur Yudeo, Berhen e ano, eur pezh marhadour madou dre vraz. Kerkent, e voulhem gand al labour evid lakaad al lehiou da glota ouz on ezommou...

...Ar hapiten Le Bonhomme a resevas urz da zével eur strollad soudarded karget da zizac'ha kamionou hag otoiou ar rejimant. Kaset e oen d'ar strollad-se. Daouzeg e oam e-barz, euz toud ar micheriu, dindan urziou eur serjant. Adkavoud a ris an abad Nikol, bet skoliad e Sant-Jo... Med ne oa mekanisian ebed. Jouanneau nemetken, genidig euz kostez Kintin, blenier unan euz pennou-braz ar gompagnunez elektrisite "Nord Lumière" e Pariz, a houeze eun draig bennag diwar-benn an ardivinkou.

Tri bagad a bevar zoudard pep hini a oa e-barz ar strollad. Ouspenn an hanter aneze ne houezent ket kondui. Chañs am-oe da veza lakeet e bagad Jouanneau. Ol labour dizac'ha a zeuas prim da veza eul labour-ramorki...

...An tri devez kenta goude ma oa bet savet or strollad, e oa bet resevet eun daouzeg bennag a halvou war zikour euz a beb tu. Ar zoudarded, pa veze sac'het o gwetur, a zlee telefoni d'or bureo goude beza goulennet an aotre d'hen ober e-barz an ti tosta. Hemañ ne helle ket nah ar zervij-ze d'eur zoudard gall.

E bureo ar gompagnunez, ar henta deut a ziskroge an telefon. Ankouaed a ree goulenn, a-wechou, e pe leh en em gave ar harr sac'het. Mond a ree ar bagad d'her hlask, o trei ha distrei e-barz ruiou Eaubonne ha war ar mêziou. Dond a reem a-benn da gaoud ar harr sac'het, ar peurvuia.

Aliez, ar blenier, skuiz o hortoz, a oa distroet d'ar gompagnunez. Aliez-aliez ivez, daou vagad-dizac'ha en em gave dirag ar memez karr : ar blenier, mall gantañ d'or gweled, e-noa telefonet eur wech ouspenn d'ar bureo. Ha setu-ni eiz en-dro d'ar memez koz-oto.

A-wechou e tegoueze dim kaoud eur stivell-esañs goullou... ar pezh a lakae Jouanneau da fuha. Eur wech war diou, ar harr-tan a zac'he dre ma ne labourer ket mad ar "viñsou-platinet", dre ma veze kaohiennet ar hantoliou-elvenni pe stouvet ar flister. Red-oll e veze Jouanneau neuze. Beb an amzer, e veze eet kuit ar wetur a glasken a-raog ma'h erruem. Eun nann-zoudard truezuz e-noa aozet anezi. An dizurz-se a badas eur pemzeg deiz bennag.

Da heul eur glemmadeg greet gand or habiten da strollad-gourhemenn ar rejimant, e oe dilennet tri mekanisian d'or strollad, unan evid peb bagad. Ar habiten a reas e vad euz adreizadur or strollad evid rei din ar post a zekretour-skoer-liziri. Metivier, sekretour ar gompagnunez "er-mêz ar reñk" ne houeze ket ober gand ar mekanik da skriva. Fontaine, hag a oa sekretour ivez, ne zeue med eur wech an amzer da vureo ar sekretourva. Evid pezh a zell ouz ar haporal Lordier, eñ, adaleg ma kemeris va harg er bureo, e brofitas da vond d'ar gêr da Zant-Maur,

beb noz, gand e oto goz, kaset en-dro evid mann... gand esañs an arme. Aoza an danevell skridou a oe fiziet ennon. Ne gollen ket va amzer. Errued a reas eur hinnig-savidigez er gompagnunez. Metivier a nahas beza anvet adjutant gand aon da veza kaset leh all. Gras d'eun taol gwidiluz ha da skoazell ar habiten Le Bonhomme e oen anvet kaporal.

Or habiten, evel ma lavare e ano, a oa eun den mad, ofiser e-pad ar brezel 14-18, e taole pled dreist-oll ouz êzant ha bevañs e zoudarded. Euz e-noa ouz ar vureverez. Da zarn euz goulennoù ar strollad-gourhemenn a gave dibouez, e ree din respont dre ar geriou-mañ : "Bevet, lojet ha gwisket mad e vez va zoudarded".

Begny

E-pad ma oan en Eaubonne, eh is da weled va hoar Frañsin a oa o paouez dond da chom da B/Pierrelaye, tost d'ol lojeiz-soudarded. Kavoud a ris va hoar hag he daou vugel en diouerded ar vrasa. Va breur-kaer a oa bet galvet d'an arme abaoe deizioù kenta miz Gwengolo ha Frañsin n'he-doa touchet gweneg ebed, abaoe ma oa bet digoret ar brezel. Abaf-braz e oa ha ne anaveze den ebed e-barz ar gumun. Setu perag n'he-doa ket kredet mond beteg an ti-kêr da zisklêria he stad ha da adgoulenn eur sikour da hortoz. A-boan ma vane ganti a-walh da brena he bevañs evid daou zevez. Abaoe eur zizunvez, ar famill ne en em veve ken nemed diwar soubennoù.

A-raog mond da B/Pierrelaye am-oa lakeet evez evuruzant da gas ganin toud va arhant. Rei a ris dezi a-walh evid beva eur penezeg devez bennag. Adaleg va distro d'ar gompagnunez, e rois kelou euz he stad d'ar habiten Le Bonhomme. Kerkent e telefonas da di-kêr Pierrelaye, a roas eur sikour malluz da Frañsin.

E-kerz miz Kerdu, or rejimant a resevas urz da vond da en em bosta en Ardennes. Or hompagnunez a zlee mond da gêriadennig Begny. Echu e oa an amzer vad.

Al lojeiz a oa bet roet dim a oa eur feurm vihan dilezet, e penn ar bourk. Deut e oa an erh 'raog dim. Adaleg ma oam erruet, e lakjom an dour, an tredan, hag eur strinkadenn-dour tommet gand fornigell ar gegin. Tostaad a ree Nedeleg hag an amzer ah ee war yennaad deiz-ha-deiz. Lakaad a reem or bureo er gegin, e-kichenn ar fornigell. Diou zal a-rez an douar a ree evid sal-debri ha magazin ar bitaill.

Soudarded ar gompagnunez a oa bet ingalet e meur a lojeiz. En on hini, e oam eun ugent bennag, soudarded hag isofiserien. Unan diouzm, an abad Patin, person eur barrouz euz bro Normandi, a reseve lipouzereziou digand e barrouzianiz. Da nozvez ar pellgent, e lavaras an oferenn hanternoz en eur zal euz ar bourk bet prestet d'ar gompagnunez gand person ar barrouz, evid an degouez. Hemañ a ginnigas dillad-oferenna d'an abad Patin. Med o nah a reas.

- « Me a zo eur zoudard ha lavared a rin an oferenn gand va dillad-soudard. »

Eun tregont bennag a zoudarded a heulias devod an ofis ha goude eh adkavem or hamaraded el lojeiz evid an askoan. Mond a ree an traou en-dro ken ha ken. E-leh ar yar-indez, ar geginerien o-doa kavet eur penn-gwazi. Evel ma ne oa na

champagn na gwin fin er hontre, hag an dour o veza difennet gand ar geginerien, ne oe zervijet nemed aperitivou e-pad ar pred.

Goulennet e oe eur ganaouenn digand Metivier, pa oa serjant-chef ha teñzorer ar gompagnunez. Ne helle ken chom en e zav. Daou gamarad e zikouras da graped war an daol. Ober a ree eur paz war-raog, daou war dreñv. Koueza a reas añfin etre divreh eur soudard a daole pled outañ.

D'ar c'hweh warn-ugent a viz Kerdu ar gwrezverker a ziskennas beteg pemzeg dindan zero. Ar fornigell vraz e veze taolet glaou enni heb ehan hag e-barz ar zal a ree evid sal-zebri e oa bet c'hwezet eun tan braz. Kregi a reas e-barz ar siminal a-raog kreisteiz. Eur bagad tud en em vodas dirag ol lojeiz. Er reñk kenta, perhenn ar feurm a jestraoue, o yudal e oa eun darvoud gwall-spontuz. Ar serjant Duchemin, eur pomper genidig euz bannleo Pariz, en em hastas d'hen digounnari.

- « Ma ne fell ket dit e vefe devet da goz-ti en e-bez, hast buan degas din diou skeul hag ugent metrad-kerdin. »

Deg munutenn goude, e oa lazet an tan.

C'hoari a ree ar goañv muioh-mui. Dond a ris a-benn memestra da lakaad eun trohad mad a blouz heiz em boutou-ler. Dre zegouez, eur houblad tud koz a ginnigas din eur gambr hag eur gwele evid daou. Asanti a ris a galon vad hag hel lavariz d'am hamarad Lordier. On-daou e tremenjom añfin eun nozvez e tommder eur gwele war eur pez golhedad marblu, dindan tri fallenn hag eur plueg-treid.

An deiz war-lerh beure, da lein, e oe servijet dim eur pred saouruz gand silzig teo, koñfitor, mel, bara hag amann, evel ma karem. Tremen a rejom pemp nozvez ti an daou goz. Ar re ziweza e Begny.

Rocroi

D'an deiz kenta a'r bloaz 1940, e oa skornet toud an tuellenou-dour. Galloud a reem koulskoude kaoud dour mad da eva er puñs. Ar gwin, e-barz ar boutaillou, ne oa ken nemed skorn. Evid hen diskorna, ar geginerien a ranke terri ar boutaillou. Ar "pernod" zoken a oa strafuillet. An temz-amzer a oa war-dro tri warn-ugent dindan zero. Den ne labouré ken. Daou dra nemetken a zelle ouzim : herzel ouz ar yenion ha debri.

D'an eil a viz Genver, e oe kemennet dim chañch lojeiz. Dleed a reem mond d'eur bourk braz a-walh, eun ugent kilometrad bennag euz Begny. Ne ree ket ken erh med an temz-amzer a zalhe da ziskenn. Ober a rejom an hent war droad, evid en em domma. Goullo a-grenn e oa an ti a oa bet miret evidom. Nag an disterra pez-arrebeuri na zoken eur fornigell. Rei a ris da hovezed d'ar habiten e oa eur bern-koad e-kichenn treuzou an ti.

- « Kemerit eur harrig-dre-dan, emezañ. En em gemerit evel 'po c'hoant ha deut en-dro ar buanna ar gwella. Lavarit d'ar perhenn hag adaleg warhoaz beure e vo roet dezañ eur baperenn-rekizision. »

Ha ni da en em bourveza. Pevar e oam. Digor e oa ar magazin, med bez' e oa an diwaller, eur pez ki-dogez hag a deuas etrezom en eur ziskouez e zent. Duchemin

a reas sin dezañ da zouza goustadig. Taped a reas eur skirienn hag, a-nerz e gorv, e roas eur skillennad d'ar hi a ruillas war an douar a-raog tehel kuit en eur yudal. Eur horadenn vad a dan e pep sal a dommas ahanom eun tammig.

Tri deiz goude, e kuitaem ar harter evid mond war gompézenn Rocroi, Siberia ar vro Ardennes. Ar horn-bro dibabet evid ar gompagnunez "er-mêz ar reñk" ne oa ket gwall bell diouz kêr. En em zivoda a reas e pevar pe bemp kêriadenn. Pep bagad soudarded a rankas en em gemer evid beza lojet ti an dud en eur ziskouez e villed-rekizision.

Or bureo nemetken a resevas an dileuridigez ispisial evid galled beza a-stok ouz strollad-gourhemenn ar rejimant. Al labour-bureo a oe kaset d'ar peb reta. Or habiten a ziazezas e Rocroi gand ofiserien all. Dond a ree d'or gweled prim-ha-prim, e-kerz an devez, evid sina eun nebeud skridou en em garge da gas.

Tremen a reem on amzer o vale war an erh evid divorza on diouharr, o kousked, o tebri, o skriva ol liziri pe o c'hoari 'r hartou. Paotr al liziri ah ingale al liziri bemdez hag a roe kelou dim euz ar hompagnuneziou all ha bemdeiz, gand hirêz, e hortozem e vizit. Stignet e oe, añfin, al linennou telefon prometet dim adaleg ma oam erruet... an deiz a-raog ma tleem mond kuit adarre.

An temz-amzer a grogas da veza digrisoh. Ha setu ma oe gourhemennet dim mond da en em bosta, tost da Charleville-Mezières.

Abaoe pemp miz e oa digor ar brezel, med den ebed ne ree ano dim a gementse.

Ar stal-werz "Arvor"

An diblas-mañ a oe ar pevare hag an diweza a-raog arsaill an armeou almant. Adaleg ma oam bet diazezet mad e Rimogne, or hompagnunez a resevas eur hinnig-savidigez a-berz ar strollad-gourhemenn. Or habiten n'en em dregasas ket gand se. Ar re genta ah eas d'e gaoud a oe servijet dioustu. O veza ma oan e bureo an deiz-se, e oen anvet kaporal-chef.

Ar stad a "louf-torchenn" ne zeree ket ouz temz-yehed or habiten, kinniger-koñvers bet. Krog e oa da gaoud hir an amzer. E-pad pevar devez, ne oe ket gwelet er bureo. Eun abardaevez, en em ziskouezas adarre hag a zisklêrias deom eur helou euz ar souezusa.

- « Keuz am-eus d'ho kuitaad, emezañ. Pourvezadur ar rann-arme n'eo ket eratre. Goude kalz a strivou eh on deut a-benn da veza aotreet gand ar jeneral hag e strollad-gourhemenn da zevel eur genbrenerez-rann-arme evid bitailladou ar zoudarded... en eur baea evel just. An darvuia euz zoudarded ar rann-arme a zo Bretoned, setu perag e vo anvet "stal-werz Arvor". Keuz am-eus ne hellan ket ho kemer toud ganin, med peb rejimant a zle kaoud e zileuriad. En abeg d'ar garg a gemeran eh on bet aotreet da choaz va zeñzorer. C'hwi, Ar Moal, eo an hini am-eus dibabet. Bet am-eus an arhant red evid ar prenadennou kenta, hag adaleg warhoaz, e krogfom d'ober or staliadiou. »

D'an eil antronoz, ar "stal-werz Arvor" a zigore.

Ar habiten Le Bonhomme a oa eur paotr futet, ha gouvezed a ree e oa red, evid gwerza, c'hoari gand an embannadurez. Unan euz e vignoned euz ar brezel 14-18, marhadour gwin hag alkol a-vicher, a oa komandant e-barz ar strollad-gourhemenn. A-drugarez dezañ, eul lizer-kelh a oe lennet e peb kompagnunez da boent ar galv.

Eur hamion ha daou gamionig goloet a oe roet da lod d'ar "stal-werz Arvor" evid ar bitailladur. A-drugarez d'ar habiten Le Bonhomme, toud ar varhadourez a veze gwerzet diouz ar priz a-vraz. C'hwezeg e oam o labourad e-barz : ar habiten, eur beleg-serjant, eur haporal, daouzeg soudard ha me.

...Distaget e oam diouz ar gompagnunez... bet on-oa eur prest-arhant ispisial kevatal ouz priz klok bevañs eur soudard : eur gounid nêt evidom peogwir ar stal-werz a geusteur ahanom evid mann...

Or heginer n'e-noa nemed ober e choaz evid sevel ar roll meuziou. Bep kreisteiz, on-nije droed da gaoud eun "digor-kalon". Kartad gwin voutin Yann zoudard a vije lakeet en e leh eur gwin a-zoare diskarget e-barz "gwer garrennou dezo". Evid echui ar pred, e veze servijet dim eun dibenn-pred en on diviz - hag eur bannah hini kreñv. Evuruzamant e oam paotred dilonteg ha n'eh eem ket re bell gand an evaj.

Siwaz, ne oa ket heñveldra gand or habiten... Kazi bemdez, e pede d'o merenn tri pe bevar ofiser, en eur zal vihan miret evite. Bep gwech, e veze eul lonkadeg vraz gand gwin champagn.

Bez' e oa eur soudard euz Vouvray, er stal-werz. Bet gantañ eur bermision deg devez, ar habiten e bedas da brena - diouz ar priz-a-vraz - teir barrikennad a zaouhant litrad gwin Vouvray, euz ar gwella, ha d'ober o degas ar primma posubl. Ar paotr a reas kement a strivou evid kas da benn e gefridi ma tistroas d'ar rejimant gand daou zevez dale... ha gand e henou poaz, war ar marhad. Dleet e-nije bet beza taolet en toull e-pad eur mizvez. Med e "stal-werz Arvor", toud an traou a zeue hag en em reize. Ne oe ket lavaret d'ar rann-arme ha setu greet ar stal, eur wech c'hoaz.

Tri deiz goude, or harrig-goloet a zegemere eur varrikennad Vouvray ti Goulet-Turpin, marhadourien win. Adaleg ma oe erru er stal-werz, e oe lakeet ar varrikenn e toull hag urz roet d'ar werzerien da rei ar gwin da dañva, evid bruda anezañ, da doud ar zoudarded a zeufe da "stal-werz Arvor".

Pa veze er stal, ar habiten a drinke gand toud ar zoudarded. Evitañ, gwin ebed ne oa gwelloh evid ar Vouvray. Eiz deiz goude, e oa goullo ar varrikenn. N'am-oa ket lakeet an disterra gwenneg em hef. Eun nebeud deizioù goude, eh erruas an diou varrikennad all. Dleoud a reen lakaad em hef arhant teir barrikennad win, ha n'am-oa nemed diou da werza...

Bez' e oam e fin miz Genver 1940. E Rimogne, den ne gomze diouz ar brezel. Hervez ar hemennadurioù a reseven, strollad-gourhemenn armeou Bro-Hall a hortoze, sonn war e dachou, arsaill an Almanted, a-dreñv d'al linenn Majinot.

Champagn

Eur zulvez, e savas ar rannad-arme eur fest sport. Da-geñver ar fest-se, ar habiten Le Bonhomme hag a zaremprede kalz a bennou-braz-braz, ne gavas ket gwelloc'h evid o fedi d'ober eur horvad. Ar habiten hag a oa eur beg fin a oa deut da veza eur mestr-touet war ar geginouriez. Sevel a reas ar roll-meuziou heb taol evez ouz an dispign. Karget da bourveza eur rannad euz armeou Bro-Hall, heb espern e boan hag e amzer, e kave dezañ e oa eur gopr reiz eur verenn vad, beb an amzer. Rekizisioni a reas eur zal a skoe war eur jardrin a oa diouz eun ti stok-ha-stok gand ar stal-werz.

Goulenn a reas sikour gand eur mestr-keginer hag eur gwasteller. Bez' e oa eun ugent kouviad bennag, a beb grad, abaoe al letanant beteg ar horonal. En o zouez, daou veleg, ar homandant Thomas euz bro Gwengamp hag eun all euz Lannuon. Eur friko dispar !

Evid kas an eog hag ar givri-mor d'an traoñ, ar habiten a zibabas tri mark champagn euz ar re vrudeta. Evid pedi ar gouvidi da lipad gand herr o gwerennad, or habiten a zave en e zav, da beb mare hag ah esae klask eun abeg da drinkal.

- « Da yehed ar jeneral, komandant ar rannad-arme, evid beza aotreet ahanom da zevel ar "stal-werz Arvor" ! »

- « Da zavidigez unan euz on ostizien d'eur grad uhelloc'h ! »

- « Da yehed an hini kosa euz an ofiserien a zo amañ ! »

- « Da yehed an hini yaouanka ! »

Adaleg ma veze boulhet eur werennad, eur servijer a zlee he adleunia. Urz ar habiten !

Hemañ a oe evuruzamant awennet mad da nompaz sevel e werenn da dreh-dazond on armeou. Gwelloc'h e kavas komañs e dro-kana gand eur ganaouenn en enor da zoudarded ar brezel 14-18.

Ofiserien all a ganas d'o zro. Kanaouenn ebed ne oe kaset da benn. Goude e teuas tro ar hontchou, darn fentuz, darn all louz krak-ha-krenn.

Ni ivez on-oe ol lod-friko. Ne dañvajom ket ar champagn zoken. Re heuget e oam gand ar pez e oam o paouez gweled a-berz an ofiserien. Chomet e oant bet ouz taol e-pad ouspenn teir eurvez. Eur penn-skwadron a zeuas soñj dezañ a-greiz-toud e tlee ren embregadou ar rejimant e gouel ar sportou komañset eun eurvez oa. Eur habiten zoudarded-war-droad a zlee ivez kemer plas e gomandant e penn ar bataillon. Red e oe kas diwar vall unan euz or blenierien evid o digarezi : ar penn-skwadron a oa o paouez beza reuziet gand eur red-kov foeltruz hag ar habiten gand eur barrad droug Sant Urlou a zalhe anezañ en e wele.

Peb rouler e-noa lonket diou voutaillad hanter a win-champagn.

Toull-diskarg "stal-werz Arvor"

Bep sizun, ar serjant-beleg ha me a renable or staliad marhadourez. O lakaad anezi e kemm gand al lizerou-dle hag an traou deut e-barz ar vagazin, an toull er hontchou a zalhe da greski.

En em houlen a reen penaoz kempoueza koll ouspenn kanter-kant boutailad Champagn, heb konta ar bitaill all. Bep taol, e halven d'an evez ar habiten Le Bonhomme... ha ne zeblante ket beza strafuillet an disterra.

- « N'en em chakit ket 'ta, Ar Moal. E-barz an arme, ar hudennou-mererez a vez reizet dalhmad ! »

Spontet e oan gand seurt moherez. Abaoe an nozvez goude al lonkadeg vraz, e kousken fall, o klask, heb vad ebed, penaoz en em denna diouz an toull-gwesped-se.

Eul lunvez, kerkent ha ma oa bet serret ar stal-werz, e renablen va staliad. An toullig em hef a oa deut da veza eun toull-diskarg. D'ar meurz, e houlen digand ar habiten ma dizamma diouz va harg. Lakaad a reen en a-raog e oa re bonner ar garg-se evid va zammig gouestoni :

- « Ho kinniget am-eus bet evid ar post-ze, a lavaras din. Med anvet eh oh bet gand penn strollad-gourhemenn ar rannad arme ha den nemetañ ne hellfe ho tizamma diouz ho karg... ha c'hoaz e vo red proui n'oh ket diouz ar gefridi-ze... Me, n'am-eus mann ebed da damall deoh. Ha ma savfe tabut, dre zegouez, me a warezo ahanoh. Bezit dizoaniet, Ar Moal. »

Bez' e oa oh echui e gaoz, pa zonas an telefon. En abeg d'ar riell, eur harrig dre dan a oa o paouez mond d'an douflez. Ar harrad marhadourez a oa evid ar stal-werz. An drived darvoud abaoe deg deiz...

En eur ziskregi diouz an telefon, ar habiten a vousec'hoarzas :

- « Setu aze eun darvoud hag ho tivehio », en em gontantas da lavared.

Ha goude beza en em zoñjet :

- « Ha greet ho-peus ar renabl, Ar Moal ?... Ahanta, her roit din. »

Ar brasa euz ar holl a oa war an evaj, dreist-oll war ar varrikennad Vouvray. Manked a ree ivez ouspenn kant boutailad Champagn ha daou-hant a win fin. Dezañ e-unan, an evaj a oa evid pevar-ugent dre gant euz ar holl.

Ar habiten ah eas kuit d'e vureo heb lavared grik. Dond a reas en-dro, eun hanter eur goude.

- « Hemañ eo an drived kamion o vond d'an douflez e berroh amzer ha pemzeg deiz, hag ar bemped en eur miz. Peurliesha, e vez freuz, pa ziskar eur hamionad boutailou. Bet oh bet aketuz da ober renabl ar pevar darvoud kenta ; hini dilun, eh eom da bleal gantañ bremaig. Skrivit war ar rann "koll" toud ar pez a vank deoh. Skrivit ivez eo en em zileuniet ar varrikennad Vouvray ».

Êsa a ris zevel va mouez :

- « Kompren a ran ho morhed, Ar Moal. Med grit evel am-eus lavaret deoh. Skei a refet ar renablou gand ar skriverez ha me o zino ha c'hwi a vo dizle. Rentit din ivez toud al liziri-dle hag e virin aneze. Mar bez eun enselladur, n'ho-po nemed ho kaier-kev da ziskouez. Me en em gargo diouz ar rest. »

War diwall e oa ar habiten. Savet e oa bet kaoz diouz lonkadeg vraz ar zul a-raog ha deut e oa ar vrud beteg diousskouarn meur a ofiser euz ar strollad-gourhemenn hag eun enselladur a oa bet kemennet.

Rei a ris da hovezed d'ar habiten :

- « Grit ar pezh am-eus lavaret deoh. En em garga a ran d'o resev. »

Eul letanant euz strollad-gourhemenn ar rannad-arme a zeuas d'or haoud, d'al lun war-lerh, da nav eur. Evuruzamant ne zaremprede ket ar stal-werz.

- « C'hwi eo Ar Moal, teñzorier "stal-werz Arvor" ?

- « Ya, me an hini eo. »

Lavared a reas :

- « Lennet am-eus, er rannad-arme, e oah urcher a justis. Bet am-eus an dro da enselled hiniennou euz ho kenvreudeur. Me a zo enseller an dielladur. »

- « Hag e teuit evel just d'am hontroli ? Red e vefe deoh mond da weled ar habiten Le Bonhomme. »

- « Me 'zo o vond koulskoude da voulha ganeoh. »

E-pad ugent munutenn, e sellas spiz ouz renabl diweza ar varhadourez ha va haier-kev.

- « Bez' ho-peus bet gwall-zarvoudou », emezañ.

- « An hentchou a zo ken frimet ma'h on souezet n'ez eus ket muioh. »

Goulenn a reas neuze al liziri-dle.

- « Emaint ti ar habiten Le Bonhomme. Just ! Setu ema o tond. »

Diouz e vureo e-noa klevet ar gaoz ha deut e oa er-mêz, war an taol. Div eur e chomas an enseller e bureo ar habiten. Goude-ze e chomas gantañ ha gand daou ofiser all da zebri e verenn e-barz ar stal-werz. Diou voutaillad champagn a oe lipet gante !

Paotr e vomeder

War-dro an deg a viz c'hwevrer 1940, e resevis a-berz Ernest ar Gao, eur banerad istr plad kaset war-eeun diouz Lannuon gand eur marhadour pesked war-dro an ugent a viz genver. Ar marhadour e-noa ragwelet e lakfe ar gasadenn kalz amzer evid errued d'am bete ha greet e-noa ar brasa diarbennou. Goloet e-noa an istr gand eur gwiskad teo a hoemon. Digeri a ris ar baner heb spi ebed da dañva unanig hepken aneze.

Va hamaraded - an darnvuia n'o-doa jamez tañvaet an disterra istrenn - a zelle ouzin gand avi, o tigeri va fakad.

- « Domaj eo... a laris deze... Med ne hellfet ket tañva istr plad brudet Breiz. Lakeet o-deus teir zizun evid dond beteg amañ ha sur a-walh n'int ket mad da zebri bremañ. »

E-touez ar bagad, eur zoudard yaouank distaget gand ar 158^{ved} rejimant a ganolierez e-barz ar stal-werz a gemeras eun istrenn, a dennas eur momeder euz e hodell hag hen lakas 'uz d'ar grogenn. E vomeder a reas eun nebeud luskelladuriou a gleiz da zehou. Kemer a reas eun istrenn all ha goude eun all

c'hoaz. Enne toud e vane eur bannahig dour-mor. O floupa a reas, dirag ar zoudarded all, sebezet.

- « An istr-ze n'int ket gwall fresk, a dra zur med paket mad eh int bet hag abaoe ma'h int bet kaset ne ra nemed skorna bemdez. Ma fell deoh o zañva, hastit buan, anez eh an da zebri an hanter aneze. »

Eur hard eur goude, e oa goullo ar baner.

Bezañs "paotr ar momeder" e "stal-werz Arvor" a oa eur wir divunadenn evidom toud. Pevar bloaz warn-ugent e oa. En em houlenn a reem petra a ree en on touez, ni hag a oa deg vloaz warnañ. Eur segred bennag a zeblante beza en-dro dezañ. Ne zaremprede ket kalz a genvrezelourien. Prest e veze dalhmad d'ober toud ar horveou, zoken ar re heugusa ha seblanted a ree kaoud eun tammig plijadur oh ober aneze. E-pad e amzer vak, en em golle e-barz lennadur kelaouennou-kelh ha leoriou a ouiziegez.

Tañvaet gantañ an istr, e kinnigen dezañ chom d'or zikour e-barz ar vagazin, ar glianted anezañ o veza niverusoh-niverusa. Buan-tre, eun spes kengarantez on dedennas an eil etrezeg egile.

Eur zulvez d'abardaez, e oam on-daou o pourmen war ar mêziou. Goude beza roet va ger da ziskleria netra da nep piou bennag, e lavaras din e oa e dad eun ofiser euz an eil bureo hag e vamm eur judevez. Hervez e lavariou, e-noa tremenet c'hweh miz en eur hoñsuldi en Alamagn dindan eur fals-ano, karget diouz eur gefridi amguz pe amgusoh, diwar-benn enklaskou brezel.

Distroet e oa bet da Vro-Hall goude emgleo Munich. E-kerz ebrel 1940, e lavaras din e-noa selledou war waz e-keñver degouez ar brezel.

- « Arme Bro-Hall a zoñj ganti ema dienkrez a-dreñv d'al linenn Majinot. Daladier a zo o paouez rei e zilez ha Paul Reynaud e-neus kemeret e blas. An Almanted hag ar Rused o-deus lodennet Bro-Bolonia etreze ha Hitler ne chomo ket heb kilenebi e-pad c'hweh miz. Bremañ, ema sur 'walh o voda e dankou hag e girri-nij war harzou ar Beljik hag an Holland. E-keit hag ema ar jeneral Gamelin o hortoz aneze a-dreñv d'al linenn Majinot, didreuzuz a gav dezañ, armeou Hitler a zo o vond da dreuzi steriou ar broiou nep tu evid taga or zoudarded a-ziadreñv. An Almanted o-deus pemp kwech muioh a dankou evidom ha kement a girri-nij ha ni. N'eo ket gand or zoudarded war droad hag or hezeg e hellfom o harta. Hitler a fell dezañ beza treh war Bro-Hall ar primma posubl evid galloud trei goude a-eneb d'ar Rused. Med braz-divent eo Bro-Rusia hag e armeou a hellfe beza drastet e-barz. N'ankouait ket Napoleon. An diktatored o-devez dalhmad ezomm d'aloubi ar broiou all evid mired o levezon. Lavared a refet din eh on eun trehedour, med anavezad a ran stad an traou. Kredi a ran koulskoude e trehfom a-benn ar fin. Evel e 1917 an Amerikaned a zeuio d'or zikour rag ne asantint jamez gweled eun diktator suja Europa a-bez. Med n'int ket c'hoaz prest bremañ hag emaint o vond da laoska an Almanted hag ar Rused d'en em skuiza a-raog dond warne. Ar Moal, ma chomo kement-mañ etrezom ; med mah or-bez tro da en em adkavoud, e vo adkomzet diouz se. »

E derou miz mae, eun nebeud kirri-nij a dremenas, uhel tre e-barz an oabl. Imposubl o anavezad. Eur zoudard hepken ah anavezad eun avion almant, diouz trouz e voteuriou : paotr ar momeder. Den nemedon ne houvezas kement-se, er gompagnunez.

Rimogne-Vervins-Compiègne... hag e se

D'an deg a viz mae, war-dro peder eur d'abardaez, e houzañvas Rimogne eur gwall vombezadeg a-berz kirri-nij an Almanted. Liez hini e-touez ar ziviled a oe lazeta pe gloazet. Urz a oe roet d'or rejimant da veza prest da gila. Karget e oe ar hirri, gand or pakajou dillad ouspenn, a-benn mond kuit. Ar ziviled, pendallet gand ar vombezadeg, a dehe kuit. Ar spontadenn drumm a rene dre oll. Toud bitaill ar stal-werz Arvor a oa bet lakeet e goudor e-barz kamionou. Or hirri a oa dindan gwardoniezh vad en eur porz e-kichen, eun ugent metrad bennag pelloc'h. Pa ne reseve ar habiten urz ebed da gila, war-dro teir eur diouz ar beure, e kemennas d'ar serjant-beleg mond da houlenn disklêriaduriou digand ar strollad-gourhemenn. Distrei a reas, strafuillet, deg munutenn goude. Izili ar strollad-gourhemenn, toud, a oa eet kuit... gand or hirri ha gwetur ar habiten : ofiserien, isofiserien ha soudarded ha n'o-doa ket moarvad tra-walh a weturiou ha n'o-doa ket kavet gwelloc'h evid kemer or reou-ni ha tehel kuit heb her rei zoken da houvezad dim. Digeri a ra ar brezel iskiz gand e zizurz hag e sistem D.

Ha ni ivez kuit... war droad ! N'on-oa ken netra : na arm, na pakad, na bitaill, na dillad diouzm on-unan. Ha ni da voulha or bale hirbad e-touez eur strollad repudi. Darn o-doa digaset gante, buan-ha-buan, beb sort traou : meublaj, bitaill, leueou, deñved, hag e se. Skuiz-divi goude beza kerzet e-pad peder eur, e rejom eun diskuiz war-dro eiz eur d'ar beure, a-raog derhel da gila.

D'an unneg a viz mae, war-dro unneg eur, e hartjom en eur hroazhent. Ar habiten Le Bonhomme a zellas spiz ouz e gartenn. Va zellou a baras war eur banelhent : Tourteron, 3 h/km. An ano-ze a oa manet sanket don en va spered. Aze, el leh-se, va zad, Fañch ar Rolland, a oa bet gloazet. Aze e oa bet greet prizoniad-brezel, d'an dregont a viz eost 1914.

Mouez ar habiten am hasas en-dro d'e gavoud.

- « Ma ne gavom doare-karr ebed, a-benn eun nebeud eurveziou e vefom tapet ha greet prizonidi. »

En em lakaad a reas dirazom, eur vaz en e zorn, e-kreiz an hent.

- « En em lakit a-dreñv din, ha stankit an hent. An Almanted a zlefe dond diouz ar hostez-se. Hartit ar henta doare-karr a welfet. »

Eun nebeud munutennou goude eh erruas eur harrig marhadourez Citroën goloet. Ar blenier hag an tremeniad, marichal al lojeiz, a nahas diskenn d'an traoñ. Goude eun tabut braz etre ar marichal hag or habiten, ha ni da lamped e-barz ar harr.

E Vervins, e klevjom e oa tremenet rag-strolladou soudarded almant e Tourteron, war-dro teir eur goude kreisteiz. An deiz war-lerh beure, e kemeren

hent koajou Compiègne, e-leh ma tlee rejimantou gall en em voda. Paotr e vomeder e-noa ragwelet reiz. Armeou Hitler en em daole warnom goude beza aloubet Bro-Veljik. Imposubl dezrevell an dizurz a rene e-barz ar hoajou divent-ze.

Goude beza bet kaset e tri rejimant lerh-ouz-lerh, ha ne oa ket gallet sevel anezo, eh erruen, n'houvezan ket penaoz, e-barz departamant an Oise, eun daou-ugent kilometr bennag diouz Creil, evel sekretour eur homandant hag a ree evid koronal eun tamm rejimant distankaet.

O tond er-mêz diouz e vureo, en em adkavan gand Maury, paotr e vomeder.

- « Lodennet om bet e meur a rejimant. Kuitaet am-eus koajou Compiègne gand ar beleg-serjant, an deiz war-lerh da zisparti ha kaset om bet amañ tri devez 'zo dija, med sur a-walh ne jomfom ket gwall bell. »

E gwirionez, daou deiz goude, eur soudard-reder a deue da lavared dim e oa tri garr-arsaill almant war-dro tri kilometr diouzim. Evid o harta n'on-oa nemed eur hanol bihan, teir fuzuill-vindrailla hag eur bistolenn.

Gand urziou ar serjant Noel euz Zant-Malo, e kemeras Maury, paotr e vomeder, ar fuzuill-vindrailla. A-veh e oa en em guzet e-barz eun touflez ma en em gavas gand beleg-serjant ar stal-werz Arvor. Med chomet e oant en or pakajou pa dehas kuit ar strollad-gourhemenn gand or hirri.

Ar homandant a hourhemennas din mond da sportva Colombes, e-kichenn Pariz, e-leh ma tlee beza dastumet rejimantou all. Ha me war an hent a-gevred gand Duchemin. A boan on-oa greet pemzeg kilometrad ma tremenas eur skouadrennad kirri-nij-chase almant a-uz dim. Mond a reent etrezeg Creil.

Pesort gwall darvoud vrezel, oh errued e Creil. An tangwall e-barz meur a di... Karteriou beuzet dre ma oa bet distrujet an tuellennou-dour... Korbou-marou astennet war ar ruiou... An dud n'o-doa ket dilezet o goudorjou. Kuitaad a rejom Creil gand herr. An hent a oa leun a zoudarded oh en em stleja e-touez ar repuidi. A-raog errued e Colombes e oe red dim harta evid laosken da dremen eur charreadeg kirri euz an arme, heuliet gand eur gompagnunez tennataerien ar Senegal.

Seblanted a reent beza skuiz-marou, med derhel a reent da vond, kleñk dre an hent, dindan urziou eul letanant. Unan aneze e-noa eun dañvad. Abaoe an deg a viz mae, ar gompagnunez-mañ a oa kenta bagad soudarded reizet mad a gaven war va hent.

Ha ni, añfin, e sportva Colombes e-touez soudarded hag ofiserien a beb derez-karg, a vil-vern. Ar vlenierien a jome en o hoazez a-dreñv da rodou-stur o hirri-tan evid o harz da dehel kuit gand eul laer bennag. Galled a rejom memestra kaoud eun tammig plas evid reñka or harrig-marhadourez.

E-touez toud ar zoudarded-se, dre ar brasa degouez, e kaven ar habiten Le Bonhomme ha Jouanneau hag ivez eun nebeud soudarded war droad, bet saveteet.

- « Etre hirie ha warhoaz, a lavaras dim ar habiten, an Almanted a vo amañ. Resevet on-eus urz da gila e koajou Ballancourt, e-barz traonienn Chevreuse. N'am-eus gwetur ebed barreg da vond war-raog hag arabad konta war or mistri

evid beza pourvezet. Ma ne fell ket deoh beza prizonidi, en em zibabit evid kaoud unan ha bezit distro benn div eur amañ. »

Evuruzamant e-touezom, e oa liez ganfard euz ar vannleo. Unan aneze ah anaveze eun uzin Citroën tost d'ar sportva ha gouvezed a ree e oa bet dilezet an deiz-raog. Jouanneau ha tri euz e gamaraded a bartias etrezeg an uzin. En eur harr-di, e oa eiz oto nevez flamm, heb diwaller ebed. Pep hini a gemeras e hini, leunias ar stivell-esañs hag a zeuas a-benn zoken da gaoud ugent litrad ouspenn da lakaad a-gostez. Hag int etrezeg an uzin adarre... Distrei ar rejont gand kamionetezou. Eur soudard all ah arruas e-barz eur pezh gwetur a ginnigas d'ar habiten, gand kalz a lorch. Hemañ a oa dare dezañ ober eun infarktus.

- « Nondedie... n'ho-peus ket taolet pled ho-peus laeret kased eur jeneral ! »

- « Penaoz e houvezit kement-ze, va habiten ? Her havet am-eus tost da dachenn ar sportou ; gwelet am-eus e oa leun ar stivell-esañs ha daou vidonnad ugent litrad pep hini a oa e-barz ar houfr. Evel ma ne oa den ebed war-dro, em-eus en em lakeet dreñv d'ar rod-stur... ha setu aze. »

- « Hag an dra-ze ? », a yudas ar habiten, o tiskouez giton ar jeneral, e penn-raog e oto. « N'ho-peus ket gwelet anezañ ? Hastit buan lemel ar giton-ze hag ar plakennou. Klaskit kaoud eun tamm livadur ha bastrouillit ar wetur. Ha grit ma vo evel eun all en he leh... ha hastit buan. »

Eun hanter eur goude, an harzou-stok hag ar plakennou a oa bet lemnet, an eskell, an doenn, ar houfr, goloenn ar moteur bosigellet. E-kerz an abardaez, heb gortoz an urziou, ar habiten or pedas d'e heuill. Eiz gwetur on-oa, pourvezet mad gand bevañs hag esañs. An 13^{ved} a viz mezeven e oam. Treuzi a rejom lod euz bannleo-reter Pariz war-du traonienn Chevreuse. Or habiten a oa e penn ar golonenn en e wetur gwall-gaset.

En eur hroazhent, e kemennas Le Bonhomme dim harta. War on tu kleiz c'hweh karr-botez dre-dan almant ah errue. Nao harr-arsaill skañv o heuille, a-skoaz tri-ha-tri : Eur rag-strollad euz armeou Hitler hag en em brepare d'antren e-barz Pariz. Eun taol-zell ouzom en eur dremen hag e kendalhjont gand o hent, evel pa na vije ket mann ebed diraze. Nao miz 'oa e oa krog ar brezel. Ar wech kenta din da weled an Almanted.

E-barz koajou Ballancourt, ez adkavem an heveleb gwaskadeg-soudarded hag e Compiègne, en o zouez komandant rejimantig departamant an Oise e-noa fiziet e baperiou ennon. Rei a reas urz din da vond da Orléans gand ar paperiou prisiuz-se. Gourhemenn a reas din treuzi kêr ha gortoz pa vijen eet er-mêz, heb beza resisoh.

Bez' e oam d'ar 15 a viz mezeven hag, abaoe tost eur miz, e-nao disklêriet Mussolini ar brezel d'ar Farns... evid kaoud darn euz on traou sur a-walh.

Kuitaad a reen neuze ar hapiten Le Bonhomme, Jouanneau hag eun nebeud re all euz ar gompagnunez "mêz reñk" evid mond da Orléans gand Duchemin.

Tehoud a ree an oll dud.

E-touez eun dizurz spontuz ha dindan bombezadegou spontuz arme an Italianed, eh erruem e Orléans d'ar 16 a viz mezeven.

Den ebed e kêr. An darnvuia euz ar staliou a oa bet lakeet ar skarz warne. Gwastet e oa an tier gand an tan-gwall. Treuzi a rejom al Liger, war ar Pont-Royal, diouz kleved. Goude ar pont, eur homandant, eñ e-unan, a reas zin da Z/Duchemin da harta. Gourhemenn a reas dim diskenn d'an traoñ diouz an oto.

- « Eul lostad kirri a dle on heuill, a lavaras ar homandant. Ema o vond d'errued diouz eur momed d'eun all. Chomit aze ha lavarit d'ar wetur a zo e penn-raog kemer hent Blois. »

Rei a reas din eur gartenn.

- « Med, komandant, a respontis dezañ, me am-eus eun urz-kefridi ha ranked a ran gortoz amañ komandant va rejimant. »

- « N'eus ken urz-kefridi ebed. Dleed a rit senti ouz kenta ofiser a ro urziou deoh. Chomit aze ha grit ar pez a lavaran deoh. Galled a refet mar peus c'hoant mond e-barz karr diweza al lostad. »

Ha da Z/Duchemin :

- « Kemerit hent Blois. Ho heuill a rin. »

Chom a reen aze e-kichenn ar pont. Ha dreizañ ez is, va hask-branskell war va fenn. Ne welis jamez al lostad kirri. Med gweled a ris berniou doareou-kirri, ken nann-zoudard, ken zoudardel, o tibuna dirakon. Dambrest, eur Citroën vihan a hartas em hichenn. Jouanneau a oa dirakon.

- « Petra a rez aze ? »

Disklêria a ris dezañ va afer e berr gomzou.

- « Ya, plantet e-neus ahanout aze evid mond kuit gand herr hag en em lakaad e gwarez ar hirri-nij italian. Mindraillet om bet ha sachet am-eus va hillorou ganin en eur dremen e-biou da doud ar golonenn. Krap prim e-barz va gwetur ha kuitaom ar hontre a-raog an argadadenn. »

Kentoh evid pemp munutenn goude, an Italianed a zeue en-dro. En em daol a rejont war ar pont d'e vombeza.

Jouanneau e-noa kartennou euz ar strollad-gourhemenn. O hemeret e-noa e-barz oto eun ofiser e sportva Colombes. Divizet on-oa mond a-diz etrezeg Barbezieux.

... Milierou a zoudarded a oa erruet a-raog dim - kuitaad a reem prim kêr evid en em repui en eur feurm vihan, pemp pe hweh kilometr pelloh, war ar mêziou.

Daou zoudard a oa aze : pep hini gand eur gamionetez Citroën goloet. Unan a oa leun a armou hag eben a zanvez-bevañs... Ar venajerien a oa oadet. Digemeret mad e oem gante. Kleved a rejom gante e-noa Paol Reynaud roet e zilez abaoe ar 16^{ved} a viz mezeven hag e oa bet anvet ar Marichal Pétain e penn eur gouarnamant nevez e Bourdel ha goulennet e-noa eur arzav-brezel. Dinerz ha skuiz eh ejom da gousked beteg an deiz war-lerh beure.

D'an 21 a viz mezeven, Jouanneau, me hag an daou zoudard all a zivizas mond da glask kelou, da V/Barbezieux. Derhel a ree ar zoudarded d'errued. Komz a reed d'arzav-brezel, heb ma vefe resiz...

...Ne ouezem netra diwar-ben an arsav-brezel-ze. Hemañ a oa bet sinet, diouz kleved. Med dihouzvez e oam dioutañ. Klevet e veze ar haoziou ar muia faltaziuz. 'Vid ar pezh a zelle ouzim, e soñje ganim e oa bet diskoulmet ar gudenn...

... Gwetur vihan Jouanneau a oa bet spisverket gand eur habiten a houlennas digantañ :

- « Da be ofiser eo an oto-ze ? »

- « D'ar habiten Le Bonhomme euz ar 146^{ved} rejimant zouarded war droad. En em zispartiet on-eus pa'h eo bet bombezet Orléans ha n'am-eus ket e welet abaoe ha klask a ran anezañ. »

- « Rekizisioni a ran an oto. »

- « Her hemerit, eme Jouanneau, med lavared a ran deoh memestra eh eo zac'het. »

- « En em zibabit evid hen lakaad e-ratre vad ha bezit amañ, warhoaz da unneg eur. »

- « Bez' e vin, va habiten, m'hen tou », eme Jouanneau.

- « Roit din hoh ano hag ho niverenn-enrolla. »

- « Bonneau Paol, niverenn 1823. »

Kerkent ha ma oa eet ar habiten kuit, Jouanneau a gasas ar moteur en-dro ha ni da dehel etrezeg ol lojeiz-soudard.

- « Fall daonet ar hontre-mañ », a lavaras din Jouanneau... « Inutul d'ar habiten am gortoz warhoaz. »

E-pad merenn ti on ostizien ne oa kaoz nemed diouz or gwetur rekizisionet ha kreizenn dizoudarda Jonzac. Divizet e oe mond di adaleg an deiz war-lerh. Soñjal a reem e vefe dizoudardet da genta toud ar re ah errufe da genta hag en em weled a reem dija er gêr a-benn eun deiz pe zaou.

War-dro teir eur goude kreisteiz e kuitaem ar feurm, evid mond war-du Jonzac... en eur dehel euz Barbezieux. N'on-oa ket greet deg kilometr ma en em gavjom gand eur steudad kirri-arsaill almant. Jouanneau a droas a daol krenn war an tu kleiz hag en em gollas en eur pezh domani... Bez' e oam ti eur gwiniour... Hemañ ne oe ket zouezet o weled ahanom.

- « Netra n'am zouez ken, emezañ. C'hwil a zo marteze an degved bagad o tond amañ da glask repu. Eh oh o vond da Jonzac, moarvad ? »

- « En soñj e oam da vond di... Eur greizenn dizoudarda a zo o paouez beza bet digoret e-barz, diouz kleved. »

- « Sur mad, e vefet resevet a galor frank. An Almanted o-deus greet sevel ar vrud-se med n'eo nemed eur hamp prizonidi ha milierou a zouarded a deu da en em daol etre krabanou ar bleizi... »

... Eul linenn-vevenni a zo bet treset eun nebeud deiziou 'zo. Ar Frañs a zo bremañ etre diou lodenn, eul lodenn dieub hag eul lodenn aloubet. Ni a zo e-barz al lodenn aloubet. Toud ar zouarded en em gav e-barz a zo prizonidi-vrezel ha dastumet e vint, tamm-ha-tamm. Pevar ofiser almant o-deus rekizisionet kambrou en va zi. Me a zo eun ofiser bet prizoniad e-pad ar brezel 1914-18. Anavezad a ran mad a-walh an Almanted, hag evid tenna c'hwibez deze, o fedan bemnoz ouz taol.

Evel-se e houvezan toud an darvoudou. Al linenn-vevenni en em gav eun tregont kilometr bennag diouz amañ, war du Limoges. Ho hentcha a rin betek enno, fenoz. Lakit ho kweturiou er gwarez. 'Vid an noz, e rin war-dro ar Voched hag pa vint kousket, o hasin betek al linenn. »

War-dro c'hweh eur d'abardaez-noz gwreg ar gwiniegour a breparas dim eur goan founnuz. Eun eurvez goude, eh eem da goach e-barz eur marchosi koz, kuzuliet gand on ostiz.

- « Greet am-eus skuilla eun tamm plouz. Evel-se e hellfet en em ziskuiza. Distrei a rin war-dro hanternoz hanter, pa vo manet kousket ar Voched. »

Errued a reas, war-dro eun eur diouz ar beure.

- « Mezo-dall int, evel Poloneed... ha dirohal a reont. Prennet am-eus an diou zor-leur hag an alhweziou a zo em godell. Boutom war ar hirri-tan evid o has ermêz ha goude me o hentcho dre an hentchou treuz. Gwelloh beza evezieg. Goloiou va gwetur o blenio. Harta a rin daou pe dri hant metr diouz al linenn. Red e vo deoh treuzi eur pont hag e vefet e-barz al lodenn dieub. N'ankouait ket dreist-oll trei war an tu dehou goude ar pont. »

War-dro div eur diouz ar beure, e hartas e oto, e tiskennas war droad betek ar ster hag e tistroas da lavared dim e oa diharz an hent. Serri a reas on dorn dim hag heti a reas dim chañs vad.

- « C'hweh ouspenn o tehel kuit. Soñjal a ran n'oh ket ar re ziweza ».

Ne houvezan ket penaoz e drugarekaad.

- « N'am-eus greet nemed va dever. »

Hag e retornas d'e wetur.

Limoges

Ha setu-ni e-barz al lodenn dieub, o vond trezeg Limoges... War-dro unneg eur diouz ar beure, e welis, war an tu kleiz, eun nebeud a vetradou diouz an hent, eur zoudard bihan harpet ouz eur hleuz. Poan am-oa o kredi ar pezh a welen.

- « Med, Metivier an hini eo ! »

Ya, Metivier a oa aze, 'n e-unan, dilezet e-kichenn al linenn-vevenni. O hortoz... o hortoz ma fellfe d'unan bennag hartag hag e gemer e-barz e garr-tan. En em adkavoud, pebez joa evidom ! Goulenn a reen digantañ ar pezh a ree aze, ouz ar hleuz.

- « O ! En eul lostad-kirri ha soudarded e oan, hag a-greiz-toud am-eus bet ezomm da staotad. Goulennet am-eus gand ar blenier hartag e gamion. Med ne felle ket dezañ chom d'am gortoz. Setu perag, abaoe diou pe deir eur, emeon amañ o hortoz. »

Jouanneau a reas eun tammig plas dezañ ha ni adarre etrezeg Limoges. E penn kêr, e hartjom e-barz eun ostaleri vihan. Ar gêr a oa aloubet gand milierou a zoudarded, hervez an ostiz. Kuzuliet gantañ, e pellaem 'ta diouz Limoges evid derhel gand on hent eun tammig muioh war du ar hreisteiz. Ha setu-ni, añfin, en

eun uzin dilezet, eun deg kilometrad bennag diouz kêr, war bord eur ster. Aze, eun ugent bennag a zoudarded hag eur serjant o-doa lakeet o hamp.

Kalz a zoudarded en em lehie tro-war-dro hag eur harr-bitailleur a oa hartet tost d'an uzin. Lakaad a rejom on anoiou evid ar prejou. Jouanneau a brederias ouz tenna kuit kantoliou-elvenni e Citroën.

E-kerz eur valeadenn e Limoges, e taolis pled ouz armel-wer eur stalig-leoriou : war eur skritellig e oa skrivet kement-mañ :

“N'eus ken kroaziou-vrezel da werza”.

Souezet, eh antreen e-barz ar stal. Al leorier a lavaras din :

- « E gwirionez, resevet am-eus bet eiz kant kroaz a vrezel euz an arme, pemp pe hweh deiz 'zo. Med bet int gwerzet buan-tre. Abaoe derhent deh da noz, eo bet gwerzet ar re ziweza ha ne resevin hini ebed ken. Diouz kleved e vefe bet divizet gand or renerien e hellfe toud ar zoudarded erruet e-barz al lodenn dieub gand o armou beza tremenet evid soudarded o-deus divennet o bro hag e hellfent adgoulenn eur groaz-a-vezel. Resevet am-eus kemennadurioù d'o gwerza d'ar zoudarded hag izofiserien o-dije eur paper sinet gand komandant o hompagnunez o testenia eh int erruet el lodenn dieub gand o armou... Med kredi a ran n'ema ket bet an divizadur ».

Ra gendalho ar vuhez

Tremen a ree an devezioù, dizarvoud... Pouezuz e oa chom heb ober netra. Erru e oa dija hanter miz gouere hag an arzav a oa zinet abaoe teir zizun. Dizoudardet e vezed goustadig, hag ar re genta da veza kaset d'ar gêr a oa kargidi ar P.T.T. ha merereziou an departamant. Eur greizenn dizoudardur a oa bet savet e-barz prefeti Limoges. War-dro an ugent a viz gouere, Metivier ha me ah eas di. Metivier a glevas e oa a-walh dezañ kinnig eul lizer digand rener e di-bank o kemenn dezañ adkregi gand e labour, evid beza dizoudardet. Pevar pe bemp deiz goude, or huitae. E zisparti a roas eun ide din.

Klevet am-oa bet gand unan euz ensellerien ar gompagnunez La Protectrice e oan kourater anezi e Bear, he-doa houmañ e Limoges eun dileuriad yaouank euz an oberianta. Mond a ris da weled anezañ en deizioù diweza miz gouere evid diskleria dezañ va stad.

- « Klevet am-eus komz diouzoh, emezañ... Lavared a reer e teu mad an asurañsou-buhez ganeoh. »

Ar memez oad on-oa. Lavared a reas din e oa bet mobilizet hag dre ma n'e-noa ket gallet distrei d'al lodenn dieub, e-noa adkroget gand e labour.

- « Ne dalv ket ar boan deoh skriva da Bariz. Ne fello ket d'ar renerien derhel ar zah e-barz an afer-ze. Er greizenn dizoudarda e ren ar brasa dizurz ha den ne daolo pled da vann. Eun dra nemetken a hart aneze : penaoz kaoud treñioù evid kas ahanoh d'ar gêr. An darnvuia euz an hentchou-houarn a zo kontrolet gand al Almanted. Anez se, eul lodenn vraz euz ar zoudarded a vefe dija er gêr. »

War an taol, en em lakaas dirag e skriverez hag a skoas war eur follenn baper gand an ano La Protectrice war an talbenn, an testeni-mañ : “Ar haporal-chef Ar Moal, kourater ar Protectrice e Bear, Aodou-an-Hanternoz, eo red dezañ adkavoud e famill hag adkemer e garg hebdale, evid mad”.

- « Laoskit ar skrid-testeni ganin, emezañ. Eur mignon am-eus er prefeti. Fenez, e tlean e weled. Goude warhoaz, diouz ar beure, e hellfet mond d'e weled d'ho tro, diouz va ferz. »

Sekretour bureo ar prefeti a roas din eur fichenn dizoudardur hag eur paper evid galled kemer an treñ. An deiz-se, goude kreisteiz, e tilezen va hask-branskell. Evid mad !

An deiz war-lerh, d'abardaez-noz, e tapis sevel e-barz eun treñ e gar Limoges. Leun-kouch e oa. War al linenn-vevenni e oe red gortoz e-pad peder eurvez. Abenn tri devez eh erruen en eur Pariz sioul. Lakeet a-gostez ar gweturiou gand ar groaz hevoud an tremen-distremen a oa dister. Ar Barizianed a oa doare gante da goll o amzer. Serret e oa an darnvuia euz ar staliou. Dibourvez a vitailadur e oa Pariz moarvad. E-barz ar hroazhentou, an nebeud a dremen-distremen a oa renet gand an alouberien. Taped a ris kaoud eun otobus am laoskas dirag gar Montparnasse. War ar pazennou, tri Almant, o fistolenn en o dorn, a zellas ouzin, heb ober van. Direol e oa va faperou - dizoudard ha ne oan ket dizaonaet mad.

Eun eur hanter da hortoz am-oa a-raog mond gand treñ Brest. Kuitaad a ris ar gar evid mond d'eva eur bannah kafe. Tremen a ris dirag eur stal-hoariellou hag e prenis diou verhodenn vraz d'am merhed bihan. Pa zistroen d'ar gar, an tri Almant a oa bepred war ar pazennou. Unan dioute am anavas moarvad. Buka a reas e viz-yod war va fakad ha gourhemenn a reas din hen digori. E-keit ha ma tispaken anezañ, e souzas war tri pe bevar metrad... Kemer a ris ar merhodennou.

- zYa... ya...z a respontas hepken.

An treñ a oa er gar... n'am-oa ken d'ober nemed adpaka ma merhodennou.

Ne oa ket koz an deiz pa ziskennis e gar Gwengamp. An otoiou ne oant ket aotreet da vale hag inutil e oa mond da glask eun taksi. Gweled a ris eur gamionetez hartet dirag magazin ar varhadourez. Anavezed a reen an Ao. Leon, marhadour moh ha kig sezon e PederNEG. Kinnig a reas din mond d'am has beteg Bear.

- Bez' ez on o paouez echui gand va hasadegou. Red mad eo pourveza Pariz. Galled am-eus bet kaoud an aotre da vond ha da zond gand va hamionetez digand an Almanted. Med ral eo an esañs.

E-kerz an hent, e lavaras din e oa Almanted e Bear ha zoken eur homandantur. Diwar ar pez a houveze, ne oa c'hoaz distroet d'ar gêr zoudard ebed euz al lodenn dieub.

- « Ne vint ken pell oh erruoud, a respontis. Eun afer treñiou nemetken dre berz an alouberien. Me a zo o tond euz Limoges. Krog e ver da gas ar zoudarded d'ar gêr abaoe eur zizunvez bennag. »

Ne oa ket sonet seiz eur diouz ar beure, ma lampe Monig d'am gouzoug. Kresket spontuz o-doa, Annaig ha Maria-Sklêrder. Annaig a oa war he fevar bloaz hanter hag he c'hoarig a oa o paouez kaoud he zri bloaz.

E Bear, nebeud a zoudarded a oa distroet d'ar gêr. Ne oa erru nemed mestr Breban, noter. Soudarded all, distroet d'ar gêr da goulz an arzav-brezel pe a-raog ma oa erru an Almanted, n'o-doa ket kavet gwelloc'h evid return d'o hazarn evid beza dizoudardet en eun doare reiz. En o zouez, va breur Yann. Degemeret e oant bet a-zivreh digor-frank... gand an Almanted. Ar hedourien, koachet dreñv d'ar porrastell, o laoske da zond e-barz. Med hini ebed ne addeue er-mêz.

Chom e ris kloastret e-pad eun nebeud deizioù er gêr. Monig a gleve lavared, en ti post, e tlefen mond da ziskouez va fichenn-dizoudarda d'an archerien. Lenn hag adlenn a reen va skrid-testeni gand ar brasa evez. En oll d'an oll, e oa reiz. Dael posubl ebed ! Dougen a ree ano ha sinatur ar horonal a gomande kreizenn Limoges hag ar siell ofisiel. Kaoud a reas din n'am-oa ket da vond d'hen diskouez da nep piou bennag. Va spered dineh, eh is da weled eun nebeud mignoned. Ar peb brasa euz ar zoudarded all a zistroas d'ar gêr e miz gwengolo. Eur miz mad a lañs am-oa warne.

Ar vuhez a ranke derhel... Kousto pe gousto.